

# Karnedoù brezel a zeiz da zeiz

(22/05/1915 - 05/02/1919)

## Ur gerig da zigor

Daniel CARRE

Ar skrid a ginnigan amañ a zo chomet diemban ha kazi dianav betek an deiz a hiriv. E-touesk paperioù kozh, oc'h penn mesket ha bepeilpennet Loeiz Herrieu en em gave. Ma ouie bugale ar Barh-Labourer eh oa anezhañ n'o devoa biken klasket pelloc'h : penaos talvoudegezh teurel get ar pezh a sellent-int el kentañ skrid, brouilhed envorennoù brezel o zad p'en doa henañ savet hag embannet ar stumm lipet, *Kammdro an Ankoù* ?

E gwirionez e fariant : talvoudegezh o devez bepred ar c'hentañ skridoù-se. Evit an enklaskour àr ar yezh hag ar skriv pa venn studial arz, ijin, mestroniezh an oberour hag e zoare da labourat ar yezh betek tizhout al live c'hoantaet d'ur skrivagour seurt get Loeiz Herrieu : goveliiñ ha kinnig d'al lennour ar pezh eo *Kammdro an Ankoù* : ur wir oberenn lennegel.

Met un tu arall a zo c'hoazh d'an afer. Soñjit 'ta ! Pennadoù kentañ *Kammdro an Ankoù* a zo bet embannet e 1933 ! Ar re

diwezhañ a zo bet savet – adwelet da vihanañ – ha kempennet evit an embann e 1944 pe 1945 !... Peadra a zo aze da lakaat an istourour koulz ha ne vern pe Yann Lennour d'en em soñjal. Ha levezonet eo bet an testoni get ar pezh en deus bevet Loeiz Herrieu goude ? Ha mar bez bet, betak pelec'h ? Na mennozhioù an test, e sell àr an traoù hag an darvoudoù, an doare ma varn an dud, ha goret int bet dezhañ pa gerzhe àr hentoù ar Brezel Bras pe goude ? Adalek deizioù kentañ Gwenholon 1914 e kemer notennoù : el lâret a ra d'e wreg en ul lizher. Arvar ebet nend eo ket evit « *diskarg* [e] *galonad* » evel ma en diskleri e-barzh klozadur *Kammdro* : n'eus kalonad ebet evit c'hoazh ! Evit magiñ *Dihunamb* ur wezh achu ar brezel ? A-dra-sur. Met un tammig... hent a zo etre an notennoù pemdeziek hag ar pezh a vo lakaet dindan selloù al lennerion.

An nep en do lennnet *Kammdro an Ankoù* na vo ket kollet amañ : en em gavout a ray amañ get an notennoù orin, get mammenn an oberenn a-fet stumm èl a-fet danvez. An nep n'en do ket c'hoazh a savo moarvat ennañ an c'hoant d'en ober hep tereniñ pelloc'h.

Ne stagan doc'h ar skrid na notenn, na studiaden ebet : ken nemet ar skrid.

Trawalc'h a vo, a gredan atav, e lakaat tal-oc'h-tal get *Kammdro* evit... komañs magiñ soñjoù. Ya, ken nemet komañs ! Arabat disoñjal e chom c'hoazh diembann ul lodenn pouezus a destoni ar soudard Herrieu : an 630 tamm miret deomp ag ar miliad mat a lizherioù, kartennoù bet kaset getañ d'e wreg etre dibenn miz Eost 1914 ha dibenn Genver 1919 !... Da c'hortoz o lenn – edan berr marse – e c'heller o selaou lennet àr gwagennoù ha lec'hienn *Radio Bro Gwened* (<http://www.radiobreizh.net/fr/emission.php?emid=66>)

Ul labour dielfenniñ a vo ret, eme-c'hwil. Netra suroc'h, met n'eo ket genin-me e vo graet. Esperañs am eus e vo kavet un spered lemm ha soutil, un istorour arbennik àr ar prantad

1914-1945 e Breizh, e Frañs hag e Europa da renabliñ, da gompajariñ, da lec'hiiñ, da sklêrijenniñ ar pezh a ya d'ober un testoni brezel ken dibar ha ken pinvik e meur a geñver.

### **Evit bout resisoc'h**

\* Ar skrid a grog e-kreiz ur frazenn d'an 22 a viz Mae 1915 : an notennoù kent (ar c'harnedad kentañ moarvat) nend int ket bet kavet betek bremañ e dielloù L. Herrieu.

\* 5 karned a zo bet kavet din e 1994. D'am soñj e rankont bout bremañ e *CRBC Brest* 'lec'h ma en gav dielloù ha pape-rioù L. Herrieu.

Karned 1 : 22-05-1915 / 27-04-1916.

Karned 2 : 28-04-1916 / 23-09-1917.

Karned 3 : 23-09-1917 / 21-08-1918.

Karned 4 : 21-08-1918 / 18-12-1918.

Karned 5 : 18-12-1918 / 04-02-1919 (notennoù diwezhañ – ar veaj distro – savet goude an distro)

\* Ne vo ket meneget amañ :

- ar cheñchamantoù karned.

- ar c'hemmoù a-fet skritur (lizherennoù brasoc'h pe bihanoc'h, fonnusted an notennoù dre bajennadoù, kreion paper pe kreion liv...). Talvoudus e vezont dreist pep tra d'an nep a glask goût hiroc'h a-zivout an endro, an aergelc'h... Un dra neoazh : ar meneg (*Marv Bleimor*) douget d'ar 27-04-1917 a zo bet sur a-walc'h skrivet diwezhatoc'h.

- an notennigoù douget get Loeiz doc'h kein ar c'hardedoù – pe zoken àr bajennoù zo – (roll prenadennou, chomlec'hioù tud, kontoù ar popote, ...) : ne zegasont amañ netra a bouez d'an testoni.

- ar gerioù, frazennoù islinennet pe barennet get L. Herrieu.

- ar merkoù (kroazioù, linennoù...) douget get ar skriva-gnour e-unan da zerc'hel soñj ag al lec'h ma oa arru get e

notennoù pa oa é sevel *Kammdro* da vout embannet e *Dihunamb*.

\* Divizet em eus lakaat un deiziad klok (deiz, miz, blez) evit pep deiz meneget ; aesoc'h e vo d'al lennour en em gavet. Loeiz, eñ, ne lak d'al liesañ ken nemet an deiz.

\* Evit aesaat al lenn...

- ... em eus kavet gwell adskriv an danvez-mañ e peurunvan en ur glask doujiñ d'an dibaboù graet get *Al Liamm* ha François Louis e 1994 ; digarez al lennerion a c'houlennan evit an traoù a-dreuz, ar farioù... Dalc'het em eus avat d'ar gerioù ha d'an troiennoù orin ; miret ivez ar galleg 'lec'h ma oa implijet (a bouez stummoù gerioù amprestet mil anavet e brezhoneg èl *jeneral, ekselsis, rejimant, kazarn...*).

- ... graet ur c'hempenn d'ar poentadur.

\* Un tachad kousiet, distrempet a zo kaoz d'ar mankoù a zo e notennoù an 10-06-1915 : dilennapl eo un nebeud gerioù. Ur follenn distaget - ha kollet ! - abeg d'un toull arall d'ar 14 ha 15-06-1915

Evit an 17, 18, 19 ha 20 a viz Genver 1916, a pand eo ar rejimant é redek davet an talbenn da gavet ar C'holoniale ne dizh ket da Loeiz, ha eñ skuizh ha lakaet diaes get e dreid, sevel danevell ebet. Douget en deus notennoù a-herr er c'harned hag o adskrivet goude. Kavet em eus gwel o lezel en desped d'ar skrivagnour bout o barrennet a-dreuz.

# 1915

[...] bravañ. Ar brasañ am eus gwelet betek bremañ. Èl ma oa ur ruskenn goulleet d'ar jañdarmed el liorz e oamp aet d'esae en tapout, met ne laoskent ket aes tostaat dezhe. Philippe a zalc'has ar ruskenn ha Guegan a hejas ar blantenn. Rac'h ar gwenan a gouezhas àr fri Philippe hag er flemmas er fas, en daouarn. Laosket e oa bet deomp eno betek an deiz àrlerc'h vintin.

**23-05-1915** - Sul ar Pantekost. An deizioù a dremen, a dremen get herr daousto deomp kavout hir hon amzer. Oferenn ar mintin-mañ. Àr-lerc'h an oferenn Ar boufam Celina en em laka da ganiñ ken faos ma laka rac'h ar re 'rall da ganiñ èl ti. Ret eo d'un ofisour monet àr an armoniom da esae lakaat ar ganerion an hent eeun.

Àr-lerc'h an oferenn eh aomp àr-dro an taol gwenan a zo aet en tu 'rall d'ar vagoar en ul liorz hìg a-'rall, d'en em stagiñ doc'h ur blantenn arall a-rez d'an douar. Met just eh arruomp evit er gwelet éc'h achap par ma c'hell trema koad Beaurioùx. Kollet eo deomp. Plijadur am behe bet neoazh é soviñ al loenedigoù-se d'o mestr.

Henoazh eh aomp kuit. Kuitaat a reomp Jumigny get keuz, rak paseet hon eus a-barzh deizioù bourrus en abri ag an obusoù. Kempennet eo ar vourc'h deomp. Bokedoù a zo bet lakaet e pep lec'h hag er gognelloù lousañ eh eus lakaet geot ha bokedoù. Souezhet e vo an dud pan dint du-mañ, mar daont, é welet ken brav ar ruioù hag an diavaez ag o zier hag an diabarzh ken foñdet, ken dispaket.

Beajiñ en noz. Pas a ra boledoù a-dreist hor pennoù. Oulches, hag a ziskoueze bout hep droug, a zo diskaret lod-kaer a dier

a-barzh. Bout a zo ivez re hag a oa diskaret a-raok, dilaosket get o zud, rak er broioù-mañ e tivroer e-leizh. Souezhet e vez an den é welet enne hepken tres kozh, tier e revin. Ti nevez erbet, ken nemet un ti-skol e pep parrez. Rac'h ar geginerion ha me a zo lakaet e porzh un ti hanter diskaret. Ur c'hav a zo lec'h da 15 pe 16 a-barzh. Kavet a ran un tammig kavig arall edan ur forn a zo klouedoù a-barzh hag ur gwele hep netra na plouz. Kousket a zo ret deomp àr ar c'hoad hag àr an houarn. Ne harzan ket get ma c'hostezioù.

**24-05-1915** - Sevel a reomp abred hag eh an da anzav ar c'hantonemant hag ivez an trañcheoù lec'h m'ema hon tud. En ul lec'h fiskal emaint, didrouz, distroet d'ar c'hreisteiz. Ar Jermaned a zo a-gleiz dezhe hag a-dreiste, met didrouz int.

An enderv-mañ eh an d'ar Vilin-Ruz da anavout an hent a ya d'eno - rak d'ar vilin-se eh aer da glask ar boued. Difennet eo d'ar c'hirri donet du-mañ. Dec'h da noz e oa bet ret da garr ar gompagnonezh monet d'eno da glask ar boued. Teir eur (mintin) e oa a pa oa distroet !

Monet a ra Hirgaer ha me dre an hent kuzh a ya d'ar vilin dre ar c'hoad. Savet eo bet get gwez lakaet a-dreuz. Leun ar c'hoad a orsal pikek. Donet en-dro dre ribl ar riolenn a za ag ar C'hoad Foulon. Leun a doullou marmite. Kaer-brav. Ur blijadur eo bale edan ar glazadur-mañ. Ar Vilin-Ruz a zo diskaret d'an obusoù.

Lâret a raer ema bet lazhet ar miliner èl espion. Leun eo ar c'hoad a geot, hesk, glaieul, sceau da Salomon. Leun a orsal.

Monet da 9 eur da glask ar boued. Ar c'harr a dorr ahel. Mizer ! Arru un eur vintin. Rac'h ar ravitail. en tachad-se. Bourrus.

Lâret zo deomp hiziv e kerzh an Itali. Hag eh aomp kuit arc'hoazh da noz.

**25-05-1915** - Diloj c'hoazh. Monet a ran da welet ar c'hapiten evit goulenn ali getoñ evit monet kuit henoazh hag e welan ar c'homandant get an adjudant de Bataillon é sellet en ur periscope. Man Doue ! sotet un den ! Setu-eñ 4 deiz en trañcheoù hag ar periscop en e loj ha ne oui ket c'hoazh penaos en em servij anezhoñ. Eñ a sell en toull uhelañ hag, èl rezon, e wel e dreid. Souezhet eo !!...

Goude eh an da welet an eil section. Amañ ema lojet mat hon tud : bout a zo 5 pe 6 troc'had douar, sec'hier sabl, gwez, douar, tol a-dreist ar gitounoù. An 34° a oa eno ha kempennet mat eo an traoù dezhe. Ar plouz o deus bountet er-maez ha kousket a ra an dud àr orsal mailhet. Mistroc'h eo e-leizh an traoù èl-se. Ken didrouz omp amañ èl e Vassognes.

Henoazh eh aomp kuit doc'h serr-norz. A-raok eh an da welet an iliz. N'eo ket gwallaozet. Ar vered a zo en ur stad truekoc'h ; ar c'hroazioù a zo torret, ar bezioù toullet. Bezioù soudarded a zo e-leizh daousto d'un 40 bennak a zo interret izeloc'h evit ar vourc'h en ul liorzhi. Ar re-mañ a zo lakaet ur groaz àr bep bez èl bepred ha, staget doc'h ar groaz, ur voutailhig vihan a zo anv ar soudard a-barzh. En iliz, meur a soudard a vro ar C'hreisteiz en deus merket kant tra àr ar vagoerioù, traoù naif, man Doue ! Pedennoù evit o maouezi, o dous ha me 'oui-me evit piv rac'h.

Ret eo deomp kas ar bagajoù betek ar Vilin-Ruz get ar c'harr bihan a zo dalc'het an ahel anezhoñ get div dreujenn goad hag orsal. Er Vilin-Ruz e kavomp ar c'harr bras a lakaomp a-barzh al lod muiañ ag ar pezh hon eus da gas ; der voneur c'hoazh eh eus roet kemenn deomp lezel get ar 7<sup>vet</sup> al listri kegin. Kement-se nebeutoc'h hon eus da stlejal àr hol lec'h.

Dre koad Beaurieux e taomp d'ar gêr. Ur blijadur eo kerzhet. Kan a ra an eostig e kement korn a zo. Loargann gaer. Pec'hed eo eh on é stlejal ma zroad dehoù èl an hañv paseet get gloewennoù gwrez.

Ar 49° a baseomp er Vilin-Ruz ; douaret int e gitounoù ha beviñ a raont eno e-kreiz ar glazadur.

Arru e Beaurieux da 10 eur ha da 11eur da gousket en un ti toullet d'an obusoù àr un dornad plouz. Droug kostezioù !

**26-05-1915** - Monet da Oeuilly da glask dilhad ankouaet d'hon tud. Skuizh bepred. (Roch anvet s/lieut)

**27-05-1915** - Monet a ra gwell un tammig. Ar mintin-mañ eh an da vale un tammig er-maez ag ar vourc'h hag e welan eh on amañ en un tachadig klouar ha bourrus. Liorzhoù kempennet-mat a zo daousto d'an obusoù en deus kouezhet àr ar vourc'h. N'em eus ket oar da welet an iliz. Diskouez a ra bout bravoc'h evit an ilizioù am eus gwelet betek hiziv. An tour graet get mein a zo hañval un tammig doc'h hanni Kaodan, met izeloc'h hag un tammig digoroc'h doc'h d'an diaz.

E-pad ma skrivan an dra-mañ daou soudard ag ar C'hreisteiz a ra un c'hoari pelotenn a zo rac'h an dud da sellet doc'hte. Chomel a raont un eur bennak da redek ha da deurel o felotenn en aer ag an amzer.

**28-05-1915** - Hiziv eh an c'hoazh da Fismes. Tremene raomp dre Oeuilly hag en ur arru get sukrdi Villers-Haute-Rive e choman souezhet é welet martoloded kozh e-tal ar pont. Souezhetoc'h on c'hoazh a pa dostan dezhe é welet ema labourizion porzh int. Daet int a-c'houde miz diwezhañ ar blez evit sevel ha gober a-nevez ar pontoù diskaret a pa oa ar Jermaned é tonet e Frañs.

Bout a zo ag an hanter anezhe a gostez an Orient. Un adjudant labourer porzh a zo doc'h o c'homandiñ hag un ingénieur gwisket èl ul lieutenant de vaisseau.

E Fismes an enderv-mañ da 3 eur eh interrre 15 soudard lazhet daou zeiz kent e gar Fismes get ur bomb taolet d'un



aerlestr hag a ziskoueze bout un aerlestr a Frañs. En o mesk e oa soudarded ag ar 88° hag ur serjant, Durand, a-nevez 'zo anvet er ravitaillement lec'h ma en em gave a-dres, ar paour-kaezh. Donet a ra c'hoazh un aerlestr jermanek da vale a-dreist kêr met monet a ra unan ag hor re àr e-lec'h ha ne dizhas ket teurel bomb ebet.

Gwelet a ran daou di a zo kouezhet bomboù àrnezhe. Gwallaozet int, muioc'h mem evit get obusoù.

É tonet d'ar gêr e kavan c'hoazh al labourizion porzh é kempenn un tachad evit lakaat o c'hamakoù a-skribilh evit monet da gousket. Chom a rint amañ un teir sizhun bennak.

E Oeuilly ema arru ar 144° da gemer hol lec'h. Leun eo ar vourc'h anezhe. Kement-mañ a sinifi, e kredan, ne vimp ket galvet d'ober labour an active. Arru 'zo geneomp territ. ag an 218° a zo lamet ag an active evit o lakaat er 88° : al lod muiañ anezhe a zo a gostez Pau. Tud didrouz, en em gav un tammig divroet e-mesk hor Bretoned a zalc'h da gomz yezh ar vro.

**29-05-1915** - Ar mintin-mañ, mintin-mat, e teraou an aerlistri bale. Pas a ra unan jerman ha tenniñ a raer àrnezhoñ hep en diskenn. Enderv : muzik 149° a-raok koan. Ar soudarded a vale àr dachenn ar marc'had èl d'an deizioù muzik àr ar blaenenn pe Place d'Armes. Skoiñ a raer an daouarn, kemer a raer plijadur é klevet ar muzik é c'hoari tonioù skañv ha da zañsal. Me a gav ema un tammig dijaoj an dra-mañ a pa zo kement e begin.

**30-05-1915** - Sul an Drinded. Teir oferenn a zo ar mintin-mañ. Monet a ran d'an hanni gentañ hag e sellan àr-un-dro doc'h ar vered ha doc'h an iliz. Ar vro-mañ a zle bout pinvikoc'h evit ar c'hornadoù eh omp é tonet anezhe. Ar bezioù a zo bravoc'h, an iliz a zo kaeroc'h : diavaez ha diabarzh.

An enderv-mañ eh on kaset da Oeuilly c'hoazh get un den

da glask e zilhada zo chomet àr e-lerc'h. Ar valeadenn-se, graet goude merenn, a reas vad din.

Ar-lec'h koan eh an àr lein an dostenn a zo doc'h ar sav-heol a Veaurieux ; bravet ur gwel en deus an den ag an tachad-se ! Met teñvel eo, n'hellan ket anavout ar vro ha n'eo ket ma c'hartenn genin. Ar wezh kentañ e taimp du-mañ eh in da welet gwell an traoù-se.

**31-05-1915** - Ret eo arre en em gempenn da vonet kuit. Henoazh eh aomp da Oulches. Arañjet eo hor c'harr bihan. Àr-lec'h merenn eh an trema an tachad lec'h ma oan bet dec'h d'enderv-noz hag e welan ur c'hanon 75 é tenniñ. Na fonnapl e kerzh an traoù getoñ. Obusoù ordiner, obusoù evit foñdiñ labour ; ur blijadur eo er gwelet é skopat...

Àr-lec'h koan eh a Philippe, Craver ha me àr-raok evit degemer al listri kegin laosket deomp get ar 7<sup>vet</sup>. Ar hor goar eh aomp dre goad Beaurieux ken brav bremañ. Kan a ra an eostig e kement korn a zo, ha soudarded ar 49° a zo kantonet amañ a gan, a c'hwitell hag a c'hoari galoche get galochoù hir.

Ar-dro 10 eur eh aomp en-dro get ar c'harr d'ar Vilin-Ruz da glask ar boued get ar c'harr bihan. Un eur da vintin eo a pa gouskan.

**1<sup>a</sup>-Vezheve-1915** - Setu c'hoazh daet ur miziad. Ha seblant erbet atav da achu...

Ar mintin-mañ e klevomp doere ar gompagnunezh dec'h da noz. Mezv e oa an hanter ag ar gompagnunezh, chomel a raent a-dreñv ; kouezhel er fozelloù hag a pand int arru en trañcheoù e faote dezhe fardiñ àr ar Jermaned. Poan a-walc'h a oa bet doc'h o derc'hel ! Ar mintin-mañ e tap ar re mezvañ prizon hag ivez diouwer a win evit pemp pe c'hwec'h deiz.

Kelion a zo leun er vro-mañ. Ne harzer ket gete ; dreist-pep-tra hiziv ema ken pouk an amzer.

Lod ag ar re mezvañ a vez graet dezhe skarzhiñ an toulloù kaoc'h en trañcheoù get o gamel betek hanternoz...

**02-06-1915** - Atav eh aomp d'ar Vilin-Ruz da glask boued. Henoazh é tonet ag eno e tarzhañ hor c'harr bihan genomp en ur arru er vourc'h. Ha setu taolet ar garg, torret ar c'hostez karr ha ret diskarg rac'h an traoù. Ur gompagnunezh arall a brest deomp o c'harr evit donet da glask an hanter barrikad gwin. Burzhud d'ar fuzeoù a winter henoazh. Hep arsav e splann an oabr gete. Re ar Jermaned a sav hag a gouezh a-benn. Gwen kann eo o splanner. Hor re-ni a welan é monet en aer ag en amzer, éc'h ober ur meni kerlenn tan hag é tarzhiñ en aer. Ar splanner a zo gwanoc'h, met pell e chom en aer ag an amzer.

**03-06-1915** - Monet a ran d'an trañche evit gouiet get ar c'hapiten petra preniñ e Fismes. Pounner eo an amzer. Arneñv a zo.

**04-06-1915** - Da 5 eur eh an kuit a Oulches. Ur valeadenn gaer a ran dre ar c'hoad é monet da Veaurieux. En ur arru amañ eh an da c'houlenn ar bermision get lieutenant segretour ar C'holonel. Nac'het en deus hennañ sin ar bermision daousto mand eo ret monet da Fismes rak n'eus nemet an deirvet hag en deus dober a vonet d'eno !... N'eus ket mui tamm legumaj ; gwin a zo bihan, met netra... Ret eo deomp enta diskarg ar c'harr ha me arre da Oulches, dre ar c'hoad.

An enderv-mañ eh an da walc'hiñ ma servietenn d'ar wazh a red er Vilin-Ruz d'an diaz hag a za a zan ar C'hoad-Foulon. Kaer eo an amzer atav, pouk mem. Ar riolennig-se a red en ur vourboutil hag en ur ober kammdroiennoù e-kreiz pradoùier ruz get ar bokedoù kokelikot. Lâret e vehe ema tapennoù gwad àr ar bratell. Degas a ra soñj din a lec'h emgann ar Marne am

boa gwelet get soudarded lavregoù ruz ahetet àr ar parkoù. E-pad ma skrivan an dra-mañ troet trema Merval hag azezet àr ervi asperj gounidet d'ar geot ha d'al louzoù, me a glev hon obusoù-ni e kouezh àr ar Jermaned doc'h an tu kleiz din ha re ar Jermaned e kouezh àr hor re-ni doc'h an tu dehoù e-tal ar C'hoad Foulon. Pegours ne glevin ket ket mui ar bouezhioù spontus-se leun a gasoni ha ma c'hellin c'hoazh klevet trouzioù bouezhioù mam bro leun a vraventez, a yaouankiz, a beoc'h ?

**05-06-1915** - Sadorn. Ar Jermaned ne lâront ket kalz a dra deomp-ni. Neoazh an noz kent an neizhour eh oa bet un tammig aon en o-raok. Ur sañtinell ag ar 49° en doa soñjet getoñ en doa ar Jermaned tennet àrnezhon, ha eñ àr-dreñv en ur huchal : «Aux armes ! » Ar post bihan a oa a-dreñv a yas d'e dro da gavet ar section. Hor re-ni a oa a zorn kleiz é klevet an trouz a gas aon dezhe, ha setu rac'h an dud àr sav !... Ne oa netra...

Dec'h d'an noz, èl bep div noz, eh an get ur c'horve da glask ar ravitaillement d'ar Vilin-Ruz. Nag ur stal ! Ar c'hirri n'hellont ket donet da Oulches hag ema ret monet èl-se bemnoz àr-dro dek eur pe dek eur hanter, get ur c'harr bras kozh kavet deomp en ur porzh ha troc'het an traversoù anezhoñ da glask ar boued. Er Vilin-Ruz eh arru ar boued e pemp karr, ha rac'h an traoù da douch en teñvelder rak n'heller ket ivez alum gouloù : ar Jermaned a zo du-se àr lein ar menez diragomp. Gwin, gwin ardant, bara, kig, holen, sukr, kafe, paper da vutumat, bougies, eoul, riz, alumetoù, ... Pep seurt traoù a douchit eno a-dastorn-kaer. Gazetoù a za ivez get Jaffre hag a raer ur pakad da bep kompagnunezh. A-hendarall e vez c'hoazh pakadoù 'rall a vez roet da voserion ar gompagnunezhoù pe da soudarded soutil hag a gav an tu da werzhiñ pep gazetenn 2 vrank ha da c'hounit èl-se ur blank bennak, rak ne faot ket bout souezhet amañ a pa baeer un dra an hanter keroc'h evit ma talv.

Dec'h d'anderv eh oa paseet un taol-gwenan a-dreist hor c'heginoù. Setu Filip é redek àr e-lerc'h hag é teurel douar àrnezhoñ evit el lakaat da varriñ. Donet a ras da benn ag el lakaat da ziskenn en ur parkad sainfoin. Ur haisse soavon frotet get del knaou kelwez ha lakaet a-barzh div varrig a servijas da ruskenn. Da serr-noz eh oa degaset da-dal ar c'heginoù lec'h em boa kempennet ul lec'h dezhoñ. Un orsalenn en-dro dezhoñ hag a-dreist ar ruskenn un tamm plañch get ar gerioù-mañ : « *Essaim recueilli par la 3<sup>e</sup>C<sup>e</sup> du 88<sup>e</sup>T<sup>al</sup> le 4 juin 1915. Placé sous la protection des militaires* ».

Ha setu ur ruskenn evit mestr an ti a pa zay en-dro. Eñ eo a vo ar pinvikañ ag ar vourc'h rak ne chom ket mui loen erbet na netra en tachadig-mañ labouret d'an obusoù, re Frañs ha re Jermani.

Kempenn a raer en-dro d'an tier neoazh. E-tal unan anezhe tost d'al lec'h eh omp eh eus un ti hep toenn ha hanter diskaret. Ar soudarded a oa en hor-raok aze o deus skrivet àr an ti get tammoù koad, tammoù barroù *KULTUR et Culture* ha dirak an ti e weler poltred ar Republik labouret er pri get daou glezeñv kroazet a-dreñv he fas. A-gleiz hag a-zehoù ur boked pensée hag, doc'h kostez ar vagoer, ur c'hog gall savet e benn getoñ. Rac'h an traoù-se a zo roet liv dezhe get tammoù gwer, tammoù teolennoù, tammoù mein-glas. (*marqueterie*).

Doc'h d'an diaz ar vourc'h, trema ar c'hoad, eh eus graet ur vered lec'h mah eus interret ur yoc'h soudarded (40 bennak) ag en 34°, 49° hag ar soudarded paseet amañ. E-kreiz eh eus ur mell maen hir (colonne) torret, a zo merket àrnezhoñ «Aux morts pour la patrie». 4 obus, ur pikol anezhe (210) a zo é voñtiñ gward e-tal ar geizh-se marv e-kreiz o ampartiz. Ag ar C'hreistez al lod muiañ anezhe. Binioù.

**06-06-1915** - Sul ar sakremant. Ar mintin-mañ eh an d'an oferenn da iliz Oulches, toullet da zaou obus. Ur serjant-

fourrier ag ar 49° a lâr an oferenn. E-pad an oferenn (8 eur) e klevan ar c’hanon é vourboutil. Àr-lerc’h an oferenn e krapan da welet ar c’hapiten. Ar-dro Soissons e tarzhe an traoù, ha tarzhet a ra, pas farsal. A-c’houde Epernay n’em eus ket klevet kement a drouz. Betak kreisteiz bennak e pad an trouz. Henoazh eh aomp da Veaurieux.

Evit kas hon traoù ema ret deomp en em servij ag hor c’harr bras. Leun eo ar re, kaer hon eus lezel meur a dra àr hol lerc’h. Sec’hier ar c’heginerion a zo a-barzh ivez, gwir eo. Evit krapañ ar menez eh eus 17 den doc’h ar c’harr é tenniñ pe é pous. Hañval int èl-se doc’h ar veteraned pe ar vartoloded a pand int é hal àr o c’herdad. Pleget int. En em deurel a raont a-hanter d’o zor, monet a raont d’ar paz hag o c’hlevet a raer é tihostal ! Penaos micher ! Ar roñseed e-pad an amzer-se a chom klañv dre forzh gober netra !

Arru a raomp àr-dro dek eur e Beaurieux ha kentizh eh aomp da gousket en ur soñjal e kêr Premizl a zo bet ret d’ar Rusianed lezel a-kostez goude bout hi kemeret. Trema Soissons e klevet c’hoazh un tammig bouezh ar c’hanon...

**07-06-1915** - Ar mintiniad a ya en-dro get an diloj. Hon tud, ur section anezhe, a zo ret dezhe monet da labourat doc’htu get ar Génie. Ar re ’rall a gemer gward an enderv-mañ.

**08-06-1915** - Monet a ran da Fismes. Didrouz eo kêr. Soudard erbet mui nemet an 6<sup>vet</sup> a zo bepred eno.

**09-06-1915** - Monet a raomp kuit arc’hoazh d’an noz. Da Glennes eh aomp kentañ ha goude da Bagneux. Rentiñ a raomp hol lañjerioù ha rac’h en dihaolaj, an dilhad kozh a stlejemp àr hol-lerc’h a-c’houde Bourg-et-Comin.

Lod a lâr eh aomp da Châlons, lod d’an Nord, lod da Bariz met hani ne oui da be lec’h eh aomp. Bremañ e komañs an

dizurzh. Al Lieut. Toupin a skarz h e vagazin, a vount traoù get an dud, pakadoù en deus bet oar da reiñ a-raok, bremañ o sammer arre el loened.

**10-06-1915** - Monet a ran ar mintin-mañ da welet an iliz. Doc'h penn an iliz un taol-gwenan a zo aet d'en em vountiñ en un toull er vagoer. Troet int d'ar sav-heol ha labourat a raont a-forzh doc'h terrennoù klouar an heol é sevel. An iliz a zo bravik ; graet eo get mein ar vro met ar mein kaletañ. An tour a zo mein, ar pezh n'em eus ket gwelet lies, ha pinvikoc'h eo an diabarzh evit ar c'hornadigoù arall am eus gwelet.

Ar mintin-mañ e raer deomp rentiñ ar pakadoù fri ha beg a oa roet deomp a-enep da ampoezon ar Jermaned hag un herrad àrlerc'h e raer deomp o c'hemer en-dro. Nend aomp ket mui da Glennes. Da Vagneux eh aomp eeun-ha-eeun. Àr-dro seizh eur eh aomp kuit. Ar gompagnunezh a ya dre un tu, dre ar c'hoadoù, ha ni get ar c'hirri dre Revillon, Merval, Fismes. Splanniñ a ra an oabr get ar brogon é splanniñ àr du ar Jermaned.

Gwelet em eus lies a-walc'h arneñv, met biskoazh luc'hed na brogon ken stank. Toufourek eo an amzer ken ne harzer ket get ar wrez. Ret eo deomp lakaat hor [.....] a lâr al lieut. [.....] a zo leun [.....]dant leun ar [.....] estroc'h evit ar pezh a zo ret dougen [.....] kant tra da bounnerat [.....] Dilhad da cheñch a bep liv el [.....] traoù serret àr ar [.....]obus, [bizhier ?] ha me oui-me petra rac'h ; hep kontiñ o faperioù, o skeudennerezed.

1 eur 1/2 eo a pah aomp da gousket, poan a-walc'h deomp kavet ur c'horn evit en em astennn. Lod a gav un dornad plouz. Lod a gousk àr an douar, àr ar c'hoad, en ur c'harr. Gleg-teil eo re ar gompagnunezh met ken skuizh eo an holl ma kousker dous betek 6 eur.

**11-06-1915** - Eh omp e Magneux evit un deiz hepken. Henoazh moarvat eh aomp da gemer an tren evit ne ouiomp ket da bezh tachad. 36 eur tren a lâr ar c'hapiten. (Monet a ran da Glennes da glask ar c'hartouchoù. Bro kaer àr lein ar menez ; pas e kostez Koad Baslieux. Monet dre Fismes lâret kenavo (Tud Magneux, [.....] ha [.....]).

Kemer tren noz gwener. Paket e bagonioù loened (40 j. hep plouz na netra). Ni 'bas e Noisy-le-Sec, a dreuz Koad Chantilly. Trema an Nord eh aomp. Àr al linennn, tud yaouank-flamm é labourat. Arru àr-dro 10 eur e Lagneux.

Ur jeneral a zo doc'h hor gortoz hag a lâr deomp eh omp staget doc'h ar C. A. Colonial èl reserve d'infanterie. Petra a daolo an traoù-se genomp ? Hani ne oui. Gober a raer deomp diskenn doc'h kostez an hent-houarn da zebriñ ur begad. Hernet omp, naon hon eus ha sec'hed. Gortoz a raomp an eil bataillon, hag eh aomp kuit. Chom a ran get ar c'hirri. Pas a raomp e Amiens, met a-gosteziad dezhi. Gwelet a raomp an iliz ha kêr a-zehou deomp. Tud Amiens a ra degemer mat deomp. Reiñ a raont sistr, gwin, bier d'an dud evit netra, met an dra-se ne blij ket kalz d'ar c'holonel a za da huchal àrnezhe. Evet a ran ur werennad sistr a-dreuz ur grille get ur vaouez gozh hag ur plac'h yaouank a ziskouez bout desavet mat, met gwelet a raer o c'hig etre o dilhad toullet ha roeget rac'h. Get kalon e reont neoazh hag ur soñj mat a zalc'homp anezhe...

Monet a raomp da gantonin d'un tachad a raer Les-Ponts-de-Metz anezhon. En un uzin hol lakaer, un uzin paper marse rak àr ar pillhot hol lakaer da gousket.

Debriñ en un davarn e-tal ar pont hent-houarn en un tachadig klouar. Monet da gousket. E-pad kousket dihun get glav a gouezh àrnon. An deiz àrlerc'h e welan ema ul lous ag ar 4<sup>vet</sup> Komp. hag en deus friget àrnon ag an ostaj uheloc'h !

**13 juin 1915** - Monet kuit 3 eur mintin. Lakaat ma sac'h



er c'harr ha setu-ni àr un hent-bras a 16 kil. é kerzhet, bec'h àr an holl. Gwelet a ran en un tachad lann divleuñvet hag ema eürus man daoulagad. Met nen deus ket achumant d'ar parkoù. Keit èl mah a ho selloù e welit parkoù, koadoù, plaen èl a pa vehent rastellet. Ed ha boued loened, betrav. Setu ar pezh a welomp e-pad an 16 kil.-se. Ur gêr hepken ! Clairry, ur gêrig : un davarn ha parkoù, gwez àr vord un hent-bras ag ar plaenañ.

Arru a raomp èlkent get poan goude bout lesket un nebeud tud un tammig e pep tachad hed-ha-hed get an hent.

Arrest a raomp 3 c'hardlev doc'h Quevauvillers lec'h mah aomp. Ur jeneral a bas e-pad mah omp astennnet àr vord an hent-bras. Lod-kaer a zo kouezhet ar c'housed àrnezh. Setu 2 noz ne gousker ket.

Arru er vourc'h. Broig plat, un toull dour get gwadi àrnezhoñ, ur maner get toull dour dirak ha bugale é c'hoari, un dachenn pe div, un nebeud tier graet get koad ha pri... (Neoazh gwelet em eus àr vord an hent-bras bernioù mein-greun) ha goloet get teolennoù. D'enderv, goude un hun gousket edan ur wezenn, eh an da glask plouz e'it ar gompagnunezh d'an dachenn vras. An evezhour a zo bet soudard en Oriant bout a zo 50 vlez zo. Soñj en deus ag an Oriant ha plijadur en deus é komz ag ar vro-se lec'h ma en em gave ervat. Sistr a gavomp en ur arru, 2 ha 3 blank ar voutailhad. Sailh a ra an dud àrnezhoñ. Preniñ e'it ar gompagnunezh rak ar gwin a zo ker-mat : 16, 17, 18 ha 20 blank. A-benn an noz eh eus arre ur yoc'h tud vezv.

**14-06-1915** - Lun. Ar mintin-mañ e lakaer arrest doc'htu ar re vezv. [...]

**[15-06-1915** -.....]

Setu ar c'hirri-tan, unan, daou, tri, kant, daou gant ! En em

heuli a raont el greuniad ur chapelet bras, tennet àr an hent-bras. Emberr eh omp goloet a heuenn, karget hon daoulagad hag hon difrenn. Ha setu-ni neuze é krapin enne, hag àr-raok tremaAmiens. Nedremenomp ket neoazh er gêr-se. A-gosteziad dezhi eh aomp c'hoazh, met gwelet a raomp du-se, savet uhel a-dreist kêr, an iliz-vamm, rac'h dantellet ken brav e-kreiz kêr. Ha goude kêr e treuzomp plaennoù, flagennoù, hep kleuz na garzh da ziskuizh an daoulagad. Ur c'hoadig meur a wezh, ha goude flagennoù c'hoazh, plaennoù goloet a vlezad. Treuzin a raomp meur a gêrig. An hanni vravan, Beauval : un iliz graet get brik ha mein-gwenn kizellet a zegas soñj deomp a iliz Kêrentrec'h. Ar vourc'h a zo etre div dostenn, e-kreiz ar bokedoù hag ar glazadur. Hep arrest eh aomp arre... betak Sezaincourt lec'h mah arruomp àr-dro 12h 1/2, un tammig a-raok an 3° Chasseur d'Afrique hon eus paseet en hent. Ar remañ àr roñseed skanv ha bihan, get o bonedoù hañval doc'h re Turked.

Ar vourc'hig amañ a zo dister. Poan a vo sevel lec'h da rac'h an dud e ken bihan a lec'h. Setu Lafabrier ha me é fetekal. Na tier paour, graet get pri ha get koad, gloestr erbet a-feson enne. Bernioù teil dirak an tier, meni karrdioù a zalc'h àr o sav rak mand int staget doc'h tier un tammig sonnec'h met digor d'ar seizh avel. An tier a zo goloet get mein-glas, teolennoù el lod muiañ anezhe.

Kaer hon eus klask nen daomp ket da benn a gavet lojeris da 250 den ar gompagnunezh. En un ti eh aomp lec'h mah eus ul leue é lardin. Dre-mañ e vezer kustum da lakaat el leueoù e tachadoù didrouz ha teñvel. El ma venn ar c'hapiten monet er c'hraou-se, ar vaouez paour a denn àr he blev get ar gounnar, prest eo da vatin... Monet a raomp neoazh ha setu hor c'haezh ofiserion é lâret doc'htu ema ur Jermanez eo ar vaouez paour-se ha n'en deus ket ken da vevin 'gozik sur 'met div vuoc'h hag al leueig-se.

A-druegezh e taer da benn a gavet lec'h da rac'h an dud. Ni a ra-ni, Lafabrier ha me, ur goban get fagot hag al lien koban. Er-maez e chomomp.

**16-06-1915** - Yen eo marse un tammig, met kavet a raomp c'hoazh ar galon da c'hoarzhet. Ar mintin-mañ e tihunomp get c'hwitell un uzin hag an hent-houarn. Donet a raer da lâret deomp da 6 eur eh aomp kuit da 8 eur. Da 8 eur netra. Da greisteiz netra. Eh omp é c'hortoz àr ar c'hlasenn. Ma zreid noazh evit distan dezhe. Ar boued ar gwashañ. Sardin, koñserv, bara louet. Dre voneur hon eus kemeret provision. Aerlistri a vale dre-mañ. Reiñ a raer droad deomp da alum an tan hag e raer ur banne soubennn get « potages condensés » ha kig « singe » c'hoazh. Chom a raomp amañ c'hoazh da bas an noz. Er-maez e kouskan àr mam bern fagot.

**17-06-1915** - Netra atav ; ar mintin-mañ e teraouer get ardoù ar servij arre : revue !!

Ar c'hapiten a ra ur c'houlenn sekour evit e familh rak m'en deus 4 a vugale. Nag ar re en deus pemp ha nend int ket kapiten !... Ha nend eus ket tu dezhe goulenn netra.

Ar predoù àr ar geot èl er pardonioù, en ur farsal.

Doc'h serr-noz en em soursian da gempenn un tammig gwell man gwele. Get geot e tan da benn a stankiñ meur a doull er fagot, un nebeud barroù àr al lein, geot edandon, ha setu ma loj. (tre Freschvillers, Amplier)

**18-06-1915** - Gwiner. Re em boa kempennet man gwele. Ar mintin-mañ da 3 eur 45 e ta Hirgair da lâret din eh aomp kuit da 4 eur 45. Kousket e oan dous neoazh, ha kaer e oa din e ma neizh.

A-herr en em gempenner hag àr-raok. Dre Doullens, a-gosteziad dezhi e paseomp. Doullens a zo en un toull àr ribl

ar stêr Authie. Luzinioù a zo tro-ha-tro da gêr.

Arru a raomp àr-dro 9 eur e-tal Orville. Ret eo gortoz c'hoazh ma vo graet ar c'hantonemantoù. Da 10 eur 1/2 eh aomp ar vourc'h.

E-pad mah oamp é c'hortoz ne zehan ket ar c'hirri-dre-dan hag ar soudarded da bas en hent-bras.

En un ti goulle eh aomp. Porchoù, grañjoù pri atav ; ha paour, man Doue ! Ar blañcherisoù, an dergeier a bleg, a darzh, a gouezh edan hon treid. Ret eo o arañj evit gellout kousket enne. Ne gavan-me lec'h erbet. Pechañs e vo ret kousket er-maez c'hoazh !

Evit gwelet ma ne gavan netra eh an àr ar maez hag e welan ar vered. Nevez eo. Ur c'hantad bezioù bennak a zo a-barzh, lod paour, lod pinvik, met ar re a zo paour a zo paour doc'htu hag ar re pinvik a zo ur vezh o gwelet, ken nombrus èl m'emañt. Tud ar vro-mañ a sav tier pinvik ha kaer d'o zud varv hag a laka ar re bev a lojoù pri !...

A-dreñv an ti lec'h mah omp eh eus un adjudant é lakaat tri den d'ober, dre bunision, an ekselsis hep fichal o zreid... Eñ a gomz doc'h ur soudard evit en tamaliñ. Hennañ a sell doc'htoñ. Eñ a lâr dezhoñ deval e zaoulagad. Hennañ ne ra ket. Neuze e venn getoñ er bountiñ a-barzh... Setu petra a raomp e-pad ar brezel a pand eo ken prizius buhez ha labour pep den. (Pedenn noz iliz, 4 civil !!)

**19-06-1915** - Sadorn. Netra a vad. Komz a raer a vonet arc'hoazh vintin da redek àr an hentoù a-dal 5 eur da 8 eur. Met emberr e taer da lâret deomp ne vo netra. (Pedenn noz). Kousket àr un nor get sec'hier.

**20-06-1915** - Sul. Oferenn 5 eur 1/2 ; predeg brezhonek ha kanennoù brezhonek. An amzer en deus kaeraet un tammig.

Arc'hoazh vintin eh aomp da redek... Ma nend aomp ket

kuit, rak d'an ordiner eh aomp kuit a pa lârer deomp eh aomp da redek. Didrouz eo pep tra.

An deiz kent evit dec'h em boa kavet Dr Savouray, medisinour eil galon, Bizien, studiour medisinour, medisinour auxiliaire, Denoez capitaine artilheri dimezet da verc'h Corbières. Komz a raomp ag ar vro, ag ar re a anavomp.

Alfred Mellac, lieut., a zo dre-mañ ivez.

**21-06-1915** - Lun. Diskuizh.

**22-06-1915** - Meurzh. Monet da gerzhed da 5 eur mintin betek 8 eur. Kerzhed, kerzhed, 'gozik redek, gober heuenn, el lonkiñ, c'hweziñ... Setu rac'h hol labour an deiz-se ; hag en ur arru hanter boued da zebriñ ha dour da evet. Ar ravitaillement a-c'houde ma kerhomp el-se ne arru ket mui a-feson. Ret eo deomp skoñ àr hor c'hig e bouestoù ha kement-se ne spir ket. Un deiz mem nen deus netra doc'htu met avaloù-douar. An dud nend int ket koutant. Kerzhed bepred àr hentoù pavet get mein-gurun. Ar mintin-mañ hol lakaer d'ober an ekselsis en ur park re vihan hag ema ret deomp monet da flastriñ luzern evit 20 lur bennak...

**23-06-1915** - Monet a ran da glask gwin ha legumaj da Doullens a zo 5 kardlev a-zoc'h ar vourc'h lec'h mah omp. Àr an hent paturages, loened enne ag ar re gwellañ. Dre-mañ e laoskont o loened ar-maez noz-ha-deiz, hañv-ha-gouiañv. Da vintin eh aer get ar c'harr d'o goeriñ. Gwelet em eus mem loened staget e parkadoù melchon glas ; a-gentizh ma vouetont un tachad e vezont kaset ur stagad pelloc'h. Int a deil ar velchoneg àr un dro.

Doullens a zo en ur flagenn plaen. Gwazhioù a bas a-barzh, edan an tier lies, hag a servij da charreat kaoc'h ha lousteri pelloc'h. Bras eo pasapl, met an tier n'o deus ket min vat kêrioù

kozh Breizh-Izel. Graet int get kerlad ha fang ha get brik. Ar c'henwerzh a zle bout kreñv neoazh rak e kement ti a zo eh eus ur voutikl bennak. Neoazh ne daomp ket da benn a gaout forzh aes ar pezh a glaskomp. An avaloù-douar a baecomp 13 L. ar 100K., ar c'haol glas 7bl. ar penn hag ar c'harot 1.75 ar pakad.

An dud lec'h mah omp a ra ar gwellañ degemer ac'hanomp ha ne werzhont ket an traoù dister keroc'h e'it d'an ordiner. Ar jañdarmed ne lâront netra evit evet en tavarnioù, nag evit bale ar ruioù. Ar c'henwerzherion en em glem start neoazh ag ar c'homandant d'étape en deus takset an traoù marc'hadmatoc'h e'it mand int bet paeet ! Met me a gred en em glemmont dreist-pep-tra rak ne c'hellont ket mui gounit kement.

Merenniñ e Doullens ha donet en-dro.

**24-06-1915** - Kerzhet arre. Hiziv e paseomp e-tal parkadoù fav, lin, ed ag ar bravañ. E koadoù e tremenomp glas ha fiskal. Pas a raomp e-tal soudarded ag an 2° Chasseurs hag ur parkad kanonnoù 180 long get kirri-tre-dan evit o stlejal. Skuishat a raomp !...

**25-06-1915** - Gwiner. Ar mintin-mañ da 5 eur eh aomp un hanter lev doc'h Orville àr lein ar menez mein-gurun ha rad a zo doc'h tu ar c'hreisteiz da zeskiñ brezelat. Met ar re a zo da benn a zo chomet staget doc'hte ar pezh o deus desket bout zo 20 vlez zo. C'hoari a raomp un euriad hanter bennak é teskiñ lakaat plaen hor fuzilhennoù ha kerzhet d'ar paz. Skuizh doc'h hor gwelet é koll hon amzer moarvat, Doue a zegas ur barrad glav hol laka da achap fonnapl ag an doullennoù wenn-hont. Diskenn a raomp d'Orville. Monet a ra an devezh a-bezh get ar barradoù glav.

**26-06-1915** - Sadorn. Ar mintin-mañ eh aomp kuit da 6 eur hepken. Deraou a raomp en em akoursiñ doc'h ar redadennoù-se. Bep eur e vez un tamm diskuizh.

Kavet a raomp parkadoù pavot, lin, fav, melchon glas ag ar c'hentañ.

An enderv-mañ eh an da Doullens get karr bras ar bedervet. Eizh omp é monet da glask gwin ha legumaj. Poan hon aes é kavet bep a hanter barrikad gwin, muioc'h c'hoazh é kaout legumaj rak ne gavomp netra. Takset eo pep tra. Monet a raomp d'ar gar evit kas pakadoù hag e welomp eno tud é tiskenn ag an tren, merc'hed é tonet da welet o gwazed, mammoù é tonet da welet o bugale, e-leizh e begin. Kant digarez a gavont da lâret d'ar jañdarmed evit kaout o laissez-passer, met ar re-mañ, sontil en o micher, a zizol ar wirionez. Unan a lâr eh a da breniñ traoù, ur moissonneuse, gwin ; lod a ya da welet ur voereb, ur vamm. Hani anezhe ne venn lâret ar wirionez ha rac'h ar paperioù-se a zo sinet get maer ar parrezioù ha ne zoujont lakaat o sinatur edan traoù seurt-se. Ur bourd eo gwelet an dud-se é ruziñ get ar chif a pan da ar jañdarm da benn a ouiet ar wirionez. Ar maréchal-des-logis a lâr dezhe donet da ziskouez ar pezh o do prenet dezhoñ...

Un interramant : ur groaz, ur beleg soudard, ur c'harr arnezhoñ tri arc'h goloet get ur c'hozh drap mortuaire, teir c'hroaz simpl get an anv àr ar plakoù tol. Div vaouez yaouank-flamm dre ar vrec'h, ur beleg yaouank é reiñ ar vrec'h d'unan anezhe. Goueliñ a raont. Dreist-pep-tra an hanni tostañ d'ar beleg. Ne c'hell ket mem goueliñ he gwalc'h rak arrest a ra hag e taol he fenn àr-dreñv hep gellout dianaliñ. Un nebeudig, un dornadig tud, div renkad soudarded. Setu ar pezh a welan hag a start ma c'halon.

**27-06-1915** - Sul. Gouel Kalon Sakret Jezuz genomp. An enderv-mañ en em c'hlouestromp dezhoñ. Devezh didrouz. Hun gousket er suler. Enderv-noz binioù ha bombard a son en 6<sup>vet</sup> Kompagnunezh ha tud a goroll. Gurunaj, glav.

**28-06-1915** - Glavaj, brumaj. Da redek c'hoazh met redadenn berr. Dec'h d'anderv eh oa tapet unan ag ar gwellañ soudarded ag ar gompagnunezh é tonet ag an davarn get ur bidonadig gwin, ha 15 deiz prizon a-wel a vo bountet getoñ rak difennet eo monet da glask gwin d'an davarn evit evet doc'h pred. Met gellout a raer, en davarn, evet ur voutailhad, div, teir, betek mezviñ !! Èl-se e raer amañ evit sentiñ doc'h gourc'hemennoù ar jeneral a lâr parraat doc'h an dud a vezviñ... Èl-mañ nend eus 'met an dud vat hag a zo ret dezhe diouwer.

An enderv-mañ eh aomp en ur prad da deurel greunadoù goulle evit deskiñ o zeurel.

**29-06-1915** - Da gerzhet c'hoazh ar mintin-mañ : an dud ne gomprenont tamm erbet da betra a c'hell servij ar redadennoù-se. Skuishaat a raont, uziñ a raont o botoù, kousi a raont o dilhad hag ar gouiañv-mañ n'o do netra arre. Gwir eo nend eo ket an dra-se en deus lâret ar jeneral deomp gober. Kerzhet meur a wezh evit digroz an divhar ha deskiñ dreist-pep-tra gober brezel.

An enderv-mañ da Doullens : na gwin, nag avaloù-douar.

**30-06-1915** - Monet a raomp en hent da 6 eur c'hoazh, met ar glav a za d'hon arrest hag e taomp en-dro. Daet a zo ur gegin deomp get rodoù. Daou geginour a zo lakaet geti ha 4 keginour da sekour. Prest da vonet da redek àr-lerc'h ar Jermaned !!

**1<sup>añ</sup> a viz Gourhelen 1915** - Baleadenn. Lin, pavot, gwinizh, segal, heiz er parkoù. Melchon àr sav ha troc'het. Sec'hiñ melchon tre-mañ doc'h o faotiñ. Tud vil, bugale fall zesket, lusteri. Tier pri ha koad. Tud pinvik-bras hep relijion ha tud paour bras.



**02-07-1915** - Revue ur Général de Brigade hag a ra e lec'h ur Général de Division. Graet a zo deomp kempenn hol leraj get siraj ha gober kant ard, hag ar jeneral a bas dirakomp en ur sellet doc'h ar parkad gwinizh a zo a-dal deomp ! Setu rac'h ar stad a ra doc'h an ardoù a zo graet deomp gober evit en em lakaat dirakton.

**03-07-1915** - Ar mintin-mañ eh aomp d'ober an ekselsis el soudarded yaouank ec'h arru er gazarn, met ekselsis ha n'en deus netra da welet get ar brezel. El kaporal-fourrier emaret din komandiñ un hanter section hag aes eo d'ar re ma anav kompren penaos eh oa aet an traoù genin ! Hag ar sous-lieutenant, ur serjant paour daet 3 pe pevar miz àr hol-lerc'h ag en Oriant, met Parizian, a esaeas ma lakaat da gompren pegen rekiz e oa kement-se evit gober ur soudard mat ! «Ar Jermaned a zo kreñv, eme-eñ, rak ma ouiont gober mat an ekselsis» !! Met ne zas ket da benn a ma lakaat d'er c'hrediñ.

Enderv : E-pad ma skrivan eh eus diragon soudarded (Mentec, Hirgair) ec'h ober sinaturioù faos àr ar Cahier Ordinaire ! Èl-se e talc'her ar paperioù er servij ! Nag ar soavon troet da vout karot ! Nag an tachoù troet da vout ler !...

**04-07-1915** - Sul. Ar mintin-mañ ne c'hellomp ket sorti a-raok 8 eur 1/2 : ar medisinour bras a za da welet mard eo mistr an traoù. An devezh a bas fonnapl get al labourioù pemdeziek. Goût a raomp e tleomp monet kuit henoazh. Tud vezv a zo arre ha kousket nend eus ket moiand gete.

Da greisnoz eh aomp kuit. Start eo kerzhet get ar sac'h doc'h ar c'hein ha ken pouk el mand eo an amzer. Bep 50 mn a raomp un diskuizh a zek minut. Dre Naours e paseomp hag e Havernas (Somme) eh arrestomp. Ne harzan ket mui get ma zreid. A pa vehe bet ret monet pelloc'h eh oan parev.

A wezh-mañ ema gwell hol lojeris. Plouz a zo a-wel. Kousket

omp en ur c'harrdi pri met plouz a-barzh. Ar vourc'h-mañ en deus bet 300 a dud. N'en deus mui 'met 200. An dud a zivro. Tier a zo da feurmiñ. Bro pinvik neoazh. Gwez fiskal ha druz. Iliz vras graet get brik.

**06-07-1915** - N'hol laosker ket da ziskuizh. Ar mintin-mañ hor c'haser, daousto d'an hent graet dec'h, d'ober service en campagne en ur park a-dreist Havernois, a-dal 6 eur 1/2 betek 9 eur. Gwir eo ne redomp ket kalz. Dre minotennou a-dreuz dre parkadoù ed eh aomp. Azezet a raomp e-kostez ar c'hleuzioù hag àr ar melchon troc'het evit selaou doc'h an ofiserion hag ar serjanted é tiviz deomp àr-lerc'h bout lennet en ul levr na gomprenont ket lod-kaer anezhe...

En ur arru a redek e lârer deomp ema ret monet kuit arre. Da Beauquesne, e-tal Orville, eh aomp da gousket. 14 km a dapomp en hevelep hent hor boa graet dec'h. Da 5 eur eh aomp kuit d'enderv hep bout debret netra a-feson (ur banne soubennn : ar c'hig ne oa ket darev) hag arru a raomp àr-dro dek eur e Beausejour. Eno, èl bepred, ema al lojeris da glask, hag, èl bepred, e farier. Goude mand dint disammet ha lojet ema ret d'ar soudarded cheñch lojeris, àr gwall an ofiserion n'o deus ket gouiet ranniñ ar vourc'h etre ar soudarded. Da 11 eur èl-kent e c'hell an holl kousket. En un tammig karrdi e kavan ma lec'h àr ur garg melchon hanter glas. Gober a ran ma zoull enne ha deraou a ran kousket e-pad ma guiguika un nebeud pousined kousket èlomp àr ar melchon ha ma tiroc'h ur c'hazh bihan a zo paket en ur gognell.

**07-07-1915** - Da 3 eur 1/2 an deiz àr-lerc'h vintin, ar mintin-mañ, e teraou an dud fichal ha blejal ; rak evit gober trouz nend eus ket par d'hon tud... Hanter brevet, hernet, krommet, e tan da benn a vonet betek al lec'h m'ema tolpet ar gompagnunezh. Un tasad kafe a evan ha setu-ni arre é postal

e-pad 17K. bennak e-kreiz ar parkadoù ed, lin, oeillette. Treuziñ a raomp ur vourc'h pe div hag atav ne gavomp 'met tier fang, tier na chomont àr o sav 'met dre ur burzhud ! Ha neoazh pennoù a weler é tiboukiñ dre an norioù hanter distak pe ar fenestri hep karrezioù. Nend eo ket ar brezel en deus foñdet ar vro-mañ. Gloevoc'h-gloev an tier. Arru a raomp e-tal Forcevillers àr-dro 8 eur. Ur pezh kanon a zo eno e-talomp evit tenniñ àr an aerlistri ; àr ur c'harr-tre-dan ema. Àr-dro 9 eur eh aomp ar vourc'h.

Diskuizh evit an holl ken 'met evidomp-ni. Monet da douch boued. Kaviñ a ran en hent mab Adol a Bouskorv, ss-lieut. En em glemm start ag ar brezel diot a raomp, ag an niver bras a dud a lazher evit mann. Lâret a ra din ema e vreur, an avokad, dre-mañ ha Robic. Lâret a ray dezhe donet d'hor gwelet.

An enderv-mañ èl ma oan éc'h ober un hun e ta an Ao. Moigneu da lâret din ema arru Robic hag Adol. Monet da evet un tasad gwin kevret. Adol a gont e vizer. Robic nend eo ket maleürus. O daou aňgajet. Komz a raomp ag ar vignoned, ar vro. Eürus omp, eürus-bras d'en em welet. Donet a ray Robic da zebriñ du-mañ un deiz bennak mar chomomp.

Get plijadur e welomp ivez an noz é tostaat. Kousket en un tamm suler. Plouzh a-walc'h edandomp. Fall gousket : re skuizh.

**08-07-1915** - Ar mintin-mañ e kemerer anvioù ar re a venn monet permission - 4 deiz a roer !! - Bout a zo re hag a sailh get ar joa. Nend ain ket-me neoazh rak ne vennan ket gwelet 2 wezh disparti ar blez paseet. Ur vezh eo atav reiñ permissionoù ken berr : louzouenn ar basianted...

Dec'h eh oa puniset daou benn fall ag ar gompagnunezh a lâre tenniñ àrnezh kentoc'h evit monet da gemer gward... ken skuizh èl ma oant.

**09-07-1915** - Monet d'an oferenn ar mintin-mañ ha da resev. Ur beleg soudard a zo da lâret an oferenn doc'h an aoter kleiz : ur vaouez gozh a respont dezhoñ. An devezh a dremen didrouz. Kaer. Roet em eus ma dilhad da walc'hiñ. Àr-lerc'h koan eh aomp da vale un tammig er parkoù, Lafabrier, Ar Pan hag an Ao. Questel a zo bet doc'h man gwelet hiziv. An Ao. Questel a chom da zebriñ genomp. Kontiñ a ra deomp ar pezh en deus gwelet, ar fariadennoù a zo bet graet get an ofiserion, dreist-pep-tra get re an infanterie a gase o zud d'ar voserezh hep bout sur ag o zraoù daousto d'ar pezh en deus gourc'hemennet ar général en chef. Bout a zo jeneraled hag a zo aet betek lakaat o zud da fardiñ er-maez hep n'en doa tennet an artilheri a-raok, pe c'hoazh e-pad ma tenne an artilheri. Èl-se eh eus bet lazhet lod-kaer ag hor re get tennoù hor c'hanonoù.

D'enderv-noz eh arru kemenn genomp e tle an tri kompagnunezh chomet amañ monet da labourat da-dal al linenn, da gempenn an trañcheoù kentañ linenn gwezharall a zo aet bremañ da vout trañcheoù eil linenn. Hep sac'h eh aer. An dud nend int ket fallgoutant. An dra na blij ket dezhe a zo an doere a lâr ne vo kaset 'met unan a bep kompagnunezh e permission bemdez. Ur blez a vo ranket evit ma c'hello rac'h an dud monet !...

**10-07-1915** - Da 6 eur eh a ar gompagnunezh àr-raok. Chom a ran-me amañ get Lafabrier. Na didrouz e vemp èl-mañ a pa ne vez nemedomp ! An Ao. Costaouec a za d'am gwelet. Ar Pan ivez. Amañ e kavomp berroc'h an amzer èlkent.

Àr-lerc'h koan e komzan get mestrez an ti lec'h ma tebromp, ur c'hozh tiig toet get plouz, magoerioù pri ha plouz dezhoñ, hanter kouezhet. An diabarzh neoazh nend eo ket lous. Gloestraoù mem a zo a-barzh ag an amzer gozh. An tiegezh-mañ en deus a-dreñv an ti un tammig liorz bihan kempennet

brav lec'h mah eus legumaj evit an ti. Bodadoù bokedoù a zo àr vord ar vinotenn ha, goude al liorz, ur pradig get gwez avaloù. Ur c'havr o deus ivez a zo é krignat er penn du-se ha div vuoc'h ag ar re bravañ... Un tammig douar labour lec'h ma laka gwinizh, oeillette, pe betrav sukr a servij d'an tiegezh da vevañ. Ar vro nend eo na pinvik na paour - etre an daou. Pep tiegezh a vev el-se doc'h un tammig tachenn. An tiadoù a zo bihan. Dibaot eo an tiadoù a 5 pe 6 a vugale. Kentoc'h 2 pe 3. Bihanaat a ra an dud ivez.

An traoù nend int ket ker-bras : 36 bl. an div zousenn uioù ; 4 real, 4 real hag ur blank al lur amannenn, 3 pe 4 bl. ar voutailhad laezh. An devezherion a c'hounit 7 real ar wazed, 5 real ar merc'hed hag int d'en em vagiñ.

**11-07-1915** - Sul. Hiziv eh an get ar gompagnunezh da labourat àr an trañcheoù. Dre Bertrankourt eh aomp betek Sailhy-au-Bois da arañj trañcheoù a zo a-dreñv Hebuterne. Ne welomp netra er vro-mañ flañgennek izel. Kouezhet a zo meur a obus amañ ar miz paseet a p'hon eus araokaet un tammig er c'hornad-se. Hir e kavan ma amzer du-se. Prediñ a raomp àr ar geot edan ur wezenn. Glav a ra àrnomp. Fall bred. Bara loued, un ui, ur gostezenn maout ag an Amerik, yen, hag ur c'hartad kafe a zo ankouaet lakaat sukr a-barzh.

D'an iliz eh an lec'h ma kavan ur beleg a vro Kerne é predeg e galleg get un accent ! Met ar pezh a lâr a ra ankouaat ar feson d'el lâret. Komz a ra ag ar meritoù a c'hellomp gounit er vicher spontus-mañ. Madoù an douar, ar brezel-mañ en desko deomp, a c'hell bout dismantret e berr amzer get ar c'hanon ; madoù speredel nend eus ket a zismantr dezhe.

E-tal ar sañtinell àr hent Hebuterne eh eus ur c'halvar etre peder gwezenn. Deiz ar bombardemant bras, un obus a zo kouezhet àrnezhon ha bountet an tan a-barzh. Ne chom mui 'met an troad savet truek trema an Neñv. A-skribilh doc'h ur

wrizienn, ur farsour en deus staget un askorn bevin ha merket àrnezhon : « *Antiquité. Os de Napoleon tué au combat d'Ebuterne (sic) le 16 août 1915 !* »

Labourat a raomp amañ e trañcheoù na zo bet biskoazh soudarded enne. Ne welan ket forzh kaer da betra hol lakaer d'ober 4 lev bemdez evit donet d'ober labour didalvez. Àr an hent e kavomp soudarded yaouank hag a za trema Forceville da labourat... Penaos dizurzh !...

**12-07-1915** - Lun. A bas didrouz. Chom a ran e Forceville. Arru 'ra genomp an doere ma chomomp da labourat tostoc'h da Forceville hag e vo kaset ar re a za a Sailhy en hol lec'h. Èlkent !

Met setu, a pah aomp d'en em astenn àr hon dornad plouz, ar c'homandant é tonet da lâret deomp eh aomp kuit trema an Division Coloniale c'hoazh..

Setu un doere ha ne ra ket kalz a blijadur da hani ac'hanomp. Da Beauquesne eh aomp, 12 pe 14 kil. d'ober àr droad àr un hent hon eus graet an deiz 'rall...

**13-07-1915** - Meurzh. Setu-ni arre é monet èl keizh loened touchet tre el lazhdì a-dreuz dre parkadoù gwinizh, segal, oeillette, lin ar flagennoù-mañ.

Komañset int da droc'hiñ ar segal a lakaont a « Vogettes » ; baotoù, stagell doc'h ar begoù (el lin a renkadoù digor doc'h an treid ha harpet an daou benn). Soudarded a ra al labour.

Arru 'raomp e Beauquesne e-kreiz mintin hag e lârer deomp ne rimp ket kozh askorn amañ c'hoazh... En ur c'hozh tachad e kouskomp e-tal ur bern lin... Kalet eo an traoù rak nend eus ket 'met un troc'hadig plouz torret edandomp.

**14-07-1915** - Gouel ar Republik. Da beder eur e savomp e'it monet àr-raok. Met ne ouiomp ket mard aomp kuit.

Dec'h e oa roet jambon, cigare, confiture, piz e boestoù e'it gober Gouel ar Republik met moarvat n'hellimp ket pourfitiñ anezhe hiziv.

D'un eur eh arru kemenn genomp da vonet da gantoniñ da Talmas (8 kil.). Àr-dro peder eur eh arruomp e-tal ar vourc'h. Glav a gomañs kouezh àrnomp, da gentañ a-dapennou ha goude a-boullad. Ar c'hampemant a zo ec'h ober e labour, met ret eo cheñch an tachadoù choazet kentañ. 6 eur paseet e oa a pand omp aet er vourc'h, hanter treuzet. Ha lec'hioù da gousket ! Ema an dud an eil àr egile, hep plouz, àr koad oeillette. Me 'ya-me en ur suler. Na penaos suler ! Àr an douar. Ar vagoerioù pri a zo rac'h toullet... En em c'hronniñ a ran e ma lien tant hag e pasean an noz get un tammig droug d'am c'hostezioù met hep aneoued.

**15-07-1915** - Arsavet en deus ar glav. An noz paseet, roñseed a zo distaget er porch lec'h ma oant. Hag ema galvet ar charretizion rak taolet eo ar gare àrnezhe bout distaget o roñseed. Naour en deus en em zifennet un tammig rok hag ar c'holonel, àr ar ru, a grog en e varv, a denn àrnehi hag a vount ur flankad getoñ en ul lâret dezhoñ e vounto 15 deiz prizon getoñ. Naour, chifet, ne lâr ger met engortoz eo da gas an traoù pelloc'h...

Ar c'hapiten ne venn ket ma vo puniset Naour peogwir n'en deus graet netra.

Da greisteizz eh aomp kuit a Dalmas e'it monet da gemer an tren da Amiens (gare St-Roch). 1 deiz boued tren a raer deomp ha boued 2 zeiz e'it goude. Krediñ a raomp hor c'haser d'an Alzas. Bremañ eh arruo bep seurt traoù genomp a pand omp staget doc'h ar C'holoniale.

4 kil. hag un dra bennak a zo d'ober àr un hent plaen ha eeun el ur reilhenn. Hanter hent e welomp, en un taol, e distro an hent, kêr Amiens du-se, pell : an iliz-veur a sav uhel he

zourioù hag he zoenn a-dreist kêr. Arrest a raomp kent Amiens en ur parkad segaleg troc'het an deizioù a-raok. Ema c'hoazh ar segal a baotoù. Debrñ a raer ur pred. Get ar c'heginioù nevez e raer boued en hent hag e c'heller tapiñ ur begad a pa arraster. Hed-ha-hed get an hent e kaner er 4<sup>vet</sup> Kompagnon. sonennoù diot ag ar gazarn... Ur yoc'h tankirri a gavomp àr an hent, tudjantil ofiserion enne é monet hag é tonet etre o c'hantonemantoù hag Amiens. Bout a zo re ha ne ouiont ket petra eo bout er brezel.

Da 6 eur e Amiens. Tost dek eur pah aomp en tren. Bagonioù loened get brichoù.

Pas dre 'tal Pariz, Canal St-Denis, Meaux, La-Ferte-sous-Jouarre. Un tammig a-raok Nogent e teraou ar gwiniégi. Bro é cheñch. Pinvikoc'h.

**16-07-1915** - Noz truek en hent-houarn. (Tremen dre ruioù Amiens e'it monet d'ar gar. Tier mem uhelled, hañval-tre, get plakenn an hevelep kompagnunezh asurañs ; ne vanke ket mui dezhe 'met an hevelep niverenn. Ar merc'hed àr an norioù a oa hañval.) - Setu Epernay. Ne arrestomp ket c'hoazh. Betak Avize, ur garig vihan e-kreiz ar winieg (11 h). É tremen e Epernay an dud a ra gwign deomp. Amiaploc'h eo an dud dre-mañ ha plijadur a ra d'hon daoulagad gwelet en-dro tier graet get mein, ha tud dereat hag amiapl.

Goude bout predet en ur prad e-tal ar gar eh aomp get un hent doc'h tor ur menez goloet a rezin betak bourc'hig Cramant, ur vourc'hig mistr ha pinvik, tier a c'heller lojiñ enne. Fournis, ar gwin ne goust nemet 9 blank. Lojet mat eo an dud ha koutant int.

Ag ar vourc'h e weler trema Châlons pell, pell ; 40 kil. a-wel, get rac'h ar blaenenn pinvik a zo izeloc'h e'it Epernay betak Tours-sur-Marne. Lojet omp un nebeudig e pep ti. Me 'zo-me e ti Moun, ur Jerman en deus prenet ti un den ag ar



vro. Ar gouarnamant en deus-eñ kemeret a-c'houde ar brezel. Kousket a raomp mat ha diskuizh a raomp.

**17-07-1915** - Sadorn. Amzer gaer. Pep unan en em gempenn, a walc'h. Glav a ra. Ar c'holonel a c'houlenn eskuz get Naour.

**18-07-1915** - Sul. Diskuizh c'hoazh. En oferennoù an iliz a zo leun. Nend eus ket kalz a lec'h e'it tud ar vro. Arc'hoazh eh aer d'ober an ekselsis !! da-dal Epernay. E-pad an amzer-se ar Jermaned en em gempenn harz-pe-krev da sailh àrnomp ha da zonet da benn ac'hanomp.

**19-07-1915** - Lun. Amzer gaer. A-vintin eh a al labourizion àr-dro ar winiegi, ur sklisen rezin doc'h o c'hein, ur stropez àr o skoaz, ur voutailhad gwin pe ur bidonig koad en o dorn. Gwisket int mistr daousto d'al labour eh aont d'ober. Ar merc'hed yaouank hag ar re 'rall a ya d'o zro, fresk-bev, o benveg àr o skoaz, o fas gwarantet doc'h an heol get ur c'hapot hag un disheolier a-dreist o fenn.

D'enderv-noz eh a Lafab. ha me da welet distro al labourizion. Doc'h serr-noz e taont d'ar gêr, lod àr droad, lod e kirri, bepred mistr, bepred dereat. Ar parkadoù rezin a zo duse a-gleiz hag a-zehou get o del glas-dour, glas-melen pe glas-gwerc'h, reve mad int bet sulfatet kalz pe nebeut pe ma nend int ket bet. Rac'h ar parkadoù-se a zo renket brav, èl parkadoù kaol pe legumaj. En o mesk kapotoù ar merc'hed a ra èl pikol bobelanoù a ya ag ur bod d'ar bod arall.

Tud ar vro-mañ a zo brav, gwazed ha merc'hed. Ar merc'hed dreist-pep-tra en deus daoulagad splann ha don hañval doc'h merc'hed an arvor a Vreizh. Bras int evit gellout morvad kemer rac'h ar blaenenn divent, an tostennoù stank ha koadek a zo astennnet dirak an daoulagad. An dud en em zalc'h mat met

hep ardoù, a zo seven hag a gomz mat an eil doc'h egile. A pa vehe hor bro ken mistr èl ar vro-mañ, a-dra-sur ne vehe ket par dezhi ! Na diskuizh a ra hon daoulagad àr-lerc'h bout gwelet en Artoaz !

**20-07-1915** - Meurzh. Ar gompagnunezh a ya da redek arre (12 k.). Lafabr. a zo aet kuit hag e choman d'ober labour ar burev.

Rouxel a za a bermision hag a gont deomp ema leun an Oriant a re « kuzhet ».

**21-07-1915** - Merc'her. 4 eur. Donet a ra Ar Port da lâret deomp nend aomp ket kuit d'ar march met eh aimp kuit henoazh pe arc'hoazh vintin. Komz a raer à Reims... c'hoazh. Setu ur blez hon eus graet an hent-se e'it ar gentañ gwezh.

**22-07-1915** - Yaou. Da 1 eur hanter e taer da lâret deomp ema digemennet deomp monet kuit hiziv. Gwell-a-se ! Àr-lerc'h ar rapport eh ouïomp eh aomp d'ar 25 da Poix, a-gleiz da Châlons. 5 lev d'ober àr droad a-dal ar gar d'ar vourc'h-se.

Ul lizher daet ag ar jeneral Joffre a zegas soñj d'ar vistr ne zleer lakaat ar soudarded d'ober an ekselsis 'met ar bihanañ-ar-gwellañ. Bremañ e tleer deskiñ dezhe gober ar brezel. Met ne vo ket selaouet get hon ofiserion rak al lod muiañ anezhe ne ouïont 'met an dra-se. Nend eus ket tu dezhe deskiñ d'ar re 'rall ar pezh na ouïont ket o-unan.

**23-07-1915** - Hiziv da 5 eur eh a ar gompagnunezh da redek (10 K.). Nend eo ket aet un hantereur kuit ma teraou ar glav da gouezh a-boullad. Dec'h eh oa graet dezhe naetaat o fuzilhennoù a-bezh ha hiziv glav àrnezhe....

D'enderv e lârer din eh an get ar c'hirri arc'hoazh vintin.

Kenavo da Cramant ha d'he zud seven ha karadek ! 'Gozik

e karen ar vro-se hag he zud a lâr deomp ema get keuz hor gwelont é pellaat...

**24-07-1915** - 2 eur mintin. Sevel.

Eh aomp àr-raok, ur steud kirri, mitrailleuses ha roñseed. En un herradig e tiskennomp er Champagne pouilleuse. Plaenennadoù ed berrik-berrik ha treut, koadoùier sapin, bodadoù genièvre, kiriz ha kant ha kant bokedig gouez a bep seurt liv a gaver d'al liesañ en tachadoù-se. Àr an hent e kavomp bourc'hoù a zo teir pe peder tachenn enne hag evit pep bourc'hig eh eus un ilizig.

Kent diskenn e treuzomp Avize hag a zo, èl rac'h ar bourc'hoù ag ar vro winiegel, ur berlezennig. Pas a raomp goude Flavigny, Les Istres, Thibie, Coolus lec'h mah arrestomp da zebriñ e-kreiz park ur maner, Sarry lec'h ma kouskomp. Ec'h arru e Sarry e kavan Lettry Morice ha Plateau Georges. Levenez !

Debriñ er-maez met glav a gouezh ha taol an traoù dre ar fenestr an ti. Kousket dous-dous àr un tamm plouz.

**25-07-1915** - 4 eur mintin. Monet kuit dre Moncetz ha L'Epine. Glav. Er vro-mañ nend eo ket ken amiaapl an dud. Graet a zo vilonaj dezhe an taol kentañ ha bremañ ne fiziont ket mui.

Àr-dro 7 eur e-tal L'Epine. Da 8 eur -1/4 e paseomp a-barzh. An tu dehoù ag ar vourc'h a zo bet losket setu pell 'zo moarvat rak gwenn-kann eo endro ar vagoerioù. Iliz kaer rac'h dantellet (gothique).

Ac'hale-se eh aomp da Gourtesols lec'h ma kavan ur yoc'h Breizhiz, en o mesk mam breur-kaer n'am eus ket gwelet setu tuchant ur blez, ha mab maer Gwidel. Setu du-se Sommes-Vesles, hag àr-lerc'h Poix. Bout a zo atav ul lev vat etre pep kêr er vro-mañ hag etreze parkoùier hag a zo e-kreiz anezhe

parkadoù koad plantet ken eeun. An ed a zo berr ha fallik. Lakaet int ivez Doue oui penaos, ha sec'hour a zo daet. Atav ne gredan ket e labourer gwallik er vro-mañ. An douar a chom hep bout teilaet. Loened nend eus ket da fournis kardell.

Poix a zo ur vourc'hig dister, 160 a dud hepken. Ar vestrezskol, un damezell a Bariz, hor resev ar maeri ; sekretourez eo. Hi a lâr deomp petra hon eus d'ober (ema àr-dro 11 eur).

Monet a raomp da breidiñ da di an davarnourez (nend eus ket 'met un davarn hag a zo ivez burev butum). Lazhet eo he gwaz. Monet a raomp e rac'h an tier hag e lod kaer anezhe e vank tud. Ar gompagnunezh a arru da 8 eur. Lojiñ pep eskouad hag an ofiserion. Me 'zo-me en ur sulerig dister a-dreist ur c'hovel. Ar Jermaned o deus losket un 20 ti bennak en ur vonet kuit ac'halemañ.

**26-07-1915** - Diskuizh e'it ar gompagnunezh. Gouel Santez-Anna. Predeg an Ao. Moigneu a gomz deomp a c'houarnasion hor patromez en hon c'heñver. Kan met perak ar predegour a gar dreist-pep-tra ar galleg ? Èl-se ivez e vez graet e Breizh mard eus 5 pe 6 en ur barrez na gomprenont ket brezhoneg, e komzer galleg evit gober plijadur dezhe rak m'emaint tudjentil. Ne vo ket graet ur seurt en ur barrez ag ar c'hêrioù pe ribl ar vro gallek evit ur barrez hag a zo a-barzh kement 'rall a dud ha ne gomprenont ket forzh kaer ar galleg...

**27-07-1915** - Ekselsis !! Glav a ra un tammig met Yann Soudard a sec'ho diwezhatoc'h... Amzer divalav ur seurt evit ar c'houlz-mañ rak penaos e vo serrret en eost ?

**28-07-1915** - Kroget eo an amzer gaer. Chom a raomp amañ didrouzik. Bet on bet ec'h ober ur bale er c'horn losket ag ar vourc'h. Ne chom mui met tammoù magoer gwenn-

kann, èl rac'h ar magoerioù mein-rad gwalc'het d'an amzer. Mekanikoù da labourat a zo chomet en tan ; emaint c'hoazh eno hanter interret edan an dihaolaj, loaget get ar wrez, tammoù anezhe savet d'al lein èl divrec'h é c'houlenn get Doue kastiziñ an dud digalon en em laka àr-dro an traoù hep buhez evit torriñ ar c'has o deus doc'h ar re bev...

**29-07-1915** - Atav da redek. Me 'chom-me atav er burev hag eh an d'ober ur valeadenn betek ur meni motte feodale a zo d'an diaz ag ar vourc'h. Goloet eo a goad ha doc'h tu ar c'hreisteiz eh eus ur c'hav a zo bet graet goude ar bern douar-se. Àr lein eh eus un toull hañval doc'h Menez-Mikel Carnoet met bihanoc'h.

**30-07-1915** - Labour get ar prêt. Ne chom mui 'medon er burev. Lafabrier a zo chomet klañv hag ar chef a zo aet permission.

**31-07-1915** - Devezh didrouz. Ar vestrez-skol a brest levrioù din hag e kavan berroc'h ma amzer a pa ne vez netra d'ober. Ur vaouez yaouank ag an Ardennes dimezet amañ, a lâr din nend eo ket ken paour ar vro èl ma kreder. Met ar blez-mañ ne oa ket teil, na tud, hag an amzer a zo bet fall. Glav n'en deus ket graet a pa oa dober anezhoñ. 'Gozik rac'h ar beizanted a zo perc'henn. Argant a raont e-leizh get an heiz.

**1<sup>añ</sup> a viz Eost 1915** - Er rapport e lâr ar c'homandant deomp eh omp risklet-bras da achap arre arc'hoazh vintin. Monet a ran da St-Julien d'enderv da douch argant get an trezolour. E-pad mah on eno eh arru an doere eh omp lakaet get an 16° Corps evit labourat àr-un-dro get ar Génie.

**2 a viz Eost 1915** - Da 4 eur e sav bec'h evit monet àr-

raok. (Da Croix-en-Champagne eh aomp da lojiñ.) Da 5 eur eh aomp àr-raok.

Setu ur blez hiziv eh omp dispartiet doc'h hor bro ha doc'h hon tud.

Arru a raomp e Croix àr-dro 10 eur. Lojet eo ar gompagnunezh e porchoù digor d'an avel. Eh omp amañ àr lein un dostenn a welomp diàrnezh an obusoù é kouezh pell du-se trema Beausejour. Kousket a raomp en ur suler leun a blouz brein, brevet ha heuennek.

Ar mintin-mañ, kapiten an eil kompagnunezh, Lescaze, a gav krouget doc'h ur wezenn sapin ar soudard Ar Fouler a Laouelan. Get an anken ag ar brezel en deus en em lazhet.

**03-08-1915** - Da 5 eur eh aomp en-dro àr-raok trema Cabannes-et-Puits, ul loj hag ur puñs e-kreiz ur c'hoadig. Gober a raomp 12 pe 14 kil. a-dreuz dre ur vro paour, treut, goloet a sapinegi krazet. Nend eus 'met un dra en douar : bokedigoù dister ag ar re kaerañ. Hañval e vehe en dehe an Ao. Doue tolpet en tachadoù desolet-se ar c'haerañ bokedoù naturel ag ar c'hornad bro-mañ.

Arru a raomp get Sommes-Suippes lec'h ma tougomp ar fuzilhenn d'ur vered leun a soudarded. Setu pell zo n'em eus ket gwelet kement en hevelep tachad. A-raok Sommes-Suippes e kaver ur gêrig lojoù savet d'ar soudarded. Gronnet eo o lojoù get gwez ; liorzhigoù a zo e-talte ha legumaj enne ; ruioù a zo graet : lâret e vehe ur gêrig ag ar broioù gouez.

A-dreuz dre parkoùier marne ha nend eus àrnezh met tammigoù geot ruz eh aomp eeun diragomp betak ur c'hoad sapin lec'h mah eus lojoù ivez a-yoc'h. Eno ema hol lec'h. Amzer diharak a ra, avel spinec'hus èl e miz Meurzh. Yen eo.

En ur arru e kavomp ar 1<sup>er</sup> Colonial a zo daet amañ da labourat èlomp ivez. Mam breur-kaer a zo amañ.

D'an noz e kouskan edan bache ar c'harr bras àr sec'hier

met an deiz àr-lerc'h e arañjan ma zraoù edan an douar e-tal ur goban lec'h ma ran mam burev. Debrñ a raomp en ur c'harrdi barroù. Dour nend eus ket. Solut a ran ul lavabo get ur gamelle a stagan doc'h ur wezenn sapin. Un toullig a-barzh hag ur broch koad. Ur c'harr a zo roet deomp, get ur jao hag un den, hag a ya da glask dour evit ar 1<sup>añ</sup> hag an hanter ag ar gompagnunezh. An hanter arall a zo e Cabannes.

**04-08-1915** - Komañs a raomp en em gustumat doc'h ar boullou sapin...

**05-08-1915** - Netra a nevez. An noz paseet ema bet hon tud é labourat àr an trañcheoù. Monet a raont hep armaj da stenniñ orsal pikek ha da blantiñ postoù a-dreñv al linennoù gentañ. Tenniñ a raer àrnezhe met oar o deus d'en em guzhet.

**06-08-1915** - Bemnoz eh aer da labourat. An noz-mañ e tap unan ag ar 1<sup>añ</sup> kompagn. ur boled en e c'har. Nend eo ket dañjerus ar gouli.

**07-08-1915** - Nend eo ket divourrapl-bras amañ, met sec'h an traoù ! Gwin a gaver neoazh en intendance evit 6 blank ar voutailhad hag e c'heller reiñ meur a wezh 3 c'hart bemdez d'an dud. Eürus-bras int a gement-se.

Bemnoz e kevomp an traoù é rudellat trema al linenn. En Aisne, meur ar wezh e veze un diskuizh bennak ; amañ dehan erbet, 'pad an deiz, 'pad an noz ema ar c'hanonoù, ar fuzilhennoù, ar bomboù, an torpilhoù é strakal.

An Ao. Moigneu ha daou pe tri den a volonteiz vat a sav ur chapelig er c'hoad lec'h mah omp. Arc'hoazh e vo oferenn a-barzh. Ul lojig graet get koad sapin. Ur groaz koad doc'h an tal, tammoù sapin kroazet-digroazet doc'h an tre, ur blankenn bennak èl aoter, ul lien tinell, ur groazig graet en ur maen-rad

get un den hag a labour e'it beredoù, daou gantuler graet ur seurt, setu rac'h ar chapelig-se. Doc'h an tal neoazh ur gartenn-postal a weler get limaj Santez-Anna ; rak da Santez-Anna-ar C'hoad ema glouestret ar chapelig-mañ.

**08-08-1915** - Oferenn. Pas kalz a dud. Kan : kanennoù brezhoneg.

**09-08-1915** - Diviz d'an noz àr an traoù brezhonek get Breizhiz na anavont netra ag o bro. Betak 10 eur e chomomp da ziviz. Àr al linenn e tarzh an traoù er momand-mañ.

**10-08-1915** - 4 eur. E taer da lâret deomp eh aer kuit da 6 eur ar mintin-mañ. Dle e oa d'an Division Coloniale fardiñ da noz àr ar Jermaned met ne raer netra. Kerzhet a raomp edan ur wrez pounner hag ar c'homandant, e-lec'h hol lakaat da vonet a-dreuz dre ar parkoù, hol laka d'ober 5 kart lev bennak re !!

Treuziñ a raomp Sommes-Suippes, Somme-Tourbe. Ar vourc'hig-mañ a zo rac'h diskaret. Ar soudarded en deus savet tier ha graetajoù, lod anezhe forzh forniz el ar c'hlañvdi gronnet get tachadoù geot ha bokedoù ha minotennoù sablek.

Diskuizh a raomp dre bep div wezh (bep 50 mn.) met kement-se ne barra ket e kouezh bep 20 m. soudarded àr an hent, lazhet d'ar wrez ha da bouez o sac'h. Ha lâret e oa deomp eh oa da Sommes-Tourbe eh aemp. Setu-ni aet en tu 'rall, ha treuzet Somme-Bionne, lec'h ma kavomp soudarded ag ar C'holoniale ag ar vro, ha goude Valmy e welomp un delwenn a-dreist ar vourc'h, àr lein ar menez. E gar Valmy ema gar ar ravitaillement evit an arme a zo amañ. Leun eo ar parkoù tro-ha-tro d'ar gar a blouz, a goad, a draoù a bep seurt evit ar soudarded. Leun eo ar gar ivez a ofiserion ha soudarded ec'h ober àr-dro rac'h an traoù-se. Pelloc'h eh aomp c'hoazh.



Arrest a raomp èlkent àr-lerc'h bout graet ur 5 lev bennak e Dampierre-sur-Aisne, en un dachenn leun a zeñved.

Kousket a ran àr lein ur bern foen en ur c'hrañj. Fall gousket, droug penn. Tarzhal a ra ar c'hanon spontus e-pad an noz, 'tro ar mintin.

**11-08-1915** - Chom a raomp amañ e-pad an deiz. Àr ur blankenn en ur manej ema ret din gober ma faperioù. Debriñ a raomp en ur park en tu 'rall d'ur riolenn edan gwez avaloù. Ret eo deomp treuziñ ar riolenn àr ur blankennig a bleg edandomp. D'an noz, goubanwel, e welomp tenniñ àr aerlistri ur yoc'h tennoù. Kousket c'hoazh en ur suler. Arc'hoazh vintin eh aomp kuit.

**12-08-1915** - Mintin, 5 eur. Monet kuit trema al linenn. Treuziñ da gentañ plaenenoù goulle hag en un taol, en un distro, setu dirak hon daoulagad flagennoù ha tostennoù ag ar re kaerañ goloet a wez avaloù, a frouezh. Hag en ur flagenn, staget doc'h an daou du ag an daou menez, Chaudefontaine, hañval doc'h ur vourc'hig ag hor bro.

Kerzhet a raomp bepred dre zindan alezioù koad. Ar ribl an hentoù eh eus gwez avaloù. Tuchant eh arruomp e-tal ur gêr, Neuville-au-Pont, graet rac'h get plañch goloet get teolennoù. Ur gêr trist en ur vro kaer... Leun a soudarded. Ar gar leun a draoù evite. Atav e kerzhomp betek un dorgenn a zo àrnehi un dachenn baour : Araja. Penaos anv ! An ofiserion a ya d'an dachenn ha ni e lojoù hañval doc'h re saboterion ; lous, toullet. Me 'gousk-me e ma hamac er-maez. Glav a ra ! Ar re a zo er c'hobanennoù nevez a zo gwlebet. Tarzhal a ra an traoù.

**13-08-1915** - Glav, yen, gwlebet kousket, debriñ er-maez. Donet a ra ar strouilherez deomp.

**14-08-1915** - Labourat a ran da sevel ul loj.

**15-08-1915** - Gouel Maria Kreiz-Eost. Chapelig e-kreiz ar park. Nend eus ket kalz a dud. Kanal brezhoneg ha galleg. Glav atav. Atav e tarzha an traoù.

**16-08-1915** - Goût a raomp en devoa an deiz arall ar Jermaned pourfistet ag ur barrad glav arneñv evit fardiñ àr hor soudarded. Daet e oant da benn a gemer ar fozelloù kentañ, met kentizh get hon artilheri eh oa graet dezhe skarzhiñ. Ur yoc'h anezhe a oa chomet àr ar bratell. Ag hor re-ni ivez e oa chomet.

Da Gourtemont pe da Neuville-au-Pont eh aer bemdez da glask evaj ha boued. Lâriñ a raer ne chomimp ket c'hoazh gwall bell er c'hornad-mañ hag e vimp kaset d'an Alzas.

**17-08-1915** - Chom a rimp moarvat pelloc'h e'it ma kredemp en tachad-mañ. Achu a ran ma loj. Nend eo ket ag ar c'haerañ anezhoñ. Da noz e vez brumennoù yen hag àr an deiz ema sklasmus an amzer èl e miz Meurzh.

Henoazh eh oamp astennnet àr hor plouz, ne oamp ket c'hoazh kousket, a pa zeraouas ar pezhioù bras da denniñ arre. Ha kentizh àr-lerc'h ar pezhioù 75 a skop, a skop ken nend eus ket mui diforc'h erbet etre an taoloù. Monet a rezomp er-maez da welet hag, àr du Marie-Thérèse du-se, nend eus ket dehan erbet d'ar fuzeoù da sevel. Re gwenn, re sterennek, re gwerc'h, re ruz. Un hantereur vat e padas an traoù.

**18-08-1915** - Arru a ra botoù-ler nevez, rochedoù, flanelloù, kalsonioù nevez genomp, ha bec'h arre evit reiñ da beb unan ar pezh a vank dezhoñ.

Goût a raomp, dre lâret, ema ni en deus fardet àr ar Jermaned dec'h d'an noz ha kemeret ur fozell doc'hte. Pep

unan d'e dro ! Koll, gounit ; gounit, koll !... A p'en dehe pep enebour argant ha tud a-walc'h, ar brezel a c'hellahe padout el-se kant vlez...

Henoazh e tarzha an traoù c'hoazh, rak en tachad-mañ ne dremen ket un deiz, un noz hep ne vez un tarzhad bennak... An dra-se neoazh ne barra ket doc'homp a gousket dous àr ar foen pe àr ar plouz. Ma c'henseurt-loj neoazh ne gousk ket re zous : aon en deus ken ne vramm ag ar rac'hed. Hag ar vro-mañ a zo leun a re vras el kizhier, na lart ! An disterañ ma klev un dra bennak é fichal en em laka da c'hourdrouz ha da c'hrognognat.

**19-08-1915** - Atav ema fresk an amzer. Rac'h eh omp souezhet. Ar Génie en em glemm ne labour ket trawalc'h hon tud. Neoazh ar serjanted a lâr e labouront harz-pe-krev. Ar wirionez : gwall vall eo gober al labour hag e-lec'h lâret an dra-se d'hon tud evit reiñ kalon dezhe en o diskalonekaer é lâret dezhe ne labouront ket a pa raont ar pezh a zo moiand d'ober. Rac'h ar re en deus gwelet hon tud é labourat hag an dud yaouank ag an active a lâr a-walc'h nend eus ket da baraviziñ an daou labour.

**20/21/22-08-1915** - Netra a nevez 'met un tregontad obus bras bennak en deus tennet ar Jermaned e-tal Maffrecourt hag e-tal Neuville-au-Pont. En tachad kentañ eh eus lazhet 3 soudard hag un nebeudad roñseed. Toullet eo rac'h an hent a-raok arru er vourc'h. D'an 20 ha d'an 22 e tennont.

**23/24/25/26/27-08-1915** - Ne fichomp ket ag hor park ha bemdez ema an hevelep buhez. Re é monet e permission, re ec'h arru. Tankirri a gantoù é tremen deiz-ha-noz, é kas koad ha dañvez kreñvlec'hioù, an tren bihan ha kirri artilheri é kas obusoù. Nend eus ket dehan erbet. Souezhet eo ar spered

da gement a draoù, da gement a labour evit sekour get en Ankoù gober e labour hirius. E-pad an noz eh eus ur rummad soudarded bennak é pas pe é tibas, hag ar re a zo tost d'an hent nend eus ket tu erbet dezhe da gousket. A-c'houde mard eo kaeraet an amzer ivez ne zehan ket an aerlistri a vale. Dec'h d'enderv hag ar mintin-mañ (28) e oa oc'hpenn 15 en aer ag an amzer ha bec'h gete get o mitrailleuses é klask en em ziskenn. E-pad an noz eh eus bet ur vandenn é teurel bomboù àr gar Neuville-au-Pont. En ur bas a-dreist Araja o deus lesket unan da zeval ivez ha kement a drouz he deus graet mard on dihunet groñs. Loargann gaer a zo ivez hag ema aes dezhe bale.

**28-08-1915** - Bemdez e sav tabut get an dud é klask monet permission an eil a-raok egile. Ar roll a oa graet reve an niver ag ar vugale ha reve ar c'hours ma oar daet àr dalbenn ar brezel, reve ivez ma oar soudard mat pe fall. Met setu, èl bepred bout a oa re, e-mesk ar re na veritent ket èl rezon, hag a gave nend ae ket buan a-walc'h o zro. Ha dre forzh loagiñ, en em vountiñ, emaint daet da benn a gemer lec'h ar re gentañ... Trouz neuze ! Aet eo ordonnance ar c'hapiten, hag a zo dizimez, unan ag ar re gentañ kuit ; hag àr-lerc'h, re hag a vezve a-raok re ha ne vezvent ket... Ha rac'h an dud-se a gomz a justis 'tro an deiz...

Ar vedisinerion, daousto d'ar bec'h a zo bet àr o lerc'h er Gampr, nend int ket furoc'h : unan yaouank a zo genomp, Hudes, a lâre d'ur soudard : «Mar dait c'hoazh d'ar vizit, m'ho pounto a-barzh ! » Hag an deiz àr-lerc'h ar soudard a zae c'hoazh. Ar medisinerion a ras dezhoñ en em ziwikiñ rac'h evit sellet doc'htoñ : d'enderv eh oa bet kaset d'ar c'hlañvdi !!

**Noz 28-08-1915** - Pouk eo bet an amzer ken ne oa pouk a-walc'h. Du-se doc'h tu ar c'huzh-heol e sav arneñv. Luc'hed, brogon a splann en noz. Donet a ra an arneñv en arbenn d'an

avel ha tuchant e strak an traoù : al luc'hed a dreuz an oabr ag ar c'hreisnoz d'ar c'hreisteiz hep arsav. Splanniñ a ra an douaroù ken ne weler an traoù disterañ el àr-greiz an deiz, ha kentizh e kouezh an holl draoù er brasañ teñvleded. Doc'h tu Forn Pariz e sav fuzeoù en aer ag an amzer. Sur a-walc'h e strako ivez an traoù doc'h an tu-se tuchant rak ar Jermaned a zo re vat da fardiñ àrnomp a pa zo amzer divalav. Met n'o deus ket oar da ziboukiñ penn o fri : setu hor pezhioù kanon é kas houarnaj dezhe muioc'h e'it bihanoc'h hag e-pad un herrad ne ouier mui ha gurun Doue pe gurun an dud a ra ar muiañ a safar. Spontuset ur gweladenn !... Sevel a ran evit gwelet an dra-se : brav ha hirius eo...

**29-08-1915** - Ar Jermaned get o fezh bras a denn àr Neuville-au-Pont hag a lazh ur vaouez, ur c'hrouadur hag ofiserion ha soudarded o doa graet o lec'h en ur c'hav. An tan a grog en ur boberezh.

**30-08-1915** - D'enderv-noz, àr-lerc'h koan, e kouezh tri pe pevar obus àr an tachad lec'h mah omp. Ne raont droug erbet.

**1<sup>añ</sup> a Wenholon 1915** - Netra a nevez. D'an noz e choman un herrad da sellet doc'h ar projektionoù a daol Frañsizion ha Jermaned en aer ag an amzer evit gwelet an aerlistri a zahe da vale. Fuzeoù a sav ivez e kement korn a zo ha meur a wezh ul luc'hedenn ha goude trouz mouget un obus é tarzhal a lâr din en deus tennet ur pezh kanon. Eh an da gousket.

**02-09-1915** - An enderv-noz-mañ eh aomp kuit. D'an dostenn 202, trema Sommes-Suippes, eh aomp. Un herrad àr-lerc'h e taer da lâret deomp ema da Donmartin-sous-Hans, e-tal Courtemont, eh aomp.

Hag ar glav da gouezh muioc'h e'it biskoazh.

Edan ar glav eh aomp d'ober ar c'hampemant. Get keuz, e-leizh a geuz, e tilezomp Araja, rak poan hon eus bet eno é kempenn hol lec'h ha bremañ ema ret deomp monet d'un tachad arall d'ober ur seurt hag an dra-se en ur vourc'h lec'h ma vimp jablet arre get an ofiserion ha get o ardoù.

Treuziñ a raomp Courtemont lec'h mah eus ur yoc'h dañvez, gitounioù, koad, tol, traoù evit toñ, un heskennerezh dre dan.

Donmartin a zo tostik-tra. Ur vourc'hig trist ha paour eo, a lâr ar soudarded. Chomet a zo a-barzh tud ag ar vro hag a gomz ur meni galleg ken fall pe falloc'h e'it an hanni hon eus klevet e lec'h arall. An dud-se a werzh traoù ar c'herañ ma c'hellont d'ar soudarded hag a ziviz a rentiñ servij dezhe.

An dud a gousk en ur c'harrdi bras a zo bet savet un c'hoari-lec'h a-barzh d'ar 5<sup>vet</sup> D<sup>on</sup> Coloniale. Emañ an eil àr egile. Ha ni, ni 'ya en ur c'harrdi arall ; me etre ur mekanik da zorniñ hag ar vagoer lec'h ma pasan an noz é kreniñ get an aneoued.

**3 a Wenholon 1915** - Kaeraet en deus an amzer. Arru a ra genin an doere ema marv ma zad-kaer. Start eo bout dispartiet doc'h ar re a garer ha gouiet e kuitaont ar bed-mañ.

**04-09-1915** - Fang, glavaj. Arc'hoazh eh aomp kuit arre.

**05-09-1915** - Da Gourtemont eh aomp. Fonnañpl eh aomp doc'h taol rak a-raok mah ouiimp netra e vo galvet ar c'hampemant.

Ne oa ket c'hoazh achu pred ma taer d'hor c'hlask. A-benn ema ret monet kuit. Ur 400m. bennak a zo etre Courtemont ha Donmartin ; an hent a zo goloet a fang hanter sec'h a rusk èl soav. A pa vehe ret deomp gober hir hent àr un hent seurt-se e vehe start an traoù.

Klask ar c'hantonemant nend eo ket diaes. Karrdioù hep plouz, lod get toulladoù dour : setu evit an dud. Kamproù hanter diskaret, leun a razhed, get ur gwele orsal ha peder plankenn : setu evit an ofiserion.

Kement-mañ ne blij ket kalz d'ar geizh ofiserion hon eus, lod anezhe mevelion, hag int a ziskouez emaint chifet en ur gennig punisionoù d'ar fourriered. Rak, er vicher-mañ, an ofiserion a laka an dud d'ober o dever ec'h ober aon dezhe ; hag an dud a labour an nebeutañ a c'hellont é toujiñ bout bountet a-barzh.

**06-09-1915** - An enderv-mañ eh oamp é komz ag ar soudarded tolpet amañ. Bout a zo oc'hpen 4 000 den e Courtemont. Nend eo ket fiziapl neoazh tolpiñ kement a dud en un tachad ha ne c'heller ket abriiñ a-barzh. Ne oa ket peur achu hon diviz ma klevomp un obus é tonet hag é monet da gouezh en tu 'rall d'ar vourc'h àr ribl ar Bionne. Pep unan neuze a achap, hep en em soursial ag ar gourc'hemennoù roet d'ar soudarded d'en em dolpiñ ha da vonet kevret betak un tachad merket. Aes eo komprenn ne c'heller ket chomel da sellet. É monet pleget doc'h kostez an hent-bras e tan da benn a achap ur pevar c'hant metr bennak àr hent Hans, lec'h mah eus tolpet dija meur a soudard. Gwelet a raer re éc'h achap a gement korn a zo. E-pad an amzer-se ar boledoù a gouezh atav hag a darzh. An tammoù a za da gouezh tro-ha-tro deomp. Arru a ra re bleset hag en deus achapet a-raok ar marv. Reiñ a ran ma fakad pañsemant evit rolltiñ tro-ha-tro d'ur soudard a zo daet da gouezh e-talomp. En e c'hoûg, en e vrec'h, en e zivhar ema tapet. E-kreiz ar vourc'h e klevomp re é c'harm get an droug.

Monet a ran da gas ar pezhioù da sin d'ar c'hapiten (àr-dro 5 eur) hag e welan ar gentañ kompagnunezh, gwad e pep tachad, tammoù kig ha mel-penn a-skour doc'h an orsal. Ur

c'haezh soudard a zo lazhet amañ ha roñseed. Er vourc'h ne weler 'met linennoù telefon troc'het, karrezioù gwer torret...

38 bleset a zo ha 7 pe eizh re lazhet.

Da goubanwel-noz eh an àr an dostenn lec'h mah eus ur vered ofiserion. E kement korn a zo eh eus bezioù dre-mañ.

Perak a-c'houde mand eo ar Frañsizion amañ, nend eus ket graet d'ar soudarded gober toullou en tostennoù a zo e kement lec'h tro-ha-tro e-lec'h lezel kement a dud en un tachad èl hennañ ? Hañval e vehe ne vehe ket sellet doc'h buhezioù an dud...

**07-09-1915** - Kaer-bras. Debret omp d'an c'hwenn e-pad an noz. D'enderv eh interrer an 8 a zo bet lazhet dec'h. Lakaet int e arc'hoù hag o gwelet a ran tro 3 eur é krapin doc'h tor en dorgenn lec'h mah eus graet ur vered nevez rak en hanni gozh nend eus ket mui lec'h...

**08-09-1915** - A-vintin e tarz'h an traoù trema La Grasse. Ne zehan ket ar c'hanon a drouzal. Goût a raomp en deus ar Boched fardet er-maez. 3 rejimant dezhe a zo chomet àr ar rampoù. Kollet hon eus ivez un nebeud tud met netra e-talte.

D'an noz ema farsus hor gwelet é jiboesat an c'hwenn hag ar razhed. D'an deiz e pep korn e weler re doc'h en em laouat.

**09-09-1915** - Kaer eo an amzer atav. D'enderv e taer da lâret deomp achap rak ema ar Jermaned é tenniñ àr La Neuville-au-Pont get o fezh bras. Aon hon eus ma kouezho àrnomp ivez.

**10/11/12/13-09-1915** - Devezhioù didrouz. Labourat a raer start evit ma achuo al labour a-raok an taol bras. Skuizh eo an dud. Neoazh bremañ e labouront get muioc'h a galon a-c'houde ma o lezer monet da gousket a pa vez achu o labour.



Dre varc'had eh aont, ha diskar a raont o labour get kalon. A-raok o doa un eur da gomañs ha ne achuent ken ne veze doc'h gouloù-deiz. Bremañ e raont muioc'h a labour hag eh arruont da 2 eur 1/2.

Bemdez d'enderv-noz e vale an aerlistri a-fors. 5, 6 a vez àr-un-dro eeun d'an tachad lec'h ma tebromp. D'an 12, unan anezhe a dremen just a-dreistomp. Huchal a raomp àrnezhon en ur hejal hor bonetoù hag e respont deomp.

**14-09-1915** - Ar mintin-mañ e tihunan get un obus é kouezh àr ar vourc'h. Fonnapl ma loeroù ha ma espadrilhoù ha me par ma c'hellan da greiz an douaroù a zo a-zehou àr hent Hans a pah aer ag ar vourc'h. 21 obus a daolont àr ar vourc'h. C'hoazh eh eus re bleset. Daou ag ar 88. Unan en e vouzelloù, an arall en e c'har. Dec'h eh oa anvet ur yoc'h. Tremen a ran serjant-fourrier e'it kemer lec'h Lafabrier a zo reformet.

Tarzh al a ra an traoù àr al linenn. Roet a zo kontelloù boser d'ar soudarded yaouank a zo aet d'an trañcheoù evit « naetaat », da lâret eo evit diwadiñ kement hanni a esao derc'hel penn, rak get ar baionet n'heller ket labourat a-feson er bouzellennoù strizh-hont.

**15/16/17-09-1915** - Devezhioù didrouz ha kaer. Bourboul a ra ar c'hanon pell du-se trema Hurlus.

**18/19-09-1915** - Monet a ra hon tud pelloc'h c'hoazh da labourat. Gober a raont 10 km e'it monet ha 10 km e'it donet, ha labour start a zo d'ober. Boued o deus da zebriñ met bepred ur seurt : soubenn, kig, ragout meur a wezh. Argant a zo, oc'hpen 3 000 lur, evit drusaat ar predoù ha n'en em servijer ket anezhe. Ar c'hapiten a zouj dispign ur blank ha neoazh an argant-se nend int ket dezhoñ. Ar gegin-àr-rodoù a zo mat d'ober soubenn pe ragout met ne c'heller ket gober

traoù arall a-barzh, hag an den a skuizh bepred get an hevelep boued.

**20-09-1915** - Netra atav. Àr-lerc'h koan eh an d'an iliz. Aluzonour ar Brigade a lâr ar bedenn. Goude e ra un tammig predeg evit degas soñj d'ar soudarded e tleont, int ivez, bout apostoled e-tal o c'hileion. An iliz a zo leun a soudarded. Trouz ar c'hanon é tarzhal doc'h tu Beausejour a arru genomp, gwanaet d'ar pelded. Neuze e lâr d'holl ar soudarded yaouank a zo eno en em lakaat àr o daoulin evit lâret ar bedenn a geuz. Goude ar bedenn-se e sav e zorn hag e roa an absolvenn dezhe rac'h àr-un-dro. Hañval omp eno doc'h martoloded en ul lestr a zo àrnezhonñ monet da goll hag e roer an absolvenn dezhe kent mervel... Goude e tostont 'gozik rac'h d'an daol santel da resev, lod anezhe, o sakremant diwezhañ... Stardiñ a ra ar galon é welet kement-se...

**21-09-1915** - Monet a raomp goude koan d'un tolpe da Zonmartin-sous-Hans. Un tolpe'it an eil-ofiserion. Diskoueziñ a raer deomp get projeksionoù La Main de Massige ha lec'hioù ar Jermaned àr-dro da Ville-sur-Tourbe. Ar skeudennoù-se a zo bet tennet get un ofisour-aerlestrour. Gwelet a raer splann-mat trañcheoù an eneberion. Diviz a ra an ofisour penaos emaint graet, e pezh tachad eh eus mitrailleuses pe pezhioù kanon. A pa vo an taol bras, eme-eñ, ni a vreono ar pezhioù-se èl ma karomp.

**22-09-1915** - Da 6 eur e taer da lâret deomp e tleomp kuitaat Courtemont a-raok 8 eur 1/2. Gober a raomp hor sec'hier, kargiñ a raomp ar c'hirri ha, àr-dro 8 eur, eh aomp kuit. 3 c'hardlev a-boan d'ober.

Tostenn 196 - a-dal d'ar Justis (motte féodale). Eno ema ret deomp gober toulloù evit en em lojiñ. Tarzhal a ra ar

c'hanonoù pell du-se trema al linenn. Neoazh nend eo met an deraou. 8 saucisses a zo savet en aer a-dal deomp ha karget eo en oabr a aerlistri é spial.

A-benn kreistez ema achu pe 'gozik ma zoull din. Kousket a ran mat a-barzh àr plouz fresk touchet d'an noz. Strizh eo neoazh un tammig.

**23-09-1915** - Gwasaat a ra an traoù. 'Pad an noz en deus tarzhet an tennoù. Stankaat a raont.

**24-09-1915** - Arc'hoazh vintin eh aomp kuit. 12h/45.

Tenniñ a ra ar pezhioù bras hag ar re vihan. Klevet a raer an obusoù é monet en aer èl un tarar é troiñ fonnapl-fonnapl. Re a ya kuit, re a arru. 3 pe 4 a bas a-dreist hor penn met ne dalvont ket netra : a-boan ma tarzhort. Skoiñ a raomp met respont a raont ur seurt. Àr-lerc'h merenn e lenner deomp O/J. ar G<sup>al</sup> Joffre. An taol bras eo. Komz a raer anezhoñ a bell 'zo. Pell 'zo eh omp doc'h er gortoz.

Kreñv a-walc'h omp. En 3/4 a soudarded Frañs a zo àr al linenn, Saozon, Breizhiz, Beljiz. Ret eo bountiñ ar Jermaned er-maez. Betak ar pezhioù e lârer deomp monet kentañ...

Marse ema ma noz diwezhañ honnañ. Àr ar plouz e skrivan, doc'h torgenn 196. Doue d'am choaz èl kennig, mar dle ma marv servij d'ar vro ha servij d'am salvedigezh. Mervel a rin e peoc'h, dle bras din da baeiñ da Zoue ; ar re ma c'har a esao paeiñ an dle-se. Mervel a rin ivez get keuz, rak ma varvin pell doc'h mam bro am eus karet-karet, pell doc'h ma zud en deus bepred diskouezet skouer vat din, pell doc'h ma Vedig, an hanter ac'hanon, pell doc'h man daou grouadur am boa glouestret da Zoue ha da Vreizh. Karet em behe mervel evit Breizh, rak eviti em eus bevet, met mervel a rin evit an onestiz hag al lealded am eus karet ivez.

Doue da reiñ koñfort d'am bro ha d'am zud.

---

Ma varvan me 'venn ma vo lezet rac'h ma zraoù get ma fried,  
Mari-Louiz ar Meliner, kuit ag ardoù nag a dabut. Dezhi e  
vo ar garg d'en em soursi a hor bugale hag a ma zud.

---

Doue d'am gouarn mard eo e volentez, met ne vern penaos  
benniget revo e volentez santel.  
Sant-Guenel, pedit evidon.  
Santez-Anna, gouarnit-me.  
Loeiz Herrieu.  
Louis Henrio.

**25-09-1915** - 1 eur 1/4. Sevel a raomp evit monet da  
gemer hol lec'h. Splann eo an amzer get al loar. Àr-lerc'h trouz  
an deizioù paseet ema ur blijadur deomp kerzhet. Ne glevomp  
ket mui 'met un tenn bennak. Pell e welomp luc'hedennoù èl  
a pa vehe kant tour-tan é splanniñ diragomp. Arru a raomp er  
Vallée des Pins lec'h ma c'hortozomp en eur merket da vonet  
kuit. Ema 3 eur bennak. Da 4 eur e komañs ar 4 pezh 105  
a zo e-talomp bountiñ potarnoù trema an eneberion. Àr-dro  
nav eur e tarzh an traoù e kement tachad a zo. Ema an eur eh  
arru.

Neuze eh aomp dre fozelloù nend eus achuamant erbet  
dezhe, etre ar pezhioù kanon, betak ar menez a zo a-dal da Zorn  
Massiges - A-zehou : Massiges, tachennnig diskaret ; a-zehou  
c'hoazh Virginy gwallaozet. – Ville-sur-Tourbe. – A-gleiz :  
Minaucourt. Leun eo an tachad a soudarded hag a bezhioù  
kanon. Dehan erbet d'an tennoù èl a pa vehe fuzilhennoù e  
vehent. Sevel a raomp doc'h ar menez. Doereoù vat a zo. Aet eo  
hor re àr lein dorn Massiges ha nend eus 'met un hanter-c'hant  
bennak ag hor re gwallaozet. Monet a raomp er bouzellennoù  
leun a orsal telefonik hag e welomp get ar brasañ plijadur  
Dorn Massiges diragomp hag àrnezhi soudarded Frañs éc'h

ober gwign d'an artilheri da denniñ pelloc'h. Met setu ne c'heller ket tostaat evit c'hoazh. Ema hor soudarded é naetaat du-se an trañcheoù. Bomboù a daolont en toulloù hag e welan é sailh. Tannoù fuzilhenn a zo ivez met ne vern : ema hor re àr ar beg.

D'enderv e tenn ar Jermaned get o c'hanonoù evit parraat doc'h hor c'havaleri a bas doc'h kostez dehoù Dorn Massiges. Skoiñ a raont par ma c'hellont met kouezh a ra al lod muiañ anezhe en douaroùier. Pouf ! Moged ha netra ken.

An devezh a bas èl-se edan an obusoù é vourboutal en aer, lod èl pousined, lod èl trenioù (ar re vras). Diaes eo deomp kaout an hent er fozelloù-mañ.

Prizonerion a ziskenn ag ar menez. Pas a raont amañ, e-leizh anezhe yaouank-flamm, trist, fal vinet, lod bleaset... (Glav)

Noz diharak àr peder plankenn diblaen hag an obusoù é vale hep arsav.

**26-09-1915** - Ar mintin-mañ e komañs an c'hoari bravoc'h pe brav. Kaer ha splann eo an amzer. Labour brav a vo gellet gober.

Komz a raer hon eus avañset e kement lec'h a zo, ha pell e meur a lec'h. Amañ e vo un tarzhad c'hoazh hiziv.

A-gentizh m'en deus avañset hor re el linennoù gentañ, setu ajadigoù soudarded é tiskenn er flagenn, doc'h en em guzhet a-dreñv ar gwez, ar c'harzhoù. Kuzhet a raont par ma c'hellont doc'h tor ar menez hag, a pa ne denn ket mui ar Jermaned, e krapont hag eh aont pelloc'h d'esae diloj an eneberion. Emaint èl taoloù-gwenan doc'h tor ar menez. Lod-kaer anezhe siwazh ! a gouezh, met re 'rall a za en-dro, bleaset un tammig, prisonerion gete hag int fier. Pas a ra ur yoc'h e-pad an deiz. D'enderv-noz e welomp ur soudard deomp bleaset en e zivhar é tonet kazaliet get ur soudard Jerman.

Nend eus ket ur bern bras re lazhet. Re bleaset a zo ar

muiañ. Ar Jermaned a lakaer d'o doug. Soudarded a huch àr ar brizonerion, a daol dour pe mein àrnezhe. Yaouank int 'gozik rac'h, goloet a zouar gwenn taolet àrnezhe get an obusoù. Ur c'homandant ag ar C'holoniale a zo lazhet. D'an diaz ag ar menez eh eus 'pad an deiz korvoù marv ec'h arru. O interriñ a raer er flagennig-se a-dal d'hor 1<sup>añ</sup> Section.

D'enderv-noz e welan hor re éc'h ober un attaque. Ema al loar é sevel a-dreist ar «Meud». Ruz-poazh, hanter kuzhet get kogus du. Fuzilhennoù a darzh ; ar c'hanon ivez hag ar mitraill. Sevel a ra gouloù hep arsav. Du-se, trema en Argonne, e c'hoari an traoù ivez.

Droug kalon en deus ar Jermaned. Teurel a raont potarnoù bras hep sellet, a-gleiz hag a-zehou, a gantoù. 2 ag ar 1<sup>añ</sup> Komp. a zo lazhet, 8 gwallaozet. Da Massiges ema bet ret dezhe monet evit kas greunadoù d'ar C'holoniale ha n'o deus ket abrioù. Da nav eur e taer da lâret monet da glask boued. Glav a ra. Ar c'hirri a zo chomet er vouilhenn. Ar roñseed ne zalc'hont ket àr o sav. Ema un eur a pah arruont !

**27-09-1915** - Komañs a ra an traoù c'hoari a-vintin. Ar Jermaned ne vennont ket kiliñ. Bountiñ a raer gete a zornad...

**28-09-1915** - Mintin. Jermaned a interr hor soudarded a-dal deomp. Kreskaat a ra niver ar bezioù.

Pezhioù kanon deomp a zo krapet doc'h tostenn Massiges. Skoiñ a raont àr ar Jermaned. Doc'h tu Beausejour nend eus dehan erbet d'an tennoù. Lâriñ a raer deomp e kila ar Jermaned. Àr-dro kreistez e taolont potarnoù èl glav àr Massiges hag an droioù.

Arru a ra kemenn genomp da vonet da gemer lec'h ar gentañ da Vassiges edan ar barrad houarnaj-se. Ha just em boa arañjet ma loj. Graet em boa get div dreujenn goad ha ma

lien tant ur meni gwele blot. Toemmet em boa mem ma fred e ma asiet get un tammig amanenn.

Àr-dro kreistez eh aomp kuit. Doulbiñ a ra ar Jermaned da denniñ. An obusoù a gouezh tro-ha-tro deomp hep arsav, lod fusants, lod percutants, hag an tammoù a nij en avel èl gwisped arrajet. Hor re-ni a darzh ivez. Biskoazh n'em eus klevet kement a drouz. Huñvreal a gredan gober. Unan ag ar gompagnunezh a dap un tamm en e benn, met n'en deus ket kalz a zroug. Àr an hent eh eus korvoù roñseed, korvoù tud, fuzilhennoù, dilhad, etc...

Tenniñ a raont àrnomp get obusoù mougus hag ema ret deomp lakaat hon tampon.

Lec'h ma arrestomp - toull deun en douar, 3 troc'had koad, houarn, douar – ne risklomp netra.

Monet da glask boued da 180 da 9 eur hanter. Met dehanet o deus a denniñ. Hor pezhioù-ni a dosta bepred. Goulenn a raer hon tud evit kas kartouchoù d'ar re yaouank a labour en hor-raok. Kiliñ a ra ar Boched.

Un arall bleaset get ur boled en e skoaz.

**29-09-1915** - Didrouz ar mintin-mañ. Da 11 eur e komañs an c'hoari.

**30-09-1915** - Bemnoz ravitaill. côte 180. Nag a dud, a girri, tud bleaset. Àr an hent 15 jao lazhet. Tarzhal a ra an traoù hep arsav. Pellaat a ra ar Jermaned. Neoazh derc'hel a raont da deurel potarnoù àrnomp.

**1<sup>añ</sup> a viz ar Gouel-Mikel 1915** - Dirak hol loj, tammoù a gloc'h an iliz teuzet e 1870 ! - Ar c'hreisteiz-mañ merenn ag ar choaz : biftek get avaloù-douar, gwin, un aval diskaret d'un obus ! Setu pell 'zo n'em eus ket bet kement 'rall. E-pad ma oan é prediñ e lennen ur pennad ag ar re kaeran diarbenn braventez ar Joconde àr ar Revue Hebdomadaire.

**02-10-1915** - Obus kouezh e-tal ma c'hav, taolet ar vagoer àr ma zraoù. Me 'oa-me chouket un tammig pelloc'h. Netra, trugarez Doue !

**03-10-1915** - Sul trist... Oferenn erbet. Reiñ a raer hol lañjerioù deomp en-dro. Gwell-a-se. Yen eo. Labourat a ra ar c'hanon.

**04/05-10-1915** - Èl bemdez e klevomp obusoù é vale en aer ag an amzer hep dehan erbet. Re vras, re vihan ha pep unan anezhe en deus e vouezh spontus èl trouz karrigell an Ankoù...

D'ar 5 d'enderv e pas ur yoc'h obusoù bras. A pa darzh ar re-se e vezer sur ag un taol bennak.

Da goubanwel-noz e taer da lâret deomp gober hor sec'hier. Àr-dro 3 eur da vintin, d'an 6, e tiskarg ar c'hanonoù hep arsav. 3 eur e pad ar barrad hag e tav un tammig. Neuze ema bouezh ar fuzilhenn, bouezh ar mitrailleuse a glever. Da 8 eur eh omp atav prest da vonet kuit. Ar Jermaned a daol re vras àrnomp. Pep unan a c'hortoz get hiraezh hag anken ma tay un doere bennak du-mañ rak eh omp a-dreñv ar menez ha trouz an emgann hepken a za betazomp.

D'an noz é monet da glask ar boued èl bepred e lâr deomp re hag a zo é tonet ag ar Chenille hon eus gounidet ha kollet an tachad-se àr gwall ar 75 a denne àr hor re. Ofisour evezhour lazhet hag ar gwignoù pas gwelet. Àr ur gompagnunezh 200, 25 a zo daet er-maez ha ne oa bleaset 'gozik hani é monet.

**07-10-1915** - Kizhier a chom amañ. 5 pe 6 a vev àr ar soudarded, a gousk gete hag a vount c'hwenn gete.

Aerlistri a denn an eil àr egile en aer ag an amzer kaer-bras.



**08/09-10-1915** - Derc'hel a ra an amzer gaer hag an trouz ivez. Ur soudard deomp a oa e-tal ar gegin a pa gouezhas ur potarn. Eñ a vennas en em warantiñ hag a achapas doc'h tor ar menez lec'h ma kouezhas lazhet, faoutet e benn d'un tamm potin. Interret eo bet doc'h troad ar penn douar 180 (Goueloù) ; an hanni aonusañ ag ar gompagnunezh e oa ha bepred doc'h en em guzhet...

Oferenn d'an 8 mintin en un toull goloet get houarn, koad ha douar àr ur blankenn goloet get lien tant. Unan e respont ha me en oferenn. Trugarez da Zoue bout hor gouarnet hep droug.

Ur yoc'h tud ha loened lazhet àr-un-un dro get Goueloù.

**10-10-1915** - Oferenn 8 eur. Kanal e brezhoneg. Kaer-bras. D'enderv e tremen 24 aerlestr. Làret e vehe bet ur vandenn fubu en aer ag an amzer. En desped d'an tennoù e talc'hont da vonet trema al linenn jerman. Kerzhit, evned skañv, da goñfortiñ hor soudarded hag an dud edan yev ar Jerman. Kerzhit da hadiñ ar spont e-mesk an dud diseven-se en deus dismantret ar vro paour-mañ...

**11-10-1915** - Noz. Devezh didrouz met an obusoù a gouezh ken stank pe stankoc'h. Met bremañ ne raomp ket kalz a van anezhe. Kustumat a raer doc'h an trouz-se el doc'h an trouzoù arall.

D'enderv-noz eh ouiomp e c'heller monet da glask boued pren evit ar gompagnunezh. Mall e oa. Skuizh e oa an holl get soubenn ha kig bervet seul pred, seul pred. Karget on-me da vonet hag eh an get ar ravitaillement, d'an noz, a-dreuz ar parkoùier betek Maffrecourt. Àr un nebeud sec'hier goulle eh on astennnet e deun ar c'harr. Morgousket on met me 'sant ur seurd ar veaj souezhus a raomp. Ne c'heller ket monet dre an hentoù a zo rac'h tennet àrnezh get ar Jermaned.

Ne c'heller ket alum gouloù pe e veher gwelet. En noz dall eh aomp. Meur a wezh eh a ar c'harr e toulloù obus hag el mand eus graet ur rizennad glav, ar roñseed a ruskl hag a gouezh. A vizer-kaer e taer da benn a zonet er-maez ag ar stad truek-se hag e kaver neuze ul linenn telefonik a luzi ar c'harr a-barzh. Un c'hoari arall. En un taol ul luc'hedenn e-talomp. Ur pezh bras a denn hag e kren an douar get an horoz e-pad ma vourbout an divskouarn. Luc'hed a-gleiz, luc'hed a-zehou, trouz dirak, trouz a-dreñv, hag en aer ag an amzer pemp pe c'hwec'h projecteur é vale en oabr teñvel el lagadaou é spial en aer ag en amzer. A doull da doull, a bark da bark, a skosell da skosell, gwintet d'un tu, rudellet d'an tu 'rall, hep droug erbet (tra souezhus !) eh arruomp e Maffrecourt. Ur c'hardlev hon eus d'ober c'hoazh evit monet betek ar c'harrlec'h. Glavaj a ra. Setu-ni arru. Edan ur c'harr eh an àr un dornad foen, gronnet em lañjer am eus graet mat kas genin. Kousket a ran c'hwek daousto d'am gwele truek betek an deiz àr-lerc'h vintin.

**12-10-1915** - Trouz an obusoù bras é monet da Maffrecourt ha da Neuville man dihun da vintin. Bep mintin ema ur seurt. Glav en deus graet. Bouilhennek eo ar park lec'h mand eo ar c'hirri. An dud a gousk lod er c'hirri, lod edan o lien tant.

Goude bout kemeret un tasad kafe edan ar glav eh aomp kuit dre Neuville-au-Pont ha Chaude-Fontaine. Vad a ra din ; plijadur am eus doc'h en em welet lamet a veg ar bleiz. Ha neuze an tu-mañ ag ar Champagne a zo pinvikoc'h. Eh omp àr ribl an Aisne. Gwez a zo, frouezhaj, legumaj, pradoùier. Ne welomp ket mui dirak hon daoulagad douar gwenn el erc'h bro Massiges. Ar gwez a zo uhel. Nend int ket krazet ha bitig el re ar Champagne laouek !

Ste-Menou a zo ur gêrig a zlee bout gwiv gwezharall, a-raok ar brezel. Bremañ ema leun a soudarded ha ma eoñtr-kordenn a zo mestr a-barzh. Neoazh gellout a raer bale a-barzh ha nend

eo ket diaes-bras kaout ar pezh a zo ret. Sistr nevez a welan, tev  
èl kani Breizh a pa vezer doc'h er gober. Gober a raomp an dro  
d'ar votenn a zo èl ur bern douar-goz e-kreiz kêr hag a zo un  
iliz gronnet a wez àrnezhi. Amañ, èl e Fismes hag e Doullens,  
an holl a zalc'h kenwerzh ha pep ti a werzh a bep tra... kerañ  
ma c'hell. 22. ar voestad formaj ; 14 bl. al litrad gwin ; 22. ar  
100 Kil. avaloù-douar ; 8 bl. ar c'hilo karot ; 10 bl. an ognon...  
44 bl. an dousenn uioù !!

Evit debriñ ema ret d'ar soudarded preniñ o zraoù ha debriñ  
àr ar ru ! An tier a zo dister.

Nend eus 'met ar blasenn vras a zo àrnezhi tier brasoc'h  
ha kaeroc'h. Mein a vank atav evit gober tier. An diaraok a zo  
graet get brik hag ar speurennoù get douar lakaet a dammoù  
ha sec'het en heol. E daou pe tri tachad e welan tier foñdet  
d'an obusoù, met netra.

Donet a raomp en-dro dre Maffrecourt ha flagenn ar  
Gwez-Pin ha goude Minaucourt. Soudarded àr an hent ; re  
du lod. E-tal Minaucourt eh eus ur vered graet a-nevez leun  
a vezioù. Bro ar Marv, an Ankoù eo honnañ. Minaucourt a  
zo 'gozik rac'h diskaret ivez. Chom a ra c'hoazh neoazh an  
iliz 'gozik a-bezh hag un ti bennak bravik er vourc'h àr an  
Tourbes. Arru a raomp èlkent a-fet-noz. Goût a ran neuze eh  
eus lazhet c'hoazh unan ag ar gomp. àr ar Promontoire (Royaume ;  
den yaouank.). Daou a zo gwallaozet.

Kousket dous an noz-se.

**13-10-1915** - Tarzhal a ra an traoù. Kaer eo an amzer. Netra  
a nevez. Doulbet en deus ar Jermaned da denniñ neoazh. Ne  
ouian ket petra a wall doc'hte. Neoazh ne welont ket e-men e  
tennont. A pa lazhont unan bennak ema hep gouiet eo...

**14-10-1915** - Arru a ra ar c'hemenn genomp da vonet da  
Gourtemont da ziskuizh. An eil bataillon a za da gemer hol

lec'h. Mall e oa hor sevel, tenniñ hor re-ni ag o zoulloù : 22 a zo bet ar mintin-mañ é welet ar medisinour. Goulenn a raer gete ivez labourat start. D'enderv-noz eh aont, lies etre hol linenn ha hanni ar Jermaned, da grouiziñ trañcheoù, da skarzhiñ ar re gozh. Lies ema ret dezhe en em lakaat àr o c'hrabanoù evit labourat e toulloù obus evit diwall a vout lazhet rak, hep dehan, e kouezh obusoù en-dro dezhe pe e tremen boledoù fuzilhenn en ur viañal.

Da 11 eur 1/2 eh an-me kuit da choaz lec'h ar gompagnunezh. Pouk eo an amzer ha c'hweziñ a raomp. Monet a raomp a-dreuz ar parkoùier. Rac'h an devalennoù dre-mañ a zo toullet èl tamouezoù. Nend eus ket unan ha nend eo ket goloet a lojoù, tud doc'hte èl merion. Lod éc'h ober boued. Ur fuzilhenn a servij da valiñ kafe ! Lod é lenn lizherioù, lod é skriv, re 'rall é kempenn o dilhad, doc'h o gwalc'hiñ.

Kemer a raomp lec'h ar 7<sup>vet</sup>. Hir gortozadenn hor bo é c'hortoz ar gompagnunezh. Ar 7<sup>vet</sup> nend a ket kuit a-raok 8 eur ac'hale-mañ hag hor re-ni nen daint ket kuit a-raok mah arruo ar 7<sup>vet</sup>.

**15-10-1915** - 5 eur mintin a pa yan, e'it an 3<sup>vet</sup> kwezh, da c'houarn ar gompagnunezh àr an hent. Arru a ra èlkent 'met section an adj. en deus en em gollet àr an hent. Ar paour-kaezh den-se nend eo ket evit en em gundu daousto d'ar gartenn ha d'ar boussole en deus prenet... Arru a ra da 6 eur 1/2 hag e c'hell pep unan neuze monet da gemer un tamm repoz.

**16-10-1915** - E Courtemont, bep mintin e kouezh un dousenniad obusoù etre 5 eur ha 7 eur. Ar mintin-mañ e klevomp o bouezh é c'hwitellat. Fonnaapl er bouzellennoù ! Neoazh an drederann anezhe ne darzhont ket. Graet int evit toulliñ a-raok tarzhal hag eh aont en douar lec'h ma voug an tarz. Ur soudard a bas e-tal ma loj goude an dennerezh :

« Achu int koleat ! » eme-eñ. (Rak blejal a ra an obusoù èl ur c'hole é tonet àrnoc'h.)

**17/18/19-10-1915** - Diskuizh a ra an dud ha gober a raont bizoùier muioc'h e'it bihanoc'h. Ar re gleisañ a ra labour souezhus. Kavet o doa aluminiom da serrezh àr-lerc'h an taol bras-hont ha bremañ ne arsavont ket a deuziñ, a heskennat, a rac'hiñ. Kenwerzh a zo gete ivez. Lod a werzh pennoù obus. Lod arall o zeuz hag a werzh pennoù krouiz d'ober bizoùier. Micher ar re 'rall a zo o heskennat. Re 'rall o labour, o achu, o c'hrabisa !... Ar gwashañ, gwalleurioù a zegouezh ivez. Dec'h, ur penn obus a oa chomet fulminate a-barzh en doa sailhet etre daouarn ur soudard ag ar Mitrailleur. Foñdet e zorn hag e fas... Marv eo an deiz àr-lerc'h.

Arru eo ar gemenn lemel rac'h ar re yaouank a vout sekreterion ha lakaat re kozh en o lec'h pe tadoù a familh. Ha pep unan a zo eürus a gement-se rak ur vezh e oa gwelet rac'h an dudjentiligoù-se a oa daet da benn a en em guzhet pell doc'h an trouz hag an dañjer.

Gwelet em eus ivez an deizioù-mañ soudarded ag ar 62° daet d'hor gwelet du-mañ. Ur yoc'h re kozh a zo daet en o mesk, re hag a oa aet àr-dreñv ; setu-int tapet é klask tenniñ àr-dreñv. Rac'h ar pezh a weler a ziskouez pegen gwan e oa ar garantez-vro e-mesk an dud. Keneve ma oa ul lezenn da lakaat rac'h an dud da vout soudard eh oa achu an traoù evit Frañs ; ne vehe bet kavet gwezh erbet tud a-walc'h a volentez vat evit he difenn.

Ar pezh a glever ivez a zikouez ema bet ret kaout Breizhiz an taol-mañ c'hoazh evit lakaat ar Jermaned da giliñ. N'en deus ket mui ar pennoù brezel konfians erbet e soudarded teodek ar C'hreisteiz. A pa vez ar muiañ dober anezhe eh achapont.....

Arc'hoazh 20 eh aomp en-dro d'an dostenn 180.

**20-10-1915** - Ar mintin-mañ eh eus ur servij en iliz evit ar geizh soudarded o deus kollet o buhez an deizioù paseet. Gwelet a ran an Ao. Thube, sekretour an Eskop, aluzonour en un divizion tost deomp. Klevet en deus e komzer ag hor c'has àr-dreñv da ziskuizh... Hennezh a vo un dra na grediñ ket kent n'er gwelin.

D'un eur eh aomp kuit da glask lec'h ar gompagnunezh. En adj. a zo doc'h hor c'hondu, un denig mat hag a za ag ar skol-ofiserion. Ne oui ket forzh-kaer dre be hent hor c'hondu, hag hol laka d'ober 3 hardlev re !... Àr an hent Terrt. Génie a zo karget da dorriñ mein ha da gempenn an hent. Peb unan en deus e vizer, ha pep unan a labour par ma c'hell get... e lim !

Martoloded a gavomp e Minaucourt é fondiñ un ti diskaret : evit gober ul loj dezhe moarvat.

Doc'h tor ar menez 180 e chom ar gompagnunezh, doc'h tu ar c'hreisteiz. Ur blijadur a vo deomp ma ne zegouezh netra. Me 'gousk-me en un toull a 2v. krouizet er menez. Kaer eo a-barzh ha disafar on : trawalc'h evit bout eürus ! Ar pezhioù-ni a denn, a denn. Hejal a ra an douar gete. Ha droug penn a raont ! Da 1 eur eh arru ar gompagnunezh hag e c'hellont monet da repoz.

**21-10-1915** - Ar mintin-mañ e tihunomp get trouz euzhus potarnoù euzhus é kouezh d'an diaz ag hon tostenn. An dason a zo spis, ha seul taol e red dre ar flagenn, e sailh ag un dostenn d'an arall é tarzhal seul gwezh mah arrest hag e pad pell-pell... Biskoazh n'em eus klevet an tennoù ec'h ober kement a safar... Kaer eo an amzer ha plomiñ a raomp en heol get jourdoul, plijadur.

**22/23/24/25-10-1915** - Netra a nevez met tennoù a-fors doc'h tu Mesnil lec'h ma hon eus gounidet un tachadig douar.

**26-10-1915** - Kouezh a ra 2 zousenn obusoù bennak àr 180 ; unan anezhe àr an tachad lec'h m'ema roñseed an eil Komp. Unan anezhe troc'het dre an hanter, an tammoù anezhoñ strewet a bep tu. 200m. ag an tachad e kaver e lost.

Noz : eh aomp da Gourtemont.

**27-10-1915** - Devezh paperioù. Nend eus dehan erbet d'ar c'hemennoù. Aneoued.

**28-10-1915** - Glavaj.

**29/30/31-10-1915** - Skorniñ a raomp. Monet a raomp da gemer douch paeet Cons. G<sup>al</sup> Morbihan. En ur porch yen met douch vat.

**1<sup>añ</sup> a viz Du 1915** - Monet a raomp kuit da gemer hol lec'h du-se da 180. Glav arre. Noz dall. Klask gitoune en teñvelded. Abrioù lous, kac'het enne. Kousket en ur sape 5 pe 6 mètr. Rudellat er fang !... Ruskliñ a ra ur bam. Hon tud a arru hernet, gwleb... Un druez.

**02-11-1915** - Deiz ar re tremenet : amzer du, du.

**03-11-1915** - Kaerat a ra. Debriñ en un toull doc'h tor 180 àr sav. Boued yen. Joaius omp met ar begoù moan duchentil... Ar re-se a gav fall bout èl-mañ.

**04-11-1915** - D'enderv-norz trema Maison-de-Champagne e sav en un taol ur vopedenn a gouezh àr ar menezioù, àr Dorn Mass. Diàr honnen e sav moged du ha flamm. Ema ar Jermaned é c'hoari ur fall dro deomp. En un taol setu hor c'hanonoù é skopat tan. Tarzhal a ra ar mitrailleuse, ar fusilhenn. Met nen daont ket da benn a ober kalz a dra, a lârer. An deiz àr-lerc'h

e raomp dezhe ar pezh o deus graet deomp hag ema ret dezhe achap d'o zro. Penaos brezel euzhus !

Hor soudarded a zo ret dezhe monet div pe teir gwezh, d'an deiz ha d'an noz, da gas greunad ha boued d'ar soudarded a zo er gentañ linenn. Daou a zo gwallaozet, unan anezhe en e benn, an arall en e c'har. Ret eo troc'hiñ gar hennañ hag e varv daou zeiz àr-lerc'h. Un arall hag a oa er 107° T<sup>al</sup> é labourat a gouezh un obus àr e loj ; hachet eo a dammoù.

Ne arsav ket ar Jermaned a atakiñ, ha ni 'respont dezhe. Penaos safar !

**05-11-1915** - Kousket omp a pa zaer da lâret deomp eh aomp kuit henoazh da Gourtemont. Setu ur brav a ziskuizh ! Hag a-raok ema ret d'hon tud monet betak al linennoù kentañ da gas greunad. Me 'ya-me get ar gegin. Met ar roñseed a zo e flagenn ar Gwez-Pin, hag ema 1 eur da vintin a pah arruont genin e-tal an dostenn 180. Get an dra-se ur soudard ag ar 5° azezet e-talomp en doa kollet e fuzilhenn, en doa kemeret unan e kostez ar c'hleuz hag en doa tennet àr ar gachette. Aet an tenn kuit e-talomp. Pa vehe bet troet e fuzilhenn tremazomp !

**D'an 06-11-1915** - Ema 4 eur 1/2 a pah arru ar gomp. amañ. Penaos nozvezh c'hoazh evit hor c'heizh tud !

**D'ar 07-11-1915** - Labour paper 'dreist penn. E-pad tri deiz ne vo ket mui distag erbet evidon get ar c'hozh paperioù-se.

Komz a raer mah aimp àr-dreñv da ziskuizh met ne gredomp ket : kel lies èl mah eus lâret kement 'rall deomp...

An 35° a zo arru amañ. Ur yoc'h Breizhiz a Vro Dreger, a Gernev, a Leon a zo en o mesk. E gwirionez bountet a zo Breizhiz e kement tachad a zo... Ar re 'rall ne dalvont ket an diaoul.



Hiziv er rapport e lenner ema difennet lezel mui re kostez Bro Spagn monet permission hep n'o do goulennet aotreadur G<sup>al</sup> o c'hornad lec'h mand eo o zud é chom. Achap a raont da Vro Spagn !... Setu un dra ha ne ra ket kalz a enor da vroioù ar C'hreisteiz. Ne vehe ket kavet kalz a seurd-se e-mesk soudarded Breizh daousto dezhe kas trouz o gwalc'h a-enep d'ar brezel.

**D'an 08/09/10-11-1915** - Diskuizh evit ar gompagnunezh, met hani ne fiz gwalc'hiñ na kempenn e draoù rak an divizion mah omp geti a ya àr-dreñv ha soñjet-mat omp monet geti. Komz a raer a gostez Stez-Menehoulde...

D'an 11 da vintin eh a ar gompagnunezh da denniñ.

Dec'h da noz eh arruas ul liher ag ar c'holonel Colombani de Niolo da lâret kas ur c'harr da glask e draoù da 180, rak ar 88° a guitae evit mat an tachad-se. Hag ar mintin-mañ eh ouiomp eh omp laosket get an divizion arall hag eh aomp henoazh arre da 180 !...

Glav a ra. Gwlebet eo hon tud evit netra bepred, rak an dennerezh-se a oa gourc'hemennet evit deskiñ da denniñ d'ar re na ouiont ket. Hag e lakaer an holl da denniñ ne vern penaos en ur sibl ha nend eus ket den evit merkiñ mard eo touchet pe nend eo ket. Kenkoulz e vehe bet tolpiñ an dud a pa vehe bet loargann gaer hag o lakaat da denniñ àr al loar ! Met setu : èl-mañ e vez selaouet bepred doc'h ar c'hourc'hemenoù er vicher a raomp !...

Ar pezh en deus gounidet an dud a zo bout gwlebet ha me 'respont deoc'h nend int ket gwall goutant a pah arruont é klevet eh aont arre da veg ar bleiz !...

Èl bepred eh aomp-ni a-raok get ar c'hampemant. Na hentoù a gavomp !...

En noz, àr-dro 7 eur 1/2, eh arru ar gompagnunezh ; straket, man Doue ! Lod kaer a zo kouezhet meur a wezh !... Hag ema o lec'hioù da glask èl bepred rak ne ouiomp ket perak ne vez

ket lakaet gwezh erbet ar gompagnunezh er mem lec'h. Ha neoazh al labour a zo ur seurt, al lojoù ivez. Kement-se ne servij met da ziaesat labour ar re a zo karget da glask al lojoù hep gounid erbet e'it ar gompagnunezhoù. An dra-se ivez a barra doc'h an dud a labourat da gempenn o lojoù, ar pezh a rahent get plijadur a pa vehent sur da zonet arre en hevelep tachad.

**12-11-1915** - Un nozvezh glav hag avel gwalern. Dour a gouezh àr hon tud en o zouloù. Al lien a zo dirak ma hanni a gouezh hag e tihunan hanter gwleb : ar glav a fard e ma loj get an avel. E-kreiz an noz ema ret din arañj ma zraoù er fang ha hep gouloù. Fall nozvezh !...

**12-11-1915** - Hiziv e paeer ar miziad kresk. N'en deus ket vennet ar c'hapiten ma vehe bet paeet an argant-se e Courtemont get aon ne vehe mezvet an dud. Ar re-mañ, ken fin pe finoc'h evitañ, en doa dispignet ag o argant relez ha prenet gwin boutailh. Gouiet a raent a-walc'h o dehe bet argant an deiz àr-lerc'h ! Neoazh dibaot e oa ar re vezv.

Ar gwin boutailh-se a servij da dud ar vro-mañ d'ober fortun. E-lec'h preniñ gwin tavarn n'o dehe ket kalz a c'hounid àrnezhon, int a bren gwin boutailh 4 real hag er gwerzh 14 real !... Ul laeroñsi !...

**13-11-1915** - Glav atav. Distrempet eo rac'h an dostenn amañ ha fang a zo doc'homp e kement tachad a zo. Ruskliñ a raer ha ret eo da beb unan kemer e benn-bazh evit derc'hel àr e sav. Hon tud a ya bemnoz da gas koad d'ar soudarded yaouank a zo a-raok. An hanter ag ar gompagnunezh a chom da repoz ha da c'houarn 180 ; an hanter arall a ya d'al labour noz. Èl-se bemnoz betek 11 eur 1/2, hanternoz.

**14 a viz Du 1915** - Ar sul. Erc'h a gouezh ! Yen eo an amzer ivez met teuziñ a ra a-gentizh ma kouezh. Oferennniñ a ra an Ao. Moigneu en ul loj goloet get houarn krommet. Siwazh ! èl bepred, ur 500 a dud a zo amañ pe oc'hpenn hag a ya 400 anezhe d'an oferenn bep sul a pa vezont er gêr : nend eus ket un dousenn en oferenn. Tro an deiz ne fichomp ket kalz ag hol loj. Nend eo ket brav ivez bout é trapikellat er-maez. Yen eo atav an amzer ha dizolaat a ra. Pechañs e skorno an traoù henoazh.

**15-11-1915** - Skorn a zo ha setu erc'h é kouezh. E-pad an deiz e ra barradoù. Met tomm eo an douar c'hoazh ha ne bad ket an erc'h. Neoazh e-pad un euriad ema gwenn-kann an traoù.

Didrouz e chom ar vrezelerion ! Klasket em eus-me ur voest toullet a lakaan kok a-barzh evit tommet ar burev rak nend eo ket brav chom hep bouljal e-pad an deiz doc'h an daol, paraviz d'ur fenestr nend eus 'met an toull anezhi.

Rac'h an notennoù-mañ a skrivan en un toull krouizet er menez, e douar marnek, lec'h ma kouskan àr un dornad plouz. Didrouz on amañ. Ne glevan 'met trouz hor pezhioù-ni a zo a-dal din hag a denn meur a wezh en noz. Neuze e horos an douar hag e ran un tamm kren, met hep aon rak goût a ran emaint aze doc'h man gouarn, èl un nebeud chas. Hag a pa fachont ema ur spont o c'hlevet.

**16-11-1915** - Ne bad ket an erc'h. A-benn ema teuzet ha neuze e sav ur vouilhenn seurt na gaver 'met er vro-mañ. Fang brizh-gwenn, druz èl soav hag e ruskler àrnezhon èl àr ur glerenn.

**17-11-1915** - Henoazh eh aomp kuit arre hag ur brav a hent a gavomp ! Arru a raomp e Courtemont da c'houbanwel-noz.

E-pad ma oan é sellet penaos eh oa lojeris ma zud, soudarded a bas el lec'hioù na welont den enne hag a sav ar pep bravañ ag ar plouz. Èl-se ema an traoù amañ. Pep unan a soñj ennoñ e-unan kentañ hag èl-se, ar pezhig a raer evit gwellat ho stad, evit kempenn ho lec'h, a zo foñdet, dismantret kentizh ma troit ho kein... Al lojig paper bitumet hor boa kempennet a zo laeret ivez ar plouz anezhoñ. Met ne vern : re yen e oa a-barzh atav. Choazet em eus ur gampr en un ti arall dilezet àr gorn hent Hans ha hent Donmartin. Eno e raimp hol lojeris bremañ. Nend eo ket ag ar choaz rak nend eus ket enni cheminal erbet, met chom a ra c'hoazh fenestri hag ur c'harrez gwer bennak ha ne vimp ket àr an douar a-wel.

**18-11-1915** - 0 eur 1/2 d'an noz. Huchal a raer din ema arru ar gompagnunezh. Yen eo. A-herr eh aomp da gonde pep unan d'e lojeris ha goude bout evet get ar c'hapiten un tasad kafe tomm a barray tuchant doc'hin a gousket eh an àr man dornadig brevajoù plouz.

**19-11-1915** - Fall zoere : komz a raer a lemel ag ar 88° ar soudarded ag ar c'hlas 1899 evit o zrokiñ doc'h soudarded 1893-94 ag an Armée Coloniale. Un dra just eo an dra-se, met nag un tarzha kalon evidomp rac'h, ha dreist-pep-tra evit ar re a zo e'it monet kuit. Nag ur grad a ouier dezhe, ar geizh, evit bout labourat harz-pe-krev a-c'houde 15 miz zo hep en devout bet tamm diskuizh.

**20-11-1915** - Gwir a-walc'h e saver ar soudarded 1899, met ne gemerer 'met ar soudarded. Ar re gradet a chom beta goût. Arc'hoazh eh aont kuit. 38 ag ar gompagnunezh a zo dle dezhe monet en 35° C<sup>al</sup>. Oueliñ a ra lod-kaer ag hor soudarded, rak an active, evidomp-ni, a zo brezeliat àr ar bratell, get ar baionet...

Kement a boan o deus é kuitaat ma en em lakaont d'evet ha d'enderv-noz eh eus ur vuhez gete !...

**21-11-1915** - Sul. Ar mintin-mañ e tolper rac'h ar re a ya kuit (àr-dro 400 a zo anezhe) a-dreñv hor c'hantonemant evit bout prezantet d'ar c'holonel. Kenavo a lârer d'ar re a anaver. Ema an dour en daoulagad hag a pa lâr ar c'holonel en em lakaat en-dro dezhoñ ema prest an daeroù da sailh er-maez. Lâret a ra ema stardet e galon é welet ar pezh a arru. Graet en deus ar pezh a c'helle evit parraat, met respontet a zo dezhoñ eh oa ret an traoù-se ha ne oa netra da lâret. Oueliñ a ra en ul lâret kenavo. Engortoz eo ma vo ar soudarded a ya kuit gwir difennerion ar vro lec'h mah aont ha ma vo ken koutant o chefoù nevez anezhe el mand eo bet eñ. Met ne c'hell ket komz ; tagiñ a ra get an difronk. Pep unan en em laka en e lec'h ha setu-ni dispartiet. Un tammig àr-lerc'h eh arru ar re gozh daet ag an 35°. Ag ar blezioù 94-95 emaint rac'h, en o mesk Breizhiz a vro Dreger. Unan a oa mestr bag ; a Bleubihan ema (Foricher).

A-raok noz e welomp ag hor soudarded aet er C'holoniale. E-leizh anezhe en deus lec'hioù konduerion, keginerion, skrivagnerion. Ar re-se a vo eürusoc'h eno e'it genomp-ni... Met ar re 'rall ?

**22-11-1915** - Skornet en deus. Yen eo. Gober a ran tan en ur brasero hag e c'hellan en devout un tammig gwrez kejet get ur yoc'h moged... Met er brezel eh omp !

Ma zreid gronnet en ul lañjer, ur bann heol é skoiñ àrnon dre ar 5 karrez gwer a chom àr ar fenestr, nend on ket sur an hannn maleürusañ c'hoazh.

**23-11-1915** - Henoazh eh aomp da 180. Hon tro eo bout en trañcheoù. Komañs a raomp en em ober doc'h ar vicher.

An hent eo ar gwashañ. Ar wezh-mañ eh aomp èlkent a-dreuz. Ur vrumenn yen a zo. Ne weler ket 500 paz dirak an den. Skornet eo. A-raok arru get ar Pont-Jacquin, e-tal Minaucourt, e welomp un dra poanius. Un arc'hul a zo torret e bav kleiz a-dreñv. Ema e-kreiz ur blaenenn, trist ha treut. E-taltoñ tri den a grouiz un toull lec'h ma vo lakaet tuchant, marse e bev ! Al loen mut a chom hep fichal, èl a pa vehe marv dija. Sellet a ra doc'h an toull lec'h ma kouezho tuchant hag em eus truez doc'htoñ, ar paour-kaezh loen...

Aesaat a ra klask lec'h d'ar gompagnunezh rak bremañ eh aomp beb eil kwezh d'an trañcheoù ha beb eil kwezh en abrioù doc'h ar Promontoire.

Arru a ra ar gompagnunezh àr-dro 7 eur. Kousket a ran en un toull lec'h ma oa an adjudant deiz an emgann (25) hag a zo foñdet rac'h bremañ 'met an doenn. Get lien tant e stankan an toull hag e c'hellan kousket a hanter rak aneoued am eus. Ma sac'h am boa lakaet er c'harr, met èl ma oa skornet an hentoù ema ret dezhoñ arrest. En arrest en doa stoket ur c'harr doc'htoñ ha torret ur rod, ha setu-me hep sac'h ha hep lañjer. Dre voneur e kavan lañjel kozh ar c'hapiten am boa kaset genin.

An ofiserion hag a c'hortoze ar c'harr ivez evit koaniñ en doa graet bouzelloù moan...

**24-11-1915** - 'Pad an noz eh omp bet dirañjet get an tamm rod-se. Ar mintin-mañ, a-vintin, ema aet ar c'hapiten d'er gwelet. A-c'houde eh eus kaset tud da glask an traoù hag ar c'haporal- fourrier. Nag ur stal ! Get rac'h ar boan a oa bet a-gaoz ar rod-se e vehe bet graet unan nevez ! Komañs a ran kempenn ma loj. Er stankiñ a ran. Hon tud a ra èl bepred : degas koad, houarn, plañch d'ar C'hoad-Vallet evit ar gentañ linenn. D'an noz e labouront atav.

**25-11-1915** - Achu a ran kempenn ma loj. Resevet em eus ar gazetoù, dastumadennoù hag e pasean bravik ma filajoù. Komz a raer atav ag ar sistr evit ar soudarded met kant digarez a gav politikerion ar C'hreisteiz evit teurel dismegañs ar evaj hor bro. Gwell e vehe deomp rac'h neoazh kaout un tasad sistr mat evit ar sistr-gwin a roer deomp. Graet em eus un daol em loj hag e skrivan àrnezh evit ar gentañ gwezh. Ar Jermaned a zo didrouz ar wezh-mañ.

**26/27-11-1915** - Netra a nevez 'met al labour komandet bep eil penn get tri pe pevar mestr. Bremañ e lârer monet 100 da labourat 'benn arc'hoazh. Ur c'hardeur àr-lerc'h ema rac'h ar gompagnunezh e'it pas an noz. Nend eus ket mui penn erbet dezhe.

An amzer en deus yenaet-mat. Skorniñ a ra mat. Ar bara a skorn, an dour er seilhoù hag an añkr doc'h beg ma stylo. Ret eo din en diskorniñ get ma anal !...

An amzer ivez a zo sklaer hag e nij an aerlistri muioc'h e'it biskoazh. Tenniñ a raer àrnezhe ivez a-fors...

Henoazh e tle rac'h ar gompagnunezh monet da gas traoù d'an Index. Kent pell e tleomp fardiñ àr ar Jermaned ha teurel àrnezhe klor maged. Met ne ouian ket perak e tegaser en-dro hon tud hep bout graet al labour. Goulennet e oa neoazh 25 den get an eil bataillon evit sekour.

**28-11-1915** - Yenoc'h pe yen. Lâret a raer deomp eh eus 8 den doc'h hor gortoz e Courtemont daet ag an dépôt.

Hadiñ a raomp obusoù àr ar Jermaned muioc'h e'it ne daolont àrnomp a-c'houde un herrad zo.

**29-11-1915** - Dle e oa deomp monet kuit hiziv met labour preset a zo. Bout a zo podoù houarn leun a gas klor da gas tost d'ar gentañ linenn. Kaset en deus mem an eil bataillon deomp

25 den e'it pep kompagnunezh e'it sekour. Monet a raont àr-lerc'h koan àr-dro 6 eur edan un amzer teñvel, er fang, glav ec'h ober. E-pad an deiz eh oant, ar geizh, é labourat edan ar fall amzer. Heneoazh eh aont enta, al Lieut. P. gete. Met hennañ, èl 'gozig rac'h an ofiserion ag an T<sup>al</sup> a pah arruont àr lec'h al labour, a ya en un toull da c'hortoz ma vez achu al labour. An dud int, konduet da dud arall, ne ouiont ket mat an hent, a ya en noz teñvel, o fod a-stribilh doc'h ur vrec'h gravazh, e bouzellennoù leun a zour hag a vouilhenn, lec'h mah aont betak an daoulin. Poan o deus doc'h en em stlejal hag o deus ur samm a 75 Kil. da gas etre daou. Re yaouank a zo ivez é labourat hag e klever lod anezhe é c'houeliñ get ar boan o deus. Lod ag hon tud-ni a c'houel ivez. Ne harzont ket é labourat noz-ha-deiz edan an amzer. Donet a raont en-dro da bep kourz ag an noz. Da 4 eur eh arru c'hoazh anezhe. Hag en noz e taer da lâret deomp eh a ar gompagnunezh kuit arc'hoazh àr-lerc'h ar soubenn ! Ur redadenn arall c'hoazh. Hag ar glav ne arsav ket. Bremañ ne c'heller mui distag an treid doc'h ar fang.

Graet em eus tan em zamm chemical hag eh on mouget d'ar moged !...

30 a viz Du 1915 - Da 11 eur eh a ar gompagnunezh kuit. Ni ya-ni un tammig a-raok. A-c'houde daou pe tri deiz e taol ar Jermaned ur yoc'h potarnoù àr an diaz ag an dostenn 180. Dec'h e oa lazhet pe gwallaozet re ag ar C'holoniale. An deiz a-raok ur c'haporal àr varc'h a dremene àr hent Massiges get ur c'henseurt àr droad. Un obus a gouezh e-talte, a laz ar soudard àr varc'h hag an hanni àr droad n'en deus ket bet droug erbet. Hiziv ema tro ur soudard ag en 8<sup>vet</sup> kompagnunezh a oa àr lein an dostenn a zo skoet. A pa soñjer ar bihanañ amañ e vezer falc'het. Ar Jermaned a sko àrnomp a du Ville-sur-Tourbe hag ar C'hoad-Hauzy. A eno e welont forzh aes ar pezh a bas er flagenn-mañ.



Monet a raomp-ni a-dreuz dre an hentoù berrañ hag e welan a-dreñv rac'h al linenn a ya a-zrebi Massiges beta Maison-de-Champagne. Nag ur vro noazh ha disto ! Gwelet a raer du-mañ ha du-hont koadigoù pe kentoc'h treujad gwez a zo bet troc'het d'an obusoù. Gwenn eo ar menezioù get ar bouzellennoù krouizet pe get an tennoù obus. Pell-pell du-se, 25 lev bennak, en Argonne du get ar c'hoadoù.

Arru a raomp e-kreiz an deiz met hernet, man Doue ! Ma choachetoù a zo en ur stad truek : diseuliet int ! Atav ar mem buhez amañ. Paperioù a zo d'ober muioc'h e'it bihanoc'h. An dudjentil a chom amañ ne soñjont ket eh omp-ni skuizh hag hon eus d'en em naetaat. Int ne vouljont ket hag a-boan mah arruomp e kavont tres o dorn àrnomp.

**1<sup>añ</sup> a viz Kerzu 1915** - Deiz ar pae. Fank ha paper.

**02/03/04/05/06-12-1915** - Ne arsaver ket a skriv. Re ec'h arru bemdez a bermision get un deiz, daou zeiz re ziwezhat hag ema ret o bountiñ a-barzh. Rac'h e taont hanter-vezv, gwin ardant gete, hag a raont an dro get o boutailhad e'it reiñ da dañvaat d'ar re 'rall. Unan, ul lañstefoued, en doa graet sielliñ e bermision hag en doa distroet d'ar gêr goude hep bout gwelet : 2 pe 3 deiz re ziwezhat eh arruas.

Arru a zo c'hoazh genomp soudarded : unan ag ar Faoued daet ag an Oriant ha, rak mand eo daet e-unan, eñ e lâr deomp bemdez en deus pechañs fariet ar re en deus-eñ kaset du-mañ. Un arall, marc'hadour koshaj e Pariz, a zo bet beta bremañ e Troyes hag a-dreñv : hennezh a ray selloù du a pa faoto monet da 180.

Ur c'hapiten nevez a zo arru da vout chef de bataillon. Unan hir, trist, moan, gwisket a druegezh get ul lavreg ru, ur c'hozh capote hag ur bonet polis lien lous... Amiapl eo neoazh, amiaploc'h evit an arall.

Kaset hon eus 28 den da Donmartin-La Planchette evit diskarg bagoniou an deizioù paseet.

Arru a ra kemenn genomp monet da 180 henoazh. Da 12 h. eh aomp-ni kuit. Dre ar Vallon-en-Dent-de-Scie e konduan an adj. de Bat<sup>on</sup>. Aon en deus d'en em goll, ar paour-kaezh... Arru a raomp neoazh àr-lerc'h bout patouilhet e-pad 3 eur er fank hag en dour.

Doc'h tor 180 e chomomp ar wezh-mañ. Na fank ! Monet a raer a-barzh betek an daoulin hag e stag neuze... Fank Breizh a stag, fank ar vro-mañ a stag kant kwezh muioc'h. Lod ag hon tud é tonet a gouezh e toulloù : straket int, ar geizh, o zreid fôndet...

**06-12-1915** - Da 8 eur 1/2 noz - Arru a ra ar gomp. Da 23h. e teraou ar paperioù. E-pad an noz ha d'ar...

**07-12-1915** - ... da vintin e teraouont arre. Arsavet en deus ar glav. Ar pezh ne arsav ket ema ar c'hanon doc'h tu Tahure ha Maison-de-Champagne. A-c'houde dec'h da noz e rudell an traoù hep arsav.

**08-12-1915** - An hevelep labour a ra hon tud, met ar wezh-mañ e labouront d'an deiz hag ema un tammig bourraploc'h dezhe. Ar pezh a zo mezhus a zo kas 100 den da labourat un deiz a-bezh en un tachad lec'h mah eus labour da 20 den e-pad un eur pe div. Lies e tegouezh an dra-se, hag an ofiserion a c'hellahe gober un dra bennak ne fichont ket ag o zoulloù : doujiñ a raont ar fank pechañs... E-pad ma vezont èl-se dalc'het er-maez e tegouezh d'ur potarn bennak kouezh àr ar vandenn. Daou pe tri a gouezh, gwallaozet pe lazhet.

**09-12-1915** - A-c'houde mah omp arru ne arsav ket ar glav hag ar brumaj. Bemdez ivez e tarzh an traoù trema Maison-de-

Champagne lec'h hon eus kollet bouzellennoù a zo ret bremañ da c'hounit en-dro.

Hiziv ar chef de bataillon nevez a gas kemenn pas fournis dezhoñ mui Etat Néant evit ar pezh a sell ar re lazhet pe bleset. Setu unan hag a zo finoc'h e'it ar re 'rall...

Ur vezh eo gwelet an dud lojet el m'emañ e toulloù lec'h ma kouezh glav ha 'gozik hep plouz. Àr-lerc'h bout gwlebet-mat ema brav bout e toulloù seurt-se é repoz.

Dec'h da vintin hor boa kaset kuit ar soudarded kozh 1890-1891-1892 en doa kaset an dépôt du-mañ. Èl-se e weler penaos dizurzh a zo er burevioù-se. Goût a ran hiziv ema ar re ag ar 88° aet en 34°-35° Colonial el linenn gentañ hag ema dle dezhe atakiñ arc'hoazh vintin da 5 eur. Ur brav a amzer o deus choazet. Ne gredan ket e vo ar fard-mañ kenkoulz el ar re 'rall : re fall an amzer hag ar soudarded n'o deus ket goust erbet.

**10/11/12-12-1915** - Glav atav. Atav fank. Meur a wezh erc'h. Ret eo din achap a ma zoull douar : ne dizhan ket skarzhiñ an tammoù a zistag ag al lein, hag aon a za din ne zistago an doenn a-bezh ha neuze e veher kuit a ober interramant genin. Monet a ran er burev get man dornad plouz.

Bep mintin respont oferenn an Ao. Moigneu en toull lec'h ma tebromp. An avel a c'hwezh ; ar glav a za àrnomp. An aoter a zo un tamm plañch pozet àr 4 post koad. Kein an aoter ar voest aoter. Ul lien tant a servij da doal. Ur pod « singe » get soav a-barzh a servij da lamp hag ur c'houlouennig koar a servij da biletoù. Meur a wezh e varv ar gouloù hag ema ret din, get ma faper a servij din da respont an oferenn, parraat an avel doc'h ar gouloù.

Hiziv ema an deiz d'achap met komz a raer e chomimp 12 deiz muioc'h amañ. En un taol, da 3 eur 1/2, eh arru ar gemenn genomp da vonet kuit ! A-herr, en ur 1/4 d'eur, ema ret din gober ma sac'h, serrezh ma zraoù ha monet àr-raok

get ar c'hampemant. Ken fonnapl eh an kuit ma ne dizh ket d'an daou zen a zle donet genin arru a pah aomp kuit. E Courtemont hepken eh arruint genomp.

Lous eo an hentoù met neoazh pas ken fall èl ma kredemp. Lakaet a zo pontigoù àr ar bouzellennoù evit pas a-dreiste – rak ne faot ket soñjal a vonet enne bremañ : leun int a zour. – Àr-dro 6 eur 1/2 eh arruomp hag ar gompagnunezh àr-dro 10 eur.

**13-12-1915** - Hiziv e roomp d'an dud toile de tente. Goulennet e oa genomp mar hor boa re da cheñch. Hag eh eus kaset deomp re kozh, falloc'h evit hor re-ni c'hoazh. Ret eo bet deomp o rentiñ 'gozik rac'h. Loeroù ha manegoù a zo roet ivez.

**14-12-1915** - Cheñchamant amzer. Skornet en deus e-pad an noz. Yen eo arre, ha nend eo ket forzh bourrapl bout staget doc'h an daol e-pad an deiz. Al Lieut. Le Petit a ya e perm. Le Bayon a gemer e lec'h èl kapiten. A-raok monet kuit e skriv ar Rapport-mañ.

**15/16/17-12-1915** - Netra a nevez. Frim a ra ; glav. Yen eo. Komz a raer c'hoazh ag hor c'has àr-dreñv met ne gredomp ket mui netra.

**18-12-1915** - Nend aomp ket da 180 ken ne vo arc'hoazh vintin. Lâret a raer eh aomp evit daou zeiz hepken, met poan hon eus é krediñ rac'h an traoù-se. Komz a raer ag hor c'has da gostez Meaux.

**19-12-1915** - Da vintin e sav boulj. Da 6 eur eh aomp kuit. Skornet eo an hentoù hag aesoc'h é monet àrnezhe. Kentizh èlomp 'gozik eh a ar gompagnunezh àr-raok. Cheñch a raomp

c'hoazh lec'h er Promontoire : ar wezh-mañ eh aomp doc'h an tu gwalern ha lec'h erbet ne vo ket evit ar burev. 'Benn ar fin er graomp lec'h ma oa gwezharall ur poste da télégraphie optique ha goude an adjudant de B<sup>on</sup>. Nend eo ket drouk an tachad met bihan eo. Ar Génie en deus skarzhet el bepred ar pezh a oa a vad a-barzh. Daou doullig a oa evit kousket : nend eus 'met an orsal mui. Me 'ra-me man gwele get ma lien tant. Fall lojeris ! Ha ne oan ket yac'h. Reboursset em eus ma c'hoan an noz paseet... Ar red-kov get an dra-se ha setu skarzhet an den... Ne harzan ket e man gwele get an aneoued.

An dud a vez kaset doc'htu àr-lerc'h kreistez da gas traoù d'ar C'hoad-Valet.

**20-12-1915** - Labour el bepred ha paperioù.

D'enderv-noz e lârer deomp eh aomp kuit el kent ! Ar 111° a za da gemer hol lec'h. Nag ul levenez ! Rac'h an dud a zo eürus.

130 den en deus kollet ar 88° amañ : 32 lazhet, 98 bleset.

**21-12-1915** - Ar mintin-mañ a pa savomp ema gwenn an traoù ha yen an amzer. Erc'h en deus graet hag atav e kouezh.

Da 11 eur e tleer monet àr-raok. Ar re a gemer hol lec'h a sell rous doc'h ar menezioù fangek-mañ o deus da bignal doc'hte.

Monet a raomp-ni a-raok ar gompagnunezh, da 11 eur. Gwenn eo rac'h ar maezoù, diaes kerzhet àr ar blaenenn gwenn ha souezhus hor gwelet. Stagiñ a ra an erc'h doc'homp. Ma mantel a rent servij din.

Kompagnunezh arru 3 eur. Gwlebet. Straket. Arc'hoazh vintin eh aomp àr-raok. 30 kil. d'ober met lâret a raer deomp e tay kirri-tan d'hor c'hask.

**22-12-1915** - 5 eur eh aer kuit. Cheñchet an amzer : brav

eo bremañ. 9 Kilom. betek ferme La Planche lec'h ma ta kirri-tan d'hor c'hemer. Dre Meaux, St-Cohière, Ste-Menehould ha Vieil-Dampierre eh aomp beta Neuville-au-Bois lec'h mah arruomp da 11 eur.

Ar vro-mañ a zo elkent pinvikoc'h e'it an hanni e taomp anezhi. A-benn a pa zegouezhomp doc'h dinev an Aisne e welomp ar cheñchamant. Parkadoù gwez avaloù, flagennoù geotek, tammigoù douar hadet. E Sainte-Menehould e tremenomp el ul luc'hedenn é strimpiñ fank doc'h brec'hier an intronezed é tremen ! Na selloù rous a daolont deomp. O, intronezed dantellet, penaos selloù a rahec'h-c'hwi a pa vehe ret deoc'h monet du-se d'ar C'hoad-Valet ha da Flagenn-ar-Stang !...

Àr an hent ne welomp anad erbet en deus tremenet ar Jermaned dre-mañ, ken 'met a-raok arru e Neuville-au-Bois lec'h mah eus en ur park daou pe tri tachadig a zo bet krouizet enne bouzellennoù a-dal d'ur bod lec'h ma oa morvat kuzhet ur mitrailleuse bennak.

La Neuville a zo ur gêrig vihan staget doc'h penn un dostenn el mah eus e-leizh er vro-mañ. Diskouez a ra bout pas pinvik, met aes an dud a zo a-barzh. Met el rac'h ar vourc'hoù ag an tu-mañ a Frañs, 'gozik rac'h an tier a zo graet get plañch ha pri.

An ti lec'h mah omp a zo aet an dud kuit anezhoñ. Diskouez a ra e oant pinvik : fournis eo an ti ha gloestraj a zo a-barzh, kizellet lod anezhe. An horloj a zo get ur voest ; kozh eo. Ar cheminalioù a zo frank, pladennoù bronze doc'h ar c'hein anezhe. Ur ber get pouezoù a chom àr gorn ar stal hag er gredañsoù eh eus c'hoazh listri kouevr.

**23-12-1915** - En ur gamprig e kouskan àr un nebeudig plouz gwinizh lakaet àr ar blancheris. Un dornad kañfr a daolan e pep lec'h e'it pellaat an anstu rak re 'rall a zo bet amañ.

Laosket o deus mEMP merkoù ha nend int ket ag an dibab àr o lerc'h : sec'hier foñdet, gamelles lec'h mah eus troazhet... Dec'h d'an noz e oa bet bec'h get an dud vezv. Setu pell 'zo n'o doa ket gellet evet o gwalc'h ha dec'h o doa neuze karget muioc'h e'it ne c'hellent doug... Unan anezhe mEMP a yas da gouezh el lennad dour a zo d'an diaz ag ar vourc'h. Burzhud ma ne oa ket chomet a-barzh.

Henoazh eh aomp kuit arre. Da 24 eur e tleomp kemer an tren e Givry-en-Argonne. Ne ouier ket c'hoazh forzh kaer lec'h mah aomp. Lod a gomz a Château-Thierry, lod ag ar Bourget, lod arall a Nanteuil-le Haudouin. Ni 'welo !...

Consignet eo hiziv an tavarnioù, ha mat a zo graet - (Àr ur geriadur kavet e ti Deullin, Neuville-au-Bois, lennet en dramañ àr gêr Lorient : On y fabrique du sucre de betterave. Dict. Univ. d'Hist. et de Géogr. par Bouillet. 1842 ; Hachette.)-

C'hoazh eh eus tud vezv met nebeutoc'h a drouz a zo gete. Ar c'hapiten Maratray, nevez daet en hon mesk, en deus lakaet en e benn parraat doc'h Breizhiz a vezviñ. Difennet eo, eme-eñ, da hani monet da glask gwin hep aotreadur mestr e gompagnunezh. Daou gartad gwin seul pred a c'hellint preniñ, hag ar gompagnunezh a vo kavet tud vezv a-barzh ne vo ket mui aotreadur erbet dezhi da breniñ gwin. Paour-kaezh den ! Hir, moan ha displet eo èl Don Quichotte ; hag èl Don Quichotte eh a d'en em bilat doc'h ur vilin avel. Kastiziñ an holl e'it unan.

Monet a ran d'ober un hun goude koan rak nen daimp ket mui a-benn.

Prenet em eus konserv evit gober an hent hag em eus paeet 14 real an teir boestadig legestr, ton ha pate avu gwaz.

Monet a raomp kuit, ha glav bras hag avel àrnomp. Dre voneur nend eo ket hir an hent ha fang nend eus ket. Met ar glav a strimp en daoulagad. Arru a raomp enta e Givry-en-Argonne, ur vragig a vourc'h a zo ul lennad dour doc'h

un tu anezhi. Ar gar a zo pellikoc'h. Derc'hel a ra ar glav. Ne chomomp ket re bell a-raok krapañ en tren, met pell e chomomp a-raok monet kuit : ema 1 eur 1/2 a pa zistagomp. Dre Vitry, Châlons, Epernay eh aomp, met teñvel eo ha glav a ra, ha ne welomp 'met Châlons get ur yoc'h tud é monet e permission.

E Mezy e chomomp un eur. E-talon ur soudard a gemer greun kafe hag o brev en ur gamel get ur c'hros fuzilhenn. Ur mouched a servij da sil ha ne ziskouez ket bout re vistr.

**24 a viz Kerzu 1915** - E Trilport ema an arrest. Emberr e son an trompette d'ar fourriered da ziskenn ha setu-ni é monet àr hent Meaux. Da Iverny ema dle deomp monet. Nend omp ket c'hoazh aet-mat er-maez a Drilport ma teraou glav bras d'ober. Mar dalc'h da gouezh el-se ne vo ket un neudenn sec'h ac'hanomp p'hor bo graet ar 15 « kilometrig » hon eus d'ober reve ar c'homandant Colombani.

An hent dre voneur a zo brav ha plaen. Al lodenn vrasañ anezhoñ a zo gouldronnet. A bep tu d'an hent : gwez vras olm, druz ha digor. Tri c'hardlev bennak a-zoc'homp e welomp tour iliz Meaux a-dreist kêr a zo paket en ur flagennig a zo un dostenn goloet a goad en tu 'rall dezhi. Arru a raomp emberr e Meaux. Ur gêrig koant a zikouez bout. An iliz a ziavaez a zo kaer, met an amzer hag an dud en deus en em lakaet àr he zro. An amzer en deus debret ar mein-gwenn hag ar c'hizelladurioù a zo distaget e meur a dachad, hag an dud amoet o doa pourfitet ag an Dispac'h bras evit dismantr kement braventez, en deus dibennet delwennoù, foñdet skouedoù. Oar n'hon eus ket da vonet en diabarzh rak an hent a zo hir. Deraouet e oer da gempenn an tour. An hent a Meaux da Bariz a zo kempennet mat ; ur blijadur eo kerzhet àrnezhhoñ. A bep tu parkoù druz, hadet an darn vuiañ anezhe. Tier ne weler ket kalz : nend eus er vro-mañ 'met tachennoù vras. Ul levig doc'h Meaux,



e welomp arre lec'h an emgann : setu ur bez aze e-kreiz an douaroù. Bokedet eo hag ur vinotennig e-kreiz ar park gwinih a zo lesket evit monet d'er gwelet.

Chauconin a baseomp àr an hent hag a-dal neuze eh omp e-kreiz douaroùier divent hadet rac'h. Tostaat a ra da c'houbanwel-noz, met splann a-walc'h eo c'hoazh evit gwelet doc'h an daou du ag an hent bezioù niverus goloet a vannioloù triliv ha kurunennoù.

Amañ en doa arrastet hor soudarded an houlenn jerman hag emaint kouezhet edanti goude bout hi brevet, èl ma tor postoù ur pont edan pouez un houlenn mor goude bout hi foñdet. Nag a dud kouezhet c'hoazh....

Dre forzh kerzhet eh arruomp èl kent 'benn an noz e Iverny. Skuizh omp ken n'hellomp mui : nend eo ket 15 k. a oa d'ober met tost da 20... Amañ, hani ne ouie e taemp hag ema rac'h ar c'hantonemant da ober en noz teñvel. Lojiñ a raomp ar gompagnunezh en ostaj ag un ti tachenn. Plouz a zo : gellout a ray hon tud diskuizh. An ofiserion en deus gweleoù ha lâret a raer deomp e vo gweleoù evit lod an eil-ofiserion.

**25-12-1915** - Gouel an Nedeleg - A-herr e c'hellan kaout un oferenn diar 3. Ret eo en em soursial atav da lojiñ an holl. Kavout a ran ur burev e ti daou zen kozh, breur ha c'hoar intañv a zo daet da vevañ kevret e'it kavet dousoc'h amzer ar gozhoni. An degemer gwellañ a raont deomp. Gober a raont tan deomp, fournis a raont gouloù. Ar fenestr a zo distroet d'ar c'hreisteiz hag, a pa bar an heol, e ta da skoñ àr an daol lec'h ma skrivan. Ur c'here a zo er vro hag a laka koad edan ma galochoù. Get an dra-se e kav din ur gwele e ti ur vaouez ag ar vourc'h a zo aet he gwaz ivez d'ar brezel. Gwallaozet eo bet hag ema en ur c'hlañvdi a-c'houde tost d'ur blez. Ne gred ket neoazh e chomo mac'hagnet. 3 a vugale he deus hag he merc'h koshañ a zo klañv a-c'houde tost d'ur blez. Ar vestrez

a zo bet matezh get tudjantil ag ar Bourget ha redet he deus bro un tammig : soutil eo a spered ha kurius, hag èl-se he deus desket paot a draoù. Komz a ra din a vodoù ar vro-mañ : rac'h an douar a zo etre daouarn tudjantil pinvik ha noblañs en deus amañ manerioù hag a vev e-pad ar gouiañv e Meaux pe e Pariz. Start int e'it ar geizh. Ar mestr amañ a zo an aotrou atav met pas an aotrou a zebrer doc'h e daol èl genomp-ni, met an aotrou galloudek, taer ha diaes da servij. Nend int ket rac'h èl-se neoazh. Bout a zo tud vat en o mesk met dibaot int. An dud izel a vev doc'h an douar é monet da labourat, d'o devezhioù. 6 real, 7 real hep bout maget e'it ar merc'hed ha 8 real, 10 real ar baotred. Nend eo ket maleürus an dud neoazh rak èl m'ema druz an douar an traoù a zo marc'hadmat.

Kousket dous a ran er gwele-hont : ar gwashañ a pa yan d'en em ziwiskiñ, ne ouian ket mui forzh kaer dre bezh penn deraou...

**26-12-1915** - Sul. Sistr a zo amañ ha nend eo ket fall. Ar gwin a zo ker : 15 ha 16 blank. Bihanaat a ra an argant hag e vihana ivez an dud vezv. Debrñ a raomp e ti ur mevel ag an taosoù indirekt daet d'ar vro-mañ e-pad ma raer gwin ardant betrav er vourc'h-mañ. Karadek eo, hag e vaouez hag a zo ag ar C'hreisteiz a gomz hep dehan èl tud ar C'hreisteiz... Ar re-se a zo distag o zeod, ma c'haezh tud !

**27/28-12-1915** - Didrouz eo an traoù amañ. Met ar paperioù a zo ken stank èl biskoazh. C'hoant am behe neoazh da vonet er-maez ag ar vourc'h evit gwelet ar vro : oar n'em eus ket. Ar c'hapiten a arru hiziv get e gastellenn nevez. Me 'gonto an deizioù-mañ istor burzhudus ar gastellenn-se.

Al Lieut. Hegron a zo chom en un ti bourc'hiz lec'h mah eus ur c'hi fentus. A pa dostait d'an nor, eñ a sailh doc'hti hag a garg deoc'h. A pa zigorer an nor neoazh ne lâz ger ; met n'ho

laosk ket da zonet kuit hep ne zay ar vestrez get ur fouet d'ober hent deoc'h...

Devezherion a c'hounit 4 lur ; merc'hed, 8 real (sul ha gouel lakaet a kostez - hep boued).

E'it ar bara benniget amañ, pep tiegezh a ro d'e dro hag an hanni en deus roet hiziv a gaso ar boulc'h da di an hanni a zle reiñ a-benn disul, hag el-se seul gwezh. Ar voutailherez a anav an tiegezhioù hag a ra ur gurunenn bara a vo kaset àr ar foñs a vadeziant. A-raok an oferenn-bred, bugale an hanni a roa ar bara pe daou gurev a za get ur c'hravazh goloet get ur servietenn da glask ar bara : an hanni a roa ar bara a ya kentañ trema ar c'heur lec'h ma vez benniget ar bara. Ar boulc'h ag ar bara-se a vo kaset d'e dro d'an hanni a zle kennig ar bara ar sul àr-lerc'h.

Da zeiz an interrantoù, 'met hag e vehe bugale e vehent, tud an hanni tremenet a gennig d'ar person bara hag ur voutailhad win.

## 1916

**1<sup>añ</sup> deiz ar blez 1916** - Ar mintin-mañ e raer réveil en campagne hag e teraoz peb unan da vonet da welet e gomper. Daousto dezhe bout pell doc'h ar gêr, Breizhiz n'ankouaont ket modoù o bro - fall pe mat, el ma vezont. Hiziv e vo mezv en 3/4 anezhe. Roet a zo 1 vout. champagne etre pevar, 1 sigarenn, confiture, jambon, orange avaloù... Frikot, che !... Ar bae a oa ivez met dre voneur nend eo ket paet ken ne oa an deiz àr-lerc'h. Keneve-se e vehe bet gwazh an traoù c'hoazh.

D'an noz ema ret din monet d'al lec'h ma lojont hag e kavan re tolpet a-rond en-dro d'ur penn gouloù, o c'hartoù en o dorn, leun a sistr, hag int bec'h é son sonennoù ar vro. Ar binioù hag ar bombard ivez a zo tennet arre er-maez hag e klever e-pad an deiz o bouezh sklinton é tassion er vourc'h...

**02-01-1916** - Atav eh eus re vezv hag an eil-ofiserion nend int ket furoc'h e'it an dud. Bec'h a sav, taoloù dorn !...

**03/04-01-1916** - Didrousoc'h eo an traoù. Ar re furañ a ya da zebriñ yer pe konifled e ti an dud paour a ra un tammig friko dezhe. Sur emaint finoc'h e'it ar re a lonk o argant e evaj na ra vad erbet dezhe.

D'an 6 eh aomp kuit. Da Montge ema dle deomp monet àr-raok. Ne oa ket drouk an traoù amañ neoazh.

Kontet en deus ar c'hapiten din istor e gastellenn. Ur 4 lur bennak en deus kollet bemdez diàr e zevezh, hep kontiñ e voued. Kollet en deus àr-dro 3 skoed bennak bemdez, ha 26 deiz ema bet er-maez. 78 skoed en deus kollet. Sur ne vehe ket aet e gastellenn da gen ger dezhoñ a pan dehe karet he faeñ...

Hiziv ema aet kuit hor 4<sup>vet</sup> Colonel. Rac'h eh aont kuit diskaret d'ar bec'h. Hennañ a laka er Rapport kent kuitaat : «Le Lieut -C<sup>el</sup> se voit dans la pénible nécessité de se laisser évacuer, mais il espère que son absence sera de très courte durée. Il laisse à M. le Lieut -Colonel Colombani de Niolo le commandement du Régiment. Au cas où il ne lui serait pas possible de reprendre le commandement du régiment, il fait ses adieux aux officiers, sous-officiers, caporaux et soldats qui lui ont donné tant de satisfactions».

Ne vo ket keuz dezhoñ, rak e gwirionez n'hon eus ket gouiet hor boa ur c'holonel gwall lies.

Nend eo ket mui da Montge eh aomp met da St-Mard ;

ha nend eo ket d'an 6 eh aomp kuit met d'ar 7. Atav cheñchamantoù.

**06-01-1916** - Henoazh eh on kouviet get an I. Daoudin-Colletier da goaniñ. Ne rahuizan ket dezhi rak plijadur a rin dezhi. Gober a ra ag ar gwellañ e'it sevel ur predig c'hwek a zebromp er gegin doc'h un daolig vihan get ar vugale genomp.

**07-01-1916** - A-vintin eh aomp kuit (7 eur). 10 kil. d'ober met brav eo an hent ha pinvik ar vro. Gwelet a raomp div pe teir gwezh restajoù ag an emgann vras. Da 10 eur eh omp e St-Mard. Fonnañpl e raomp ar c'hantonemant hag e tebromp da c'hortoz ar gompagnunezh a arru àr-dro 3 eur. Lojet mat eo pep unan. Plouz a zo. Amiañpl eo an dud.

Sistr a gaver ha gwin, met èl bepred difennet eo monet da glask en tavarnioù hag e weler neuze ur yoc'h re vezv e-pad ma chom ar re 'rall hep evet rak mand int re aonek. Me 'gav-me ur gwele e ti un intron a zo he gwaz saozon. Bep mintin da 6 eur 1/2 eh a da Bariz da labourat. Bep noz e ta d'ar gêr get en tren a 9 eur. Ur saoz eo, ha hi 'zo-hi ur suisenn. Diskouez a raont bout tud sevenaet. An intron a ra skol hi-mem d'he bugale hag a ziskouez kariñ ar studi. Ar vugale a zo desavet mat. Ur saloñs a zo a-barzh delwennoù, taolennoù livet a ziskouez ema desket an dud. E ma c'hambrig taolennoù c'hoazh, hag ur penn kartoñs a zo àrnezhon « *Que ta bonté soit sur nous, ô Eternel !* » E tier protestant em eus gwelet kement-se ivez e Bro-Saoz.

**08-01-1916** - Didrouz eo an traoù amañ. Da gerzhet e vez kaset hon tud e'it o deverral. Ni a skriv-ni dalbezh !

**09-01-1916** - Sul. Dilhad a zo arru hag ema ret arre pas un devezh a-bezh e'it o lodenniñ.

Gellout a ran monet d'an oferenn a 8 eur. An iliz nend eo ket souezhus ; neoazh a-dreist an aoter eh eus ur vitrail a zo àrnezhoñ buhez Sant-Medard a zo kaer e liv. Ar gêr-mañ a oa St-Medard gwezharall. An D a zo kouezhet hag ema daet da vout St-Meard, St-Mard (èl Paern).

An enderv-mañ eh eus arru un dek soudard bennak genomp. Re kozh 1894-1890. An hanter anezhe a zo mac'hagnet, inapte, hag emaint kaset deomp ur seurt !...

**10-01-1916** - Monet a ran da vale trema Dampierre. An hent a dreuz ur c'hoadig hag a-gleiz hag a-zehou ema frouezhet ar parkoù. Na kaer e tle bout ar parkoù-mañ da nevez-hañv ! Chom a ra c'hoazh edan ar gwez avaloù nend int ket bet serrret. Tud ne oa ket hanter d'ober al labour. Avaloù kontell a zo e-leizh er vro-mañ, ha gounit a raont e-leizh a argant e kas anezhe da Bariz. An dud en deus ivez labour ar pezh a garont. Ar merc'hed a c'hounit betek 7 real, 8 real bemdez (a-dal 15, 16 vlez) é labourat da serrezh frouezh, da c'hwennat an ed, pe àr-dro ar chicorée endive. Kement-se a zo kaoz ne gaver ket kalz a dud paour er vro.

**11-01-1916** - Devezh ar pae. N'hon eus ket dehan erbet. Bemdez e kouezh labour nevez àrnomp. Gwir eo e kavomp èl-se berroc'h an amzer.

**12/13/14-01-1916** - Didrouz e vevomp amañ. Re zidrous rak emberr ema ret monet àr-raok. Arru eo an doere genomp eh aomp kuit d'an 16. E-men eh aer d'hor bountiñ c'hoazh...

**15-01-1916** - Bepred eh omp staget doc'h an Armée Coloniale ha da gostez Crèvecoeur ema dle deomp monet evit he c'havet. Arc'hoazh vintin eh aomp kuit.

**16-01-1916** - Da 6 eur ema an eur da vonet àr-raok evidomp-ni, fourriered. Monet a raomp, harz-pe-krev el bepred, betek Coye. Ur vro gaer ha druz a dreuzomp. Bep lev bennak e kavomp ur vourc'hig. Emberr e welomp koad Chantilly hag eh aomp a-barzh. Ur blijadur eo bout er vroig-mañ. Atav parkoù bras-bras a weler displeget keit el mah a ar sell. Nend int ket rac'h hadet neoazh rak divrec'h a vank ivez er vro-mañ. Trañcheoù a zo bet krouizet stank en douaroùier hag orsal drezennek a zo ivez.

Coye a zo en un devalennn bourrus. An tier a zo àr vord an hent ha kentizh àr-dreñv al liorzhoù ema ar c'hoad doc'htu. Tor ar menez a zo goloet a goadoù kaer.

An dud a zo amiapl, ur bam. Un degemer karadek a raer deomp. A-benn ema kavet deomp lec'h ar soudarded ha donet a raer a-benn da c'houlenn genomp mah eus soudarded hag a vehe koutant bout kouviet da zebriñ ha da gousket ! Ni 'zo kouviet get ur gouarnour forest da zebriñ ha da lojiñ. Hon degemer a raer el a pa vehemp ag an ti. Hag el-se e tegemerer an holl a pa zegouezh ar gompagnunezh.

Na konifled a vo debret hiziv amañ ! Pec'hed eo ema ret achap arc'hoazh !

Kêr a zo mistr hag an dud ivez. D'an hañv e ta ur yoc'h tudjentil a Bariz da vale d'ar c'hoadoù-mañ hag int a zebr en ostalerioù a gaver stank er vourc'h hag àr an hent.

Setu pell 'zo nend eus ket graet degemer ken kaer deomp el amañ. Ur pred roue a ran : konifl, kig heizez, formaj heizez, kaol-fleur, saladenn, kanou, avaloù, kafe.

Gwele kaer da gousket ! « *Mon poilu* » a lârer deomp. An dud-mañ a zo achapet ivez a pa oa ar Jermaned ec'h arru. Spontet e oant. Re a faote dezhe en em deurel edan an tren e sigur nen dae ket an tren d'o c'hlask abred a-walc'h. Goude o zraoù kuzhet e lessiveuzoù el liorzh. Goude achapet Jermaned. Labour trañcheoù. O bugale 17-18 vlez a c'hounide 2 skoed bemdez.

Jiboesaat a ra ar garde-forestier : an deizioù paseet en doa lazhet paseiñ 70 heizez ! Bemdez, bep pred, e tebront jiber.

Ar gompagnunezh a zegouezh da 4 eur.

**17-01-1916** - Monet kuit 7 eur mintin.

Treuziñ Chantilly. Bro kaer - Koadoù - Tier - Heizez - Pont torret - Bag mor-

Kontiñ G<sup>al</sup> de Brigade arru e-tal gwazh.

Degemer mat e ti an holl.

St-Leu-d'Esserent. Iliz kaer. Abatti. Tier.

**18-01-1916** - Monet àr-raok 6 eur mintin.

30 kilom. Ar vro nend eo ket mui ken brav. Tier rivinet, gwez avaloù. Meneziek.

Koadigoù e-kreiz parkoù.

Hentoù karr get silex.

Arru Villers-St-Sepulcre 8h1/2. Komz da -

Ne harzan mui getoñ.

Boued. Gwele erbet e'it kousket. Àr ar plouz. Kraou.

Gwelet enseigne Phokol.

Ar gompagnunezh ne harz ket mui. Souezhet eo ar re nend int ket Breizhiz.

**19-01-1916** - Monet kuit 7 eur dre Beauvais. A-zehou e paseomp.

Kêr seblant koantik. Tier brik. An iliz kaer met hep kloc'hdi. Kaer-bras an amzer. Nevez hañv.

Ret din monet àr marc'h-houarn ar gompagnunezh. Mam bizied treid a zo foeñvet ha morvat emaint talpet. Debrñ en un davarn a-raok Beauvais get kafe ha gwin ardant - Hentoù brav atav get avaloù.

Kalz kirri-tan goulle. Perak hor c'has àr droad ! Hag an tren (displeg)



indesirable  
bazhadoù  
Erc'h - lumière.  
Arrivée à Proyard 11h. C<sup>ie</sup> 2h.  
Mauvais cant°

**19-01-1916** - Noz Campdeville 4h. Usine.

**20-01-1916** - A 8 h départ Camp. Arrivée à Frestoy à 11h1/2.

**17-01-1916** - Da 7 eur mintin eh aomp-ni kuit ; ar gompagnunezh da 8 eur. Skornet en deus un tammig. An hentoù a zo kaer, ur bam, ha treuziñ a raomp koadoù Chantilly. A-gleiz, a-zehou doc'h an hent, manerioù kaer goloet a zeliav, get parkoù diraze, re ag ar re bravañ. Koadigoù kempennet, minotennoù klouar. Setu ur vro a zle bout kaer-bras d'an nevez-hañv : nend on ket souezhet e ta an tudjentil dezhi da vale.

Monet a raomp èl-se e-pad un euriad vat. Gwelet a raomp un heizez, roñseed-red, un tampl Weslesien, kêrigoù paket brav, tier dispak get abrevantoù glas-glas ! Tre-mañ e karont ar glas tener hag an tier gwenn. Ar glas neoazh a-bell a c'hell plijout d'an daoulagad, met ar gwenn ! Kenkoulz e vehe gwennniñ ivez kastel Roc'han e Joselin ! Arrast a raomp e-tal ur c'hoad gronnet a orsal kroazet evit debriñ un tamm e-pad mand eo ar c'hapiten Foix é monet da ouiet mar gellomp derc'hel get an hent, rak setu, ar pont e'it monet da St-Leu a zo torret ha hani ne ouie ! Emberr e ta da lâret deomp e c'hellomp monet èlkent : ur vagig hor c'haso d'an tu 'rall... Met ar gompagnunezh a vo ret dezhi monet d'ober an dro da Creil ! 32 kilom. ! Ar pont-se en deus tapet meur a unan : ar sizhun baseet ar C'holoniale, get ar jeneral er penn, a oa

daet betekzoñ ivez ha nen doa ket gellet pas. Met finoc'h e'it ofiserion ar 88°, graet en doa ar jeneral d'e dud tremen diàr ar pont houarn a zo un tammig izelikoc'h. Ar pont torret-se a zo taolet àr an Oise just e-tal kêr.

E St-Leu-d'Esserent eh arruomp àr-dro 10 eur. Ar gwellañ degemer a raer deomp c'hoazh. Neoazh diaesoc'h e kavomp lojeris. Kousket a ran-me e ti ur vaouez a zo chifet-bras m'ema aet he gwaz d'ar brezel. Debrñ a ra genomp d'an noz hag e taomp da benn ag he dic'hlouanekaad un tammig.

E St-Leu-d'Esserent eh oa gwezharall ur manati a weler c'hoazh restajoù anezhoñ. Un iliz vrav a chom c'hoazh, met nend eo bet biskoazh achu : nend eus 'met unan ag ar c'hloc'hdioù. Vitrail erbet, ken 'met gwer. An diabarzh noazh. Ar chapiteaux nend int ket rac'h achu. Bezioù pe kentoc'h mein-bez a zo stank àr al leurenn. Doc'h an daou du ag an nor dal, daou vez ag ar 17<sup>vet</sup> kantvlezad a zo bet rac'het àrnezhe anvioù Doue, ar roue, seigneur, souverain e-pad an Dispac'h.

Kêr a zo a-skribilh doc'h un dorgennig troet d'ar wazh-vor.

Meingleuzioù a zo ha mein-rad enne ; ar re gozh a servij da hadiñ potironed a lakaer e-leizh er vro-mañ.

Da 4 eur eh arru ar gompagnunezh.

Kousket dous e gwele-kreiz ar vestrez get Gauffriant. Paperioù e-kreiz an noz rak Fil-de-Fer ne arsav ket a skriv hag a c'houlenn paperioù.

**18-01-1916** - Da 6 eur da vintin eh aomp-ni àr-raok arre (ar gomp. da 7 eur). 30 kil. a zo d'ober hiziv.

Vilaat a ra ar vro ; treutaad a ra ar gwez. Ar gwez avaloù a zo man àrnezhe. Stank e kaver àr an hent tier hanter diskaret, dilaosket.

E-kreiz an douaroùier koadigoù bihan, tailherisoù. An hentoù a zo ar c'haerañ : graet int get mein-tan kalet. E Villers-

St-Sépulcre eh arrastomp d'un eur 1/2. Ar gompagnunezh ne arru ket a-raok noz. Amañ ema bihan ar vourc'h. Lec'h da gousket e gweleoù nend eus ket. En ur c'hraouig deñved e kouskan. Kaer eo a-barzh. Skuizh on ken n'hellan mui. Ma zreid a zo foñdet al lein anezhe. Debriñ a raomp e ti ul labourer en deus 5 a vugale. 2 a zo marv. Un dessinateur fin eo. Un daolenn graet dezhoñ a ziskouez Pariz en amzer gozh. Diskouez a raont bout er vizer.

Ar soudarded ne harzont ket, ha neoazh arc'hoazh ema ret krog en-dro da gerzhet. Ar re nend int ket Breizhiz a chom bamet d'hon tud : ne harzont ket èlte.

Àr an hent un ti a zo àrnezhhoñ « Villa Phokol » ! Piv eo an amoed a zo é chom en ti-se ?

**19-01-1916** - Da 7 eur eh aomp àr-raok. Tremen a raomp e-tal un uzin a raer gaz aphyxiant a-barzh. Àr hent Beauvais eh aomp hag e talc'homp da heuli an hent-houarn. Àr an hent e kavomp tankirri na raont netra pell 'zo ; ha ni a zalc'h-ni da vonet àr droad !

Arrast a raomp a-raok arru get Beauvais, er fabourzh (Marville !). Eno e tebromp un tamm en davarn, hag àr-raok ! Treuziñ a raomp Beauvais a-zehou. Kêr a ziskouez bout bravik : an iliz a welomp du-se e-kreiz kêr. Pec'hed eo n'hon eus ket oar da vonet d'he gwelet.

An amzer a zo biskoazh kaeroc'h : lâret e vehe an nevez-hañv. Atav e teraou ar gwez da sapiñ. Ken foñdet eo ma zreid mand eo ret din monet àr ar marc'h-houarn. Èl-se ema aesoc'h din ur yoc'h.

Da 4 eur eh arru ar gompagnonezh e Campdeville. En un usin eh omp lojet. Frank eo àrnomp ha plouz a zo. Gortoz a raomp chomel amañ un herrad hag eh arru genomp ar gemenn da 9 eur noz da vonet pelloc'h c'hoazh.

**20-01-1916** - Da 7 eur eh aomp àr-raok (ar gompagnunezh un eur àr-lerc'h) evit monet da Frestoy, e-tal Songeon. Ne c'hellan gober oc'hpenn ul lev.

Ar vro a dreuta un tammig a-vuzul ma krapomp. Neoazh Frestoy a zo druz. Tachennoù a zo ha netra ken ; na iliz, na maeri, na kenwerzh erbet. An dud nend int ket forzh lojet. Me a gav-me ur c'hornig ag ur c'hraou lec'h mand eo kaer din. Peder buoc'h a zo er c'hraou get ur c'hole : Pierrot. Ar saout a raer Catherine, Perrote, etc. anezhe.

Ar vro a zo pinvik. Avaloù a zo ha sistr, met ar sistr hep dour nend eo ket anavet hag an dour a servij d'ober sistr a zo dour ag an toulloù a gaver e rac'h ar c'hêrioù. En toulloù-se eh a al loened da evet. Int a gac'h, e freg enne ivez... Ar saout a zo bras amañ. 6 miz e vezont er-maez, 6 miz en ti. Ar pell a c'houarner da reiñ dezhe get betrav hachet.

Avaloù a chom edan ar gwez : nend eus ket gellet o serrezh. 2 vlank ar voutailhad sistr.

**20/21/23-01-1916** - Netra a nevez. Diskuizh a ra an dud. Reiñ a raomp dilhad dezhe. 9 a ya c'hoazh d'ar C'holoniale.

Chomet on-me àr ar plouz e ma c'hraou. Er vro-mañ e raer brosoù-dent e e-leizh a dier. Rac'h ar familh a labour èl-se hag a vev doc'h ar vicherig didrouz-se.

Ar serviterion a zo gopret dre viz. Ur charretour araour a zo paeet 55 pe 60 l. ar miz ; ur vatezh 20 vlez 35l. d'ar gouiañv, 45 d'an hañv, lojet, gwennnaet, maget ha meur a damm dilhad.

**24/25/26/27-01-1916** - Didrouz an traoù. Den lazhet get ur soudard ; ne ouier ket piv - 27. Eh arru kemenn monet da gemer lec'h ar 88° de Marche trema Montdidier - 28. 8 eur. N'hellan ket kerzhet : ret din pas vizit. 4 c'harr e'it dougenn ar re mac'hagnet ha medisinour ec'h ober an archer àr an hent, é kennig 8 teiz d'ar re n'hellont ket mui. Cheñchet penn d'ar

rejimant a-gaoz ma 'm eus paseet ar vizit an deiz diwezhañ ! 8 teiz arrêt a genniger din hag a gemeran hep gober van erbet. Colonel a ra foar : « *Vous me dégoûtez !* » a lâr-eñ din. Ha me da respont : « *Mon colonel, je ne vous permettrai pas de m'insulter !* » Goude e taont da vout klouaroc'h. Komz a raont a ma soagnîñ ! Arru 2 eur 1/2 e Juvignies. Kollet ma c'hontell !...

**29-01-1916** - Eh aomp pelloc'h. Brumenn tev, hentoù tenn, bro kaer, tud vil.

Arru 3 eur e Camprémy. Degemer karadek e ti ur pober a Bariz daet da ziskuizh amañ get e filhorez, plac'h 15 vlez, kreñv, paket brav, an aer dous ha frank dezhi. Roet un tamm bara din da zebriñ ma uiou.

**30-01-1916** - Sul. Ne ouiomp ket penaos e vevomp. Me 'soñje eh oan ar sadorn. Pober 'ra tasad kafe deomp a-raok monet kuit.

Ur person genedik a Vreizh o deus met aet eo d'an arme ivez.

Brum atav, ne welomp ket ur c'hardlev diragomp. Gwez per àr an hent hañval doc'h pennadoù blev a ziver tapennoù brum doc'hte el perlennoù.

Monet kuit 8 eur. Plainville (ilizig koant). Grande halte. 2h 1/2 Le Cardenois (Somme). Toulloù dour sistr ! e pep kêr atav. Nag an tier ! Yenoc'h eo enne e'it er-maez get an toulloù. Hag àr an tier-se dorioù vras, tev, hag ul laer, get un taol penn, a dreuzahe ar vagoer !

Kousket en ur bern plouz en ur c'harrdi.

**31-01-1916** - Monet kuit da 7h1/2. Ar vro a zo meneziekoc'h. Tremen a-zehou da Montdidier. An eil bataillon a chom e Pierrepont a ziskouez bout ur vroig koant ha didrouz. Ni a ya-ni beta Davenescourt, ur c'haer a vourc'h

staget doc'h tor ur menezig a zo ur maner àr al lein anezhoñ. An iliz a ziskouez bout bravik met n'hellan ket monet betakzi get ma zreid ha ma labour paperioù.

Da 2h1/2 eh arruomp. Ha kentizh kemenn àr gemenn arre. Gwelet a raomp re ag ar 88° de Marche. Didrouz eo o secteur. Met ar mintin-mañ eh arru kemenn nend aomp ket d'eno, e c'hortozomp ul lec'h arall ! Hag un eur àr-lerc'h eh arru kemenn arall monet d'ar secteur-se ! Met netra sur... Da 10 eur eh aomp àr-raok atav e'it monet da Saulchoy, 2 gardlev lev ac'halemañ.

**1<sup>añ</sup> a viz C'hwevrer 1916** - Eh aomp da Saulchoy, ur barrezig 49 den a-barzh a-raok ar brezel, ha neoazh eh eus ur maer, ur fakteur, ur c'habin telefonik ha me 'oui-me petra rac'h. Treuziñ a raomp ur flagennig kaer lec'h ma red ul linenn hent-houarn èl un aer... E Saulchoy e teraou ar blaenenn ledan ha hir a zo àrnezhi ar bratell emgann. An tier a zo taolet e kement tu a zo. Tier pri atav ha toulloù dour lous e'it al loened. Ur chapelig a zo lakaet soudarded a-barzh. He skarzhiñ a raer evit lâret an oferenn.

Hon tud a ya da grouiziñ an eil linenn àr ar blaenenn a zo doc'h tu an hanternoz hag ar sav-heol da Saulchoy.

Meur a wezh e klever ar c'hanon, met d'al liesan nend eus grik erbet amañ. Nag ur c'hemm get ar Champagne !

Tud disoudard a za ivez da labourat amañ, d'ober trañcheoù ; hag a roer 2 sk. 8 lur dezhe bemdez. E-pad an amzer-se e chom ur yoc'h tud en depôt ec'h ober netra hag ar soudarded, e-lec'h o lakaat da labourat amañ, a gaser da vale a-zehou hag a-gleiz.

En ur arru amañ eh eus bet un tamm tabut. Pep ti er vourc'hig lec'h mah eus tud a zo un davarn. Hon tud aet skuizh é redek àr an hentoù, a gav un diskuizh monet a-fet noz d'evet un tasad gwin en tavarnioù-se lec'h mand eo kaer, lec'h

mah eus gouloù. Ur c'hornad butum àr an traoù-se ha setu-int eürus. Met an eürusted a zistag teod Breizhiz, ha komz a raont emberr a bouez o fenn reve an akustumañs. An trouz a zegas Fil-de-Fer da sellet petra zo ; hag èl ne anav tamm erbet Breizhiz, e kred emaint rac'h mezv. Ha setu-eñ é klask o skarzhiñ er-maez ag an ti. Trouz a sav. An dud a vlej àrnezhon hag an deiz àr-lerc'h vintin doc'htu, e'it kastiziñ daou pe tri, e kaser an 3<sup>vet</sup> hag ar 4<sup>vet</sup> d'ober ur gerzhadenn ! E-lec'h o lezel da ziskuizh àr-lerc'h an 40 lev bennak e taont c'hoazh a ober...

En em walc'hiñ n'hell ket an dud ivez. An deiz àr-lerc'h mah oamp arru e kaser kentizh an dud da labourat. Goloet a zo lod anezhe a laoù neoazh, rak setu 3 sizhun n'o deus ket gellet en em walc'hiñ a-feson.

'Gozik sur omp da gemer lec'h ar 88° arall. Cheñch a raer anv hennañ : 288° e vo bremañ. Nag eürus e vehemp da gemer e lec'h ken didrouz.

Kousket a raomp a-dreist ur c'hud yer, en un tammig suler bras a-walc'h e'it kemer daou zen. Gronnet eo get paper ler en diabarzh. Edan e klevomp bouezhig moan ar yer ha beb mintin kan ar c'hog a za da lâret deomp pegours e vez mall diblouziñ.

**02/03/04-02-1916** - Netra a nevez er-maez ag al labour a ra hon tud hag ar paperioù niverusoc'h pe niverus hon eus d'ober bemdez.

**05-02-1916** - Un ti skol a zo amañ ! Ha telefon... Hentoù niverus ha kaer. Piv a bae rac'h an traoù-mañ ma nend eo ket ar c'hornadaou èl hor re-ni lec'h mah eus ur yoc'h tud ? Ha genomp-ni eh eus bugale hag a ra 2 lev meur a wezh e'it monet d'ar skol dre hentoù spontus.

Ur bourd eo gwelet ivez er vro-mañ dorioù pounner ha sonn é kloziñ tier a c'heller toullañ ar vagoer anezhe get un taol

penn. Gwelet em eus memp un nor àr ur park na oa en-dro dezhoñ na kleuz, na garzh, na netra !..

**06-02-1916** - Netra a nevez. Monet a ran d'ober un dro da flagenn an hent-houarn, ur c'haer a lec'h àr ribl ur c'hoad a dremen al linenn a-barzh. Trema ar c'hreisteiz e weler tour Davenescourt e tibouk e-kreiz ar gwez doc'h tor un dostenn. Ar vro amañ a zo goloet a vrini : ur spont d'an niver a zo anezhe àr an douar, er gwez, e kement tachad a zo.

**07-02-1916** - Da 3 eur e taer da lâret deomp eh aomp d'an trañcheoù da 7 eur. Alerte ! Ha da 4 eur nend aomp ket...

**08-02-1916** - Netra a vad met e yaer da lemel genomp an tadoù a 5 a vugale koshañ e'it o lakaat e kompagnunezhoù peizanted. Hag e kaser deomp en o lec'h labourizion ag ar gompagnunezhoù-se. Deraou a raer da lakaat pep unan en e lec'h !...

Tud a za deomp ivez ag an dépôt ; re kozh.

**09/10/11-02-1916** - Paperioù ha netra a vad 'met ma kasomp kuit 17 tad a 5 a vugale a vo kemeret amañ o lec'h get re daet ag ar 70° Territorial. An ofiserion a dremen amañ e c'hoari kartoù, é skriv lizherioù hag é vale. A pa chom amzer gete e klaskont trouz doc'h ar soudarded pe neuze eh esaeont skrapañ un dra pe ur blank bennak.

Revendailh e vihana ar gwin : a-c'houde 8 teiz bennak e servijer deomp ur meni tizan graet get 3/4 gwin hag 1/4 sistr. Gwell e vehe bet sur kas sistr deomp, ha gwin a kostez.

**12/13/14/15-02-1916** - Netra a nevez. Atav e krouizer trañcheoù. Ar Jermaned a za da vout hardishoc'h. Bemnoz e fardont àr hol linennoù. Ne arsav ket ar c'hanon a drouzal



doc'h tu Frise.

Dec'h d'an noz (14) ema bet ar paperioù spontusoc'h e'it biskoazh. Argant a zo da baeñ d'an dud e'it o fermision : 5 pl. bemdez hag 1l, 05 e'it an deizioù beaj. 1. 400L. e'it ar gompagnunezh.

**16-02-1916** - An diwezhañ deiz deomp amañ : arc'hoazh eh aomp d'an trañcheoù da gemer lec'h en 288°. Ar mintin-mañ eh oa ar c'hapiten ec'h ober ar Rang de taille. E 1801, eme-eñ, eh oa graet ar c'hentañ !...

**17-02-1916** - Da 4 eur eh aomp àr-raok. Kollet e oa deomp an akustumañs da zifre hag al lod muiañ ne c'hellont ket bout prest d'an eur. Neoazh a pa arrast ar gompagnunezh e Guerbigny ema rac'h an dud e-tal an iliz. Ar gêrig-mañ a zo bras-pasapl. 10m. eh arrastomp hag eh aomp arre. Ne vo ket hir an hent hiziv : 3 c'hardlev e'it donet amañ, 3 arall e'it monet betek en trañcheoù. Arru a raomp er Run-Sec'h (Le Ravin-Sec) a-raok an deiz. Glav en deus graet hag ar flagenn-mañ nend eo ket sec'h tamm erbet !... E korv 1 eur 1/2 ema lakaet pep unan en e lec'h. Me 'zo-me er burev, el loj pellañ er run-se. Ur c'haer a vurev : setu ar wezh kentañ eh omp lojet a-feson. Ur gampr evit kousket get div c'holc'hedad plouz savet diàr an douar get gweleoù. Àr al lein 4 troc'had gwez, douar : ar pezh a faot e'it gober goap doc'h an obusoù.

Ar burev, interret ivez 1m. bennak, a zo un oaled a-barzh. An deiz a za dre ur fenestr gozh lakaet àr he silh. Ar c'harrezioù gwer a zo koti moan eoulet. Lamproù, brichoù, stalioù, netra ne vank amañ. Limajoù a di Potin a zo e kement korn a zo. En ur ger : diaes eo bout gwell.

**17/18/19/20-02-1916** - Pevar devezh didrouz. Ar mintin-mañ da 6 eur eh an er fozelloù da glevet an oferenn. E abri ur

poste da secours he lâr an Ao. Moigneu. Un dousenniad bennak a zo en oferenn, kroset er c'hornoù a zo chomet goulle. Eh omp amañ 100m a-boan doc'h ar Jermaned. Met en tachad-mañ ema didrouz. A-boan ma klever un tenn bennak meur a wezh. Un obus bennak a za ivez da gouezh met hep gober droug. Ar fozioù a zo krouizet e douar bev. Kempennet mat int, lec'h e'it an dour da redek e toulloù goloet a c'heller... (?)

**21/22/23/24-02-1916** - N' heller bout didrousoc'h atav. Kouezh a ra torpilhoù a-dreñv hor c'hein hag a laka ar c'hoti a servij din da garrez gwer da sailh. Obusoù a gouezh ivez a-gleiz, a-zehou, met hep gober droug erbet da zen. Un taol fuzilhenn ur wezh bennak an amzer, ur fuze é sevel, é kouezh en un taol èl ur steredenn lostek mard int jerman ; àr o goar, é splanniñ nebeutoc'h hag é tañsal mard int re Frañs. Pec'hed eo ema ret deomp monet kuit.

An enderv-mañ eh eus bet un taol bec'h etre ar c'holonel hag ar c'hapiten : lâret en deus d'ar c'haezh boulom-ni ema klañv, ne c'hell ket mui gober e servij hag e tleae kuitaat. Cesari, ha ne venn ket koll e viziad argant, en deus en em zifennet par m'en deus gellet. Ar pezh a oa ar farsusañ a oa er gwelet e tiskouez e deod d'ar c'holonel àr an hent, dirak rac'h an dud...

A-c'houde 2 pe 3 deiz e kouezh erc'h : start eo d'hon soudarded bout en trañcheoù rak yen eo e gwirionez ha d'an noz ema ret dezhe 'gozik rac'h bout àr-sav get an aon ma dezhe d'an enebour fardiñ àrnomp.

**25-02-1916** - Mintin. Da 6 eur eh arru ar c'hapiten da huchal deomp sailh er-maez ag hol loj. Ar sergent-fourrier nevez a zo genin n'en deus ket gellet harz eizhteiz en trañche. Klañv e oa hag aon dezhoñ e walc'h. Soñjit ! Eh oa ar wezh kentañ dezhoñ monet en trañcheoù. An disterañ trouz a rae

dezhonñ sevel e vlev ha kreniñ.

Da 7 eur ema savet hor gompagnunezh. Erc'h a ra. Monet a raomp da Erches dre Guerbigny. Un hent bravik. A bep tu e weler lojoù a bep seurt savet da soudarded. Lod anezhe a zo 'gozik manerioù. Mistr eo pep tra. Bokedoù a zo lakaet dirak al lojoù, liorzhoù marellet. Toulloù edan ar menez evit lakaat munition hag a zo àrnezhe anvioù : Villa des Embusquées, Abri du Rouleau-Compresseur, etc. Ha d'an diaz ag an dostenn, etre ar gwez peuplier, e red an Avre, ken kaer, hag a ya du-se, trema Milin-ar-Skeul, da gavet ar Jermaned...

A Guerbigny da Erches e paseer àr lein ar blaenenn dre un hent hag e vezer gwelet àrnezhoñ d'an deiz. Met hiziv, get an erc'h é kouezh, ne weler ket gwall bell. Gwelet a raomp rac'h ar blaenenn diragomp neoazh, krouizet kroaz-digroaz get ar fozioù. Du-mañ ha du-hont an orsal dreinek gwenn get an erc'h a seblant èl gwiad kevnid bras stennet e-pad an noz.

Leun eo ar blaenenn ivez a bezhioù kanon. N'o gweler ket met aes eo goût emaint aze é welet al lojoù a zo a-dreiste. Pelloc'h du-se e weler iliz Erches. Àr an hent e chom un ti bennak c'hoazh, tachennoù, tavarnioù gwezharall, hag a-raok arru get Erches ema troc'het an hent get gabion ha douar. A-gleiz, a-zehou : toulloù, lojoù, fozioù, orsal. Bremañ ne welomp ket ken. Setu-ni e Erches. Ur gêr strewus-bras. Ken hir èl an Oriant etre ar vagoerioù. Ne chom ket mui netra a-feson a-barzh. E pep tachad, traoù diskaret pe hanter diskaret, lec'h obusoù, gwez hachet, fozioù, orsal. Nend eus ket tu da bas a-barzh. Neoazh setu pell 'zo nend eus ket tennet àr ar vourc'h. An iliz, hanter gotik hanter roman, hanter mein-tailh-rad hanter brik, a zo hachet, troc'het, brevet. Ne chom ket mui met ar spes anezhi. Pec'hed eo n'em eus ket oar da gemer an tres anezhi. Ar burev a savomp en ur c'hav mouest. Un tammig chemical graet get brik lakaet an eil àr egile a servij deomp da dommet ha da vogediñ hor c'hav. Kousket

dous a raomp neoazh àr hor sommier hep golc'hed erbet.

**26-02-1916** - Didrouz ar secteur-mañ ivez. Erc'h a ra atav.

**27-02-1916** - Netra a nevez. Erc'h bepred. Yen eo. Sul. Oferenn er chapelig savet en un ti. Aumonier 119° a lâr an oferenn. An Ao. Moigneu ivez. Lec'h da 10 den a-boan er gampr. Traoù ag an iliz a servij da orniñ ar gampr, barroù deliav-red a zo doc'h en trestoüier. Henoazh e sav trouz get ar c'hanonoù. Tenniñ a raont doc'h an daou du met hor re-ni a sko muioc'h.

**28/29-02-1916** - Netra a nevez. Hon tud a ya da gas boued d'ar soudarded yaouank ag ar gentañ linenn, da gempenn ar fozioù, da rac'hiñ ar fang, an erc'h rak bemdez e kouezh.

**1<sup>añ</sup> a viz Meurzh 1916** - Ar pae. A-c'houde 2 pe 3 deiz e sour arre al labour burev àrnon. Burzhud d'ar paperioù a zo.

**02-03-1916** - Un obus a gouezh hiziv e-tal an iliz, e-kreiz an hent. Droug erbet.

Arru eo an doere genomp nen daomp ket mui d'ar Ravin-Sec. An 288° a za en-dro ha ni 'ya-ni kuit. Piv 'oui da bezh tachad e vimp c'hoazh kaset, ha d'ober petra ?

**03 a Veurzh 1916** - Kuit a Erches. 5 eur. Tre Hangest-en-Santerre e'it monet da Mezières lec'h mah arru ar gompagnunezh àr-dro 2 eur. An dud a zo lojet pasapl, met evit an ofiserion hiziv nend eus gwele erbet. Àr ar plouz e vo ret dezhe kousket hag e raont selloù du. Na foar, mam breuder ! Un ofisour ag ar Génie a zo en ur gampr en hor secteur, hag ema prest ar c'hapiten d'er bountiñ er-maez ag e gampr evit kemer e lec'h. Ne ouian ket penaos ema aet gete diwezhatoh.

Mezv an hanter ag an dud. Bazhadoù a sav gete hag e

rudellont er fang, en hañvor. Unan ag an Nord (Combes) ne c'hell ket andur ar Vretoned hag ar re-mañ ne c'hellont ket en andur naket.

Àr an hent hon eus kavet teir pe peder kompagnunezh labourizion é monet da grouiziñ fozioù. Tud a bep seurt a zo en o mesk : Turked, tud du, melen, Juifed ; ar re a vez graet indésirable anezhe. Emaint é monet d'o labour èl soudarded, 4 ha 4, get ur jandarm er penn anezhe. Pep unan ag al lapoused-se a goust 8 lur bennak d'ar vro. Hag e-pad ma c'hounidont kement a argant eh eus soudarded en depoioù, amañ àr al linenn, ha ne raont netra. Rac'h al labour-se a c'hellahe bout graet e'it netra.

A pa oan é c'hortoz ar gompagnunezh eh arruas ur gompagnunezh artilheri yaouank, al lod muiañ anezhe mezv. Kanal a raont en ur arru. Un tammig drapeau a zo gete hag e raont o sot.

En un dachenn eh omp lakaet. En ur c'hraou e kouskomp e-tal teir annoar. Ur meni gwele koad a zo edandomp hag un dornad plouz. Yen eo ha ne harzan ket get ma c'hostezioù àr ar c'hoad. Ar soudarded a gan betek 11 eur pe kreisnoz. Nend eus ket tu deomp da gousket. Hag arc'hoazh da 5 eur ema ret deomp-ni monet kuit.

**04-03-1916** - Erc'h a ra. Yen eo. Avel foll. Monet a raomp àr hent Proyard, ur c'hardlev bennak doc'h Mézières, da c'hortoz ar c'hompagnunezhoù arall. Pell ema ret deomp gortoz edan an erc'h. Gwenn eo ar maezoù, tu ar gwez troet d'an avel. Hag èl nend eus ket doc'h an tu 'rall na eeun d'ar gwez, get an erc'h é luc'hiñ, c'hwi a lârahe e vehe loargann gaer. An dud é tonet àr an hent er splannder-se a seblant 2 wezh brasoc'h e'it m'emaint.

Monet a raomp kuit èlkent. Diaes eo kerzhet àr an hentoù-se goloet a erc'h hanter teuzet. Emberr ema gwlebet ar botoù-

ler ; diaesoc'h pe diaes eo kerzhet. 16 kil. àr droad hon eus d'ober pe muioc'h. Arru a raomp àr-dro 10 eur 1/2 e Proyart. A-raok monet e kêr e kavomp orsal dreinek arre, fozioù hag ivez bezioù disanv a zo merket àrnezh e « Soldats Français ».

Ar gompagnunezh a arru d'un eur. Na fall lojet eo an dud. E toulloù, e karrdioù mouest, lous, digor d'ar fall amzer e kouskont. D'an noz e kavomp-ni an tu d'ober ur pred mat e ti ur vaouez ag ar vourc'h.

**05-03-1916** - Sul. Oferenn en iliz a zo bravik. A-barzh e welan Krist Foucaucourt a zo chomet a-bezh en iliz diskaret ha losket d'ar bombardamant.

Henoazh da 6 eur eh aomp d'an trañcheoù. An 3<sup>vet</sup> a chomo e Foucaucourt. Kemer a raomp lec'h an active (Coloniale). Doc'h kostez Verdun e tarzhan an traoù atav ha moarvat e kaser soudarded du-se.

Hiziv ema kaer-bras an amzer goude ur skornenn vat.

Henoazh da 7 eur eh aomp da gemer hol lec'h da Foucaucourt. An hanter ag ar gompagnunezh a zo mezv arre. Bec'h a sav get an dud ha get ar serjañted. Ur vezh eo o gwelet é monet àr an hent. Lod anezhe ne chomont ket en o sav. A pa gavont un toull obus e fardont a-barzh hag e chenchont penn. Ur c'haporal a zo a-dreñv hag a zo karget d'o sevel ha me respont deoc'h e kav trawalc'h d'ober...

Arru a raomp goude bout graet 5 kardlev bennak ha poan a zo da lakaat an dud da serrezh o beg. Neoazh nend omp ket pell ag an eneberion. Gwelet a raomp an tier troc'het a dammoù. An iliz a sav trema an neñv stergannek he magerioù hachet a zo èl divrec'h savet trema Doue é c'houlenn getoñ pardon e'it fallentez an dud.

Skuizh on arre. Nend on ket mui e'it gober hent. Ma ivin dehou a zo kouezhet hag ema diaesoc'h c'hoazh din. Hor c'hondu a raer en un ti hanter foñdet a zo edanton ur c'hav

a 5 m. a zoded, krouizet en douar, hep masonerezh. Al lein anezhoñ a zo dalc'het get tammoù koad ha postoù. Àr ar plouz eh omp met en abri.

**06-03-1916** - Dihun a raomp a-vintin. Mouest eo ar c'hav un tammig met kousket mat hon eus rak skuizh e oamp. Erc'h a ra. Yen eo. Hon tud en deus amañ d'ober al labour a raent e Erches : kas boued, labourat er fozioù, naetaat. Hiziv e vounter prizon get ar vezverion hag o c'hondaoner da vonet da labourat e-lec'h ar re 'rall.

**07-03-1916** - Kaeraat a ra an amzer. Monet a raomp d'ober un dro da welet ar vro, a gement ma c'hellomp rak gwelet e vezer a bep tu. Ar mitrailleuse a skop e-kreiz kêr hag ema ret deomp monet dre ar c'hostezioù. Un obus a gouezh doc'h kostez an ti tostañ deomp.

**08-03-1916** - Dec'h da noz ema bet bleaset Cap. ar Gall, Foricher hag ar C'horr. Ar re-se a oa mezv an deiz 'rall hag o mezhiezh a zo abek dezhe bremañ bout gwallaozet. Foricher (Pleubihan) a zo gwall dapet. 'Pad an deiz hiziv e tarzh an traoù. Ur yoc'h obusoù a gouezh àr kêr. Unan àr gorn an ti lec'h mah omp.

Unan bleaset (Desenclos ; er c'hein).

**09/10-03-1916** - Netra a vad. Henoazh eh an da vurev ar c'holonel da vout interprète en ur c'honseil de discipline get ur c'haezh den a Neullieg hag a zo kareet gober ar c'hlañv hag a venner kas d'ar Section Speciale. Ne ziskouez ket bout dañjerus, hag anavout a ran re 'rall, lañstefoued, a vehe kentoc'h o lec'h e'it ar c'haezh den-mañ hag a ziskouez dreist-pep-tra bout un tammig berlo. Montborgne a ya kuit. Goueliñ a ra.

**11-03-1916** - Netra atav. Ar potarnoù a dremen a-dreist hor

penn. Lod a gouezh e kêr. Nend eo ket fiziapl bout amañ.

**12-03-1916** - Mintin. 4 eur. Dihun e'it monet da gemer hol lec'h en trañche. Nend omp ket drouk amañ. Treuziñ a ran girzhier, tier ; pas a ran edan gwez kouezhet. Nag ur revin ! Pell omp doc'h an eneberion (500m bennak). Gwelet a ran, dre doull ar Poste d'observation, Estrées. A-dal deomp ur c'hoadig lec'h m'ema ar Jermaned. Gwelet a raer o zrañcheoù. Krouizet an douar ; tier foñdet.

**13/14/15-03-1916** - Derc'hel a ra an amzer gaer hag, èl ma ne gouezh ket potarnoù àrnomp, hon tud ne c'houlennont 'met un dra : chomel amañ bepred. Ar Jermaned a zo didrouz e gwirionez. A-dal d'hon trañcheoù ema o re, krouizet a-dreñv ur c'harzh drein. Toulloù o deus ivez evit kuzhet rak gwelet a raer ar maged é tonet er-maez ag an douar. Tan a zo gete. A pa ziskenn an noz e teraouont lakaat postoù en douar, hag orsal. Kanal a raont, komz a raont kreñv. Kentizh ma klever o zaoloù orzh é horosal e sav hor re àr an dachenn evit lakaat o re ha doc'h an daou du e labourer harz-pe-krev e'it lakaat an orsal a barray doc'h an enebour a dremen.

Henoazh e choman un herradiger gentañ linenn da evezhaat ma ne glevan trouz ar c'hirri àr an hent a ya a Estrées da Fay, rak 'gozik bemnoz e rudell ar c'hirri àr an hent-se é monet da gas boued hag armaj d'ar Jermaned. Dle eo deomp tenniñ ur fusee evit lâret d'an artilheri tenniñ àrnezhe. Met kaer hon eus selaouet, henoazh ne glever trouz karr erbet. (C'hweder da vintin a sav etre an div linenn en aer ag an amzer - Un neizh etre an div linenn.)

**16/17-03-1916** - Netra a vad 'met henoazh e tarzhe an traoù doc'h tu Soyécourt. Arc'hoazh vintin eh omp savet.

**18-03-1916** - Da 4 eur e sav boulj. Ar 1<sup>añ</sup> komp. a arru



da gemer hol lec'h. Kemer a ran bouzellenn ar Resevour e'it monet beta kêr. Ar Jermaned en deus en em lakaet da deurel torpilhoù ar fozioù a zo a-zehou da Soyécourt. Torret hor penn get an trouz.

**19-03-1916** - Oferenn en ur c'hrañj vras hag uhel toullet-rac'h d'an obusoù, graet toullou a-barzh e'it tenniñ hag edan e'it lakaat an dud.

An amzer gaer a zalc'h atav.

**20-03-1916** - Monet a ran d'oferenn St-Jozep. Eh oa an oferenn é monet da zeraou a pa gouezh un obus er penn arall ag ar c'hrañj. Just hon eus oar da sailh er c'hav. Treuzet eo an doenn ha leun eo ar c'hrañj a voged e-pad an oferenn.

D'enderv-noz eh omp doc'h taol a pa zeraou ar potarnoù da c'hwitellat c'hoazh. Unan a gouezh doc'h pignon an ti. Tarzhal a ra an traoù. Ha ni da achap arre d'ar c'hav.

**21-03-1916** - Deiz ar pae. Labour un tammig. Netra a nevez 'met ur soudard (Tressard) é teuziñ ur penn obus a laka ar penn da sailh. Troc'het e vuzell, losket e vlev, toullet e c'har !... Ret eo er c'has kuit.

**22-03-1916** - Glavaj. Netra a nevez. Henoazh eh arru genomp 8 den, 1 c'haporal, ur serj. ag an Oriant.

**23-03-1916** - Yen eo arre. Aet eo an avel d'al lein. Arc'hoazh eh aomp d'an trañche.

**24-03-1916** - 4eur1/2. Komañs a raomp monet. Da 6 eur eh an-me. Erc'h a ra. Goloet eo an douar. Yen.

D'an noz eh oan kousket a pa zaer da lâret din monet da gomz doc'h ar c'hapiten : un den ag ar gompagnunezh

(Kerdélhue, a Blañour) a oa get un nebeud ag e genseurted é plantiñ postoù houarn dirak ar gentañ linenn a dapas ur boled en e galon. Eñ a gouezhas àr en dachenn hag a varvas kentizh. Rac’h an dud a lâr e vehe gellet parraat doc’h gwalleurioù seurt-se da arru a pa vehe karet lakaat an dud da labourat a pa vez teñveloc’h. A hend-arall nend eus dober erbet ag an orsal-se diragomp. Trawalc’h a zo èl-se ken pell èl mah omp doc’h an eneberion.

**25-03-1916** - Interramant ar c’haezh K. e bered Foucaucourt. An amzer a chom sklasus.

**26-03-1916** - Sul. Oferenn en un tachad sklasus, en depôt materiel. Erc’h ha grizilh a gouezh.

**27-03-1916** - Fall amzer atav. An noz paseet (sellet doc’h ar follenn a-raok), a pa oa rac’h an dud é plantiñ piketoù hag é lakaat orsal dreinek, e tas tri Jerman da benn a en em siliñ dre kostez ar sap 4. Eno e kavont ur mitrailhour bihan. Unan anezhe a sailh àrnezhofñ, met hennañ en deus oar da huchal : «Au secours ! » An daou zen a oa é eveshaat a pa glevazont an dra-se a achap a-gleiz hag a-zehou èl gedon aonek e-lec’h donet da sikour get o c’henseurt yaouank ag ar 7<sup>e</sup> C<sup>al</sup>. Neoazh ar re a oa er post a za er-maez, hag an tri Jerman a achap kuit goude bout taolet 4 greunadenn. Unan anezhe a sailhas met hep gober droug. Ur sizailh e’it troc’hiñ orsal a chom ivez àr o lerc’h. Get ar sizailh-se e oant daet da benn a droc’hiñ an orsal. Ne oant ket bet na gwelet na klevet ken teñvel èl ma oa an noz ha goulouenn erbet ne lañsomp-ni nag int ivez : ni rak ma laboure hon tud, int rak ma oant edan soñj gober an taol-se.

**28-03-1916** - Dec’h da noz, trema kreisnoz ha kart, e tap Iehannoù ur boled en e veg, un arall en e skoaz. Ar serjant

Prudhomme, daet an deizioù paseet ag en Orian, a zo toullet e dokarn get ur boled ha krabiset e benn. 'Pad an noz ema ar Jermaned é tenniñ get o mitraill. ha get fuzilhennoù. Nend eus ket moiand monet àr en dachenn da labourat na da eveshaat. Àr an deiz e welont penaos ema hor bouzellennoù ha d'an noz e tennont a-rez get ar bernioù. Èl-se e taont da benn ur wezh bennak a dapout unan bennak. Ar mintin-mañ ne weler 'met tapennoù gwad er bouzellennoù, en tachadoù lec'h m'en deus paseet an hanni bleaset.

**29-03-1916** - Doc'h an noz en em laka ar Jermaned da denniñ àr hon trañcheoù doc'h tu Soyécourt. Just neuze eh on galvet da vonet beta burev ar c'holonel. Eh arru e-tal ar burev e kouezh unan a-zehou ha foul a sav neuze. E'it div bermision eh on galvet, permisionoù refuset da vintin ha roet bremañ da zaou zen en deus kollet unan bennak ag o zud. A pa oan é tonet en-dro e teraou ar potarnoù da gouezh àr gêr un tammig e pep tachad. Neuze eh an da guzhet d'ar c'hav lec'h ma vez hor burev a pa vezomp e Foucaucourt. Mall e oa : kouezh a ra muioc'h-mui ar potarnoù. Unan anezhe a za da gouezh 10m doc'h an ti lec'h m'ema ar burev. Horoset en deus an ti, ar c'hav. Diskenn a ra an teolennoù. An douar a zo toullet ur m. a zoned, strimpet en deus an douar a bep tu, an tammoù ag an obus en deus fardet, tro-ha-tro, er vagoerioù.

A nebeudigoù e tistan an traoù. Monet a ran d'an trañcheoù en-dro. Doc'h an tu dehou nend eus arsav erbet d'ar fuzeoù da sevel, d'ar potarnoù da arru, d'an tennoù da vonet kuit. Ha tenn fuzilhenn erbet !

**30-03-1916** - 4 eur. Ar vourlj. Da 5 eur eh aomp kuit da Foucaucourt. Gwenn eo an traoù met kaer e vo, splann eo an amzer.

**1<sup>añ</sup> a viz Imbril 1916** - Daet eo an amzer gaer. Bourraploc'h

eo met ivez bremañ a pa n'hor bo ket ken da vrezelaat doc'h an amzer e tay keuz deomp bout dispartiet doc'h ar re a garomp.

D'an noz. 9 eur. Strakal a ra ar mitrailleuse hag un tammig goude e teraou ar c'hanon da skopat ivez. Mechal petra zo. Ne arsav ket ar fuzeoù a sevel. Met souezhet on : ni a sko àrnezhe hag ar Boched a lañs ar fuzeoù. Ar gompagnunezhoù a ya da gemer o lec'h d'an trañche. Me 'ya-me ivez, a pa zehan ar c'hanon un tammig a vlejal, da welet ar c'hapiten, met aet eo àr-raok ! Ar plantons a zo chomet neoazh, hag e-pad ma kouezh an obusoù tro-ha-tro e kêr emaint é c'hoari kartoù hep gober seblant erbet. Distreiñ a ran neuze d'em c'hav ivez hag a-nebeudigoù e tistan an dennerezh. En noz e sav atav goulou ha klevet a raer bouezhioù ar Jermaned é huchal du-se àr hor soudarded : « *Fransous kapout !* »

**02-04-1916** - Ar mintin-mañ eh ouiomp petra zo bet dec'h d'an noz. Er 134° a zo a-zehou deomp, ur serjant pe ur chef de section en deus fariet ha lakaet ur fuze da sevel evit goulenn « *tir de barrage* » e-lec'h lakaat unan wenn evit splanniñ ha kentizh en deus komañset an traoù da c'hoari, ha c'hoari vil a raent...

Nend eus netra enta, ha neoazh nag a argant a zo dispignet en un euriad amzer evit arrast eneberion ha ne fichont ket !...

**03-04-1916** - Ar baeamant arre. Kaeret eo an amzer. Ar wezh-mañ e weler ema an hañv a zo ec'h arru ! Kaer eo ken ema kaer a-walc'h.

**04-04-1916** - Ar mintin-mañ eh aomp da gemer hol lec'h d'an trañche. Freskaet en deus arre an amzer.

**05/06/07/08-04-1916** - Netra a vad met paperioù atav

muioc'h e'it bihanoc'h. Neoazh a-c'houde daou zeiz e sko ar Jermaned àrnomp pep enderv. Kaer a zo lâret d'an dud diwall, int a daol douar àr lein àr-greiz an deiz. An eneberion o gwell hag e kouezh obusoù neuze àrnomp.

**09-04-1916** - Hiziv oferenn ar Basion e loj an Ao. Moigneu. Kignet eo rac'h e zaouarn dezhoñ. Bout a zo re hag a lâr nend eus ket belean en trañcheoù. N'o deus ket 'met donet du-mañ da welet penaos e ra unan anezhe e zevel, hep trouz. Er Rapport eh eus lâret deomp ema an 8° Régiment Bavarois de Réserve dirakomp en N. O. Soyécourt. Ar rejimant-se a zo ag en 10° Division Bavaroise ha honnen a zo ag ar 6° Corps. Komandet eo an divizion-se get ar jeneral Roch hag en deus e garter e maner Fresnes. 260 pe 280 den a zo e pep kompagnunezh anezhe. 30 ofisour ha 16 pe 18 eil-ofisour e pep kompagnunezh.

Daet eo an amzer gaer arre. Dec'h e oa kouezhet tri obus just e-tal ma loj.

**10-04-1916** - Ar mintin-mañ èl dec'h vintin eh oa ur vrumenn tev. É welet an dra-se, ur serjant ag ar gompagnunezh (Gaudin) ha 5 soudard a ya er-maez, àr an dachenn, evit stagiñ orsal dreinek. E-pad an amzer-se eh oa re 'rall e serrezh pennoù obus. Met revendailh e oa klevet trouz o labour hag eh oa daet ur Jerman bennak da welet e-men eh oant. Ur wezh ma oa distroet, ar mindrailherez a dennas un hanter c'hant boled bennak àr-dro àrnezh. En o bouzelloù eh oant bet tapet. Unan anezhe (Bomy) a vo bec'h getoñ en em denn. An deiz àr-lerc'h eh oant bet propozet e'it ar groaz brezel.

**17-04-1916** - Henoazh pe arc'hoazh vintin eh aomp kuit. Ar 134° Territorial a za da gemer hol lec'h. Dec'h d'an noz, un avion a nijas a-dreist hol linenn. Ar Jermaned a dennas

àrnezhon met hep en tap. C’hwedered a ra o neizh etre an div linenn.

**12/13/14-04-1916** - Didrouz. Ar Jermaned ne dennont ket kement. Lennet em eus ar mintin-mañ paperioù diàr ur prizonour en deus en em rentet. E Péronne eh eus prizonerion rusian é labourat, é tiskarg bagonadoù koad, houarn ha traoù evit ar bouzellennoù. E Estrées amañ e-talomp eh eus chomet Frañsizion disoudard ha merc’hed. Gwir eo : e-mesk ar gwez a zo etre Estrées hag ar Palmeraie e weler tier, an iliz ha nend eus ket tennet àrnezhe.

Ar prizonour-hont a oa bet puniset 7 deiz arrêts da rigueur ; hag er Jermani an arrêts a vez graet en ur c’hav hep gouloù, bara sec’h da zebriñ ha dour da evet. Kement-se ne blije ket kalz d’an den hag en doa bet ar groaz houarn ha graet e zever bepred. Setu perak en doa tec’het. Ar Jermaned en deus ul linenn vihan a za beta Estrées, ha bouzellenn kentañ linenn ar Jermaned a zo krouizet edanti, prest da vout lakaet da sailh mar dahe deomp ha monet a-barzh. Doc’h tu ar C’hoad-Touffu, a-gleiz, ema tost o bouzellenn doc’h hon hanni ha toull et o deus evit lakaat hon hanni-ni da sailh un deiz bennak. A-hend-arall, bout o deus toull o 3m50 pe 4m. a zonded, lec’h enne da 4 soudard. An tostañ ma c’hellont d’an trañche-ni o deus ur post telefonik a zo ennañ soudarded hag a oar ar galleg hag eno, dre ul linenn douar, e taont da benn da glevet e-leizh a draoù. Goût a raont el-se pegours eh a hon artilheri da denniñ.

An deiz arall eh oa paperioù arall diàr ur fard en doa graet ar Jermaned àr hon trañcheoù dirak Soyécourt, en achumant ag ar miz tremenet. Hag àr ar paper-se ar jeneral a lâre ar pezh a soñje diàr labour ar Frañsizion. Lâret a rae e oa souezhus ne oa ket graet c’hoazh toull o e’t lakaat ar soudarded, eh oa troc’het rac’h an orsal telefonik ha ne oa lâret netra d’ar re a oa

e penn ken ne oa achu an traoù !

E gwirionez, ar Jermaned a oui brezelaat gwell evidomp.

**15-04-1916** - Fall amzer. Grizilh. Yen. Henoazh eh aomp kuit, savet d'ar 134<sup>o</sup>Territorial. An 3<sup>vet</sup> a ya da Chuignes.

Brav eo kerzhet : loargannn gaer. Dre Proyart, Chuignolles eh aomp. Hir an hent un tammig ha diaes en em gonde en ur vro n'anaver ket. Arru da hanternoz e Chuignolles. Skuizh ec'h ober 10 kil. Gwanaat a ra man divhar.

**16-04-1916** - Sul al Lore. Oferenn en iliz. Ar vro nend eo ket re zismantret. Eh a ar beleg doc'h an aoter a pa gouezh un 20 potarn bennak tro-ha-tro deomp. Unan anezhe a lazha daou zen hag a wallaoz 4 arall.

Gwelet ar vered. Amañ ema beziet 1 sud. Frañs brave ha 7 braves soudard Jerman.

Ur bez lec'h mah eus eskern Merovingien (!) kavet en trañcheoù.

**17-04-1916** - Fall amzer arre.

**18/19-04-1916** - Monet da welet Jojob.

**20-04-1916** - Amzer fall bepred. Ar mintin-mañ neoazh (20) ema kaer. Monet a raomp da Broyart da dremen 5 pe dek munutenn er gampr kloret : ne vehe ket gouelet tamm doc'h hor gwelet el-se get ar maskloù spontus-se àr hon fasoù tro-ha-tro. Ur ranjot a zo get klor a-barzh hag e taoler àrnezhon acide sulfurique. Melen-koar eo an aer en ti met nend eus ket droug. Ar medisinour a dro ur broch koad er ranjot ; lâret a vehe ur sorser bennak ec'h ober louzoù. Gwener ar Groaz : Jezuz, petra 'zo graet ag hou lezenn a garantez ?

**22-04-1916** - Glav, fall amzer. Goloet eo hor c'heizh tud

a zouar. Labourat a raont ivez. 43 anezhe a ya kuit d'un eur hag a za en-dro da 11 eur ; 43 arall a ya da nav eur hag a za en-dro da 7 eur ; hag ar re 'rall a-dal 5 eur da 2 eur da vintin. Emaint ec'h ober toulloù e'it lojiñ an dud rak an active a zo du-se ne raont ket netra. Gwell eo gete kousket edan an amzer e'it gober an disterañ labour d'en em lakaat en abri.

Henoazh eh aomp da Fontaine-les-Capy pe kentoc'h d'ar maner.

Bout a zo amañ c'hoazh tud disoudard.

**23-04-1916** - Nend omp ket aet kuit. Bremañ e tleomp monet àr-dreñv d'ober fozelloù difenn. Sul Fask : daet eo an amzer gaer get Divarvelezh hon Salver. Kan a ra an evned, ar gwez a sap, ar pradoù a c'hlasa ha du-se, a-dreist Koad ar C'heginioù ha koadigoù Capy, eh eus, savet en aer ag an amzer, 1 silzigennn jerman : tuchant e tarzho. D'enderv, beb 20m. pe 1/2 eur, e kouezh un nebeudad potarnoù bras àr ar vourc'hig-mañ. Unan a za da gouezh just e-talomp, en ur c'hraou a-dal da di ar person, lec'h mah eus lakaet tuchant daou jao ofisour. Finfoñdet eo an daou baour-kaezh loen. An adj. a achu unan anezhe get un tenn revolver.

Dle e oa deomp monet kuit arc'hoazh ha setu arre kemennoù nevez. Nag un dizurzh ! Chom a raomp daou zeiz muioc'h !

**24-04-1916** - Lun Fask. Derc'hel a ra an amzer vat.

**25-04-1916** - Arc'hoazh eh aomp kuit. Ar c'hampemant a zle diblas da 6 eur. Daou zen a za genin.

**26-04-1916** - Àr-raok ! Da Vaires-sous-Corbie eh aomp. Lâriñ a raer e vimp brav eno. Ni 'welo ! Ar pezh a ouiomp emberr ema e vo start gober an 21 Kil. hon eus da ober. Tomm e vo. Monet a raomp a-dreuz dre ar parkoù. Kavet



a raomp hed-ha-hed àr an hent orsal, tud é labourat àr an hentoù. A-dreistomp ne weler met aerlistri jerman hag hon re é monet àr o lerc'h pe tennoù ec'h arru àrnezhe muioc'h e'it bihanoc'h. Tostaat a raomp d'ar Somme. Bravaat a ra ar vro. Setu Morcourt hag un tammig pelloc'h Gubares a zo graet klañvdioù enne : merket int get ur groaz ruz a-gleiz hag a-zehou, àr al lein.

Soudarded Breizh-Veur a gavomp àr an hent e tankirri. Kirri mat a zo gete. Tud yaouank int rac'h.

Arru a raomp e Vaires àr-dro 11 eur. Ne harzomp ket mui ! Penaos e ray ar geizh arall arc'hoazh ?...

Degemer mat get an dud. Nend eo ket foñdet ar gêrig-mañ ha ne vez ket lies soudarded a-barzh. Soudarded saoz a dremen al liesañ.

Kavet a raomp àr an hent. (Unan a oui galleg.) Gober kantonemant. Mizer é klask e'it ofiserion. Debrñ en un davarn : uiou ha kostezennoù hoc'h. Soudard saoz a za da evet. Skosiz, daou anezhe. Tud bras, nerzhet.

Kousket e gweleoù plous. Fall gousket : re skuizh.

**27-04-1916** - Àr-dro 11 eur eh arru ar gompagnunezh. Bec'h o deus bet. Kaer eo bepred.

**28 a viz Imbrill 1916** - Monet a ran er-maez ag ar vourc'h doc'h kostez ar c'hanal. Ar Somme amañ a zo digor etre an daou c'hlan met ar wazh a zo kemeret er c'hanal. A-hend-arall nend eus 'met toulloù dour, tourb ha gwez peuplier. Kavet a raer ivez bodadoù aozilh, haleg hag ur wezenn aval bennak e bleuñv bremañ, ken kaer. Daoulagad an nevez-amzer é tigor. Doc'h tu ar c'hreisteiz eh omp-ni. Doc'h an tu 'rall soudarded Breizh-Veur. Ar re-mañ a zo ur c'hamp dezhe àr ribl ar c'hanal : roñseed, kirri, pezhioù. Ar roñseed a zo staget edan ar gwez hag ar soudarded edan tentoù lien

àr un dornad plouz. Daousto d'an amzer pas bout re domm c'hoazh emaint é c'houronkat er c'hanal, noazh-pilh, hag hor re-ni a ra èlte. C'hoari a raont get kanarded, farsal a raont. Dre bep div wezh e tremen un ofisour bennak àr droad, àr ur jao houarn, pe àr ul luskroder (motocycl.). Ar soudarded a laka o zreid d'en em douch hag o divrec'h doc'h o c'hostez hag an ofisour a salud. Gwisket mat int. Min vat o deus. Joaüs int. Kalz anezhe a zo Kelted : huchal a ran «Alban Jobra ! » ha kentizh un Albanad a sav e benn : goût a ra ar gaeleg. O gwiskamant a zo gwell e'it hon hannu a-fet al liv rak n'er gweler ket kement.

Ar gazetoù a gomz ag un dispac'h savet e Iwerzhon edan ren sir Casement. Tud ar Sinn-Fein en deus en em laosket da vout bobionet get ar redour-se ha setu bazhadoù hep gounid erbet e'it Erin arre, rak ne fehe ket bout choazet falloc'h amzer e'it gober un dispac'h.

Un dra farsus (pe kentoc'h trist rak a dier saoz e ta an doere) ar gazetoù a dro Sinn-Fein (Pensez à nous !!!) hag a lâr ema ar bobl hag ar velean munut a zo da benn ar gevredigezh-se ! ar Gaelic-League a zo bountet er mem kevredigezh ha taolet àr he c'hein fall labour ar re 'rall.

Ar wezh-mañ nend eo ket difennet doc'h hon tud a vonet d'an tavarnioù. Nend eus ket muioc'h a dud vezv, met kement a zo anezhe ha re mezv-dall. Ur vezh eo o gwelet.

**29-04-1916** - Brav a zoere ! An deizioù-mañ eh aomp kuit arre e'it kemer hol lec'h e Proyard, Chuignes, Fetan-Capy ha re 'rall. Lakaet omp en 11° Div. C<sup>alc</sup>. n'en doa ket rej. terr. erbet. Berr eo bet an diskuizh ha skuishaet omp muioc'h é tonet amañ e'it ne vehemp bet é chom lec'h ma oamp. Ne ouian ket penaos e kerzh an traoù e burevoù ar re a zo doc'h hor c'hondu met hañval eo eh eus un tammig dizurzh ha ne gomprenner ket mat petra eo un den. Ne ouiomp ket c'hoazh pezh deiz eh

aimp kuit.

Henoazh eh aomp àr-raok da greiznoz 1/2.

**30-04-1916**-Hanternoz 1/2. Dihouskomp! Ac'hampemant a ya kuit da greisnoz hanter hag ar gompagnunezh 2 eur àr-lerc'h. An hent hirañ a gemeromp, reve an akustumañs ; rak en arme a pah eus da vonet ag an Oriant da Henbont e vezer kaset da glask an dro dre bourc'h Kaodan ! An adjudant bataillon, hag a zo bet neoazh er skol Chef de section, a zo kollet a pand eo ret dezhoñ en em gonde get e gartenn. Esae a raomp berraat an hent un tammig é monet a-dreuz dre un hent bihan goude Hamelet, met emberr eh omp kaset dezhoñ e-kreiz ur malezad douar labour splannaet hepken get gouloù ar fuzeoù a sav d'al laez du-se e kornad ar Saozon. Er c'hoadig a zo izeloc'h evidomp eh eus ur melodi get an eostiged a laka ar flagenn da zasson get o bouezhioù sklintin... Dre forzh monet elkent e tegouezhomp get an hent-bras a dremen dre Lamotte-en-Santerre, hag un tammig àr-lerc'h get hent-bras Amiens da Vermand.

Arru a raomp skuizh hor gwalc'h e Proyard a pa sav an heol. Fentus ar sav-heol-se : da gentañ e seblant an heol bout troc'het a gornoù. Un tammig àr-lerc'h ema hañval doc'h ur pikol ui...

Hon tud a lojomp fonnapl met an ofiserion a zo diaesoc'h o lojiñ. Dre voneur n'em eus 'met unan da lojiñ hiziv.

Kavet a raomp amañ an 282°. 'Gozik rac'h Breizhiz. Job ar Porzh a gostez bourc'h Kaodan.

Labour a dapan en ur arru get ma faperioù, ma frêt.... Un douch a gemeran a ra vad bras din.

**1<sup>añ</sup> a viz Mae 1916** - Un ti a-bezh am eus e'it burev. Nend on ket drouk amañ. A pa badahe an traoù-mañ.

*Ouest de Proyard : Ici reposent 76 soldats du 60° Reg.*

*d'Infanterie tombés le 29 août en couvrant la retraite de l'armée française. Du nombre était Denizet Edmond, caporal.*

*Autre tombe : 125 soldats et S/off. repos. -- Ici reposent soldats allemands et français.*

**03/04/05-05-1916** - Paperioù muioc'h e'it bihanoc'h hag  
èl nend eus 'medon ne c'hellan ket monet er-maez a ma zoull.  
N'en em glemman ket neoazh.

**D'an 12-05-1916** - Netra, netra 'met paper.

**13-05-1916** - Bemdez e komzer mah aomp kuit da  
Chuignolles. Kas a raer mem da welet an tachad a zleomp  
monet dezhoñ ; pemp munut àr-lerc'h e lârer deomp ne  
fichimp ket. Neoazh henoazh eh arru genomp an doere eh  
aomp àr-raok, sur, arc'hoazh vintin da 2 eur. Ret eo, a lâr ar  
gemenn daet ag ar brigade, ma vo tremenet ar gompagnunezh  
diàr ar menez a zo doc'h tu kreisnoz a Broyart a-raok an  
deiz ! Ha bemdez e tremen àr-greiz an deiz tud en tachad-se.  
Ni mem, a pa oamp e Chuignes, ni a zae du-mañ d'en em  
walc'hiñ pe da dremen er gampr kloret... Ne vern, èl-se ema  
an traoù. Hon tud a oa bet é labourat e-pad an noz dec'h ha  
henoazh, da 2 eur da vintin, emaint arre àr sav e'it monet da  
zigor o beg da c'hortoz an dud da sevel.

**14-05-1916** - Ema 7 eur a pa zigor an dorioù... Hag un  
herrad àr-lerc'h, dre hentoù foñdet, eh an d'ar Rapport da  
Broyart.

En em lojiñ a raomp truhezek a-walc'h en un ti doc'h lein an  
dostenn, ti ar sakrist. Er suler e kavomp ur yoc'h levrioù relijius  
kozh hag ur se sakrist kozh goloet a vragerisoù argantet.

**15-05-1916** - An ti hor boa kemeret ne oa ket en hor

c'hantonemant. Ret eo deomp achap àr-raok re ar 102°. Monet a raomp en un ti blazus, rac'h da naetaat, un toull teil a-dal dezhoñ.

Ur gwele a ran get orasl kroazet. Fall amzer. Glav...

**16-05-1916** - Kaer-bras. Achu a raomp kempenn hon ti nevez. Didrouz omp amañ.

**17-05-1916** - Netra a-feson. Hon tud a ya bemnoz da labourat (e'it un nozvezh àr 3) d'ober bouzellennoù èl àrlene er Champagn. Làret a raer e tle d'ar Saozon pe kentoc'h da Vreizhiz Breizh-Veur skoiñ un taol bras e'it monet trema Péronne. Amañ ne vo graet met tenniñ e'it o derc'hel en o lec'h. Ar pezh a zo sur, arru a ra obusoù, kanonoù kement ma nend eus ket gwelet biskoazh kement 'rall.

**18-05-1916** - Monet a ran d'ar rapport. Citation ar c'hap. Poix a zo ar mintin-mañ ha fentus eo : « *Ayant pris le 2 octobre 1915 le commandement de son bataillon après la mort de son chef tué sur la position* (ar c'homandant Guillemot hag a oa lazhet en trañcheoù get ur boled en e dal é klask gwelet ar pezh a oa doc'h tu an eneberion) *a su maintenir ses territoriaux sous un feu violent* (ne oa ket gwazh e'it an deizioù arall) *qui bouleversa les tranchées où ils se tenaient et leur causa des pertes sensibles* ». Nen doa graet met èl ar re 'rall : en em guzhet en e doull. Ne oa dober erbet a zerc'hel an dud en tachad : rac'h e oant edan an douar ! Hag an ofiserion donoc'h e'it ar re 'rall ! (O/ de la Division)

Michaud arru dek deiz a-raok e varv àr dalbenn ar brezel a dap ivez ar groaz ha tud èl Kerdelhue, ar Boulbar, hag ur yoc'h re 'rall en deus anduret kant kwezh muioc'h n'o deus bet netra... Diaes e vo diforc'h ar re en devo gounidet o c'hroaz e-mesk ar re 'rall ! Arru a ra da vout gwir komz Louis Veillot.

E'it bout den onest ema ret chom digroaz.

**19-05-1916** - Mintin eh an d'an iliz. Bihanik eo met a-walc'h e'it ar vro. Ur vitrail a-zehou a zo roet get ar C'hont de Kergorlay. Goulenn a ran piv eo an Ao -hont ginidik sur a Vreizh a zo daet da chom d'ar vro-mañ. E kostez Fay eh oa é chom, piaouiñ a rae ur yoc'h douar er vro-mañ. Bremañ ema e vaner get ar Jermaned. Eh on ma-unan arre doc'h en em zibab doc'h al labour. Aet e Gauffriand da Vorcourt da zerc'hel lec'h ar chef aet e perm. e'it an eil gwezh en arbenn a varv e vamm-gaer. Hag ar re 'rall ne roer ket deiz erbet dezhe e'it o zud-kaer.

**20/21/22-05-1916** - Kaer-bras eo an amzer. Netra a nevez met trouz ar c'hanon a glever gwezh a-gleiz, gwezh a-zehou. N'hon eus ket neoazh d'en em glemm amañ rak dibaot eo ar potarnoù.

**23-05-1916** - É monet da Broyart e welan ur soudard é vale trema al linenn vihan e-kreiz parkadaou bokedoù melen. Serrriñ a ra anezhe a zornadoù hag eh a get ur pakad d'er c'has àr bez ur c'haezh soudard astennnet e-tal ar gar vihan... É tonet en-dro eh an da welet bered Chuignolles. Soudarded a Vreizh a zo kousket a-barzh c'hoazh.

**24-05-1916** - E Proyard, àr-lerc'h ar rapport, e welan ur mitrailleuse a zo lakaet àr ur rod karr e'it tenniñ àr an aerlistri. Èl-se e c'hell troiñ a-gleiz hag a-zehou forzh aes. Un ahel a servij da bivot d'ar rod.

Glav bras a ra. Vad a ray met ne vo ket forzh bourrapl d'hon tud monet da fangigellat du-se trema sukreri Dompierre.

An deizioù-mañ e tegouezh genin lizherioù fentus daet a dud ag an « a-dreñv ». Ne welont tamm erbet an traoù èl ma

o gwelomp. Ar merc'hed dreist-pep-tra ne c'hellont ket harz doc'h o spered paour a labourat. Da ouiet mar gellint derc'hel keit el ar re a zo er brezel !

**25-05-1916** - Jegouzoù a ya kuit hep gouiet d'ar re 'rall. Setu an eil gwezh e tegoueh an dra-se getoñ. Ar wezh gentañ eh oa aet trema Cappy ha degaset en-dro. Ar medisinour en doa-eñ gouarnet e'it gwelet ma oa cheñchet àrnezhoñ, ha goude 8 teiz eh oa degaset en-dro d'ar gompagnunezh hep netra a berzh ar medisinour. Neoazh anat eo ema gwan a spered. Ar wezh-mañ eh a beta Villers-Bretonneux hag e ta ar Prevote d'an degas en-dro. Infirmerie arre. En atretant eh oa sellet e sac'h soudard ha kavet a-barzh ur yoc'h traoù dispar : ur c'hask kouevr pompour ! ur flaouit ! Ur rolltad neud telefon, paperioù hag ul levr labour-douar kemeret dre-se en ur stal levrioù bennak... An den paour-se a oa bet reformet e'it « *troubles mentaux* » ! Sur ema diskient atav. Perak enta en derc'hel amañ ? Un deiz bennak e ray un dro fall bennak.

**26/27-05-1916** - Netra nevez. Komz a raer a cheñch lec'h d'ar C'holoniale. Arru a ray hon tro da vonet da Verdun ivez un deiz bennak...

**28-05-1916** - Sul. Oferenn get un alezonour soudard, ar groaz légion d'honneur àr e galon. Enoriñ a raer hiziv Janed-Ark.

**29/30/31-05-1916** - Devezhioù paper. Arru a ra soudarded bemdez, ha bemdez ema ret deomp stardiñ hon tud evit gober hent d'ar re 'rall. Obusoù a arru ivez. Ar XX° Corps A. a zo arru a-gleiz deomp. Kemer a raont lod a secteur ar Saozon an tu 'rall d'ar wazh. Ar Vretoned a ra ar Blaouezh ag ar Somme el ma raont a gement gwazh a gavont ! Ur yoc'h Breizhiz a zo

amañ c'hoazh, er C'holoniale, an artilheri lourde. E-mesk ar re-mañ eh eus tud hag a vehe kenkoulz o lec'h genomp-ni. Nend int ket koshoc'h evidomp-ni ha nend int ket bet gwezh erbet en trañcheoù : ne ouiont ket tamm erbet penaos e vezer eno.

1<sup>añ</sup>. /02/03/04 a Vezheven 1916 - An amzer en deus chenchet en un taol. Aet eo an avel d'an izel, a daoloù d'ar c'hevred. Daet eo da vout yen. Aneoued hor bez d'an noz ha d'an deiz e vez sur yenoc'h e'it ne vez genomp-ni e Breizh da viz Meurzh. D'an 3 em eus graet anaoudegeh get Jaouen, ni Ab Alor, a zo medisinour aux. amañ er 24<sup>e</sup> Col. Plijadur em eus doc'h er gwelet rak goût a raen eh oa tuet à draoù Breizh. E Pariz, e-pad e studi, e taremprede ar gevredigezhioù keltiek. Komz a raomp ag ar vignoned a anavomp, ag en Iwerzhoniz ha lâret a ra ar pezh a zo anat en deus ar Saozon graet vilonaj du-se a-enep d'hor breuder. Nend eo ket souezhus a pa ouier ema Carson, hennezh hag en doa savet a-enep da lezennoù Bro-Saoz un arme, hag a zo bremañ ar gwashañ a-enep d'ar Sinn-Feiners. Gazetoù Bro-Saoz en deus lâret gevier o gwalc'h diàr kement-se. Dre walleur int o-unan é komz.

Komz a ra din ivez ag ar feson mah avañser ar vedesinerion. Emaint a-c'houde penn kentañ ar brezel àr dalbenn ar brezel ha n'o deus bet avañs erbet. Touch a raont ur c'hant lur bennak ar miz hepken. E-pad an amzer-se, ar re anezhe en deus gellet en em denniñ àr-dreñv a zo bet propozet evit avañs. Daet int da benn a vout anvet medisinour aide-major, da lâret eo ofisour. An dra-mañ a zo kaoz : en depôt ar broposisionoù a ya eeun d'ar Ministr. Àr an talbennn eh aont da gentañ d'ar jeneraled hag ar re-mañ ne vennont ket o c'has pelloc'h.

**05-06-1916** - Àr-lerc'h koan eh aomp da vale. A gement tu a zo e tegouezh koadaj, obusoù, tud. Rac'h tor an devalennnoù



a zo krouizet e'it lakaat tud enne. Tentoù a zo savet hag e kement lec'h eh eus lojoù e'it lakaat tud ha loened. Nend eus ket ur c'hoad ha nend eo karget a dud.

Doc'h serr-noz e welomp labourizion ec'h arru. Oc'hpen ur rejimant a ziskenn a Broyart, a Chuignolles, evit monet trema ar Somme. Àr an dostenn a zo a-dal deomp, doc'h tu ar c'hevred-uhel (N. E.) eh eus ur batterie 75. Krouizet a zo toulloù ag ar re bravañ evit kemer kanonerion hag ofiserion hag a lein an oabr ema diaes gouiet, ag un aerlestr, eh eus netra eno.

**06-06-1916** - Monet a raomp henoazh àr an dostenn a zo e gwalern Chuignolles : tud atav ec'h arru, koad, etc. Sur e vezer é kempenn un dra bennak euzhus amañ.

Dec'h d'an noz àr-dro 9 eur e oa bet ur c'hrogad get ar Saozon hag ar Jermaned. Tarzhal a rae ar c'hanon hep dehan, beta kreisnoz hag an oabr a oa entanet. Gouiet hon eus hiziv ema ar Jermaned en doa esaet c'hoari ur fall dro d'hon amizion : souezh a oa bet gete.

Henoazh eh arru labourizion atav.

**07-06-1916** - Fall zevezh : sklasmus, barradoù, avel.

**08-06-1916** - Nend eus ket achumant erbet d'ar fall amzer. Ar gwashañ eo ema ret d'hon tud monet ur seurt da labourat e-pad an noz. Distreñ a raont d'ar gêr gwlebet, straket. Emberr en deus tapet al lod muiañ korvadoù aneoued. Rac'h an dud a basa. Gwir eo emaint lojet e tachadoù digor d'ar seizh amzer.

Ar serjanted-major a zo e Morcourt a zo c'hoazh falloç'h o doere. E'it gober hent d'ar soudarded yaouank a zegouezh bemdez emaint lakaet en ur c'hoadig er-maez ag ar vourc'h. Eno ema bet ret dezhe en em lojiñ edan o lien tant. Glav a gouezh àrnezhe, hag èl m'emaint àr un devalennn, an dour

a rudell edante... Al lod muiañ anezhe, kozh tudjentiligoù a Bariz pe a lec'h arall, ne ouiont gober netra get o bizied hag amañ ema ret gouiet gober pep tra.

**09/10/11-06-1916** - Atav fall amzer, amzer sklasmus. Netra a vad 'met eh arru tud ha houarn noz-ha-deiz.

**12/13/14-06-1916** - Labourat a ra hon tud d'an deiz lod anezhe, ha montiñ gward a raont ivez. Divec'husoc'h eo dezhe. Atav eh arru tud ha pezhioù ha traoù da lakaat enne.

**15-06-1916** - Àr-lerc'h koan e klevomp obusoù e kouezh doc'h tu Chuignes. Krapin a raomp àr an dostenn ha get hon hirmeler, e-pad un euriad e welomp ar potarnoù é kouezh àr kêr. Dre div, teir, peder eh arruont ; lod a darzh en aer, lod en ur douch doc'h an douar pe an tier. Kogusennoù moked du, pe ruz get an teol brevet, a sav, hag a pa lamont diàr kêr e welomp a-gleiz hag a-zehou tud ec'h achap. Er park uheloc'h e'it kêr eh eus ur beleg a red da welet mard eus re gwallaozet. Hor pezhioù a respont ivez, met gwan int ; e vezer just a-walc'h é tiblas ar pezhioù bras. Nend eus namet ar 75 hag a sko ha c'hoazh unan anezhe, a-gleiz deomp, a sailh. Gwelet a raomp pevar den é tougen un arall àr o skoaz, en ur c'hravazh. Re 'rall a zo er-maez ag ar sap, ruz o dilhad. Trist eo mervel èl-se lazhet da fall labour ar re 'rall ! Lies eh arru an dra-se neoazh.

**16-06-1916** - Didrouz.

**17-06-1916** - A-boan kousket e sav trouz àr al linenn doc'h tu Fay. Kanon, fuzilhenn, mindrailherez. Tarzhal a ra an traoù e-pad oc'hpenn un eur. Daou pe tri deiz àr-lerc'h e lârer deomp àr ar gazetoù en deus un nebeud Jermaned esaet donet àrnomp. Resevet-mat int bet.

**18-06-1916** - Kement a drouz èl dec'h doc'h tu Lihons

a-zehou deomp.

**19-06-1916** - E Proyard, é monet d'ar rapport, e welomp ur yoc'h tud du ag ar Senegal arru da sikour genom, pe kentoc'h da gemer hol lec'h en tu 'rall du-se. Bout a zo lod anezhe a zo kontellet rac'h o fas, doc'h o divrec'h grigri. Bale a raont digas er ru, o divrec'h hir a-stribilh doc'h te, o c'horf é vrañsigellat. Lod arall a zo azezet doc'h kostez an hent-bras, doc'h an tier, en heol, é tiviz, o daoulagad digor-frank gete, o ivinoù ha dent gwenn.

**20-06-1916** - Prêt - Labour - Goulenn a raer arre tud, ar re yaouankañ ac'hanomp, e'it en « *active* ». Selloù du, trouz, etc.

**21-06-1916** - Kaeraet bras en deus an amzer. Bale a ra an aerlistri hep dehan erbet. D'enderv-noz unan anezhe, ur jiboesour, a zegouezh dezhoñ kaout bihan a essence hag e tiskenn a-dal d'an ti, da gentañ a-blom e'it kemer lañs ha goude èl ur pousin bras e ruskl àr e zivaskell e'it monet da gouezh un tammig pelloc'h en douaroù..

Na herr a sav a-benn evit monet d'er gwelet ! En ur c'hardeur ema gronnet. Un adj. yaouank-flamm a zo a-barzh, ar groaz àr e galon. Ur mindrailherez àr al lein a servij dezhoñ da denniñ àr an eneberion. Doc'h serr-noz e c'hell monet d'ar gêr. Ar Jermaned a denn un herrad goude mand eo diskennet hag e sav herr arre e'it monet da guzhet !...

**22-06-1916** - Monet a raomp da welet pezhioù bras a zo lakaet doc'h troad an dostenn a ya trema Froissy. Digor int èl ur bidon a 50 bout. Un hent-houarn bihan a ya betek ar pezh hag a gas an obusoù a bouez 400, 500, 600 kilo. betek ar pezh. O obusoù a ya 8 m. en douar.

Ur souezh eo d'an dud du a bep gouenn, a bep bro, d'ar

c'hirri, d'ar roñseed a dremen amañ. Ar bont Laneuville-Les-Bray ur serjant en deus kontet paseiñ 6 000 karr e-pad en 12 eur ema bet eno é vontiñ gward.

**23-06-1916** - Soudarded ec'h arru bepred hep arsav ; traoù a bep seurt ivez. Ar Jermaned a wel get o «silzig» e fich an traoù amañ muioc'h e'it kent ha teurel a raont un nebeud obusoù àr Cappy hag àr ar c'hoad a zo a-gleiz da hent Cappy. En tachad-mañ eh eus gwallaozet 3 soudard.

**24-06-1916** - Ar c'hreisteiz-mañ e tarzha mat an traoù. Ar pezhioù bras a zo àr du Cappy a skop hep arsav pikol obusoù a welomp ac'halemañ é tarzhal. Gwelet a raomp tammoù motad, douar, mein é sevel uhel en aer ag an amzer, ha goude ar moged, ha goude e ta an trouz betakomp.

Burzhud d'an houarn a gouezh du-se àr du Frise, Cappy. Doc'h kosteziad Breizhiz Breizh-Veur e tarzha ar c'hanon. Eh omp amañ èl en ur hanter kerlenn. Nend eus met a-dreñv hor c'hein ne gouezh netra. A-hend-arall e kement tachad a welomp dirak hon daoulagad ne welomp 'met kogus melen, kogus gwenn, kogus al liv get an douar pe an tier a gouezh ar potarnoù àrnezh.

Àr-dro 2 eur 1/2 e taer da lâret deomp e venn d'an artilheri pounner diskar tour Assevillers ha chemical sukrdi Flaucourt hag a servij d'an eneberion da sellet ha da eveshaat doc'h ar pezh a raomp doc'h an tu-mañ. Monet a ran àr lein an dostenn a zo amañ met, kaer em eus sellet, ne welan ket an tour é teval. Atav e tarzha an traoù e kement lec'h a zo.

A pand eo debret koan eh aomp c'hoazh da sellet doc'h an dennerezh euzhus-se : diskaret eo tour iliz Assevillers. Ne chom ket mui 'met an doenn hag an diaz ag an tour. An tier tro-ha-tro a zo dismantret ivez. Ha ne arsav ket ar c'hanon a gornal.

**25-06-1916** - Gouel ar Sakremant. Ar mintin-mañ a pa

savomp ne chom ket mui an disterañ dra a iliz Assevillers hag an dir a gouezh atav a-zrebi ar c'hreisteiz tre betek ar c'huzh-heol en ur dremn dre ar c'hreiznoz. Leun eo ar flagennoù a voged. Lâret a raer e vo emberr an tarzhad ; ar sizhun-mañ za 'gozig sur ! Un dra a zo mat : hani ne oui forzh-kaer ar wezh-mañ pegours e tarzhay an taol bras : àrlene, ur miz a-raok e ouiemp hag ar Jermaned ivez. Sur n'o do ket oar da zegas amañ ar pezh a faot evit difenn.

Penaos buhez evit gouel an Doue a garantez ! Ret eo ema ankouaet-mat e lezenn e'it ma c'hell Mab-den gober traoù ken spontus.

**26-06-1916** - Tarzhal a ra atav ar c'hanon a bep tu. An ifern diskennet àr an douar !

**27-06-1916** - Arc'hoazh ema dle deomp monet kuit ac'halemañ. Ar-lerc'h kreisteiz eh arru genomp un taol telefon ag E. M. Tetard monet un ofisour, un adjudant hag ur serjant-major betek e P. C. An adjudant a zo ec'h arru, ar serjant Catoire a gaser ha me. Glav en deus graet ha fang a zo. Da greisteiz hanter eh aomp kuit. Monet a raomp dre ar vouzellenn ha betek 2 eur 1/2 e troomp gwezh a-gleiz, gwezh a-zehou en tamm bouzellenn-se a ya du-se tre betek ar gentañ linenn. Arru a raomp get P. C. ar 4<sup>e</sup> Brig. Goude bout bet herset hor gwalc'h, hor penn torret d'an tennoù. C'hwitellat a ra an obusoù hep dehan a-dreist hor penn. Nag ur viniaouerezh ! Met setu al letenant é c'houlenn get un ofisour e pezh tachad ema Koad-ar-Werc'hez (rak an « Orsalenn » en deus skrivet àr ar paper ema ar P. C. e-tal ar c'hoad-se), hag hor c'haser d'un tu ha d'an tu 'rall. Hani ne oui e pezh tachad ema ar pezh a glaskomp. Troiñ ha distroiñ a raomp, en em goll a raomp, ha bepred e kouezhomp en hevelep tachadoù. Àr an hent e kavomp daou vorilhon astennnet àr an douar, lazhet.

Lakaet int e daou sac'h, klommet àr o fenn hag àr o zreid, hag emaint bet taolet e kostez ar vouzellenn. Ur wezh eh aomp dre Bouzellenn-ar-Werc'hez é soñjal kouezh er c'hoad. Bouzellenn-ar-Werc'hez ne dremener mui : foñdet eo ha leun a vodadoù moutarde du e bleuñv hag a luzern. Gwelet a raomp anezhoñ diragomp Dompierre a gouezh an obusoù a-barzh èl glav... Dre forzh redek, da 6 eur 1/2, e kavomp unan ag a za d'hon ambroug d'an tachad a glaskomp. Ne harzomp ket mui ! Ha lâret eh omp bet amañ er penn kentañ ag an ac'hoez...

Ar jeneral Testard a gomz er vouzellenn get daou pe tri soudard.

An ofisour hor resev mat hag a lâr deomp ema cheñchet an traoù ha nend eus netra da lâret deomp. Nag a boan gollet ! Bremañ ema an hent d'ober en-dro é monet àr-dreñv...

Àr an hent e kavomp ar gompagnunezh é monet d'al labour hag arc'hoazh vintin eh aont kuit da Gappy.

**28-06-1916** - Da 7 eur 1/4 eh a ar gompagnunezh kuit. Me 'chom-me e Chuignolles da gemer ar rapport. Àr-lerc'h eh an dre lein tostenn Cappy. E kement toull a zo eh eus pezhioù. Un obus a gouezh er flagenn a pa dremenan hag a pa zegouezhan e Cappy e kouezh re 'rall, unan anezhe tostik din. Gwelet a ran unan ec'h achap d'ur poste de secours, ar gwad é sailh er-maez ag e vrec'h. Ur jao a daol gwad dre e zifroen. Ruz eo ar fang àr ar ru get ar gwad. Arru a ran èlkent. An ifern a zo amañ ! Kreniñ a ra an tier get horos ar c'hanonoù rak amañ ema ar pezhioù bras. 3 canonnières a zo ivez get ur pezh bras àr bep unan. Rac'h an traoù, an douar, an tier a horos ; ar galon a horos ennoc'h. An deiz kentañ ema bet ret din lakaat ouet em diskouarn.

**29-06-1916** - Monet a ran d'an oferenn (d'he respont). Hiziv ne denn ket ar Jermaned. Ni denn-ni nebeutoc'h ivez.

Ar-lerc'h pred, da greisteiz ha d'an noz, eh aomp d'ober ur bale doc'h tor ar menez a ya trema Frise. Gwelet a raomp Suzanne en tu 'rall d'ar Somme, ha goude ar menez ha hent-bras Albert a zo àr lein hag a zo etre an div linenn. Kouezh a ra e kement lec'h a zo obusoù a bep seurt ; lod a darzh en aer, lod é touch doc'h an douar. Leun eo an dremmwel a voged du, gwenn, gwenn-glas.

**30-06-1916** - Kreñvaat a ra atav en tarz. Respont a ra ar Jermaned. Da vintin e wallaozont un den ag ar gompagnunezh : Josse. D'enderv-noz e tennont c'hoazh hag ema bleaset al lieutenant ha Mougin. Hennañ en deus tapet tri zamm. Lâret a raer deomp ema arc'hoazh eh aomp da gemer lec'h an active goude m'he devo fardet àr ar Jermaned.

**1<sup>añ</sup> juillet 1916** - Da 4 eur e savomp a-herr hag eh aomp trema ar «Wezenn Penn-To». Da seizh eur e tarz biskoazh muioc'h an traoù. Nend eus ket dehan erbet mui. Tremena a ra ar potarnoù èl ur vandenn c'hwiled-derv en aer. Lod a ra glou-glou ; ar re 'rall e viniaoua. Ret eo din lakaat ouet em diskouarn. Torret eo ma fenn. Avañs a raomp neoazh dre ar bouzellennoù. Tostaat a raomp d'al linenn gentañ. Àr-dro 9 eur 1/2 e kouezh àrnomp ur barrad potarnoù a bad div eur atav. Goût a raomp eh a ar Jermaned àr-dreñv ; gwelet a raomp ar re gentañ anezhe en deus en em rentet. Bugale int. 16, 17, 18, 20 vlez ; paket mat. Eürus e tiskouezont bout doc'h un tu rak doc'h an tu 'rall ema divourrapl. Gwelet a raomp ivez re bleaset. Nend eus ket kalz ag hor re-ni. Ni 'chom-ni daoulinet, hor sac'h àr hor penn, da bas ar barrad houarn. Douar, tammoù houarn a gouezh àrnomp. Burzhud eo nend eus 'met daou ag ar gompagnunezh, Guerin ha Sassus.

Avañs a ra atav hor re. Gellet a raomp bremañ lakaat hor penn er-maez ag an douar hag e welomp an trañcheoù jerman

foñdet rac'h. Gwelet a raomp ivez hor soudarded é monet trema kêr Herbécourt ha Flaucourt. A-zehou e weler tier kentañ Dompierre. Ne chom ket kalz a dra ag ar vourc'hig-mañ. Saucisses o doa d'al laez a vounter an tan enne. Un aerlestr deomp a zo touchet ivez ha ret eo dezhoñ deval en hol linenn. Ema amañ e-tal ar C'hoad-Hep-Anv, e lost triliv getoñ savet en aer ag an amzer.

Avañset en deus hon tud un 6 kardlev bennak en o devezh.

**02 a viz Gourhelen 1916** - Sul. Hiziv e talc'h hon tud da vonet àr-raok. Ar wezh-mañ e weler peseurt labour a c'heller gober a pa gerzh an artilheri hag ar soudarded àr-droad dornoc'h-dorn. An hanter bihanoc'h a dud a goller, an hanter muioc'h a labour a raer. An enderv-noz-mañ neoazh, a pand eo aet hor soudarded e Herbécourt, ar c'hanonoù ne dennont ket hir a-walc'h mui hag e kouezh obusoù arre e-mesk hor re. Met emberr, get fuzeoù 6 tan, e lârer dezhe hiraat, hag e kerzh an traoù arre.

Lakaet hon eus hor burev er-maez, àr lein en dachenn emgann. Div voest koad foñdet ha tachtet ar 3 piket a servij da daol. Boestoù grenades arall a servij da azez. Distroet omp d'ar sav-heol hag azezet doc'h hon taol e welomp diragomp plaenenn Dompierre a ya a-zrebi ar Somme beta flagenn Fontaines-Les-Capy. A-zehou e welomp restajoù Dompierre : a-boan ma chom un dousenniad tier, rac'h dismantret. Toulloù a zo a-barzh, toulloù spontus krouizet d'hon obusoù. Gwez vras a zo diwriziennet ha cheñchet penn dezhe. An toulloù a zo leun a goad ag an toennoù, ha dre bep div wezh e kaver soudarded jerman astennnet en toulloù, lazhet d'hor boledoù. Pelloc'h ema Becquencourt a weler lod ag an toennoù. Pelloc'h c'hoazh en ur vonet a-gleiz, Flocourt lec'h m'ema ar Jermaned c'hoazh, ha Herbécourt tostoc'h d'ar Somme. A-zehou koadig



Merancourt. Pell du-se, doc'h en dremmwel, ar gwez a zo àr hent Clery-sur-Somme hag ur c'hloc'hdi gwenn a weler doc'h kostez ar Somme merket àr liv teñvel ar gwez : Feuillères a zo eno. A-gleiz, a-dreist ar Somme, e welan tourioù Maricourt, Maurepas. Tarzhal a ra an traoù doc'h an tu-se get Breizhiz-Veur hag en 20<sup>vet</sup> Corps. Moged du, glas, gris a sav un tammig e kement lec'h a zo. Amañ diragomp ema didrouz. An artilheri en deus tostaet neoazh. Bout a zo pezhioù just a-dreñv ar C'hoad-Kozh. Re 'rall a arru c'hoazh. D'an noz e kouskomp er sap, en hol lien tant. Yen eo un tammig met ne vern. Donet a ra kalon deomp é welet an traoù ec'h avañs.

**03-07-1916** - Goloet eo an amzer. Aet eo mat an traoù get ar fard dec'h d'ac'hoez. Kemeret eo rac'h Herbécourt daousto d'ar mitrailleuses a oa a-barzh ha d'an daou bezh 77 a denne àr hon tud beta ken ma oant arru àrnezhe. Hani ag ar soudarded a oa doc'h o darbar nend eo chomet bev, nag ivez ar re a oa é tarbar ar mitrailleuses. Nend eus ket kollet kalz a dud doc'h hon tu-ni rak, a pa zo gwelet eh oa chomet Jermaned hag a venne en em zifenn e kêr, ema bet potarnet ken mand eo kroget an tan a-barzh e daou dachad ; goude ema aet forzh aes an traoù. En tu-'rall a gêr eh oa un trañche hag a oa tennet kement àrnezhi ma tas an ofisour jerman d'en em rentiñ emberr. Graet e oa dezhoñ distroñ en-dro ha lâret da rac'h e dud en em rentiñ, met ret e oa bet kinnig koll dezhoñ e'it el lakaat da gerzhet. Emberr eh oa aet neoazh ha kentizh e tas e dud getoñ.

Souezhus eo gwelet e-kreiz ar potarnoù ar gwennili, ha dreist-pep-tra an c'hwedered, é sevel en aer ag an amzer hag é kanal èl a pa ne vehe ket brezel....

**04-07-1916** - Araokaat a ra atav hor re. Aet int an neizhour en tu 'rall da Flaucourt. Pezhioù 75 a dremen bepred amañ é

monet trema ar Jermaned. Komz a raer ivez ag hor c'has-ni pelloc'h. An deizioù-mañ e sav bec'h get ar re a venn kaout ur c'houn bennak ag an traoù a chom àr-lerc'h an eneberion. Gwelet a raomp traoù a bep seurt ec'h arru : fuzilhennoù, klezeñvier, kontelloù, jumelles, sec'hier, lizherioù, poltredoù, kartennoù... Traoù a bep ment, a bep furm...

An artilh. a zalc'h da vonet àr-raok. Ar Jermaned neoazh a daol bepred obusoù àr Cappy hag àr ar c'hêrioù arall a zo amañ. Doc'h tu Frise ivez e kouezh a-yoc'h, met ne welomp ket a veban e taont.

**05-07-1916** - Araokaat a ra atav hor soudarded. Aet int en tu 'rall da Glin Frise, an tu 'rall da Flaucourt, an tu 'rall d'Estrées. Pec'hed eo nend eo ket ken brav an amzer. Arneñv a zo daet ha glav en deus graet. Ar c'hanonoù neoazh a zalc'h da dostaat a nebeudigoù.

**06-07-1916** - Kaeraet en deus an amzer en-dro. Doc'h tu Clery e tarzha mat an traoù. Un tammig menez a zo ar ribl ar ster ha ret eo kemer hennezh evit gellout, ag an tachad-se, diskar ar pezh o deus graet pelloc'h. Tarzhal a ra hep dehan ar c'hanon a-gleiz hag a-zehou. Diragomp ema didrouz.

Ar soudarded a za ag ar gentañ linenn a-dal da Béronne a lârn ne welont ket mui Jerman erbet. Aet int en tu 'rall d'ar Somme pechañs. Respont a raont meur a wezh met, el ne welont ket e pezh tachad e tennont, dibaot ag o fotarnoù a ra droug.

Ar c'hreisteiz-mañ eh aomp da welet en trañcheoù jerman a zleomp monet dezhe goude koan. Kant kwezh hon eus klevet lâret e rae ar Jermaned o zrañcheoù gwell evidomp. Setu ar re gentañ a welan hag e gwirionez gwell ema graet hor re-ni, mistroc'h, strishoc'h. Choaz a ran teir sape e'it an ofserion, ar burev hag ar rederion. Deun int met izel-izel ha blazus. Leun int a zilhadañ, armaj, a draoù a bep seurt. Ur soudard a zo a-dal

deomp, unan jerman, àr e gostez, lazhet. Nag a genseurteñ dezhoñ a zle bout chomet interret edan an douar en abrioù-se a zo flastret lod anezhe daousto dezhe bout deun. Rak kentañ linenn ar Jermaned a zo rac'h foñjellat get hon obusoù.

A pa zan en-dro a ma zroiad e lârer deomp pas fichal, ha d'enderv-noz ema ret deomp donet àr-dreñv ar bedervet. Kavet a raomp P. C. Colonel an 8<sup>e</sup> C<sup>al</sup> a zo goulle hag a-benn e raomp a-barzh ar burev.

Doc'h tu Foucaucourt ha Soyécourt e tarzha an traoù er penn kentañ ag an noz. An enderv-mañ ivez e oa start an argad : ar Saozon, e'it lakaat ar Jermaned da giliñ, en doa taolet gaz ampoezonet àrnezhe hag e oa leun ar flagenn a voged. Doc'h ar mintin hon eus gwelet soudarded é krapañ doc'h tostenn Clery, potarnoù e tarzhal a-dreist o fenn.

**07-07-1916** - Setu-ni en hol loj nevez. Nend omp ket drouk met yen eo hag eh omp aet en un toull d'ober hor burev.

Ac'halemañ ne weler netra 'met ar parkad laezhegez a ya ken pell èl mah a ar sell get orsal dreinek en o mesk gwezh ha gwezh. Doc'h tu Estrées e talc'h an traoù da gerzhet. Monet a ran àr lein an dostenn hag e welan du-se Ti-ar-Resevour e Foucaucourt. Eno nend eus ket fichet kalz an traoù met un tammig a-gleiz e tenner get ar fuzilhenn pell-pell trema ar Somme. Mat eh a an traoù doc'h an tu se. D'enderv-noz e tegouezh genomp ar gemenn da vonet ur c'hardlev bennak tostoc'h da Herbécourt.

Cheñchamant amzer a zo daet : glav a ra. Distrempet eo ar blaenenn. Monet a ra kirri ha roñseed er vouilhenn hag èl mand eo druz an douar dre-mañ e stagont doc'htoñ èl doc'h glud. Ret eo cheñch neoazh hag eh aomp edan ar glav, a bakadoù, d'en em lakaat en trañche Elen. An dud a zo ret dezhe en em lakaat e div vouzellenn tostoc'h da Herbécourt. Emaint eno hep abri erbet, en toulloù gwleeb-se, get o dilhad gwleeb

àrnezhe, rak e-pad an deiz hag a-c'houde daou zeiz emaint é serrezh korvoù marv àr douar an emgann. Kozh micher mard eus. Setu tost d'ur sizhun ema ar geizh-se astennnet àr an dachenn, gwalc'het d'ar barradoù glav, goloet a breñved. Du int èl huzilh, rak rac'h ar re a varv get tammoù obus pe get ur boled a ya du-kell emberr. Nend eus ket ur bern bras anezhe neoazh ; a-boan 6 X 20 bennak a-dal ar Somme beta Dompierre ha Herbécourt. E Koad-ar-Vuoch eh oa ar muiañ. An tachad-se a zo just a-dreist ar Somme hag an trañcheoù eno a gouezhe obusoù enne a-blom ag en tu 'rall.

**08-07-1916** - Derc'hel a ra hon tud get o micher divourrus met ret. Ar Frañsizion a gaser rac'h en hevelep bered. Div pe teir bered a raer èl-se a-gentizh ma kerzh hor re. An amzer nend eo ket ken divourrus. Ar c'hanon ne darzh ket mui kement. Arañj a raomp hor gwele : me 'm eus-me en em vountet e beg ur sap jerman a zo foñdet get un torpilh. Donet a ran da benn a gousket un tammig daousto d'am gwele bout diblaen.

**09-07-1916** - Kaeraet en deus an amzer. Ar mintin-mañ, a pand on savet da 5 eur e'it monet d'an oferenn, e oa fresk an avel met dizolo an amzer. Doc'h kostez ur c'harr, àr boest-kadrenn ar gegin-rodek a zo lakaet àrnezhi ul lien tant, ema an aoter. Kroazig ur chapelet a zo ar groaz aoter. 3 liennenn tant a-dreist ha doc'h an daou gostez. Setu ar chapelig. Un dousenniad tud : setu ar barrez.

E-pad an noz en deus tarzhet an traoù. Hiziv c'hoazh e tarzho : lâret a zo deomp disfiz doc'h an tennoù. Met nend aont ket betakomp. An dra-se ne barra ket e tarzh an tennoù a-zrebi Maricourt tre betak Assevillers. Un trouz ifern, un trouz spontus. Hejal a ra an aer, hejal a ra an douar, hejal a ra hor c'halon ennomp. D'enderv e welomp un nebeud Jermaned é tiskenn trema Cappy. Moarvat ema aet mat an traoù. Met

d'enderv-noz e ta un aerlestr jerman da loskiñ unan ag hor silzig. Esae a ra diskenn an hanni tostañ deomp met an arall en deus-eñ gwelet ha kentizh e tenn àrnezhoñ get e vindraillerez. Ret eo d'an aerlestr achap, ha fonnapl.

D'an noz, àr-dro 10 eur, e savan da welet ar c'hrogad a zo doc'h an tu 'rall d'ar Somme. Leun eo an oabr a luc'hed tan.

**10-07-1916** - Ar mintin-mañ eh on dihunet get hon tud a huch eh eus un aerlestr deomp é teval. Ya, daet eo d'an diaz, hag an daou geizh den e oa a-barzh a gouezh flastret àr an douar.

**11-07-1916** - Hiziv eh arru prizonerion genomp evit sikour dizouariñ o c'hileion. Mall eo rak blaziñ mat a ra ar re interret ; bout a zo ur sap dreist-pep-tra a zo tri pe pevar a-barzh en ur stad truhezek. O gweliñ a raer : unan anezhe a zo hanter digoret, an arall a zo kouezhet un trest àr e gein hag un arall àr e zivhar. Marv int eno hep sikour.

Kroget eo a-c'houde dec'h hon tud da serrezh ar pezh a chom àr an dachenn pe en abrioù. Serrezh a raer ur yoc'h fornevoù, grenades, cartouches, obusoù, dilhad, sec'hier, trester koad ha houarn, ur mindrailherez rusian, kanonoù trañche. Daou a zo hag a zo e koad hag a daol potarnoù bras èl ur pod laezh a zaou bodad. Boestoù a gement ment ha form a zo. Goulenn a raer kirri, 6, e'it donet d'o c'hlask.

Ar brizonerion a zo daet amañ a zo a bemp pe c'hwec'h rejimant. Kemeret int bet e Dompierre, lod anezhe. Bout a zo ag ar gward imperial lod anezhe. An darn vuiañ a zo bihan, dister, fall vaget. Labourat a raont àr o goarigoù : ne c'hellint ket atav en em glem a vout gwallgaset.

**12-07-1916** - Derc'hel a ra hon tud da zastum ha da dolpiñ kant tra a gavont e pep lec'h : en o mesk un daol-noz ! ur votez-

ler plac'h... Ar Jermaned prizonerion a sikour da skarzhiñ ar sapoù ha da zizouariñ o re.

**13-07-1916** - E-pad an noz en deus tarzhet an traoù doc'h tu Estrées ha doc'h tu ar Saozon. Ar mintin-mañ ema yenoc'h an amzer. Souezhus eo ema ken yen dre-mañ.

Achu en deus ar brizonerion lemel ar c'hoad diàr ar sap tostañ deomp. A-barzh, en ur gognell, eh eus ur c'haezh den a oa en ur gwele koad a pand eo kouezhet ar sap àrnezhon. Un trest a zo daet da gouezh àrnezhon dre ar bouzelloù hag en deus-eñ flastret. E zivhar a zo savet, e benn pleget àr e skoaz, e veg digor geton hag ar gwad kozh e tiver c'hoazh anezhon. Ar preñved en deus skarzhet e doulloù daoulagad hag e weler àr e fas ar Spont hag an Droug. Du-kell eo, blaziñ a ra. Hag e kement sap eh eus traoù ken euzhus da welet. O, tud Jermani, a pa welahec'h ho pugale e pezh stad emaint lakaet d'ar brezel spontus-mañ diskleriet get ho tudjentil hag ho tud a vrezel !

Unan ag ar brizonerion a oui un tammig galleg. Kemeret eo bet e Herbécourt. Eñ a oa amañ ur 500 m. bennak trema koad Méréancourt, en trañcheoù. Kalz ag e genseurted a zo chomet en douar, met an ofiserion nend eus ket tapet kalz anezhe el-se, rak aet e oant pelloc'h da guzhet trema Herbécourt. Tud a oa, e Herbécourt ha Flaucourt, met un deiz bennak 'raok ar fard eh oa graet dezhe monet kuit. E Péronne ivez eh oa kalz a dud disoudard.

**14-07-1916** - Gouel ar Republik ! Hiziv eh eus el bep plez morzhad hoc'h, katev, champagn, cigare. An devezh a chom didrouz. Hon tud a gaser da walc'hiñ d'ar wazh dadal An Eclusier. Lâret a raont o deus klevet en deus araokaet ar Saozon 5 kardlev. Ar pezh a ouian, e-pad an noz en deus tarzhet an tennoù hag atav e tarzhort ar mintin-mañ. Amañ, ar brizonerion a labour atav da zizouariñ ar sapoù kouezhet.

Kavet a raont un nebeud Jermaned en ur sap, lod en o sav, lod astennnet...

Arru eo an doere eh a ar medisinour Lestang kuit. Eürus eo rac'h an dud, rak an den-se, aonek dirak an dañjer, a oa ul loen didruez e kever hor c'heizh soudarded.

**15-07-1916** - Arru eo an doere genomp en deus gounidet Breizhiz-Veur 6 k. a ledanded dirak Bazantin-Le-Petit ha Longueval. Èl-se o deus vennet gober Gouel ar Republik dec'h ha diskouez d'ar re-all na raont 'met o dikri hep rezon erbet, e c'hellont gober labour èl ar re 'rall.

Ur section deomp (2<sup>col.</sup>) aet da denniñ obusoù ha peudr er-maez ag an douar an tu 'rall da Flaucourt a zo kemeret etre al linenn ha Flaucourt d'un dennerezh-harz. Ret eo dezhe chomel kuzhet en ur vouzellenn beta 9 eur noz a-raok gellout donet du-mañ. Trugarez Doue, hani n'en doa bet droug. (Ur fard a oa bet. 3 gwezh ar Jerm. en doa esaeet donet er-maez ag o zoulloù ; teir gwezh e oant flastret.)

**16-07-1916** - Sul. Mem lec'h e'it an oferenn. Kaeraet en deus an amzer. Kentizh àr-lerc'h kreisteiz e krog an traoù da darzhal a-fors doc'h tu Barleux hag Estrées. Revendailh eh esaeer digor an talbenn doc'h an tu-se. D'enderv e ta glav arre : a-dal ne bado ket.

**17/18-07-1916** - Amzer lous ha fresk. Diaes eo gober an disterañ labour : ne weler ket e-men e skoer. Ar Jermaned neoazh a gav an tu da vintin d'en em siliñ hed-ha-hed get ar c'hanal beta kêrig Biaches. Ret eo d'hor re donet àr-dreñv, met ne bad ket pell o gounid ; ret eo dezhe tec'hel àr-dreñv. Ar Saozon a zalc'h da skoñ. Ne zehan ket ar c'hanon doc'h an tu-se : araokaat a raont ivez. (Bohec bleaset en e dal)

**19-07-1916** - Devezh teñvel atav. Àr-lerc'h koan un

obus a gouezh àr Herbécourt, just àr un toull leun a fuzeoù, kartouchoù ha traoù èl-se. E-pad 3 pe peder eur e sav un tan hag ur maged souezhus en tachad-se ha dre bep div wezh e sav fuzeoù a bep liv en aer ag an amzer : un tan ardoùek seurt ne fehe ket bout gwelet bravoc’h.

Arc’hoazh e tleer c’hoazh sailh àr ar Jermaned.

**20-07-1916** - E-pad an noz e komañs ar gurun èl an deiz kentañ. Kousket ne c’heller ket ken stank e tenn ar c’hanonoù ma nend eus ket distag erbet etre an taoloù. Ur spont ! Hejal a ra ma lien tant edandon, kreniñ a ra ma faour-kaezh loj... Hiziv ema un tammig kaeroc’h. E-pad an deiz e pad ar gurun hag ar pezh a ra ar gwashañ deomp a zo klevet an trouz hep goût petra a dremen du-se.

Ar mintin-mañ eh eus an notenn-mañ àr an Decision : «Kerzerho Louis-Hoel, Colonel Territorial. Beaux services antérieurs. Nombreuses campagnes. Chef de corps animé du plus haut sentiment du devoir et qui a su faire de son regiment une unité bien tenue et animée du meilleur esprit. S’est distingué aux affaires de Champagne en 1915». Ar wirionez, setu hi : marse ema bet soudard-mat gwezharall, met a-c’houde mand eo genomp n’en deus graet netra. Ne feher ket bout dizereatoc’h evidomp e’it a pa lârer en deus graet ag ar 88° ur rejimant dalc’het mat hag a spered vat, rak a-raok ma oa arru genomp, ni hon eus graet hon dever muioc’h e’it e-leizh a re ’rall. E-pad emgannoù ar Champagne eh oa chomet a-dreñv hep en em soursial ag an disterañ tra. A-hend-arall rac’h ar soudarded er selle èl un den skuizh, merc’hetaour ha hep volantez.

D’enderv-noz e ta splann an amzer èl nend eo ket bet pell ’zo. Él rezon an aerlistri a vale hag ar «silzig» a sav. Bout hon eus atav un hanter-kant aerlestr bennak àr talbenn an emgann hag e welomp 12 pe 13 silzigenn. Leun eo an aer anezhe ha



bourboutal a ra an aerlistri èl a pa vehe taoloù-gwenan en aer ag an amzer. Gwelet a raer pell diragomp Barleux ha mem Mesnil-Bruntel en tu 'rall d'ar Somme. E-pad an noz e tarzh an traoù c'hoazh. Lâret a raer hon eus graet 2 000 prizonour met ne ouier ket sur. (Hon tud ne c'hellont ket monet da labourat d'an noz get an dennerezh.)

**21-07-1916** - Ar mintin-mañ ema kaer-bras an amzer arre. « Jiboerion » a vale en aer ; re jerman a zo anezhe. Tenniñ a raer àrnezhe hep dehan. En un taol setu tri ag hor re é fardiñ àr ur Jerman. Hennañ a achap en ur zeval, hor re a ziskenn àrnezhoñ ; eñ 'dro a-gleiz, ar re 'rall ivez ; eñ 'dro a-zehou, ar re 'rall àr e lerc'h ; eñ en em laosk da vonet àr-dro èl un distouwer, hor re ivez. Met liant eo-eñ ha daousto d'hor re bout kel liant, gellout a ra achap. Ne ouian ket ma nend eo ket bet gwallaozet un tammig e groc'hen get ar boledoù mindrailherez.

Hon tud a gaser da sevel obusoù pelloc'h e'it Flaucourt er riskl a goll o buhez. Ne gomprenet ket perak e raer dezhe gober ul labour ken dañjerus a vehe gallet gortoz getoñ. Me 'oui eh eus d'ober ag an obusoù, met èlkent !

D'an noz, èl bemnoz, setu gurunaj arre doc'h tu Breizhiz-Veur. Sevel a ran àr-dro dek eur ha krapañ a ran àr lein ur yoc'h douar a zo e-tal ma zoull. Bravet un dennereh a zo du-se trema an hanternoz ! Sevel a ra ar fuzeoù en aer ag an amzer hep dehan èl en ur gouel bras. Bout a zo re a bep liv... Horosal a ra an aer get an drouz...

**22-07-1916** - Ar mintin-mañ baleadenn betek un toull ema ar Jermaned é tizol hag a zo ul lusker a-barzh, 10 m. a zondet atav. Moarvat e servije dezhe da zegas dour du-mañ. Na labour fall c'hraet. Un obus en deus finfoñdet an tachad-mañ a ziskoueze bout ker kreñv neoazh.

**23-07-1916** - Arru a ra tud deomp ag an dépôt ; 6 a zo

anezhe hag ur c'haporal. Nend eus met daou hag a zo bet dija àr an talbenn. Na souezhet e oant é welet ar bratell emgann, an toulloù graet d'ar potarnoù, ar potarnoù é tarzhal !

**24-07-1916** - Ar mintin-mañ eh aomp kuit. 4 devezh a lârer a vo roet deomp da ziskuizh, a-dreist An Eclusier, doc'h tu ar c'hreisteiz. Ne blij ket kalz an diloj-se deomp c'hoazh, met èl-se e vez bepred. E'it an disterañ dra e vezomp lakaet da bostal.

Arru a raomp amañ goude merenn. Un dostenn sec'h, hañval doc'h re ar Champagne, mein-gwenn. A-barzh ivez e vo hol lojeris. Nend eus loj erbet. Un toull troc'het e kostez tor en dorgenn ha goloet get lien sac'h, geot ha louzoù, un nebeudig foen sec'h serreret din a pa oamp aet e trañche Verdun. Setu hol lojeris. Nend eo ket graet mat hol loj deomp ma fard a-barzh ur yoc'h kelion daet ag ar roñseed a zo rac'h er Flagenn du 120. Bout a zo oc'hpenn 500 jao dirak hon daoulagad. Un obus kouezhet an deizioù paseet e-kreiz an tarzhad loened-se en doa lazhet un ugentad bennak anezhe ! Kousket ne c'heller ket get ar c'helion ha get trouz an tennoù. Biskoazh n'hon eus klevet trouz an tennoù èl amañ. An trouz a za a c'hlannoù ar Somme a arru amañ, hag an trouz a blaenenn Herbécourt ivez, hag an dasson a za c'hoazh da greskaat an trouz-se.

**25-07-1916** - Diskuizh.

**26-07-1916** - Gouel Santez-Anna. Oferenn da vintin en ur chapelig krouizet e-talomp.

**27-07-1916** - Ar mintin-mañ eh aomp da anavout an tachad lec'h m'ema dle deomp monet henoazh. Monet a raomp hed-ha-hed get hent Cappy-Herbécourt betek an tachad lec'h ma oa gwezharall hent Dompierre da Frise, rak bremañ nend

eus mui anad ag an hent met e-pad 200 m. bennak e-kreiz an douaroù. A-hend-arall ema troc'het ha finfoñdet d'an trañcheoù ha d'an toulloù obus. Rac'h an douar amañ a zo bet bouljet meur a wezh, d'ar Jermaned kentañ, d'ar Frañsizion goude. Àr-lerc'h fard Frise eh oa ar Jermaned arre a-barzh ha bremañ ema ni. Ne c'heller krouiziñ netra : an douàr a ruskl a-benn. Donet a raomp du-mañ goude koan. An dud a stlej gete beb a votellig plouz bihan rak amañ nend eus netra d'en em lojiñ. En ur vouzellenn foñdet rac'h ema hon tud. Me 'ya-me en un un toull obus. Gronnet get ma felerin, ma lañjer ha me lien tant m'en em astenn àr an douar hag a gousk !... edan « bolz kaer an neñvou » !

**28-07-1916** - Kempenn a raomp hol lec'hioù. An ofiserion, o divrec'h kroazet, a sell doc'h ar soudarded é labourat evite... (Anvet eo Petit lieut.) Div dreujenn koad bountet en douar en daou benn ha ma lien tant àrnezh, setu man gwele dalc'het get brinsad. Lien tan arall a-dreist man gwele dalc'het get brinsad ha get orsal, setu an doenn hag ar vagoerioù. Nend eus ket a vaner, nag a gastell, nag a diig plouz amañ !...

**29-07-1916** - É! ma en deus tarzhet un tammig an tennoù a-dreist ma fenn an neizhour ema ret din kreñvaat un tammig ma zoenn. Just e-talon eh eus ur vouzellenn gozh. Un agent de liaison a za da sikour genin hag emberr em eus un toull lec'h nend on ket en abri doc'h an obusoù bras, met lec'h na zoujan ket re an askledoù houarn a zistag doc'h ar potarnoù. Bout a zo re maleürusoc'h evidon, sur a-walc'h. Hon tud a ya trema Biaches da gempenn lec'hioù evit ar c'hanonoù. Labourat a raont en ur winizheg ha ne gouezh ket re a houarnaj àrnezh. É tonet d'ar gêr neoazh e vez ret dezhe treuziñ an tan-harz a ra dre pep div wezh ar Jermaned ha neuze e vez divourrusoc'h dezhe.

**30-07-1916** - En em arañj a raomp bepred. Met poanuis

eo labourat. Tomm eo an amzer ken ne boazh en toulloù-mañ. Hag evaj nend eus ket. An dour a zo ret monet da glask da-dal ar Somme, 500 m. bennak ac'halemañ, ha c'hoazh me 'gred ne talv ket kalz a dra. Gwenn eo an dour, goust rad dezhoñ. Ret e vez en em walc'hiñ get ur c'hartad dour ! Un druezegezh, setu. É tonet ag al labour henoazh eh eus bleaset un den ag ar gompagnunezh en e vorzhed. Tressard, hag e oa bet gwallaozet get ur fuze e Foucaucourt. Eh oa é tonet ag ar c'hlañvdi.

**31-07-1916** - Tomm eo atav ken ema tomm a-walc'h. D'enderv-noz e vez bourrapl an amzer met ur vrumenn graet a voged an tennoù hag a vurezh an douàr a sav àr ar maezoù ha ne weler netra a vad. Doc'h tu Clery, Monacu en doa tarzhet dec'h. Hiziv e kouezh houarnaj en devalenn lec'h ma tremen an hent-houarn bihan a ya da Béronne. Araokaet hon eus eno, met start eo. Bemnoz e rudell an traoù tro-ha-tro deomp ha kouezh a ra meur a unan àr an tachadig lec'h mah omp. Hani neoazh n'en deus droug.

**1<sup>añ</sup> a viz Eost 1916** - A bep tu e kouezh obusoù. Doc'h tu Estrées beta Belloy ha doc'h tu Clery. Met ne weler ket piv a sko.

*Adjudant Rousseau - N°15 - Tombeau Cappy - Le Brazidec - 211 - id -*

**02-08-1916** - Àr-dro kreiznoz un obus a gouezh e-tal hon tud é labourat hag a lazh an adj. hag ar Brazideg. An adjudant a oa dle dezhoñ bout anvet eil-letenant ar prantad-mañ. Pell 'zo eh oa é c'hortoz kement-se rak beta bremañ, bepred eh oa bet lezet a-kostez. Gwir eo penaos ne oa duac'h 'met en e vicher a alc'hwezour.

**03-08-1916** - Labour paper get traoù an daou a re lazhed.

Bemnoz e sav kann bremañ etre ar Jermaned ha ni ha Breizhiz-Veur. E tachenn Monacu (Maulx nacu : mal nacquit) e vez start an traoù bepred. An neizhour, ar Jermaned doc'h serrnoz a daol ur barrad houarnaj àr hor re hag a dosta beta 4 m. d'o zrañcheoù. Kentizh, setu ar fuzeoù é krapin e'it goulenn get ar c'hanonoù-ni tenniñ hag e kouezh àr ar Jermaned seizh kwezh muioc'h e'it n'o deus tennet. An den a vehe techet da grediñ ne chom ket mui den bev goude kement a botarnoù ha neoazh, meur a wezh, ne vez hani marv !

Ar wezh-mañ neoazh goude m'en doa tennet hor re, al legion a zo amañ a sailhas er-maez ag o zoulloù hag a fardas àr ar Jermaned a oa neuze é tebriñ o c'hoan. Ne chomas ket kalz anezhe bev. 3 trañche gounidet !

**04-08-1916** - Monet a raomp da interrnamant Rousseau hag ar Brazideg. Hennañ a oa bet interret get an Ao. Moigneu, met Rousseau hag a oa bet badezet en iliz hugenaot ha graet a-barzh e gomunion, eh oa daet ur pasteur d'an interriñ, pe kentoc'h da lenn, e galleg, en ul levrig pedennoù, ur stregennad traoù n'o doa netra da sellet get eneañv ar marv. Ne vern, na bravet eo pedennoù an iliz katolik e-tal an traoù-se. Ret eo anzav neoazh eh oa dereat pedennoù lennerezh ar pasteur. Eñ a chomas e interrnamant ar Brazideg.

Goude an interrnamant e taomp d'hol lec'h é heuli ar c'hanal. Brav eo bet an tachadig-mañ gwezharall. Hed-ha-hed bremañ nend eus 'met kirri ha roñseed, kant ha kant a zo, muioc'h e'it er vrasañ foar a zo ; met nend eus ket kalz anezhe e stad vat. Fall vaget e vezont, fall gempennet, lojet er-maez.

Tri pe pevar chaland bras a zo àr ar c'hanal, Saozon enne. Diskouez a raont bout karget ag an dour hag ag ar c'horonkadur. Pelloc'h e komañser gwelet labour ar brezel. An Eclusier a zo dismantret rac'h. An iliz a chom an tour anezhi, met an tier a zo rac'h beb eil penn. Ar gwez a zo troc'het lod

a-rez get an douar, lod e-kreiz ; lod nend int ket distaget groñs. E meur a unan e chom c'hoazh plantet tammoù dir. E-leizh a zo marv, met neoazh al lod muiañ en deus pouset en-dro. Arru a raomp get an tachad hor boa kollet e miz C'hwevrer. Gwelet a raomp an orsal dreinek, an toulloù graet e kostez ar c'hanal e'it lakaat tud, boued pe obusoù. Ur veredig a zo e-tal ar skluz hag a zo lakaet beb eil penn. Ar c'hroazioù a zo brevet, ar bezioù toullet d'an obusoù. Kerzhit da ouiet piv a zo lakaet eno ! A-raok ur miz ac'halemañ ne vo ket mui anad a netra hag ar geot, an drein en devo goloet arre an douar-se kousiet da fallentez mab-den.

Àr ar c'hanal amañ eh eus kanonieroù ha martoloded àrnezhe a vev eürus el rouañne. Tud yaouank int ha ni tadoù a familh, martoloded gwezharall e-leizh ac'hanomp, ni a zo bountet d'ober ur vicher na anavomp tamm, en tachadoù dañjerusañ.

Koad Méréancourt a zo just e-talomp ; rac'h ema foñjellet, rac'h ema hachet ha nend eus ket neoazh 'met ur miz ema foñdet ha setu sapet pep bod, setu del glas e chouchoù ne chom mui staget doc'h an douar 'met ur wrizienn. Gwez diskaret mem a ra gwriziad nevez doc'h o c'hostez hag en em laka da vevañ el a pa ne vehent ket bet biskoazh en o sav.

**05-08-1916** - Mereau a zo bleaset en dorn hag en divhar met ne vo ket dañjerus. Bremañ eh a hon tud da labourat d'an deiz.

**06-08-1916** - Sul. Oferenn en un toull min. 4h.

**07-08-1916** - Ne zistan ket tamm an tarzhad. Bemnoz e rudell an traoù. Bemnoz e sailhomp àr ar Jermaned pe e sailhont àrnomp. Bemnoz e sailh obusoù, kartouchoù, pezhioù dezhe ; bemnoz e sailh deomp ni ivez. E-kreiz an

noz e vezoc'h dihunet en un taol da dennoù a bep seurt. C'hwi a sailh er-maez ha pell du-se en noz, er menezioù tu an hanternoz pe er blaenenn doc'h tu ar c'hreisteiz e welit teodoù tan é sevel, é redek a-gleiz hag a-zehou, é vervel, é vevin kreñvoc'h e'it biskoazh. Obusoù a sailh hag a darzh en aer ag an amzer, kartouchoù, fuzeoù, hag e tiskennont el glav tan... Brav eo gwelet an dra-se, met trist ivez a pa soñjer e vehe aes doc'h hon tu parraat doc'h dastumoù el hanni an hent krouiz a sailh teir gwezh doc'htu. Un hent-houarn bihan a za betek eno hag er flagenn, kempennet evit an dra-se, eh eus ur bern obusoù, grenadoù, tarzhaj a bep seurt, paket en hevelep tachad, touch an eil doc'h egile. Labour pemzektez e'it pemp pe c'hwezek uzin a zo eno ha gwenn erbet e'it parraat doc'hte a vout gwelet. Ha neoazh doc'h kostezioù a dostenn Koad-ar-Werc'hez e vehe aes krouiziñ un tammig an douar, gober pennoù bouzellenn ha lakaat eno rac'h an traoù-se dispartiet get ar speurennoù douar e vehe etreze. El-se a pa sailhahe un toullad, ar re 'rall a-wel ne sailhahent ket. Met pell e vo ret deomp gober brezel c'hoazh a-raok ma tay deomp kompren e tleomp armerzh.

**08/09/10-08-1916** - Goulenn a raer paper muioc'h e'it bihanoc'h : tadoù a 4 a vugale, intañved, tadoù a 3, re ar c'hlas 90 ha koshoc'h, tud e'it monet da vout boser pe mecanicien, re da vout propozet e'it ar groaz. Rac'h an traoù-se d'ober er vouzellenn ar div blankenn get en heuenn pe ar glav e kouezh arnoc'h !

**10** - Hiziv ema dezignet an Ao. Moigneu da vonet d'ar C. H. R. da vout sergent-infirmier hag alezonour. Ret eo bet d'an Ao. Kerzerho monet kuit e'it ma zo daet soñj da lakaat an Ao. Moigneu el lec'h a zae dezhoñ. Ur c'holl eo e'it ar gompagnunezh rak karet e oa hag an dud en doa fiziañs

ennoñ, en dañjer.

Glav a zo daet. A pa ne rahe ket kalz a rahe vad e'it an heuenn, met re a vehe fall peogwir e komzer arre a fardiñ àr ar Jerm. an deizioù-mañ.

**11/12/13/14/15/16/17/18-08-1916** - Nend eus ket kalz a dra a vad. Hon tud a zalc'h da vonet da labourat d'an noz ha dre bep div wezh e kouezh ur potarn bennak àrnezhe. Boneur o deus neoazh chom hep droug al liesañ.

E-pad an deizioù-mañ e tarzh an traoù muioc'h e'it biskoazh doc'h tu Belloy-en-Santerre ha doc'h an tu 'rall etre Maurepas ha Clery. An tachad-mañ a welan ervat ag un trañche a zo izeloc'h evidon, trema Frise. Bout a zo predoù ne weler mui netra get ar maged. Ar flagenn a zo leun ha ne spier 'met ar maged du pe al luc'hedenn e-kreiz ar mor a voged-se a pa gouezh ur potarn bennak.

Den erbet ne fich doc'h tu erbet. Hañval e vehe nend eus met pezhioù kanon, mekanikoù é vrezelat. Burzhud eo ma c'hell ar Jermaned harz edan un dennerezh seurt-se. Doc'h tu ar Saozon ema c'hoazh gwazh. Ni a zehan-ni meur a wezh ; eno noz-ha-deiz e kouezh, ha muioc'h d'an noz e'it d'an deiz. Ur spont.

Komz a raer ivez ag hon diblas an deizioù-mañ e'it monet da ziskuizh a-dreñv. Hiraezh en deus al lod muiañ d'achap kuit ag an ifern-mañ. Torret eo penn pep unan get an drouz. Ho kalon horoset hep arsav a ra droug deoc'h 'benn ar fin hag a p'arru an noz ho pez hiraezh da fardiñ en ho loj e'it ankouaat an trouz er c'housed. Rak ma chomit dihun ema c'hoazh gwazh : an douar a zoug an trouz, a vrasa ar safar, ha neuze kenavo d'ar peoc'h !

An 8<sup>o</sup> C<sup>al</sup> en em glemmer anezhoñ. Pennoù avelet en deus nac'het a vonet da gemer o lec'h e sigur o doa dober a ziskuizh. Aet int mem àr-dreñv ag o fenn o-unan. Ret eo bet o digas en-



dro, an archerion àr o lerc'h... En trañcheoù emaint c'hoazh gouarnet get an archerion. Nend eo ket ar c'hours neoazh d'ober traoù seurt-se bremañ a pa gerzh ken mat an traoù e kement talbenn a zo.

Hiziv 18 eh eus kouezhet un obus just e-tal ma loj : un dek paz bennak. Mall e oa dezhoñ arrest !...

Genomp eh eus ur serjant (Ar Bagousse) a Henbont hag a ziskouez peseurt labour fall en deus graet ar voutinerion e spered Breizhiz dizesk. An den-mañ en deus, èl e-leizh, kuitaet ar vro e'it monet da vaez-vro da glask an eürusted. Èl al lod muiañ, kavet en deus e pep lec'h labour e walc'h ha bihan a eürusteud. Ar pezh en deus kavet re neoazh a zo tud dihentet hag en deus troet e spered kement ma ne c'hell ket mui diforc'h ar gwir doc'h ar gaou, deuto dezhoñ bout speredek. Chomet eo hep dimeziñ rak ma ne gave ket en doa re evitoñ e-unan, hag a hendarall rak ma krede e tle an dud bihanaat e Frañs e'it ma vehe bet eürusoc'h ar re 'rall àr-lerc'h. Atav ne gompren ket perak eh eus tud àr an douar hag a soñj e vehe gwell lezel ar rum tud monet da goll é parraat a gavout bugale. Ar vuhez evitoñ ne dalv ket ar boan bout bevet hag ar re a zo daet àr an douar a zle kaout er bed-mañ an holl plijadur, èl rezon. Ar vuhez-mañ evitoñ a zo ur « penn » ha pas un « hent » e'it arru get ar « penn » a zo ar bed arall... Ur bourd eo er c'hlevet é tifenn e soñjezonnoù...

**18-08-1916** - Nend eus ket bet c'hoazh biskoazh kement a vec'h èl hiziv doc'h tu Maurepas. A-c'houde ar mintin-mañ nend eus dehan erbet.

**19-08-1916** - Ar Jermaned en doa fardet dec'h 5 kwezh àr an tachadoù lamet gete ha pemp kwezh e oa bet ret dezhe tenniñ àr-dreñv. Nag a dud dezhe a oa c'hoazh kouezhet get ar feson o deus da vrezelat, stardet an eil doc'h egile.

**20-08-1916** - Henoazh e oan kousket a pah arruas ar

gemenn e vehemp bet aet kuit an deiz àr-lerc'h vintin da 3 eur 1/2. Just a-walc'h eh oa aet lod ag hon tud da labourat. Ret e oa bet kas an doere dezhe da zonet d'ar gêr. Met setu, a pah arruas an doere gete e oa diwezhat, siwazh ! Daou obus kouezhet àrnezhe a lazhas Mevel hag a wallaozas 3 arall. 'Benn 11 eur pe hanternoz e oant daet en-dro get ar geizh tud, souezhet ne oa ket bet lazhet muioc'h anezhe. An noz a-bezh a oa bet paseet el-se ec'h ober ar sec'hier, doc'h en em soursi ag ar re bleset... ha monet kuit da 3 eur 1/2 beta Froissy !...

**21-08-1916** - Ar mintin-mañ eh as Conan, Huet hag un nebeud tud da rentiñ ar benveger na oa ket bet gallet rentiñ dec'h da goubanwel peogwir eh oant aet get an dud da labourat. 3 eur ha 1/4 e oa a pa oant er Caponnière. Just neuze setu un obus fuzant ec'h arru hag a laka da sailh an dépôt peudr a oa en hent 1512. Proyau, Houarner, Jacob, Burban, Gaston a dapas tammoù houarn en o c'horf... Brav a « adsav » !

Ha rac'h an traoù-se ne vehent ket arru a pa vehe bet kaset deomp un eur abretoc'h an doere eh aemp da vout savet. An dud ne vehent ket aet d'al labour, ar benveger a vehe bet rentet d'an noz ha den n'en dezhe bet droug. Met bepred ema ur seurt er vicher-mañ...

Àr-dro 3 eur 1/2 eh aomp kuit èlkent. Kavet a raomp tankirri àr an hent hag e c'heller lakaat ar re gwallaozet enne evit monet beta Cappy. Heuli a raomp ar c'hanal penn-da-benn. Ret eo anzav ema bravik an tachad-mañ, re blat un tammig neoazh ha re fangek.

Hed-ha-hed d'ar c'hanal eh eus soudarded, kobanoù, roñseed, bagoù leun a zour, a vein, a bep seurt traoù e'it an arme. Lod anezhe a zo martoloded a Frañs enne, lod arall Breizhiz-Veur.

Àr bont Froissy eh eus lakaet ul linenn hent-houarn da bas pe kentoc'h teir linenn rak àr ar mem linenn eh eus railhoù

e'it an tren bras ha daou seurt tren bihan. Rac'h al labour-se a zo graet a-c'houde ar fard bras. Arru a raomp get ar c'hamp 4. Àr c'hlann ar c'hanal ema, en ur prad izel ha mouest. Eno ema ret en em lojiñ edan un tant àr un dornad plouz... Debret omp d'ar c'helion.

D'enderv-noz eh eus ur vandenn re vezv dija. Nend int ket bet pell ec'h ober o zraoù.

Ofiserion a zo arru deomp ivez. Fauchoux, un eil-letenant a gostez Ancenis, a zo roet deomp-ni. Nend eo ket bet c'hoazh er brezel. Ne anav ket netra a vuhez ur brezelour. A-dal ma kompreno nend eo ket er gazarn eh omp !

**22-08-1916** - Fall nozvezh, start eo ar gwele. Trouz a zo... Soudarded é monet kuit, re ec'h arru rak relève a zo evite.

**23-08-1916** - Bout a zo amañ tud ag en 2° Colonial. E-leizh anezhe a Vro-Gwened. Gwelet a ran tudjentil belean ivez hag a zo amañ en ambulance e Proyard. An Ao. Gentil a za d'am gwelet d'ar 24 d'an noz get an Ao. Coguic. Komz a raomp ag ar vro. Chom a raomp pell azezet àr ar geot lec'h ma tebromp da ziviz a gement tra ; ha d'an noz c'hoazh àr dostenn Froissy, dirak ar fuzeoù a sav a bep tu ha luc'hedennoù an tennoù kanon, e komzomp ag ar c'hornad lec'h ma vevomp, ag an dud a zo du-se doc'h hor gortoz ha ne welimp ket marse biken mui...

**25-08-1916** - Ar mintin-mañ, da 5 eur, ema an dihun. Monet a raomp get an E -M. a-raok ar gompagnunezh evit en em soursi a lojiñ an dud. Dre Villers-Bretonneux e tremenomp hag en ur arru e-tal ar gêrig-mañ e lârer deomp hon eus 3 eur da c'hortoz ! Arrest a raomp en ur park e-kreiz ar blezad troc'het a-nevez 'zo ha lakaet a gouchoù. Un hun a raomp a ra vad deomp rak, daousto nend eo ket bet hir an hent (16

kil.), pouk e oa an amzer ha heuenn a oa àr an hent. Hent Villers-Bretonneux a vez bepred karget a girri-roñseed hag a dankirri. Brizh-gwenn eo ar gwez, ar girzhier, ar blezad a bep tu d'an hent.

Àr-dro 5 eur bennak eh aomp d'ar gar ha da 6 eur eh aomp àr-raok. 70 kil. a zo d'ober. Arrest a raer bep kardeur àr an hent e'it lezel trenioù arall da bas. Gwelet a raomp èl-se un tren leun a soudarded Breizh-Veur gwisket ha kempennet, ur vin joaüs dezhe. Tud kreñv, e-kreiz o ampertiz. E gwirionez truek omp e-talte. Gwir eo e taomp-ni a veg ar bleiz hag emaint-int é monet dezhoñ.

**26-08-1916** - Goude en devout arrestet èl-se meur a wezh eh arruomp da 3 eur da vintin e gar La-Rue-St-Pierre. N'hon eus ket graet 2 lev bep eur !! Ag ar gar-mañ eh aomp trema Clermont, dre ur c'hoad teñvel-teñvel ken ne weler ket penn ar fri... Nend eus nemet un tammig ag an oabr a weler èl un hent doc'h begoù ar gwez uhel. Ret eo alum al lamproù elektrik e'it parraat a vonet àr gein ar re zo diragoc'h. Un diskuizh dre bep div wezh hag eh arruomp d'an diaz a gêr Clermont. Bravik eo ar vro doc'h tor ur manneig, an tier kuzhet al lod muiañ anezhe e-kreiz ar glazadur. Tremen a raomp dre Fitz-James ha get un hent a ya dre ur vro leun a vodoù, a goadigoù, a barkoù druz, an eost enne, troc'het. An dud a ziskouez bout amiaapl er vro-mañ. Komz a raer doc'homp, hon degemer a raer hep jourdoul, met ivez hep selloù du. Arru a raomp e Erquery, lec'h ma tleomp arrest, àr-dro 8 eur 1/2 bennak. Lakaat a raer peb unan en e lec'h ha gellout a raer lojiñ rac'h an dud. Plouz nend eus ket ur bern ha c'hoazh ema lous. Soudarded du a zo bet amañ an deizioù tremenet ha laouek e oant ! En ti skol eh aomp ha degemer karadek a raer ac'hanomp. Ar vestrez skol hag he bugale a zo amiaapl tre. Er burev butum, tavarn, épicerie, merserezh ha me 'oui-me petra rac'h e kavomp da

zebriñ hag ur pred c'hwek a raomp. Plijadur hon eus é tebriñ e asietoù, doc'h un daol, get ur servietenn, ur werenn ! Legestr, uioù, piz rom, bara fresk...

Ofiserion nevez a zo arru deomp c'hoazh. Ag an dépôt e taont. Merenniñ a raomp doc'h an hevelep taol. N'o gweler ket ec'h arru get plijadur rak al lod muiañ anezhe a gemer lec'h serjanted hag adj. a oa lakaet e'it pas eil-letenant. A-c'houde un herrad zo e raer an dra-se. Ar re a zo amañ àr dalbenn ar brezel a-c'houde 2 vlez e wel èl-se re ha nend int ket bet biskoazh é kemer o lec'h...

Ur c'holonel nevez a zo arru, Langlait e anv, ur c'hozh « paperour ». Ur chef de Bataillon ivez, allas !

Paper a arru doc'htu àrnomp ha da 9 eur da noz eh omp c'hoazh é krabisat... Repoz hon eus dober met ne vo ket c'hoazh, rak pa oan é tonet a di an ofiserion e welan an tan er porzh lec'h m'ema ar gentañ section. Jan, mezv, en deus bountet an tan get ur c'houlouenn er plouz en ur c'hie. Emberr eh eus laosket daou giel hag ur c'hraou. Diaes eo arrest an tan rak dour nend eus ket tost. Ar puñsioù dre-mañ en deus 20 pe 30 m. a zonded hag er poull a zo e-kreiz kêr, izeloc'h e'it ar porzh-mañ, nend eus ket kalz a zour. Seilhoù a vank. Donet a raer da benn neoazh ag el lazhiñ.

**27-08-1916** - Sul. Allas ! pas evidomp-ni. Nag a baperioù ! Nag a soursi get amoedaj, get traoù dibenn.

Kant tro ha chakerezh a glasker d'an dud. N'o lezer ket da ziskuizh na d'en em gempenn, na da walc'hiñ o dilhad... Komañs a raer en devout keuz d'an trañche...

**28-08-1916** - Nag ur pavad ! Fil-de-Fer, ar foll a oa kapiten àr ar bataillon, a za da vout kapiten ar gompagnunezh !... Kenavo ar vuhez didrouz, kenavo ar peoc'h, ... Get ur foll ne vo namet follezh.

**29/30-08-1916** - Ekselsis, kerzhadennoù, ... Setu buhez

ar gazarn é komañs, met hep aezamant ar gazarn. Buhez ar gazarn get ofiserion paper, kouezhet a revr ar c'harr a pa oer é charreat ar re truhezekañ. Tud anvet en un taol, ha n'o deus graet netra evit en em zeskiñ, tud ha n'o deus biskoazh bet re 'rall da gemenniñ, pe neuze tudjentilged e karg. Kozh dihaolaj a weler àr o fas, en o c'herzhed, en o farlant merk ar yev ha merk an diouiziegezh...

Amzer truek a ra, barradoù glav, arneñv, grizilh, avel. Miz Meurzh ne vez ket diharakoc'h... Ar blezad a zo atav a-blad er parkoù.

**31-08-1916** - Goulenn a raer genomp kement a baperioù pe muioc'h e'it en *active*. Ur vezh !... Hag ar blezad a chom àr ar seulegi, hep bout serret mank a dud. Pev ar den e pep kompagnunezh a roer d'ur vaouez ag ur barrez, 1 lev ac'halemañ...

**1<sup>añ</sup> a Wenholon 1916** - Netra met amodedaj, sotoni...

**02/03/04-09-1916** - Paperioù atav. Ha get ar foll a zo da benn ar gompagnunezh ema bourrus labourat !...

Ur meni aotrou e karg ag an arganti eo, paotr yaouank kozh, arajet a-enep d'ar famill ha Breizhiz, evour gwin-ardant, diskientet pemp pe c'hwec'h kwezh en deiz. Nend eus 'met e soñjennoù hag a dalv, ne selaou ket doc'h re ar re 'rall. Nend eus 'met e feson da labourat hag a zo mat ha sklaer, ne sell ket doc'h feson ar re 'rall hag a-benn e lâr ema fall. Rust, taer, fall zesavet, leun a zisfizians e keñver an holl, met leun a fizians ennoñ e-unan, setu an aotrou. Daet eo da vout ofisour er réserve, hag e kred bremañ bout ar gouiziekañ a zo edan « sklaerder al loar ! « ... Ne c'heller kavout penn vat erbet dezhoñ. Den n'hell en andur, nag ar soudarded nag an ofiserion arall, ha ne c'hell ket kaout ur c'hile evit komz

getoñ. Bemdez e klask trouz doc'h unan bennak hag a pa nend eus hani da dabutal getoñ e komz doc'htoñ e-unan, èl ur foll, en ur ober pikol pazoù, en ur astenn e zivrec'h pell a-zoc'htoñ. Ne fehe bout kaout den erbet hañvaloc'h doc'h Don Kichot ; a-fet ar c'horf rak, a du ar spered, en doa sur muioc'h evitoñ...

**06/07-09-1916** - Ur soudard a laka ur pétard fulminate da sailh doc'h er rac'hiñ get e gontell hag a zistag èl-se tri biz ag e zorn kleiz, a fond e fas hag e zorn dehoù. Nag ur jilori !

A-benn e vount 8 teiz prizon get kaporal an den-se hag e esea parraat doc'h ar serjant a zebriñ er popote, ha neoazh anat eo n'o deus perzh erbet er maleur-se ha ne anavont netra ag ar pezh a zo degouezhet. Trouz neuze. Ar c'holonel a ra dezhoñ sevel e bunision ha kentizh e lam ur c'hartad gwin get tud an teir eskoued a oa get Michaud. Arajet eo é klask kastiziñ unan bennak : aze ema e blijadur.

**08/09-09-1916** - A-dro-dorn e lâromp da Basard ha Vigneau en em glem ag ar pezh en deus graet dezhe. Ne ouian ket penaos e yay an traoù...

Atav e talc'her da lakaat hon tud d'ober amodedaj e-pad ma vreïn an ed er parkoù. Gwir eo nend eo ket bourrus sikour get lod a dud er vro-mañ. 4 den hon eus prestet d'un Intron a zalc'h un dachenn a 40 hect. Kousket int àr ar plouz en ur c'hraou deñved. Da vintin n'o deus e'it o lein 'met un tamm bara sec'h ha sistr treñk. Da greisteiz ema un tammig gwell met lakaet e vezont da zebriñ en un tachad ken lous ha ken leun a gelion ma ne c'heller ket debriñ get goust ennoñ. An Intron a zebr a-kostez get he bugale hag he matezh, ha boued dishañval èl rezon.... Hi a ya get he c'harr da welet ar soudarded a labour eviti ha dalbezh ema é kas dezhe... E-men ema tachennoù didrouz hor bro ? E-men ema amiapted

karantezus perc'henned ha peizanted Breizh ?...

Amañ ivez e raer sistr get dour glav daet ag ar «mares». Neoazh gober a raer ivez sistr hep dour ha hennen, gwan èl ar sistr bihan genomp, a zo c'hwek. Un tammig èl gillevig, met gwanoc'h.

**10/11/12-09-1916** - Netra a nevez met paper.

**13-09-1916** - Cheñchamant arre e-mesk hon tud yaouankañ. O lakaat a raer da bas er C'holoniale e-lec'h re koshoc'h evite en deus goulennet donet en Territoriale. 5 ag ar gompagnunezh a ya kuit. Ar re-mañ ne vo ket marse falloc'h o zraoù, met re an active a vo sur a-walc'h maleürusoc'h genomp-ni. Du-se e oant é kondu pe ec'h ober ar gegin. Amañ e vint lakaet get ar re 'rall. Ar miz paseet, unan daet èl-se a oa finfoñdet e c'hlin get un tamm potarn hag e chomo mac'hagnet a-dra-sur beta fin e vuhez.

Iliz Erquery nend eo ket vil evit un tachadig ker bihan. Ag ar 17<sup>vet</sup> kantved ema. Trestier a zo enni kizellet ar pennoù anezhe.

**14-09-1916** - Ar charretour a ya da Clermont da breniñ fromaj-kig ; ar gwerzhour a fari hag a c'houlenn an hanter ag ar pezh a za dezhoñ hepken ; ar c'hapiten ne venn ket rentiñ 28 fr. ma ne vint ket goulennet getoñ : hag an den-se evit ur blank a ra evit mil lur a safar hag a ardoù...

**15-09-1916** - Kas a raer 1 serjant, 1 c'hap. ha tud da vale dre ar parkoù e'it parraat a jiboesat hag ar vro a zo brein get ar jiber.

**16-09-1916** - An doereoù a zo gwell. Neoazh nend eo ket arru c'hoazh an distag.

**17-09-1916** - Bemdez bremañ eh a gwell an traoù get



ar c'hann. Hor soudarded a chom ar meud gete. Ret e vo d'ar Jermaned derc'hel mat ma ne vennont ket gwelet hor soudarded é tremen en tu 'rall da Béronne ha marse pelloc'h.

**18/19-09-1916** - An amzer en deus freskaet ha glav a zo daet. Difonoc'h e vo al labour du-se àr an talbenn met ivez didrousoc'h eo hon tud. N'o c'haser ket a-wel d'ober an amoed en douaroùier. Dre voneur ar Chef de Bataillon a zo un den ag a gompren : eñ a c'houlenn get an dud an nebeutan ma c'hell. Neoazh ret eo dezhoñ gober un draig bennak e'it ne arruo ket bec'h àrnezhoñ ivez.

**20-09-1916** - Arc'hoazh eh eus ur « *manoeuvre de Brigade* ». Ar 88° a zle bout « *en réserve* ». Rac'h an dud a bed Doue ma ray glav arc'hoazh vintin met nend eus ket rezi. Arc'hoazh eh a ar Foll perm.

**21-09-1916** - Da 11 eur 'met 1/4 e tleomp kuitaat Erquery evit monet div lev bennak a-vamañ izeloc'h e'it koad an Trois-Etats. Monet a raomp ar hor goarigoù en ur gomz, en ul lenn. Treuziñ a raomp div vourc'hig savet get pri ha plouz e-kreiz ar glazadur (St-Albin ha Cernoy) hag eh aomp a-dreuz an douaroù, diàr ar melchon, al luzern hag an douar fresk troet, d'en em astenn en ur devalennnig, e-kreiz an avel. Beta 3 eur e chomomp eno da c'hortoz ma vo kaset kemenn deomp da zilec'hiñ. Kêr Lieuvillers a zo sañset da gemer. Met ne welomp netra : ema du-se, en tu 'rall d'ar c'hoad, ul lev bennak a-zoc'homp. Tostaat a raomp d'ar c'hoad, àr vord an hent-bras, da c'hortoz ma vo lâret deomp petra gober, met netra ne za. 'Benn ar fin eh aomp dre korn ar c'hoad Trois-Etats da welet ma nend eus ket dober ac'hanomp. Treuziñ a raomp kêrig Trois-Etats lec'h mah eus ur chapelig savet get brik ha mein-gwenn. Ul lodenn anezhi a zo giz keltiek hag en nor-dal

Renaissance, met ne ziskouez ket eh a gwall lies tud ar vro da bediñ dezhi. Hir eo atav ar geot doc'h an nor-dal ha tro-ha-tro d'an iliz. 300 m. bennak doc'h ar gêrig vihan-se e kavomp an eil batailhon. Emain ivez é c'hortoz ! Treuziñ a raomp ur souleg a zo c'hoazh a-barzh feskad du-pod get ar glav hag ar greun é kelidiñ en toc'had. Arrest a raomp ha kentizh eh arru an ofisour a gas an doere ema achu ar manoeuvre ! hag e c'hellomp distroïñ. Ema 4 eur ha 1/4. A-dreuz dre an douar labour, ken blot get ar glavaj, eh aomp da dapout Rémécourt, ha doc'h goubanwel-noz eh arruomp e Erquery, brevet, skuizh-breïn, graet deomp 6 lev bennak hep debriñ a-c'houde 9 eur da vintin. Beta bremañ ne ouien ket petra oa « manoeuvre de Brigade » met bremañ e komprennan. (Just hor boa gwelet ur gompagnunezh mitrailleuses ag an active. Soudarded arall n'hor boa ket gwelet.)

**21-09-1916** - Amzer hañv. Diskuizh a raer.

**22/23/24/25/26/27/28-09-1916** - Diskuizh e gwirionez e-pad permission ar Foll.

**29/30-09-1916** - Amzer hañv. Toraj penn get ar Foll.

**1<sup>añ</sup> a viz Heneoal/02-1916** - Netra a vad.

**03-10-1916** - Un diskouezadenn traoù graet d'ar soudarded a zo e Compiègne. Evit monet ema ret reiñ an anv ha bout merket àr ur roll get ho sklas, ho niverenn soudard, lesanv, dergei, etc. Un adjudant o c'honduo betak ar gar, a gemero o billetennoù evite hag o c'honduo c'hoazh goude !... Ar re a roa o anvioù, ken 'met 2 pe 3, a venn monet da Gompiegne nepas e'it gwelet an diskouezadenn, met e'it kavet an tu da achap ha da dremen o devezh en tavarbioù ! Gwir eo ne fehe ket bout

graet gwell degemer d'ur ped ha ne laosk get an hanni pedet tamm liberte da sellet el ma kar, da vale el ma kar... O, spered soudardek ! Na kaeret labour a rit e pennoù tud ha n'o deus biskoazh gouiet petra eo bout digabestr !

**04-10-1916** - Bemdez e vez trouz etre ar Foll hag unan bennak ac'hanomp. Disfiz a ra doc'h an holl ha ne c'hell gwelet 'met ar pezh a zo graet reve e alioù. Ne gompren ket mod labour ar re 'rall ha ne selaou ket doc'h ar pezh a lârit dezhoñ evit el lakaat da gompren. Bepred taer ha rok, hep deskamant beviñ erbet, setu an c'hwil.

**05-10-1916** - Ar Jermaned a zo bet 5 pe 6 deiz er c'hornad-mañ. Dereat e oant bet. Neoazh en un ti o doa lakaet ul leue er gwele ha lakaet liñselioù àrnezhhoñ !...

**06/07/08/09/10/11/12-10-1916** - Didrouz eo an traoù genomp. Reishaat a ra d'hon amloed. Ne gomz ket mui ken rok doc'homp. Ne ouian ket forzh-kaer petra a zo degouezhet, neoazh goût a ran ema bet ar c'haporal Passard é kavet ar c'homand. goude bout bet hujaotet get Marat. Ar c'homand. en deus goulennet ma vehe bet cheñchet ar c'haporal a gompagnunezh get aon ne vehe daet ar c'hapiten da glask kapailh doc'htoñ c'hoazh hag e lârer n'en deus ket vennet ar c'holonel a gement-se. Lâret en deus : « Hama, bountit ar c'hapiten a-barzh ! M'en deus-eñ meritet ! »... Moarvat en deus ar c'homand. belzet an « Orsalenn » ha lâret dezhoñ chom didrousoc'h...

Dec'h d'enderv hag e-pad an noz en deus tarzhet ar c'hanon biskoazh muioc'h doc'h tu ar Som. Ne oa ket dehan erbet dezhoñ.

Hiziv e taer da doriñ hor penn arre get ar vaccinat. a-enep d'an tifoid. Eh aer da bikiñ c'hoazh rac'h ar rejimant. Met ul

labour hag a zleae bout graet get evezh bras, get ur medisinour gourdon, a zo graet get ur paour-kaezh Doktor. Dija eh eus marv 1 pe 2 zen goude bout piket àrlene, mank a vout sellet pervezh. Ret eo bout engortoz ar wezh-mañ a welet c'hoazh ur yoc'h re klañv ha marse gwazh.

Komz a raer bemdez a vonet kuit, met bemdez e kaser ar valeadenn diwezhatoc'h. Emberr neoazh e yaimp sur àr-raok.

**12-10-1916** - En noz eh arru ar gemenn da zilec'hiñ !

**13-10-1916** - Da 8 eur 1/2 eh a ar gompagnunezh kuit. Ni 'ya-ni get ar c'hampemant a-raok. Da Terdonne eh aomp da glask hol lec'h, ur gêrig dister kent arru get Beauvais. Ar Foll a zo genomp ha gober a ra ar c'hamp. èl ma ra pep tra. Gwir eo e labour 'gozik rac'h an ofiserion er mem mod. D'an ti-a-gêr eh aont ; eno e c'houlennont anv ar re a c'hell kemer tud. Int a c'hortoz ar fourriered hag a p'arruomp hor bez neuze da glask an tier-se. Lies mat d'ar c'hours-mañ ag ar blez ema serret blezad ha boued loened. En tier merket e'it kemer 200 den e vez lec'h da 20 enne, ha c'hoazh fall lojet. Furoc'h e vehe a-dra-sur kas àr-un-dro get un ofisour, pe mem e-unan, ur fourrier àr ur marc'h-houarn hag a yahe da sellet doc'h pep ti, a verchahe pegement a dud a c'hell kemer hag èl-se a p'arrahe an dud, n'o dehe 'met en em deurel àr o flouz. « Ur règlement » graet en amzer a beoc'h hag a zo rac'h an dud sujet dezhoñ a servij dalbezh ha hani n'en deus an hardizhted da sailh a-dreistoñ ha d'ober traoù ur penn bennak dezhe. Fall lojet eo hon tud, met e'it un nozvezh hepken eh omp amañ.

Arru a ra ar rejimant doc'h an noz. Ni 'gav-ni, Gauf. ha me, un toull goulle e-tal an nor er c'hrañj ; àr un nebeud foen eh omp. Diaes eo kousket rak kouezh a ra loenigoù-foen àrnomp hag ema ret deomp kuzhet hor pennoù e'it gellout kousket

a-feson. Ar c'hapiten hag al lieut. a zo kousket er gwele met an daou eil-letenant a zo àr ar plouz e gwele ur vaouez mezvez !

**14-10-1916** - Da 5 eur 1/2 eh aer àr-raok get al letenant. Treuziñ a raomp kêr Dovez a-zehou. Nend eo ket c'hoazh savet rac'h an dud. Ur grennblac'hig bennak, moan èl ur vazh melen, hanter gwisket, a gaver é monet d'ul labourdi bennak. Kavet a raomp div pe teir bandenn èl-se.

Dre N -D -du-Thil eh aomp hag e kavomp soudarded arall, artilheri ar C. A. C. é tiblas. Rac'h ar C. A. a ya d'en em dolpiñ d'ar mem kornad. Gober a raomp 26 pe 27 kil. en devezh. Skuizh omp ken n'hellomp mui a p'arruomp e Rothois, ur gêrig didrouz. Amañ ema aesoc'h gober ar c'hanton. Frankiz a zo. Kavet a raomp gweleoù e'it rac'h an ofiserion ha Conan ha me a c'hell ivez kousket en ur gwele. Daou zeiz e chomomp eno. Hor burev a zo e ti ur Belj, Van de Caveye. Ne ouiont ket kalz a c'halleg anezhe met hon degemer a raont mat. Debrñ a raomp en o zi d'an noz. Ur verc'hig dek vlez a servij da vout etrekomzerez. Goût a ra flamañkeg ha galleg... Kousket a raomp en un ti lec'h mah eus un dachenn feurmet da beizanted na vennont ket paeiñ o feurm, daousto dezhe gounit argant, a-gaoz d'ar moratorium. Hag ar berc'hennez a chom digor he beg geti da c'hortoz hec'h argant.

**15-10-1916** - Mem tachad. Oferenn en ilizig. Komandant komun.

**16-10-1916** - 6 eur : kuit. 21 kil. c'hoazh. Trema ar Seine-Inf. eh aomp, e Romescamps. Kerzhet a raomp èl tud foll, biskoazh ken fonnapl. Ar vro a cheñch un tammig. Gwez a zo, radenn, lann. Kavet a raomp arre soudarded é tiblas, en o mesk tud du a gan bepred ar mem ton hep komzoù !... en ur ziskouez un teod brizh du ha dent gwenn-kann. Farsal a raont

en ur bas e-talomp.

Ar gomp. a arru da 3 eur 1/2. Lojet eo gwell an dud. Kêr a zo hir, un hanter lev atav hep tamm ledanded. Toulloù dour bras èl e pep kêr, toulloù dour sistr !... Mistr eo kêr àr ar ru, met lous a-dreñv an ti.

**17-10-1916** - Repozet en deus an dud un tammig. Vizia e'it ar vaksin.

**18-10-1916** - Glav, glav ! Yenaet en deus an amzer ivez ur yoc'h. Tud ar vro-mañ nend int ket jalet-bras da welet soudarded. Breizhiz-Veur a zo amañ, tankirrierion, soudarded e karg. Ur gar a zo ivez e'it Breizhiz-Veur. Da lâret eo ema leun ar vourc'hig a soudarded pe ofiserion saozon a bae o gweleoù hag a bren kir pep tra. Neoazh kavet a raomp ur marchaosi nend eo ket re zigor d'an avel lec'h ma c'hellomp kousket àr ar plouz.

Ar vestrez ag an ti, bobion un tammig, digor èl un don, a ra degemer mat ac'hanomp. Met kentoc'h ema diaes bout geti rak bepred e komz a bouez he fenn. Dalbezh e red ag un tu d'an tu 'rall. He boulom, un den hag en deus graet ar brezel 1870, a zo bouzar èl ur pod, ha gwell-a-se evitoñ rak èl-se ne glev ket rac'h en amoedaj a lâr e hanter menaj. (Dehodencq a raer anezhe.)

Tachenn a zalc'hont hag èl-se o deus frankiz, met pep tra a zo dilaosket, pep tra a zo e revin hag al lusteri a sour en ti èl er porzh. Diskouez a ra deomp ur C'hrist get nakr a-barzh daet ag ar broioù estren, ur c'hlezeñv a zo ar c'houhin anezhoñ hag an dorn graet get olifant kizellet brav. Ar boufam a zo hec'h albac'henn kemer anvioù ar soudarded a za d'he zi. Bout he deus ur c'haier a zaou vlank a zo 'gozig leun a chomlec'hioù hag a frazennoù skrivet d'ar soudarded.

An dachenn a zo touch doc'h an iliz savet er 17<sup>vet</sup> kantvlezañ.

Nend eus 'met un delwenn pe div a dalv ar boan a-barzh hag ivez ar c'hlec'hier en deus ur son ag ar bravañ.

**19-10-1916** - Hiziv e vaksiner 80 bennak ag ar gompagnunezh a-enep d'an derzhienn tifoid. Ar re a zo ret dezhe pas n'o deus ket kalz a jourdoul, rak, el bepred, graet eo al labour-se hep penn na lost. Ar re a lâr o deus bet an tifoid pe ar muqueuse, pe ur c'hleñved bennak a-enep d'ar vaksin na biker ker. Ar re 'rall a biker. Hag e tleer gouarn an dud kloz, tomm, ha reiñ dezhe evajoù tomm !!!

**20-10-1916** - Bravoc'h eo an amzer met yen eo. Klañv eo 'gozik rac'h ar re a zo bet piket.

**21-10-1916** - Skorn ! Yen eo bet e-pad an noz. Ar mintin-mañ e oa kleret rac'h an toulloù dour... Hag atav e krog ar c'helion !...

**22-10-1916** - Skorn arre ! Met ne bado ket pell ar skorn. Bemdez e pas tud amañ é monet d'an talbenn pe é tonet da ziskuizh.

**23-10-1916** - Glav. Dousaet en deus an amzer ur yoc'h.

**24/25/26/27/28-10-1916** - Bemdez glav. Leun eo an douar a zour. N'heller ket gober ekselsis hag an dud a zo eürus bout lezet disever un herrad.

Aet eo an noterion e'it 7 deiz d'ar gêr e sigur alijiñ an dud da reiñ o argant d'an amprest. Souezhet e vehen mard ay hani anezhe da redek e'it kement-se e-pad an eizhteiz-se.

An enderv-mañ eh eus arru ur soudard daet ag ar c'hlañvdi àr-lerc'h kleñved. Degouezhet eo bet dezhoñ donet d'ar burev a pa oa ar c'hapiten a-barzh. Doc'htu e sailhas ar Foll àrnezhon

e'it rebech dezhoñ bout bet klañv, penaos e oa ur fall Frañsez hag en dehe dleet pas chom klañv. Ar soudard-hont, fall zegemeret, a respontas dezhoñ eh oa medisinerion e'it gouiet piv a oa klañv doc'h piv na oa ket. Neuze ar c'hapiten, rok, e zaoulagad er-maez ag e benn : «Taisez-vous ! » Met kement-se ne ras ket d'ar soudard tevel. Ar gwashañ, eh oa chomet un deiz re er gêr hag en arbenn a gement-se eh oa roet 8 teiz prizon dezhoñ. Setu ar pennad skrivet d'ar c'hapiten foll e'it goulenn punision e'it an den-se. Div wezh en doa-eñ skrivet hag el lakaat a ran amañ èl ma oa, hep cheñch netra. « *Le soldat Keriell est le type parfait du soldat peu dévoué aux devoirs envers son pays.*

*Ouvrier agricole, il reconnaît qu'il n'a jamais été malade avant la mobilisation mais maintenant c'est plus la même chose et qu'il n'entend pas recevoir d'observations sur ce qu'il doit faire. «Il y a des docteurs au regiment pour les malades». Il n'est arrivé à la compagnie que le 9 janvier 1916 et a été évacué pour maladie à Erquery sur l'hôpital de Breuil-le-Sec. Sans énergie, d'une constitution peu robuste, ne fera rien pour reprendre sa place à la C<sup>e</sup>. N'a pu expliquer le retard dans sa rentrée ».*

An den a skriv an dra-se a lâar ema unan a bennoù ar Bank Perrier e Pariz ! Ne istim ket, èl rezon, an dud diâr ar maez hag en em sell a ra èl un den kant kwezh desketoc'h ha finoc'h e'it rac'h ar re a zo en-dro dezhoñ.

Gwir eo n'en deus ket bet boneur get e damm paper : distroet en deus-eñ dezhoñ ar c'homandant ha ret dezhoñ gober gwell !

**29/30/31-10-1916** - Ar glav ne arsav ket. An toulloù dour a zo er vourc'h a zo gourleun. Redek a ra an dour ag un toull d'an arall ha, tra souezhus ! tapout a raer silioù hag a ya get an dour ag un toull d'an arall.

**1<sup>añ</sup> a viz Du/02/03/04/05/06/07-1916** - Eh omp bepred



en hevelep tachad, souezhet un tammig bout bet laosket ken pell didrouz. Ar glav a gouezh dalc'hmat. Da c'houel an Holl-Sent ha da c'houel ar Re Dremenet e tapomp labour muioc'h e'it bihanoc'h get ar bae hag an dilhad a zo da reiñ. Kaset a zo deomp rochedoù, jiletoù gloan, manegoù, kuzh-frioù...

Tremen a ra an daou zeiz-se hep ne c'hellan monet 'met just d'an oferenn.

Tiñsal a ra an dremenvarv, trist ha klemmus. Tud ar vro a dremen er ru e begin. Ar soñj ag ar re dremenet a wask ar re a c'hortoz o zro da dremen. Ha du-se, trema ar sav-heol, mab-den a lazh mab-den, mab-den a sikour an Ankoù en e labour divalav...

Ne gredan ket o deus tud ar vro-mañ ur garantez ken birvidant evit o zud tremenet. E-leizh a vezioù a zo dilaosket ha goloet a geot. En iliz naket ne weler ket èl e Breizh an holl dud tolpet evit pediñ Doue get an Eneñv.

D'ar 7 eh arru doere genin (dre en Union) a varv ar barzh Barz Kerne. Paour-kaezh Jos ! Aet eo kuit a-raok gwelet an achumant ag ar brezel spontus-mañ... Àr talbenn ar brezel an Ankoù a ziskar Breizhiz gwellañ... A-dreñv ema ken didruez. Piv a chomo da genderc'hel get al labour boulc'het ?...

Paour-kaezh Barzh ! E-unan e oa chomet en e di klouar e Fouesnant... Piv en deus heuliet ar barzh d'an douar ?... Piv e gano eltoñ sistr c'hwek Fouesn', merc'hed koant Kerne, plijadurioù dereat e gornad bro ?...

**08-11-1916** - Er vro-mañ gwezharall eh eus bet gloestraj na oant ket vil. Kavet a ran meur a wezh kredañsoù, bufetoù kizellet get bokedoù àrnezhe. Met rac'h an traoù kozh-se a zo lakaet a-kostez. An traoù nevez en deus kemeret o lec'h a zo c'hoazh displetoc'h e'it ar re a brener e Breizh.

**09/10-11-1916** - An amzer a zo atav ken displet.

**11-11-1916** - Un den a zo marv er vourc'h, ha doc'h an enderv e komañs ar c'hlec'hier son an dremenvarv. 'Pad un eur pe div e sonont. An deiz àr-lerc'h vintin, da greisteiz, d'an noz ha d'an deiz àr-lerc'h c'hoazh da vintin evit an interramant e sonnont ar mem ton ! Nag a drouz e'it an hevelep den... Ha goude ur miz, daou e pouso hir ar geot àr e vez ; ankouaet e vo, ar c'haezh !

**12-11-1916** - Netra a vad.

**13-11-1916** - Hiziv e resevomp sokoù, botoù-koad, chaosonoù. An deiz arall e oa kroc'hen deñved. Ne ouier ket 'men monet get rac'h an traoù a roer deomp. Nag a argant kollet !

**14-11-1916** - Souezhus eo klevet hor foll é komz. Nend eus penn erbet d'e gomzoù. Revezon nend eus hani hag a ra netra a volentez vat. Ar soudarded, er brezel, a zo ret rac'h palforsiñ ha ret eo disfiz doc'h kement den a zo. A-fet an argant ema gwevn e gousiañs. Laerezh un nebeudig argant a pa c'heller laerezh muioc'h a zo amoet. Betak 10 000 lur ema ul laeroñsi ; àr-lerc'h nend eo ket mui laerezh. Ne oui ket petra eo ur rame nag ur main paper. Ar wezh arall en doa goulennet 10 rames ! Evit paseiñ 6 X 20 lur a oa anezhe ! Dre voneur n'o resevo ket !

**15/16/17/18/19/20-11-1916** - Netra a vad.

**21-11-1916** - Manoeuvre. A-vintin eh aomp en hent. 32 kil. hon eus d'ober a-raok arru en tachad merket deomp : ur prad, ur c'harzh spern en-dro dezhoñ. Reve an akustumañs hon tolper doc'h ar c'harzh evit parraat an avel a-zoc'hti ! En

ur arru e tebromp soubenn. Yen eo. Skorn a oa hag an avel a zo c'hwerv. Ar hor sav e tebromp ha me respont deoc'h ne bad ket pell ar pred. Un hantereur goude eh on kaset da gavet ar Chef de Bataillon en ur park arall lec'h mah eus ivez tolpet div gompagnunezh arall. Evit en em dommet an dud a gerzh, a red, a c'houren pe a c'hoari da flastrin avaloù àr gabell-houarn o c'hileion. Un herrad mat e chomomp eno da c'hortoz ha da skorniñ hag e taer da lâret deomp tostaat d'ur gêrig lec'h ma raer deomp distroin da Romescamps, hep bout graet netra na gwelet netra. Ni 'oa sañset e réserve evit kas munitions d'ar re 'rall, hag evit an dra-se eh omp kaset 16 kil. ag ar gêr. En ur arru er gêr lec'h ma oamp lojet eh oa ur misi deomp en em astenn ken skuizh el ma oamp.

#### **22-11-1916** - Diskuizh.

**23-11-1916** - Ar mintin-mañ eh eus manoeuvre de cadres evit kempenn un taol el ar wezh arall. Met donet a raer da glask an ofiserion en hent. Arc'hoazh ema dle monet kuit pe an deiz àr-lerc'h ! D'e-men ? Komz a raer ag ar Somme.

**24-11-1916** - Breskennomp a-vintin. Da Vesnil-Contereux eh aomp da gousket. 25 pe 26 kil. An dud hon degemer mat, met el e rac'h ar vroioù-mañ, fall lojet eo an dud en tammoù tier kaoc'h-saout ha fang-mañ.

**25-11-1916** - Sadorn. A-vintin eh aomp àr-raok arre evit monet da Hardevillers. Glav a ra ha diaes-bras eo kerzhet. Artilheri a gerzh àr-un-dro genomp hag azez a ran àr ur c'hanon evit gober lod ag an hent. Netra a vad da welet er vro-mañ lec'h m'ema rac'h an dud, rac'h an traoù, rac'h ar maezoù hañval. Amañ neoazh eh eus bet gwezharall ur gêrig hag a zo bet pinvik, met divroet en deus lod-kaer. Ar re a chom a

vev ec'h ober brosoù-dent ha boutonoù get kregad mor. An dud a ziskouez bout sevenoc'h hag hon degemer a raer e ti ur vaouez gozh lec'h ma tebromp d'an noz. Ar vaouez-mañ en deus kollet he c'hrouadur er brezel.

Tremen a raomp e Fontaine-Bonne-L'eau, en un devalenn lec'h mah eus dour skler ha kaer el gwer. An dour ag ar vro-mañ a zo istimet-bras. Gober a ra mel ha c'hwek eo d'evet. Met oar n'hon eus ket d'en tañvaat. Gwelet a raomp ar riolennoù e redek hepken ha burzhud ken kaer el m'ema an dour.

**26-11-1916** - Àr-raok e'it Wavignies lec'h ma kouskomp e tachenn Caron fils hag a laka ur yoc'h betrav sukr. Ar mestr a zo e Verdun, soudard, met ar vestrez, diardoù hag a seblant maouez a benn hag amiapl, a ra ar gwellañ degemer a-zoc'homp. Hi a ra deomp mem alc'hwez un tiig lec'h mah eus pevar gwele plouz e kouskomp enne. Yen eo an amzer rak amañ a pa ne vez ket yen e vez glav, hag a pa ne vez ket glav e vez yen. Nend eus ket lec'h da zevezhioù klouar el e Breizh e-kreiz ar gouiañv.

**27-11-1916** - Dalc'homp ! Da Sains-Morainvillers eh aomp hiziv. Arrest a raomp eno un deiz, a lârer. Skornet eo an hentoù. Aes eo kerzhet, met el ma kerzh ar c'hampemant get ar re 'rall ema berroc'h hon amzer da glask lec'h d'an dud. Donet a ran da benn neoazh a lakaat rac'h ma re e tachenn Morel.

**28-11-1916** - Diskuizh.

**29-11-1916** - An 3<sup>vet</sup> hag ar 4<sup>vet</sup> a chom amañ betak arc'hoazh. Bremañ e ouiomp eh aomp da gemer an trañcheoù 10 kil. doc'h Montdidier. Dec'h eh oa bet an ofiserion ec'h anzav an tachad. Plat eo an douar met kant vad a lâront ag an tachad a zo didrouz ha kempennet avat evit degemer ar

soudarded. An eneberion ne skoont ket re lies hag a-c'houde penn kentañ ar brezel nend eus bet netra en tachad-se. Da Grevillers eh a an div kompagnunezh-mañ. Arc'hoazh vintin eh aomp kuit da 11 eur. Da c'hortoz, èl mah arru 9 komp. amañ, ema ret deomp-ni diloj a dachenn Morel ha monet izeloc'h da bakiñ an dud en un tachad nend eus lec'h met d'an hanter anezhe.

**30-11-1916** - Ar mintin-mañ, àr-lerc'h ar soubenn, àr-dro 11 eur, eh aomp kuit trema an talbenn. Arru a raomp goude ur pemp lev bennak e Fescamps lec'h mah arrestomp evit debriñ un tamm. Nend eo ket bet poanius-bras an hent, daousto deomp bout treuzet ur c'hornadig meneziek. Kentizh àr-lerc'h pred, doc'h serr-noz, eh aomp un nebeudad get ar c'hapiten da anzav ar vro nevez. Lâret a raer deomp ema didrouz hag e gwirionez ne glevomp ket kalz a dennoù. Da Grevillers eh aomp kentañ da c'houlenn petra a zleomp gober. D'ar c'hoad 105, etre Grevillers ha Fescamps, eh aomp. Ar c'hoad-mañ a zo krouizet rac'h evit lakaat ur gompagnunezh hag a-vod ema graet al labour. Gweleoù orsal a zo hag àrnezhe golc'hedoù leun a ran vejetal. Ar gompagnunezh a arru un herradig àr hol lerc'h. Fonnapl ema lakaet pep unan en e lec'h rak frankiz a zo hag eh aomp da gousket.

**1<sup>añ</sup> a viz Kerzu 1916** - Skorn a zo ; yen eo. Gwelet a raomp an tachad lec'h mah omp. Un toull potarn hepken a welomp e-tal ar c'hoad. Nend eo ket enta dañjerus-bras bout amañ beta goût. Paperioù hon eus da zuiñ c'hoazh muioc'h e'it biskoazh.

**02-12-1916** - Paperioù atav. Goulenn a raer genomp tud doc'h un tu ha doc'h an tu 'rall da labourat, da zeskiñ.

**03-12-1916** - Sul. Monet a ran da Grevillers d'an oferenn.

Amañ an 365° en deus graet ur chapel edan an douar get tol hanter krommet. Ar chapel a servij da sal d'ar soudarded e'it butumat, lenn, skriv. Bout o deus levrioù da lenn, gazetoù, dastumadennoù. Grevillers a zo foñdet. Komañs a ra ar geot gounit àr an tier diskaret. En iliz e kresk ar geot ivez : ne chom mui 'met ar vagoerioù. Amañ ema kempennet kêr get orsal ha bouzellennoù evit difenn doc'h an enebour. Forzh diaes e vehe pas a-barzh. Àr gement korn ru a zo eh eus tammoù koad evit lâret deoc'h diwall doc'h an aezhennoù fall ! Revendailh e c'hoarier lies get ar seurt traoù-se amañ. Girzhier fals a zo graet ivez get orsal a zo paseet ha dibaseet geot enne evit kuzhet an dud é tremen en hentoù pe minotenoù. Ar bouzellennoù a zo roet dezhe anvioù grek : Esculape, Eschyle, etc...

**04/05-12-1916** - Paperioù atav ! Hiziv ema splannoc'h an amzer ha goût a raomp ! Ar c'hanonoù en em laka da c'hoari trema St-Aurin àr an Avre hag izeloc'h trema Beuvraignes. Ar Jermaned a gas deomp torpilhoù ha respont a raomp dezhe àr an hevelep ton ! 'Pad an enderv ha diwezhat en noz e c'hoari an traoù.

**06-12-1916** - Amzer kastrouilhek. Hiziv ema didrousoc'h an c'hoari.

**07/08/09/10-12-1916** - Netra a vad. Didrouz omp.

**11-12-1916** - Henoazh e tarzhe an traoù trema Thilolloy. Doc'h an noz e taer da lâret deomp kemer hor masque. Ar Jermaned a daol o aezhenn ampouezonet met nen da ket betekomp. Ar c'hanon a darzh e-pad an enderv ha d'an noz e lârer deomp eh aomp kuit arc'hoazh vintin e'it reiñ lec'h d'ar 43° Colonial. N'heller ket en em ziwisk evit kousket rak Colonel ar 43° en deus lâret deomp en em zerc'hel prest get an

aon ne vehe un taol bec'h en noz. Goude hon eus gouiet en doa ar Jermaned an deiz-se finfoñdet hor trañche. Hor soudarded a skarzhas er-maez anezhi. Goude bout bet torpilhet mat an tachad, ar Jermaned a fardas a-barzh, met kentizh eh oa bet ret dezhe achap a-raok an obusoù a gouezhe àrnezhe el glav. Hor re n'o doa bet neuze 'met kemer en-dro o lec'h. Ne oa bet nemet 2 pe 3 lazhet en c'hoari.

**12-12-1916** - Da 7 eur eh aomp àr-raok. Glav a ra, ha kent pell àr-lerc'h erc'h teuzet. N'em boa ket graet ur c'hardlev eh oa leun mam botoù a zour. Ar vandennoù, mat e'it an hañv, ne talv netra e'it parraat doc'h ar glav. Dre voneur ema berr an hent. Un eur àr-lerc'h eh arruomp e Remaugies lec'h ma tleomp chom. Un hantereur am eus e'it klask lec'h d'an holl. An dud a zan da benn a lojiñ met an ofiserion a zo diaesoc'h donet da benn a gavet gweleoù dezhe.

Ni 'gav-ni evidomp ur burev e ti ur c'hoziad a ra deomp ur sal yen lec'h mah eus un daolig vihan. E-tal e di e kavomp tri kiel lec'h mah aomp da gousket àr gweleoù orsal.

**13-12-1916** - Dilhad a zo da reiñ c'hoazh hiziv. Ar Foll ne arsav ket a c'houlenn dilhad daousto d'an dud bout gwisket mat a-walc'h evit labourat. Ret eo rentin dilhad 'gozik nevez. Nend eus penn erbet dezhoñ. An deiz arall an ofisour bevañs a ginnig hariko dezhoñ, 17 bl. ar c'hilo. « Ya, eme-eñ, 17 bl. ar c'hilo. An dra-se a ra 17 lur ar 100 kil. ! »...

Yen eo en hor c'hieli...

**14-12-1916** - Komz a ra ar Jermaned a beoc'h. Penaos e kavit-c'hwï an c'hoari ? Goude bout laosket, lazhet, diskaret, dizenoret, e c'houlennont get ar re 'rall arsav ar gann get aon ne vehe graet dezhe paeiñ o zorfetoù...

**15-12-1916** - Ar bae arre. Bepred eh omp didrouz amañ.

**16-12-1916** - E Verdun hor soudarded a fard àr ar Jermaned hag a gemer 7 000 paseiñ anezhe. Tostik omp d'hol linenn gozh. Ur fall daol oc'hpenn evite. Un dra a zo anat ivez : seul gwezh ma raomp taolioù seurt-se e taomp da benn a ober labour vat hep koll kalz a dud. Seul gwezh ma pad ar fard e ta diaesoc'h pe diaes bemdez monet àr-raok hag e kouezh muioc'h a dud. Hañval e vehe graet enta gwell labour é tilec'hiñ al liesañ gwellañ.

**17-12-1916** - Hiziv eh omp hep gazetoù. Komz a raer ema lazhet Briand ! Komz a raer ivez ag hon diblas ; tostoc'h d'al linenn e vehemp kaset da labourat e'it en A. D ? Ne ouiomp ket just pe deiz c'hoazh e tiblasahemp. An amzer en deus yenaet. Start eo duiñ paper en ur gampr a zo peder dor àrnezhi hag unan bennak anezhe digor bepred. Tan a zo, met ker bihan ma vehe diaes rostiñ ur c'hwennenn a-barzh hag an avel a za en ti dre gement tu a zo.

**18-12-1916** - Ar mintin-mañ e kaser àr-raok ar vartoloded a oa prestet d'an arme. Hag eürus int da vonet àr-raok rak e gwirionez, ne vern pegen dañjerus eo bout àr ar mor, eürusoc'h eo ar martolod e'it ar soudard, dreist-pep-tra e'it ur soudard kozh get ofiserion nand int ket ganet e'it komandiñ da dud met e'it o gwallgas e kement feson a zo.

**19/20/21/22-12-1916** - Didrouz an traoù genomp amañ, met yen eo an traoù ! Skorn a arru, hag erc'h. Ha kentizh àr-lerc'h e tousa an amzer hag e ta glav !

Goulenn a raer bemdez un den bennak genomp evit monet a-gleiz pe a-zehou da labourat. A-dra-sur nend omp ket bet biskoazh ken didrouz, met kalavret eo hor plijadur get an den a zo e penn ar gompagnunezh. An deiz arall en doa torret



ar werenn lampr ha d'an noz, doc'h taol, e lâre e oa unan bennak ac'hanomp a oa ! Gwell evit an dra-se, lezet en deus ar gouarnemant da baeñ ur werenn arall !!

Roet a zo F. M. ha pistoletoù aut. deomp èl d'ar soudarded yaouank, ha neoazh setu pell 'zo nend eo ket bet ken gwan ar 88°. Roet int deomp ha nend eus met 2 eil-ofiser ha 2 zen hag a oui en em servij anezhe !...

Bemnoz bremañ e lârer deomp disfiz doc'h ar fall aezhennoù : me 'gred ema-ni a zo dle deomp teurel anezhe àr ar Jermaned. E-pad an amzer-se e komzer atav a beoc'h àr ar gazetoù.

**23-12-1916** - Atav e komzer ag hon diblas ac'halemañ, met nend eus netra sur atav.

**24-12-1916** - Sul. Dilhad a zo c'hoazh da ranniñ etre an dud. Dre forzh goulenn eh eus degouezhet get hor Foll muioc'h e'it ne c'hell kaout lec'h dezhe ! Ret eo palforsiñ an dud e'it cheñch dilhad hag a zo roet dezhe ur miz-so.

**25-12-1916** - Nedeleg ! Peoc'h d'an dud a volonteiz vat, a lâre ar C'hrist, met an dud ne glevont ket mui bouezh an Aviel. Monet a ran d'an oferenn e ilizig Remaugies. Soudarded a zo met tud ar vro, me 'gred, n'en em steurmout ket kalz get al Lezennn. Arc'hoazh vintin eh aomp kuit ac'halemañ.

**26-12-1916** - 7 eur. Monet a raomp àr-raok. Tremena a raomp e Boulogne-la-Grasse, ul lec'hig klouar ha druz a zle bout bourrus d'an nevez-hañv. An dud a zo hañval doc'h o bro, un tammig druz ha minet mat. Conchy-les-Pots nend eo ket vil ivez. Pavet eo al lodenn vrasañ a gêr.

N'en deus ket bet kalz a zroug kêr. Setu 15 miz n'en deus ket tennet ar Jermaned àrnezhi. Ema al lodenn vrasañ ag an

dud amañ. Met siwazh nend int ket bet well a vout bevet get ar soudarded. Ar vugale nend aont ket mui d'ar skol. Pas a raont o devezh get ar soudarded hag e teskont pep lousteri. Ar merc'hed yaouank a zo divergont ha ne roahen ket pemp plank evit o gwerc'hted ! Doc'h o c'homzoù e yan dezhe.

Ar vaouez a zebromp en he zi a gont din penaos buhez en deus graet amañ ar soudarded. Re an Nord a zo bet ar gwashañ. Esae a raent sailh àr ar merc'hed en o zier a pa vezent meyv. Mezviñ a raent ar vugale. Ur vezh !

An ilizig a zo kozh (17<sup>vet</sup> kantv. lod anezhi). Bout a zo a-barzh delwennoù kozh bravik ha dalc'het mat. Ar person a zo chomet amañ.

**27-12-1916** - A nebeudigoù e kempennomp hol lojeris nevez, met diaes eo bout ervat en tier-mañ graet get douar ha koad. An dud a zo al lod muiañ anezhe en ur c'harrdi bras lec'h mah eus 120 gwele graet get orsal kroazet met hep tamm plouz. Hag el mand eo frank hag uhel ar c'harrdi o devez aneoued o gwalc'h. Ret eo klask lec'h dezhe e tier arall trema an iliz.

D'an noz e tarzha an traoù dre-mañ, met trema ar Som. Ne ouiomp ket petra a bas : ar gazetoù ne gomzont a netra.

**28/29/30/31-12-1916** - Didrouz bepred e vevomp, disoursi ha hep potarn erbet. Hiziv eh a hon tud da labourat evit ar wezh kentañ. D'ober pe da gempenn lec'hioù kanon eh aont. Nend eo ket start-bras al labour met pell eo monet dezhoñ : 2 lev e meur a dachad.

# 1917

**1<sup>añ</sup> deiz ar blez 1917** - Blezad mat ! Mechal mar bez gwell hennañ. Rac'h e karahemp gwelet ar peoc'h é tonet. Setu an trivet blez brezel é teraou. Tri blez ema dismantret an tiegezhoù, tri blez e red gwad gwellañ bugale ar Vro. Doue da gaout truez doc'homp...

Souetiñ a raer ar blezad mat dre akustumañs d'ar soudarded, d'an dud a gêr, met yen, yen eo ar galon...

El bep plez e roer deomp champagne, gwin, katev, sigarennoù, morzhed-hoc'h. Met èl mand eo aet rac'h hon tud da labourat ema ret deomp gortoz an noz evit lipat an traoùigoù-se.

**02-01-1917** - Eh on ma-unan-kaer. Aet eo ar serj -maj. hag ar hap -four. àr-raok e perm. Monet a ran da vale da welet bered ar barrez. Paouret un dra ! Ha dilezet... Ar vered a servij din a pah arruan en ur vro e'it goût 3 zra : mar divroer (ne vez ket tud yaouank interret) ; mar bever kozh ; mah eus karantez e kever ar re varv ha, dre-se, feiz er vro. Nend eus gwellañ tachad e'it goût ar wirionez.

**03-01-1917** - Eh on ma-unan evit dek deiz bennak. Na disafar on ! Dre voneur ar Foll a zo kuñvoc'h : eñ ma laosk didrouz hag a gomz doc'hin èl a pa vehe é klask ma lakaat da ankouaat e gomzoù divalav ag an deizioù kentañ. Labour am eus, gwir eo, met gwell e vourran c'hoazh el-mañ rak ne vez ket re é rolltiñ, e puniñ tro-ha-tro din e-pad an deiz, é parraat doc'hin a labourat.

**04/05/06/07/08/09/10/11/12/13-01-1917** - N'em eus

oar da welet na da glevet netra get al labour am eus. 160 den ag en A. L. a zo daet c'hoazh oc'hpenn da vevñ e-pad 5 deiz genomp.

**14-01-1917** - Sul. Ar mintin-mañ em eus ar blijadur da welet Jaouen, medisinour ar 24°, hag ur medisinour yaouank arall a Vreizh ivez. Ar brezhoneg a sailh àr an diweuz ha komz a raer ag ar vro, hag ag he bugale karetañ.

D'enderv e ta Arzhur an Drev d'am gwelet ivez. Kontiñ a ra din en deus daou pe tri kile hag a gar Breizh en e Vateri hag e klaskont levrioù ha traoù brezhonek da lenn.

**15-01-1917** - Hiziv e tle bout un tarzhadig amañ hag e lârer deomp bout en evezh. Met arru a ra an noz ha ne glevomp 'met ur c'hant potarn bennak é tarzhal du-se trema Koad-ar-Loges. Arru a zo arre genomp tud ag an artilheri pounner.

**16-01-1917** - Trouz a zo bet trema Roye, met netra kempar d'ar pezh hon eus gwelet. Nend eus daet potarn erbet beta du-mañ.

**17-01-1917** - Erc'h ! gwenn eo an douar a pa savomp met dous eo an amzer. Da greisteiz, àr-lerc'h merenn, en em lakaat da c'hoari, da deurel boullou erc'h an eil àr egile. Aes e ta ar soudard da vout krouadur !

**18-01-1917** - Atav e kouezh erc'h.

**19-01-1917** - Hiziv en deus arsavet an erc'h a gouezhel met yenoc'h eo an amzer. Skornet-mat en deus ; ruskliñ a ra an hentoù.

Trema Sassigny eh eus un taol fall doc'h en em gempenn. 'Pad an deiz e kouezh potarnoù ha torpilhoù du-se.

**20-01-1917** - Yenaet en deus an amzer, ur bam ! Arsavet en deus an erc'h met skorniñ a ra noz-ha-deiz. Hon tud a andur é monet d'al labour. O gwin a skorn en o bidonoù. Labourat a raont àr ar blaenenn durc'haet d'ar seizh avel ha da dennoù an enebour. Ret eo dezhe labourat dalbezh, en douar gwleb, evit en em dommet. Da greisteiz n'o deus 'met boued yen (e-pad en div sizhun gentañ). D'an noz eh arruont e tier finfoñdet pe hep plañcheris erbet (doulbaj) yen. Da vintin a pa savont e vez skornet o botoù-ler : ne c'hellont ket o lakaat mui. Divourrus eo dezhe. A nebeudigoù e taont da benn a gloziñ an tier, a stankiñ an toulloù brasañ. Lakaat a raont mem un doulbaj plouz en un ti hag emaint e-leizh gwell.

En hon ti nend omp ket-ni fall lojet get hor golc'hedoù ha get hor fornev. Bet omp bet maleürusoh. (er gredañs) Paper e-lec'h gwer fenestroù.

**21-01-1917** - E kostez Lassigni ha Roye-sur-Matz ar Jermaned en deus esaet fardiñ ar hor soudarded (an trouz-se a glevemp) met arrestet int hag arrestet-mat. Paot anezhe nen daint ket mui da fardiñ àr hani. Lakaet o doa poan neoazh !

**22-01-1917** - Labourat a raer start amañ e'it kempenn ar fard ag an nevez-amzer-mañ hag ar skorn-mañ a zo a-vod e'it kas karradoù traoù a-dreuz dre ar parkoù. En em glem a ra ar re a labour neoazh ma nend eus ket muioc'h a urzh er c'hemenoù a roer dezhe. Kas ha degas a raer ar bareadoù labourizion. Lec'hioù kanon a raer hag èl ne arru ket ar c'hoad goulennet, an douar a ruskl hag a leunia an toulloù an deiz àr-lerc'h ma vezont achu ! Gwelet a raer ema kemennoù «àr baper» a gerzh ha nepas kemennoù tud a vicher hag a ya da sellet mar bez graet ha mar bez gellet gober al labour gourc'hemennet. Pep unan a chom kuzhet en e doull, tost d'an tan, ha peb unan a ra ar bihanañ ma c'hell !

**23/24/25-01-1917** - An amzer a gendalc'h da vout yen, sklasus mem. Sur e tiskenn an termometr beta 15° edan zero.

**26-01-1917** - Deraouet en deus ar Jermaned da gas potarnoù àr hon tud. 5 anezhe (ag en 2<sup>vet</sup> komp.) a zo gwallaozet hag unan ag ar re-mañ a varv an deiz àr-lerc'h.

**27-01-1917** - Diloj a raomp ag an Hôtel Tika e'it monet da ru an iliz, da di ur penn kantonnier, Debergue e anv. En ur gampr d'al lein eh aomp ha yen eo an toull-se. Doc'h tu ar sav-heol nend eus ket mui karrez gwer erbet.

**28-01-1917** - En em arañj a raomp en hor neizh nevez. Bec'h a-walc'h hon eus é tommet ar gampr get ar fornev.

**29-01-1917** - Setu savet hor fornev a-zegenomp ! Ar c'hapiten en deus-eñ kemeret evit e gampr ! Gwir eo en deus muioc'h a c'halonioù evidomp. Ni a c'hell-skosiñ a-dal ma nen do ket-eñ aneoued ! O, arme, na gever a vez ret lâret e'it hou pravaat !

**30-01-1917** - Setu arru ar gemenn genomp da achap ! Da Rollot eh aomp, da labourat àr an hentoù-bras. Dec'h d'enderv eh oa graet d'ar gompagnunezh donet ag al labour e'it en em gempenn. Ar mintin-mañ, da 7 eur, eh an-me kuit. Ar gompagnunezh a zay àr-dro 8 eur 1/2. Erc'h a gouezh un tammig ha c'hwerv eo an avel. Eürus omp neoazh da ziblas peogwir ema evit monet pelloc'h àr-dreñv, evit pellaat doc'h ar safar, hag an hent a zo berr (6 kardlev).

Emberr emaomp arru ha fonnañ e raomp al labour rak kemer a raomp lec'h ar 4<sup>vet</sup> K. ag ar 100° T<sup>al</sup>. Met ar re-mañ ne ouiont ket c'hoazh e kuitaont ! Arru a ra ma zud hag ema ret dezhe chomel àr ar ru da c'hortoz mar bez goulle an tier.

Debriñ a raomp er ru, ha fonnapl hon eus predet rak nend eo ket bourrapl poz amañ !

Rollot a zo bro genidik Galland, oberour Les milles et une nuits. Un tamm delwenn a zo savet dezhoñ e-kreiz kêr, doc'h kostez ar ru, rak el al lod muiañ ag ar vourc'hoù er vro-mañ, Rollot a zo hir ha strizh. 'Gozik rac'h an tier a zo tolpet doc'h a daou du ag ar mem ru. Pavet eo kêr ha minet vat eo. Tier a zo a-barzh graet get brik, get mein mem lod anezhe. An dud hon degemer mat a-walc'h. Bout a zo amañ kalz a re forbanet é c'hortoz get pasianted ma tay ar peoc'h da zigor dezhe dor o bro. Met e pezh stad er c'havint, ar re a zo a Beuvraignes, a Roye hag ag an tachadoù arall a zo a-dal deomp amañ ?

Hor burev a raomp en ur gwalc'hle, ha kousket a zo ret din en ur marchaozi leun a doullou. Nend eo ket kaer neoazh hag evit parraat doc'h an aneoued e lakaan ma lien tant a-dreiston hag en en em c'hronnan mat get ma lañjeloù.

**31-01-1917** - Cheñch burev a raomp. Ar c'hapiten a ra da dud skarzhiñ ag ur gampr hag el-se hon eus ul lec'hig choul ha splann. Arañj a raomp pep tra hag en em gavomp a-dra-sur gwell e'it mand omp bet biskoazh ken tost-mañ d'an talbenn.

**1<sup>añ</sup> a viz C'hwevrer 1917** - Avañs a ra hon traoù bepred ; eh omp ec'h arru el tudjentil. Tan er burev, taolioù, pachedoù graet get plañch, ur gadoer gozh revret a-nevez, ur gwele graet get plañch hag orsal ha gronnet get lien tant ha setu-me el ma veze gwezharall an evezhour er skol. Yen eo bepred ha bepred e ra erc'h, met pas kalz.

**02/03/04-02-1917** - An amzer yen a gendalc'h ha me 'respont deoc'h e krog ! Galland-eñ mem a zo gwenn get ar rev. An dud a stag o barbistell doc'h o beg ; ar re en deus barv a stlej hikinenoù doc'h o barv. Doc'h noz e lârer deomp en

deus ar Stadoù Unanet kaset kannadour ar Jermani da foar an c'hwitelloù !

**05-02-1917** - Gwir a-walc'h eo an doere. Setu un enebour arall àr gein ar Jermani. Komañs a ra an aneoued gober droug er gompagnunezh : jal a za en daouarn, en treid ; rumoù a daper. Bout a zo 5 pe 6 a re klañv hag ar Foll a bas e amzer doc'h o jiboesat ! Ne venn ket ma en em lakaint en tachadoù kaeroc'h. O belziñ a ra n'o ankouay ket ha ne ray biken netra evite. Chom a ra bemdez un nebeud da c'houarn ar c'haradioù lec'h ma kousk an dud hag en deus difennet ma vint kemeret e-mesk ar re zo bet klañv. E'it ar re-mañ ema didruez ! Eñ a lâr nend eus 'met ar re a gar hag a vez klañv !...

**06-02-1917** - Bec'h a sav etre ar foll hag ar vaouez a zo amañ. Ar vaouez-se a laosk d'an noz ar soudarded da zonet da dommet doc'h he fornev, da ziskorniñ o bara ha da zebriñ o boued mem. Lod a bren gwin hag a za da evet doc'h he zaol. Ar Foll a zo arru àrnezhe ha bec'h el loj ! Ar vaouez-hont, hag a zo a Beuvraignes, er c'has da vale, a lâr Boche dezhoñ, hag a lâr dezhoñ e oui an holl ema foll ! Setu lakaet e vonet ruz dezhoñ, hag ul liher doc'htu d'am eoñtr-kordenn. Enklask ! Trouz ! Ne ouion ket penaos e achuo an traoù bremañ.

**07-02-1917** - Roet em eus ma zraoù da walc'hiñ d'ur vaouez amezegez : lec'h o deus da c'hounit argant ar re a walc'h amañ. 5 plank ar roched ha pep tamm bras, tri blank an tamm bihanoc'h, 2 vlank hag ur blank ar mouched ! Seul gwalc'h a raont, ha gellout a raont gober unan en ur penn deiz, e c'hellont gounit tost da 10 lur !

**08-02-1917** - Arru a zo genomp ur serjant daet ag en Oriant. Ema e Porzh-Loeiz a-c'houde penn kentañ ar brezel...



A Rocroi ema hag eh oa du-se get e vaouez hag e vugale. E-pad an amzer-se Breizhiz ken kozh, ken trist o doere el e hanni, a zo àr an talbenn é skuilhiñ o gwad e'it difenn bro ar re-se kuzhet a-dreñv.

**09-02-1917** - Labourat a raer start amañ da gempenn pep tra evit an taol bras. Hentoù-houarn a raer e kement lec'h a zo evit degas potarnoù ha danvez lojoù àr an talbenn. An hentoù a lakaer kargaj àrnezhe. Pezhioù kanon a gement brasted, a gement form, a dremen àr an hentoù. Ar c'hoadoù a zo leun a obusoù, torpilhoù... Ne vo ket bourrapl bout edan rac'h an houarnaj-se a pa gomañsint kouezh.

**10/11/12-02-1917** - Netra a vad. Kenderc'hel a ra an amzer yen. Klujiri yaouank a zo a-yoc'h dre-mañ ha donet a ra da benn unan ag ar serjanted a dapout lod anezhe. Daou bred a raomp gete ha c'hwek int. Difennet eo jiboesat neoazh ha ne ouian ket perak, dreist-pep-tra get lasoù peogwir nend eus ket riskl erbet a lazhiñ den.

**13-02-1917** - Bec'h a zo savet etre ar serjant Corre hag ar c'hapiten a-gaoz d'an hent nend eo ket bet naetaet el ma oa divizet. Pell 'zo e klask an tu àr ar serjant ha bountiñ a ra 8 teiz getoñ. Monet a raont da welet ar c'homandant galvet get hennañ. Goude ema galvet ar Foll d'ar c'holonel hag evit achu e kouezh 4 deiz muioc'h ar gein ar serjant ! Ar pod douar hag ar potarn !...

**14-02-1917** - Netra.

**15-02-1917** - Ema ar Foll é teskiñ an dud a zo roet fuzilhennoù mindrailherez dezhe ha pistoletoù a nav taol. Met el n'en deus ket-eñ desket biskoazh en em servij anezhe eñ

mem, ema èl an Doktor-hont a venne... deskiñ da bep unan ar pezh na ouie ket e-unan...

Pourfitiñ a ra e'it gober divizoù hep penn na lost d'an dud a zo getoñ. Komz a ra ag an amzer ma yimp da redek àr-lerc'h ar Boched ha ma vo ret dezhe lezel o sac'h ha rac'h ar pezh a zo dezhe àr o lerc'h... Ar sec'hier hag ar boestoù a vo lezet a-dreñv get un ofisour « a 4<sup>vet</sup> pazenn » ag an territoriale, eme-eñ, a vo ar c'hentañ ec'h achap kuit mar klev an obusoù é tarzhal !... Ur brav a gentel e'it soudarded...

**16/17/18/19/20/21/22/23-02-1917** - Bemdez ema hañval al labour a ra hon tud ha bemdez ivez e welomp an hevelep traoù é pas dirak hon daoulagad. Get an diskorn ema daet ar glav ha get ar glav ar fang hag an hentoù skosellek. Hon tud a arru goloet a fang strimpet doc'hte get an tankirri é tremen, rak tremen a raont hep arsav ha nend int ket skañv anezhe ! Pezhioù kanon, re vras, pignet àr dankirri ha livet liv ar pradoù a dremen 'gozik bemdez. Hadet int du-se àr ar blaenenn etre Conchy-les-Pots ha Koad-ar-Loges, touchik-touch, hag an deiz ma skopint rac'h àr-un-dro ne vo ket sur bourrapl bout doc'h tu ar Jermaned.

An ofiserion a zo amañ en em glem ag o labour : ne gavont ket enorapl a-walc'h evite bout é kempenn an hentoù-bras. Nend eo ket aviz an dud nag ar serjanted a zo gwell gete bout àr an hentoù e'it ec'h arrest obusoù ar Jermaned... Diskouez a raont o fall imur é klask trouz doc'h ar serjanted ha doc'h o lakaat da vlej al àr-lerc'h ar soudarded e'it o lakaat da labourat harz-pe-krev. An dud-se, ha n'o deus biskoazh gouiet petra oa ul labour poanius, a gred e c'hell un den, hep tenn anal, hep sav kein, labourat ur penn-devezh a-bezh... Komz a raer ag ar garantez a zo en arme etre ofiserion, eil-ofiserion ha soudarded. Met ar re a gomz a gement-se nend int ket bet é welet. Ar wirionez eo ema amañ, gwazh e'it neptu, mab-den ur bleiz

e'it e nesañ, hag èl ma en deus amañ lod perzh àr lod arall, tenav eo ar re ne vleizont ket o breder ; ha tenav eo ivez ar soudarded, an eil-ofiserion, a gar o ofiserion. Gwir eo penaos nend eo ket ar re furañ a zo bet choazet da vout ofiserion !...

Henoazh eh eus un tolpe Cinema-Concert e'it ar soudarded. Ne yin ket get aon a gavet ma eoñtr-kordenn àr an nor hag en diabarzh ofiserion ha re gradet hag a vo karget da lâret pegours strakal an daouarn. Ur spont am eus a-raok rac'h an traoù soudardek. Ne ouien ket eh oa an dra-se an arme a pa vezè brezel...

**24-02-1917** - Deraouet eo ar Saozon da skoiñ start trema hanternoz ar Somme. Ne ouian ket petra a wall doc'h ar Jermaned, met kiliñ a raont hep difenn forzh-kaer doc'h Breizhiz-Veur. Eürus omp é welet an traoù é krog ken abred hag al labour ec'h araokaat ken fonnapl. Amañ ema didrouz an traoù bepred ha klouar an amzer.

**25/26/27/28-02-1917** - Bemdez eh araoka ar Saozon. Souezhet omp un tammig é welet ar Jermaned e kiliñ 'gozik hep difenn. Ne laoskont ket ivez prizonerion get ar Saozon. Met ar re-mañ a ya àr o goar. Disfiz a raont ma ne glask ket ar Jermaned c'hoari un dro kamm bennak dezhe.

**1<sup>añ</sup> a viz Meurzh 1917** - Bout a zo ur blez eh oamp c'hoazh er c'hornad-mañ. Da ouiet mard eo ar blez diwezhañ e chomomp ennoñ.

**02/03/04-03-1917** - Netra a vad 'met soudarded é cheñch lec'h. Lod a ya àr-dreñv, lod àr-raok. Evit hor rejimant nend eus anad erbet a cheñchamant.

**05-03-1917** - Ar mintin-mañ a pa savomp ema gwenn-

kann an traoù : erc'h en deus graet met dousaet en deus an amzer ivez ha dousaet-mat. Emberr mem e tiskorn hag e teuz an erc'h, ha get an darempred a zo en hentoù, e sav ur vouilhenn àr an hentoù !

Arru a zo paper hiziv get ar vaouez a chom e-talomp e'it monet da vout barnet da Vanne-Didier a-zivout an taol tabut a oa bet geti ha get hor c'hapiten. Esae a ra ar boufam en em arañj getoñ met nend eus netra d'ober : ne c'hell ket lonkiñ ar moranv Boche he doa bountet getoñ !

An deizioù-mañ ema sevenaetoc'h al loen. Ne vlej ket kement ha meur a wezh eh esae c'hoarzh et !... An deiz arall en doa, e sigur tapout an dud a roa lojeris dezhoñ, graet ur brav a gleizadenn. Un daolenn a zo en e gampr a zo bet roet gwezharall d'an ozac'h ag an ti get ar *Société Protectrice des Animaux*. Troet e zo en e benn skriv àr an daolenn-se ema bet fall resevet en ti lec'h m'ema ha nend eo ket laosket d'ober tan ha -16<sup>er</sup>-maez ! Get ur c'hreion-añkr e skriv e amoedaj, met ne soñj ket ema mouest an ti. An deiz àr-lerc'h vintin, al liv violet-se en deus redet diàr an daolenn ha graet gwazhioù livet rac'h diàrnezhi ! Dav e oa bet dezhoñ he diskenn hag he bountiñ da guzhet a-dreñv ur gredañs ha kas bepred an alc'hwez getoñ e'it parraat ne yahe ar perc'henn da welet ar pezh en deus graet !...

Ret eo lâret e faote dezhoñ toulliñ ar vagoer e'it lakaat un tuyo a-barzh !...

**06-03-1917** - Galvet eo Gauffriaud da vonet da vout tresour d'an 2<sup>o</sup> D. I. C. Arc'hoazh vintin eh a da gemer e lec'h. Gwelet en deus eno tud yaouank-flamm a zo er burevioù, didrouz-kaer, aes dezhe hag e-pad an amzer-se, ar re gozh, èl omp-ni, tud hag en deus tremenet o amzer servij en États-Majors, a zo dalbezh é hersal...

**07-03-1917** - Lâret a raer e fard ur vatailhon ag ar 24° R. C. I. àr ur c'hoad trema Lassigny henoazh. A pa zo lâret d'ar soudarded eh aont da gann d'an noz, da vintin eh aont da bas ar visit !! Met ar medisinour ne venn ket o an zav klañv : aon o deus ha netra ken hag esae a raont tenniñ àr-dreñv...

D'enderv-noz e tarz'h an traoù. Hep dehan e korn ar c'hanon. Ema ar re-hont é karg àr ar Jermaned...

**08-03-1917** - Setu erc'h arre ! Yen eo bepred.

**09-03-1917** - Diskorn a ra. Kaer, erc'h ; erc'h, glav. Setu amzer an deizioù-mañ.

**10/11/12/13-03-1917** - Netra a vad. Kaeraet en deus an amzer. Ar rapport e lâr deomp eh eus aet soudarded e trañcheoù ar Jermaned hag o deus gellet donet da benn ag ar pezh a glaskent. Général an eil gevrenn a gas e c'hourhemenoù dezhe.

**14-03-1917** - Noz. Henoazh e oan doc'h taol a pand eo daet mevel un ofisour da lâret din monet da gomz doc'h te. Goude koan eh an. Un ti arall ema ret din klask dezhe. Henoazh ma c'hasont d'un ti a zo ur c'hardlev ac'halemañ ha na anavan ket, da lâret d'ar vestrez e yint d'he gwelet henoazh evit o fredoù ; d'un ti arall da welet penaos tud a zo é chom ennoñ ! Monet a ran da glask ar c'hentañ an noz teñvel, en un hent skosellet-rac'h get an darempred. Ret eo din goulenn pemp pe 6 kwezh e pezh tachad ema an ti a glaskan. Arru a ran àrnezhon hag e lâran an doere d'ar vestrez.

É tonet en-dro e kavan al Lieut. Fauchoux ha ma c'has getoñ da welet an eil ti lec'h nend eus ket lec'h evite. Monet a raomp goude da di ar vourc'h lec'h ma kousk Konan. Eno eh oa lâret din ar sizhun baseet e vehent bet degemeret. Henoazh hor

bounter er-maez pe 'gozik ! Un ti arall a skoomp àrnezhon : kousket eo an ozhac'h. Monet a raomp neuze da c'houlenn get an dud a loj Petit rein o c'hegin dezhe ! Den el loj !... Skuizh eo man duchentil ha divourrus e kavont bout é pillat fang. Ma c'has a raont enta da di ar vaouez kentañ, 1 c'hardlev ac'halemañ, da lâret nen daint ket henoazh d'he gwelet !...

Skuizh on é postal er fang, met koutant on en ur mod ne gavont ket lojeris rak kustum eo an dudjentil da cheñch lec'h. Gloev eo ar gwezhoù e plij o lojeris dezhe. Bepred e vank un dra bennak dezhe ha ne c'hellont ket kompren emaint er berzel. Setu ar bedervet kwezh a-c'houde eh omp amañ e klaskont cheñch. Daet e oant da benn a vonet en un ti na oa ket graet evite, hag ar c'hentañ kolonel a zo arru emaint bountet er-maez èl laouigaj ! « Na gemerit ket al lec'hioù uhelañ doc'h an daol, eme an Aviel, get aon ne zaer da lâret deoc'h diskenn... »

Àr-dro 9 eur eh on dijabl èlkent.

**15-03-1917** - Ar mintin-mañ e ta ur mevel arall da lâret din c'hoazh monet da jiboesat un ti : dre voneur em eus labour er burev. Un digarez mat e'it o lezel d'ober o c'heusturenn o-unan...

An enderv-mañ e tarzh an traoù àr an talbenn a-bezh diragomp.

**16-03-1917** - Arru ar 57° da gemer hol lec'h. Ha ni ne ouiomp ket mard aomp kuit.

**17-03-1917** - Ar mintin-mañ eh aomp kuit da Conchy. Arru eo an doere genompt èl un taol arneñv !

**18-03-1917** - Kemenn da vonet da Goad Loges, place Gascogne. Labourat get Génie.

Noz. Klask kompagnunezh.

Kirri ur sanfin arru kreisnoz.

**19-03-1917** - Monet kuit 3 eur d'enderv da Campagne lec'h m'hor galver e'it arañj an hentoù foñdet d'ar Jermaned é monet àr-raok. Rak aet int àr-raok ! Nag un doere souezhus. Pell 'zo e komzer ag an dra-se met gwir a-walc'h eo. Monet a raomp dre Fresnières. Doc'h ar c'huzh-heol ag ar vourc'hig-mañ eh oa linenn kentañ ar Jermaned. Kempennet a-feson e oa dezhe get koad troc'het àr zouar Frañs ha lakaet o doa orsal dreinek dirak o zoullou èl a pa vehent bet engortoz da chom a-hed o buhez eno. Dour a zae get ur c'hanol betak o fozioù. Uheloc'h e'it Fresnières eh eus ur c'hoadig lec'h o doa moarvat pezhioù kanon. Labourioù o doa graet get simant armet e'it lakaat o mindrailherezed. Labouret eo rac'h ar c'hoad-se d'hor potarnoù hag ivez an hent deun graet evit donet d'o linenn. A Fresnières hed-ha-hed get ar c'hoad-se a arru get an dachenn Haussu, ur pikol tachenn graet rac'h an tier get teolennou. Diskouez a ra bout bet un dachenn vat ha pinvik. Hiziv ema a-blad. Eno e welomp kentañ labour ar Jermaned. Ul linennig Decauville a zae moarvat d'an dachenn o deus foñdet ha kaset ar railhoù gete.

Monet a raomp neuze dre Candor. Eh arru e kêr e welan ar c'hentañ maouez chomet àr-lerc'h ar Jermaned, rak lezet o deus àr o lerc'h ar merc'hed dimezet, ar re gozh hag ar vugale. Ar merc'hed yaouank, ar baotred yaouank, ar gwazed en o ment, mem ar velean, a zo aet gete. Ar vaouez a gavomp a c'hoarzh : «Setu-ni dijablet èlkent ! » eme-hi. Met na gwallaozet eo kêr dezhe. Rac'h an tier a zo àr vord an hent a zo diskaret dezhe evit stankiñ an hent ha parraat doc'h hor c'hirri, hor c'hanonoù a bas. Arrest a raomp e-kreiz kêr hag e komzan get ur vaouez 26 vlez, 3 a vugale dezhi. He gwaz a zo soudard e Frañs. Kontiñ a ra din penaos ar Jermaned a rae d'ar merc'hed ha d'ar vugale labourat evite hep bout paeet na maget. Ha c'hoazh meur a

wezhañ e vezent bountet er prison pe lakaet da baeiñ amand. Ret e veze dezhe reiñ o gweleoù dezhe ha kousket en ur gognell bennak er gweleoù a chome gete pe àr ar plouz. An deizioù diwezhañ e veze graet dezhe chom er c'havoù hag e-pad an amzer-se ar Jermaned a garge en o c'hirri gloestraj hag ar pezh a blije dezhe.

Ar gwez a zo rac'h diskaret àr an hent. Bout a zo re neoazh n'o deus ket bet oar da ziskar a-grenn : chomet int en o sav, hanter heskennet pe troc'het.

Monet a raomp neuze dre Catigny hag eh arruomp àr-dro 9 eur 1/2 e Campagne. Eno ema dle deomp kousket. Met kent monet e kêr ema ret deomp klask ar vinotenn a ya d'ar pont koad taolet àr ar c'hanal. Noz eo ha ne welomp ket forzh-kaer. Skuizh omp. Graet hon eus tost da 5 lev. Arru a raomp d'en em lojiñ da 11 eur noz, en ur marchaosi, àr an teil tomm.

**20-03-1917** - Da 6 eur eh aomp àr-raok edan ar glav trema Guiscard. Àr an hent hevelep ravaj : avalegi troc'het, gwez diskaret, hentoù-houarn foñdet ha savet.

E Guiscard e taomp da benn a en em lojiñ rac'h en un dachenn frank. Hor burev en tural d'ar ru, e ti ar resevoir. Penndareoret eo rac'h an traoù en ti. Arañjet en doa ar Boched gweleoù evite lec'h ma kouskomp. Ar c'hroaz-hent hag ar pontoù a zo sailhet, tier ivez. Ar gar a zo a-blat. Met ne gavomp ket amañ c'hoazh ar gompagnunezh 22/5 a zleomp labourat geti. Aet eo pelloc'h rak avañs a ra hor soudarded atav ha ni àr o lerc'h !

Da 6 eur eh aomp kuit e'it Cugny lec'h mah arruomp da 9 eur d'an 21.

**21-03-1917** - Ema ar gompagnunezh a glaskomp eno hag a-benn, d'enderv, eh a hon tud da labourat geti da Jussy, da lakaat ur pont àr ar c'hanal, rak sailhet eo ivez ha rac'h ar



gêrigoù a zo tro-ha-tro d'ar c'hanal. An dud a oa enne a zo bountet d'hor c'havet. Ur soudard deomp, Haye e anv, a zo lazhet eno d'un tenn kanon tennet d'ar Jermaned àrnomp. Daet eo da Cugny da vout interret.

Me a zo-me distroet da Conchy get ar c'harr da glask an dud chomet eno hag ar boued.

**22-03-1917** - Donet a ran en-dro da vintin hag e kavomp an artilheri ec'h achap ha soudarded 24°, 22° é monet kuit. Savet eo hor Corps Colonial. 'Gozik sur on ma vo aet kuit ar gompagnunezh. Nag ur vandenn tud, kirri, kanonoù a gavan ! Oc'hpenn 20 kil. a zo anezhe, sur, hag arrest a zo ret din hep arsav. Donet a ran da benn neoazh a arru e Beaulieu lec'h ma tenava ar c'hirri.

Just etre Beaulieu hag Ecuilly e kavan ar gompagnunezh. Neuze ema ret postal arre e'it lojiñ tud hag ofiserion. Diaes eo kavet lec'h rak leun eo pep ti. Neoazh en un dachenn, Aubert Désiré, e-kreiz an douaroù e Ecuilly, e kavomp lec'h d'en em lojiñ rac'h. Truezeket lojeriz. Aneoued hon eus hor gwalc'h rak atav ema yen an amzer. Skorn a zo ha rev gwenn.

É klask lojeris d'an ofiserion e klevomp doereoù labour ar Jermaned. Savet o deus ar merc'hed yaouank a-dalek 15 vlez, ar c'hrennbaotred azalek 16 vlez, ar gwragez dizimez, ar wazed. Dastumet int bet àr dachenn ar gêrigoù èl loened, ur sac'h doc'h o c'hein ha boued gete evit daou ze. Kaset int bet, lod en tren, lod àr droad, trema ar sav-heol hag a-c'houde doere erbet n'en deus ket o zud anezhe. Nag un dristez evit ar geizh tud lamet o bugale a-zegete ! Eh omp amañ e ti ur vaouez a zalc'he tachenn e Lassigny hag e oa bet ret dezhi achap d'Ecuilly get he 4 a vugale da di he zud. A Ecuilly, ar Jermaned he c'hasas àrlene d'an Aisne da labourat. Eno e veze goulennet gete muioc'h a labour e'it ne c'hellent forniz, fall vevet, fall lojet, pas paeet. Chomet e oa bet klañv hag eh

oa distroet da di he zud. Tud an Aisne (Berlancourt) a oa ken didruez e'it o c'heizh kembroiz el ar Jermaned. Ar blez-mañ neuze ema lamet he daou grouadur koshañ geti hag he gwaz a zo dalc'het gete.

Un dra gwelet : e 'gozik rac'h an tachadoù lec'h ma paseomp an dud en deus tennet ag o c'huzhadennoù bannieloù triliv ha lakaet ar c'hozh bannieloù doc'h o zier.

Ne vern e pezh tachadoù e paseomp ema serrret ar c'houevr, ar c'holc'hedoù, en dineverioù (*gouttières*) ha rac'h ar pezh a dalve ar boan. Ar gwez nend int ket diskaret a zo diskroc'hennet d'an eneberion e'it o lakaat da sec'hiñ.

Merc'hed brazez a zo. Re 'rall a zo ganet o bugale roet dezhe get ar Jermaned. Reve ar merc'hed onest a gomzer doc'hte, ar re-se a zo bet tapet dre o faot, e'it bout daet mat. Nag ur stad e'it ar re dimezet a pa arruo o friedoù ! Nag ar vugaleigoù-se a vo sellet el milligeded... Nend eus ket kalz hag a zo bet palforset.

**23-03-1917** - Chom a raomp hiziv amañ. Vad a ray an diskuizh deomp. Met nag a aneoued hon eus ! Skorniñ a ra, ha start.

**24-03-1917** - Ar mintin-mañ eh aomp àr-raok da Orvillers dre Avricourt, Amy, Beuvraignes hag e welomp c'hoazh douar ar spont. Beuvraignes nend eus ket mui anad anezhoñ. Toulloù touchik-touch, tammoù koad, tammoù houarn, chouchoù chaoket...

Savet eo ar Corps Colon. hag ema goloet an hent a girri a bep seurt, a ganonoù, a dud.

Àr-dro 2 eur eh arruomp e Orvillers ha bec'h neuze e'it kaout ul lec'h ! Ar c'homandant a zo ret dezhoñ donet d'ober lec'h deomp.

**25-03-1917** - Sul. Diskuizh. An enderv-mañ e ta davedomp soudarded ar 4<sup>vet</sup> Komp. a zo foñdet ha rannet etre ar gompagnunezhoù arall. 39 a za davedomp-ni. An ofiserion ivez a zo cheñchet lod anezhe. Nend eus ket mui 'met 3 komp. e pep batailhon hag ur gompagnunezh mitraill. Labour hor bo 'dreist penn get ar cheñchamant-se.

**27-03-1917** - Arru eo an doere genomp eh aomp kuit arc'hoazh da Laneuville-Roye. Da 3 eur e vo ret sevel.

**28-03-1917** - Skornet en deus met nend eo ket yen-bras. Brav eo an hentoù. Ar c'hampemant a ya dre an hent berrañ (Moyenneville) met ar gompagnunezh a dap un dro a 6 lev dre Henevillers, Granvillers, Cressonsacq, ha get hentoù diskornet. Arru a raont e Laneuville, skuizh-brein, da 2 eur. En em arañj a ran-me get ur boufam a asant gober koan din ha da zaou kenseurt ha da reiñ ur gwele da Gonan ha din. Nag ur pred, ma c'heizh tud ! Ar boufam n'en deus ket koad : get kolon e ra tan. Prenet he deus uioù, 4 blank ar pezh, hag e lâr deomp he deus paeet 4L. 60 an dousenn !!! Kestenoù hoc'h, peder, en deus koustet an hevelep priz !! 6 blank a gemer e'it he foan ha rac'h an traoù-se a ra 10 lur !! eme-hi. Setu pennderoret an aritmetik.

Pissenlit he deus serrret ha n'he deus nag eoul na gwinegr...

A pa yaomp da gousket e kavomp ur gwele a zo pell kozh a-barzh, kalet èl ur maen, ha liñselioù en deus servijet d'un dousenniad en hor-raok. Fonnañpl e taolan kañfr a-barzh ha gouarn a ran man dilhad evit monet el loj-se. Da 3 eur an deiz àr-lerc'h ema ret divoulj.

**29-03-1917** - Teñvel eo. Glav a ra. Setu-ni àr an hent é kerzhet skosellek, hep goût trema 'men eh aomp. An deiz a zo

diwezhat. Brevet omp d'an c'hoant kousket hag ivez d'an hent. Dre Éraïne, Blincourt, Pont-St-Maxence eh aomp. Glav a ra bepred. E Pont-St-Maxence eh eus graet ur pont bagoù e'it pas ar C'horf Armee rak ur pont koad a zo bet lakaet e-lec'h an hanni mein foñdet d'ar Frañsizion pa oa ar retred 1914.

Arru a raomp àr-dro 1 eur, met lec'h nend eus ket. Ret eo deomp chom e fabourzh St-Maxence ha tourc'hellat e'it kavet lec'h. Donet a ran da benn ha nend eo ket fall hon traoù rak foen a zo e'it lakaat edan an dud.

**30/31-03/1<sup>añ</sup> a viz Imbril 1917** - Chomet omp amañ pelloc'h e'it ne kredemp. Arc'hoazh eh aomp àr-raok. (Oferenn er maner.) Tud é labourat e'it ar vro, 18 blank en eur.

**02-04-1917** - Da 5 eur e taer d'hon dihun e'it monet da Verberie, lec'h mah arruomp àr-dro 10 eur. Ur gêrig vihan honnen, min vat dezhi. An dud hon degemer a-feson. Donet a ran da benn a lojiñ ma ofiserion ha ma eil-ofis. e gweleoù

Ni 'zo-ni e ti goulle ul livour a Bariz en deus gwerzhet e c'hloestraj ha lakaet en e soñj gwerzhiñ ivez e di. Met ar c'houarnerez a lâr deomp en deus cheñchet soñj a-c'houde mand eo aet ar Jermaned àr-raok. Gouarn a ra e di evit c'hoazh.

É tonet du-mañ e tremenomp e meur a dachadig. En unan anezhe eh eus un davarn a vez graet « A la vieille bouteille » anezhi. Ur voutailh a zo kizellet er maen, a-dreist an nor, hag ur wennel a zo aet, ken farsus, da bakiñ he neizh àr ar beg anezhi hag an neizh a seblant skumenn ec'h achap ag ur voutailhad sistr pe gwin !

E Verberie ne chomomp ket pell. N'em eus ket oar da welet an iliz a zo da welet neoazh : traoù kozh a zo amañ. Ur Breizhad ivez a zo daet da zerc'hel kenwerzh, Karadek e anv ha houarnajour.

**03-04-1917** - Àr-dro 8 eur eh aomp àr-raok. Erc'h a ra. Yen eo. Da Morienval eh aomp hiziv. 15 K. bennak dre Saintine, Bethisy, Orrouy, Elincourt.

Àr-dro kreisteiz eh arruan get ar gompagnunezh. E tachenn Friry, àr hent Soisson e lakaer ma c'hompagnonezh ha nend eo ket fall hon traoù rak plouz a zo. Kavet a raomp ul lec'hig evidomp. Uioù a brenan, 4 blank ar pezh.

**04-04-1917** - Chomet omp amañ c'hoazh hiziv ha gwell-se rak glav a ra a-boullad. Cheñch a raomp burev. En un uzin e kavomp un tachad klouar lec'h mah eus àr an holl 3 gwele orsal get plouz. Ur fornev a alumomp a-benn a roa gwrez deomp. Nend omp ket drouk amañ. Ilizig X<sup>vet</sup> kantvlezad.

**05-04-1917** - Ar mintin-mañ eh aomp àr-raok arre da 8h15, div eur 'raok ar soudarded. Da Haute-Fontaine eh aomp. Arru a raomp 'raok ar soubenn. Un iliz ojival a zo get un tour mein uhel hañval doc'h hanni an Arvor. Donet a raomp da benn a lojiñ hon tud, un nebeudig e pep tachad. An dud, a-gentizh ma tostaomp d'an talbenn kozh, nend int ket ken amiañ.

Amañ eh eus mamennoù e kement lec'h a zo. An hanni kaerañ a zo doc'h tor ar menez.

**06-04-1917** - Àr-raok c'hoazh ur wezh ! 3 c'hardlev hepken d'ober. Da Montigny-Lengrain eh aomp. Da 5 eur 1/2 eh aomp kuit. Amzer gaer a vo met skornet eo ar mintin-mañ. Aesoc'h eo kerzhet. Er Vallée e esaeomp kavet lec'h met ret eo deomp breskenn pelloc'h e'it gober lec'h d'ar re du a zo àr hol lerc'h. Hor c'has a raer da dachenn kozh Les Gorges hag e groc'hoù hañval doc'h re an Aisnes hol lakaer. Bout a zo enne c'hoazh tammoù mein benet, pikol tammoù bras èl ur gampr vihan.

Amañ gwezharall e oa un dachenn. Bremañ eh eus un ti e'it desav chas hag o hentiñ. Ar vestrez ag an ti a lâr din ema rac'h ar vro da zaou aotrou, daou argantour, unan a Bariz an arall a Gastel-Thierri. Feurmet o deus o zachennnoù d'ar mem pastellek a zo roue ar c'hornad rak oc'hpenn 200 hektar a zo edan e zamani. Rac'h an dud a labour evitoñ, rac'h emaint sujet dezhoñ. Nend eus nemeton en deus droad da jiboes àr an douaroùier bras ha hanter noazh-se.

Doc'h serr-noz eh arru ar gemenn genomp e vo ret deomp achap arc'hoazh vintin, mintin-mat. Div gompagnunezh en deus oc'hpenn 35 kil. d'ober, en arall 30 ha ni un 20 bennak evit monet da Soissons da garter Sant-Medard.

**07-04-1917** - Da deir eur ema an dihun. Erc'h a ra. Yen eo. Fang leun an hentoù. Emberr ema karget ar botoù, gwlebet an dilhad.

Arru a raomp, goude bout heuliet hentoù kamm-digam, àr hent Soissons ha neuze eh aomp eeun get an hent. Kalon a vank d'an dud rak netra nend eus ket bet da zebriñ ar mintin-mañ ha poanius é kerzhet.

Arru a raomp dre hir amzer get al linennoù a zae betek amañ. Troc'het eo an hent-bras e meur a dachad hag al linenn hent-houarn vras a servij èl ur c'hleuz a yae ar soudarded da guzhet a-dreñv dezhoñ. Nend eo ket gwall foñdet ar gwez neoazh, met an tier, èl e pep tachad, a zo tañvouezet d'an tennoù.

Setu ster an Aisne, ken didrouz bremañ, hag en deus charreet kement a wad ar blezioù tremenet. Gwelet a raomp tourioù Soissons emberr, hag eh arruomp get tier kentañ kêr. Nend eo ket foñdet kêr èl ma oa foñdet Reims. Amañ, 'gozik pep ti en deus tapet un taol bennak, met 'gozik rac'h an tier ivez a c'heller kempenn en-dro. E Reims eh eus karterioù a-bezh, laosket, dismantret, e vo ret gober a-nevez.

Kêr a zo minet vat. Ne welomp ket kalz a dud disoudart. Tremen a raomp diâr pont ar Saozon, ur pont houarn graet moarvat d'ar Saozon. Àr an hent e welomp soudarded ag ur yoc'h rejimantoù. Àr-lerc'h bout diskuizhet un tammig en ul liorzeh eh aomp d'ar gar vihan d'en em lakaat en abri rak atav e kouezh erc'h. Eno e tebromp pred. E-pad an amzer ma tiskuizh an dud eh an da glask lojeris dezhe en Institut St-Medard hag en un tiig un tammig pelloc'h lec'h ma raomp hor burev.

Ne vimp ket drouk eno, e gweleoù ne chom mui anezhe 'met ar c'hoad hag ar sommier, en ur gredañs taolet ar he c'hwen hag a zo leuniet get plouz !

Doc'h serr-noz e serran pissenlit d'ober saladenn. Burzhud d'ar vad a ra deomp.

**08-04-1917** - Sul Fask. Monet a raomp d'an oferenn da iliz-vamm Soissons. Foñdet-mat eo ar gaezh iliz. D'an ordiner e vez lâret an oferenn er vestial vras. Hiziv an alezonour ag an Divizion en deus goulennet oferenniñ en iliz. Ar person-arc'hveleg en deus asantet hag ema daet muzik an Divizion da c'hoari e-pad an oferenn. Ur yoc'h soudarded a zo en oferenn. Àr-lerc'h an oferenn, an ao. person hon trugereka bout daet ken niverus d'e iliz. « 20 vlez 'zo eh on e Soissons, eme-eñ, ha n'em eus ket biskoazh gwelet kement a soudarded àr-un-dro em iliz ». Degas a ra soñj deomp ivez en deus Sant-Loeiz pedet en iliz-mañ ha Janed-Ark pedet ha resevet H. S.

Un devezh kaer a zo hiziv ha didrouz omp amañ.

**09/10/11/12-04-1917** - Labourat a ra hon tud e Park ar Génie, just e-talomp, é tiskarg koad degaset get tankirri. Nend eo ket start al labour met fall amzer a zo : yen eo an amzer èl e-kreiz ar gouiañv. Bouilhardoù erc'h, glav, grizilh a ra. Ne ouiomp ket-ni neoazh petra eo kaout aneoued : tan a zo er chemical noz-ha-deiz, hag ur gaouad !

Doc'h serr-noz eh arru an doere genompet monet da Dernity-Sorny get ar gomp. 29/3 ag ar Génie. Eh aomp da arañj hentoù ha pontoù mar araokaer.

**13-04-1917** - Da 5 eur eh an àr-raok get tri den, dre Crouy, Vuilly, da glask lec'h d'hon tud. Àr an hent, a pah arruomp get tachenn Montgarni, e kavomp pezhioù kanon e kement kognell a zo. Breizhiz-Veur en deus muioc'h evidomp.

Amañ, èl er Somme, ar Jermaned en deus diskaret rac'h an tier, troc'het rac'h ar gwez frouezh, lakaet an hentoù, ar groc'hoù da sailh. A pah arruomp ema forzh diaes en em lojiñ. Donet a raomp da benn neoazh get kalz a boan.

**14-04-1917** - En un toull krouizet e kostez ur vorgleuz eh aomp. Nend eo ket gwall vrav hon traoù, met uhel omp ha gwelet a raomp an emgann. Ar c'hanon a darzh hep arsav ha kouezh a ra glav dir àr Laffaux ha rac'h an dorgenn a zo uheloc'h e'it ar gêrig-se. Gwelet a raomp ivez un aerlestr éteval. Troiñ a ra èl un delenn distaget ag ur wezenn ha pell e chom da buniñ elsè en aer ag an amzer. Donet a ra da zouariñ etre linennoù ar Jermaned hag hor re. An den a oa a-barzh a oa lazhet get un tenn perchanj.

**15-04-1917** - Kenderc'hel a ra an tennoù a bep tu. E-kreiz noz ar 15 d'an 16 eh omp dihunet àr-dro 2 eur d'ur potarn a gouezh e-tal hol loj, 30 m. bennak. D'hon tro da resev bremañ. Oc'hpenn ur c'hant a gouezh tro-ha-tro deomp. Arc'hoazh vintin ema an taol bras.

**16-04-1917** - Tarzhal a ra muioc'h-mui an traoù. Da 8 eur e tleomp bout prest e'it monet da 10 eur da labourat àr an hentoù. Foul ar mintin-mañ e'it kempenn pep tra. Lein ha merenn a zebrer lec'h-oc'h-lec'h. Der voneur ema kaer rak



dec'h d'an noz en doa deraouet ar glav da gouezh. Àr-dro 10 eur eh a an dud kuit. Ni 'chom-ni get ar c'hapiten da c'hortoz ma vo gouiet mard aomp da Vauxaillon. Met emberr eh arru an doere ne gerzh ket a-feson an traoù. Doc'h an tu dehou ema aet mat an traoù, met e Laffaux, goude mand eo paseet hor soudarded, Jermaned, kuzhet edan an douar, a fard er-maez get mitrailleuses ha greunad hag a sko e kein hor soudarded. Dav eo dezhe donet àr-dreñv, ar re a c'hell.

Doc'h an tu dehou, Jermaned a fard àr hor re div pe teir gwezh hag ema ret dezhe donet àr-dreñv beta Vauxaillon. Reve ma klevan ema soudarded morilhon a oa e-kreiz hag en deus kilet a zo bet abek da rac'h ar re-ni kiliñ, hag èl rezon, kollet a zo muioc'h é monet àr-dreñv e'it é monet àr-raok. Dre prizonerion, lazhet, gwallaozet, eh eus 5 000 mank en hon Divizion ha netra nend eus graet. Hon tud-ni a zo aet betak al linenn hent-houarn edandouar da rac'hiñ fang àr an hentoù get ar Génie 19/3. Burzhud nend eus ket bet lazhet hani anezhe. Ar re gozh ag ar gompagnunezh a lârn'o deus ket gwelet biskoazh kement a obusoù e kouezh àrnezh. Ar Génie en doa kollet 12 den en tachad-se : 1 lazhet, 11 gwallaozet. Gwelet e veze hon tud e kêr ha tenniñ a rae Jermaned àrnezh hep dehan hag, èl rezon, toull erbet d'en em guzhet.

Glav bras a oa daet ivez hag a pah arruazont e kreiznoz eh oa an dour e kouezh àrnomp-ni en hol loj ivez. Glav àr al lein, dour é redek edandomp. Skornet e oan da vintin...

**17-04-1917** - ... a pa oan dihunet. Diloj a oa ret hag e yazomp doc'htu d'ar groc'h doc'h tor ar menez e-tal ar c'hapiten.

Arc'hoazh vintin eh aomp d'ur c'hav (unan ag ar re lezet d'ar Jermaned) d'ober hor burev ha da gousket.

**18-04-1917** - Setu-ni en hol lojeris nevez : gwell eo hon

traoù. Doereoù mat a zo hag hon digoll ag an erc'h a gouezh !  
En Aisne lec'h ma oamp e penn kentañ ar brezel e kerzh mat  
an traoù. Araokaat a raer ha prizonerion a zo kemeret.

**19-04-1917** - Daet eo an amzer gaer. Lâret a zo d'ar  
gompagnunezh Génie a labouromp geti monet da Crouy hag  
ac'halese e yay d'ar Fort-Conde evit kempenn ar c'hreñvlec'h-  
se da zifenn doc'h ar Jermaned. Chomet omp-ni amañ da  
c'hortoz traoù nevez. Hon tud a labour d'arañj an hentoù ha  
da gempenn beg ar groc'hoù diskaret d'ar Jermaned.

**20-04-1917** - Ar mintin-mañ eh arru kemenn lakaat tud da  
imboudiñ ar gwez frouezh heskennet d'an eneberion. Ur soñj  
mat a-dra-sur, rak ur yoc'h gwez yaouank a c'heller soviñ doc'h  
o grefiñ a-benn. Re 'rall, re vras, hag a zo bet diskroc'hennet, e  
c'hellahe ivez bout sovet doc'h o gronniñ get pri ha pillhot. Da  
c'hortoz labour arall ne fehe, a-dra-sur, bout kavet gwell implij  
d'an dud a vicher.

Kaer-bras eo hiziv ha kerzhet a ra ar c'hanonoù.

**21-04-1917** - Derc'hel a ra an amzer vat met ivez aesoc'h  
eo d'an eneberion el deomp-ni gwelet petra a bas. D'an noz  
neuze e taolont potarnoù àrnomp muioc'h e'it bihanoc'h.

**22-04-1917** - Hiziv eh as an Divizion àr-dreñv. Chom a  
raomp-ni amañ da arañj hentoù. Henoazh e komañsont abred  
da skoiñ àrnomp.

Hep arsav e kouezh potarnoù àr kêr. A-gleiz, a-zehou,  
a-raok, a-dreñv. Roñseed a dap c'hoazh tammoù, unan anezhe  
mem a zo lazhet, met den n'en deus droug. Tro-ha-tro deomp  
eh eus kouezhet un dousenniad bennak. Àr hor c'hav hani !

**23-04-1917** - A-vintin e komañs an c'hoari boullou.

Dizolo eo an amzer, ha splann. Bale a ra an aerlistri. Gwell e vo deomp cheñch lec'h ! Goulenn a raomp bout lesket da grouiziñ toullou doc'h tor kreisteiz torgenn Terny. Gober a ran unan evidon ; ar re 'rall a labour evit gober unan brasoc'h evit ar burev. Amañ a-wel ne vo ket riskl deomp ma kouezho potarn erbet àrnomp.

**24-04-1917** - Kousket hon eus dous en hol lec'h nevez. Kaer eo ha nend eo ket mouest èl ur c'hav. Donet a raer da lâret eh eus plouz da douch, 40 feskenn dre gomp. Ur spont ! Ed a gaser deomp hep bout dornet. Ed ag ur bern chomet doc'h tu ar Jermaned hag a oa foñdet un tammig al lein anezhoñ. E-lec'h lakaat a-kostez ar pezh a oa mat da zorniñ ema kaset an ed deomp, mat ha fall...

Sklaer eo an amzer ha bale a ra an aerlistri. Kann a sav etreze. Gwelet a raomp unan é kouezh trema Leuilly, àr e gostez. Ar re a zo bet doc'h er gwelet a lâr ema toullet penn unan get ur boled. Daet eo tud ha mekanig da vrezilhiñ àr an douar. A-dreist Laffaux e kouezh un arall a zo kroget an tan a-barzh. Etre an div linenn ema kouezhet. Setu tri blez tuchant eh on é sellet doc'h an aerlistri é kann hag ar wezh kentañ eo din gwelet re é teval.

**25-04-1917** - Freskaet en deus an amzer. Yen eo mem ar mintin-mañ. Fentuset ur vro ! Doc'h an noz e sko ar c'hanon doc'h tu Vailly pe kreñvlec'h Conde. Pell 'zo n'en deus ket tarzhet an traoù èl-se.

**26-04-1917** - Fresk atav. Doc'h an noz neoazh e kaera ha gurun doc'htu. Lâret a raer er gazetoù ema ur spont an emgannoù dirak Breizhiz-Veur.

**27-04-1917** - Ar wezh-mañ ema an hañv a zo arru. Dousaet

en deus an amzer, ur bam, hag hep arvar ema kroget an amzer gaer. (Marv Bleimor)

**28-04-1917** - Netra a vad. Didrouz eo an traoù met d'an noz e tarzh an traoù èl bemdez.

**29-04-1917** - Henoazh doc'h goubanwel-noz e ta un aerlestr da esae diskenn hor silzigenn. Arru a ra tostik-tra dezhi ha kerzhet a ra an tennoù met nen da ket da benn ! Un aerlestr evezhour ag hor re a blant àrnezhon hag a vount ur fall daol get ar Jerman moarvat, rak er gwelet a raomp ec'h achap en ur vranseñlat truek ! Diskenn a ra tost d'an douar ha ken souezhet eo an holl ma ne denner ket àrnezhon. Monet a ra da zeval en e linennoù.

**30-04-1917** - Didrouz eo an traoù. E-leizh a artilheured neoazh a za d'ar P. S. a zo amañ, lod gwallaozet d'an obusoù, lod arall d'an aezhennoù fall. D'an noz e sko start ar Jermaned àrnomp, met doc'h tor ar menez amañ eh omp ha ne zoujomp ket kalz o houarnaj.

1<sup>añ</sup> a viz Mae 1917 - Ar mintin-mañ eh eus gurunaj. Me gred eh eus ur fard d'ober izeloc'h e'it Laffaux. Soudarded àr varc'h a zo kaset àr droad d'er gober ha tankoù a zo arru e'it monet en o raok (Kannkar ?)

**02-05-1917** - E vezer é kempenn un taol arall. Hep arsav e tarzh ar c'hanonoù. Tarzhal a raont mem re meur a wezh, rak unan a re Breizhiz-Veur a dalp hag a lazh un den pe daou hag a wallaoz 7 pe 8 arall.

Henoazh eh arru ar gemenn genomp da vonet arc'hoazh vintin da Crouy. Da 4 eur e tle ar gompagnunezh monet à-raok.

**03-05-1917** - Nend eo ket deiz c'hoazh a pah aomp àr-raok. Fall nozvezh kousket hon eus bet rak hep dehan en deus tennet ar c'hanonoù.

Ni 'grap-ni diàr torgenn Terny e'it berraat an hent. Gwelet a raomp ar groc'hoù lec'h ma oa kuzhet ar Jermaned a-c'houde 3 blez tuchant. Gellout a raomp tenniñ àrnezh ! Treuziñ a raomp Clamecy. Er gêrig-mañ ne chom ket mui un ti en e sav. Rac'h emaint taolet a-blad get ar Jermaned 'raok monet kuit. Dismantret eo pep tra ha souezhus eo gwelet an natur, edan dorn Doue, é tihun èl bep plez hep en em soursial ag ardoù an dud foll. Sapiñ a ra pep plantenn, kan a ra pep eñv ha bouezh an eostig, ken gwiv, ken lemm meur a wezh, a sav er flagennoù didrouz. Ar gwez troc'het d'ar Jermaned a sap c'hoazh, a vleuñv evit ar wezh diwezhañ, ar bravañ ma o deus bleuñvet en o amzer, evit diskouez pechañs dre o braventez ha dre ar soñj ag ar frouezh o dezhe c'hoazh douget, pegen mezhus eo labour ar Jermaned.


Arru a raomp e Crouy àr-dro 6 eur ha nend eus ket c'hoazh kalz a dud ar voutj. Kemenn am eus monet da gavet ar c'hapiten Raskol, met setu, èl e rac'h ar gemennoù a raer deomp er vicher-mañ, ne lârer ket e pezh lec'h ema an Ao. Raskol-se, a be rejimant ema. E Crouy n'en anaver ket, nend eus ket lec'h evidomp. Redek a raomp a-gleiz, a-zehou. Aters a raomp ar re a gavomp àr sav. Netra ! Àr-dro 8 eur bennak hepken eh ouiomp ema an ao -se e Soissons !

Torriñ mein, kempenn hentoù, setu hol labour...

Doc'h an enderv eh arru genomp ar gwellañ doere. Monet a ra ar Foll kuit !... An Ao. Dupoux a za en e lec'h.

Ar mintin-mañ em eus gwelet kadkirri. Unan anezhe a oa Franche-Comté e anv, an arall Bretagne ha hennañ eh oa àrnezhoñ erminigoù. E gwirionez, diskouez a raont bout spontus ar benveger nevez-mañ. Pounner int, met kerzhet a raont c'hoazh fonnapl ha ne gredan ket ema aes o arrest.

Rodoù a zo edante met e-lec'h touch doc'h an douar e rudellont  
 àr un hent-houarn hep fin èl men :



Ar c'harr a zo dir krommet, dir ag ar c'haletañ, ha troc'het  
 a-skelp e'it gober d'ar boledoù ruskliñ àrnezhon hep monet  
 a-barzh. Un nor a zo àrnezhon met kloz e serr, hag àr al lein  
 eh eus toulloù-tud ha faoutennoù strizh evit gwelet. Ur pezh  
 75 ha 4 mindrailherez a servij a-barzh e'it gober labour an  
 Ankoù.

**04-05-1917** - Ar mintin-mañ eh a ar Foll àr-raok. Kant  
 ard a ra e'it pas ar gompagnunezh d'an arall a ziskouez bout  
 skuizh é selaou doc'h e zivizoù dibenn. Ne c'hell parraat a zikri  
 rac'h an eil-ofiserion hag ar c'haporaled ! Met me 'gred n'en  
 deus ket c'hoant an arall da lonkiñ e gomzoù.

Kentizh eh adsavomp-ni ar popote goude bout bet komzet  
 d'ar mestr nevez. Ar Foll a ya kuit goude merenn. Ne lâz  
 kenavo da hani ag ar gompagnunezh na d'e vurev. Stardiñ a ra  
 dorn an ofiserion na oant ket getoù er gompagnunezh. Ar re  
 'rall er salut ha netra ken, hag achap a ra èl ul laer !

**05-05-1917** - En em akoursat a ra ar c'homandant nevez

doc'homp ha ni doc'htoñ. Letenant e oa er valtouterion hag e Breizh ema e chom, e Ploneour-Trez. E vaouez a zo mestrezskol. Pell ema bet e koad Kamorzh get ar c'hoaderion. Un den dous eo hag a dro lies e deod en e veg 'raok lâret ar pezh en deus da lâret. Nag ur c'hemm a gavomp-ni !

**06-05-1917** - Fardiñ a raer du-se uheloc'h. E-pad an deiz hag ul lodenn ag an noz e tarzha ar c'hanon, ha noz-ha-deiz ivez e kouezh potarnoù amañ. N'hon eus ket neoazh d'en em glem. Hani ne gouezh er ru lec'h mah omp.

**07-05-1917** - Atav e pad an trouz met start eo distag an eneberion. Bet eo bet ar c'hadkirri ha labour vat o deus graet. Unan anezhe, aet re dost d'ur fozell-difenn a gouezh àr e gostez a-barzh hag a chom eno 2 zeiz. Donet a raer da benn ag en tenniñ er-maez hag ema daet amañ. Monet a ran d'er gwelet doc'h an noz. Anat eo ne c'hell ket an eneberion en em zifenn kalz doc'h ar mekanig-mañ. Tennet o deus àrnezhoñ par m'o deus gelllet, ha gwelet a raer àr e gostezioù lec'h an taolioù, met boledoù ha skolloù dir a zo daet d'en em bladiñ àr an dir. Al liv hepken a zo distaget ! Nend eus 'met en tachadoù tinerañ, lantern, barennoù graet get mental blot, hag a zo bet toullet. E gwirionez, ar re a zo en diabarzh a zo en abri ha ne zoujont 'met ur potarn bras bennak a zahe da gouezh àrnezhe. Ar Chasseurs a gerzh gete (17°) a zo leun a fiziañs enne hag a lâr deomp ne c'houlennont 'met kerzhet gete. E-leizh bihanoc'h a dud a gollont gete ha labour fonnapl a raont. Pec'hed eo nend eus ket kustumet muioc'h a soudarded da gerzhet gete. Bout a zo re hag o laosk da vonet o-unan hag e chom kuzhet, hag el-se ema kollet rac'h o labour. Komz a ra ur soudard anezhe deomp ag ur c'harr a oa bet gronnet amañ d'ar Jermaned. Skrebilhet o doa doc'h ar mindrailherezed, sailhet o doa àr al lein, esaeet o doa e kement feson a oa arrest ar mekanig

ha parraat a-zoc'hton a ober droug. Arru e oa klañv mem ar re a oa a-barzh a pa zas ur soñj luc'heus d'an eil-ofiser a oa doc'h ar c'hondu. En un taol e laka e garr da droiñ àrnezhoñ e-unan ha setu ma Jermaned taolet a-gleiz hag a-zehou... Ha tan àrnezhe !

Cheñchamant amzer henoazh. Arneñv a zo ha glav a ray...

**08-05-1917** - Dihun a ran get dour edandon. Toenn erbet nend eus ket àr hon ti hag ar glav a zeval em gwele. Àr-dro peder eur ema ret din labourat da esae en em c'houarantat met gwleeb on !

Ret eo deomp cheñch burev ha monet izeloc'h lec'h mah eus un doennn. Amañ eh omp skornet d'an avel a zibouk a bep lec'h en ti foñdet-mañ. Labour a gavomp da stankiñ doc'htoñ.

**09-05-1917** - Gwell eh a an traoù ! Amzer gaer a zo é tonet. Tommet mat a ra mem en heol.

**10-05-1917** - Glav a ra 'gozik bemdez ur barrad bennak, ha ken kaer e ta an amzer goude ma weler kement tra a zo é c'hlasat. Ur frond c'hwek a zo àr ar maezoù...

**11/12-05-1917** - Didrouz omp bepred ha setu daou zeiz ne daol ket ar Jermaned àrnomp o lousteri.

**13-05-1917** - Henoazh eh ouiomp eh aomp kuit arc'hoazh vintin àr-dreñv. Koutant eo ar soudarded yaouank ; pell 'zo e oant é trouzal e'it bout kaset da ziskuizh.

**14-05-1917** - Àr-raok da 5 eur da vintin e'it Mercin-et-Vaux. Treuziñ a raomp kêr Soissons. Donet a ra tud da chom dezhi en-dro ; merc'hed dreist-pep-tra, hag en o mesk re hag



en dehe dleet chom lec'h ma oant. Souezhus eo mem m'o lezer da zonet du-mañ d'ampouezoniñ ar soudarded. Monet a raomp dre an hent hor boa kemeret.

Meur a liorzha zo hadet traoù a-barzh ha gwelet a raer tud é labourat. Ar vuhez a zo kreñvoc'h e'it ar marv ha Doue en e furnezh he laka da souriñ àrnezhon daousto da zismantroù mab-den.

**15-05-1917** - Nend omp ket drouk amañ, distag doc'h ar re 'rall, mistr en hon tachenn. Labour a zo neoazh get rac'h ar cheñchamantoù-se a zo get ar bae nevez.

Morilles a gavomp ar pezh a garomp er c'hoad evit gwellaat hor predoù. Pec'hed eo eh eus èl bepred mezverion hag a za d'hon dirañj. Chomel a raont da gousket er-maez ha donet a raont get pennoù !

**16-05-1917** - Noz. Arru doere monet kuit arc'hoazh.

**17-05-1917** - Dre Longpont (abati revin). Koad brav ha glas. Da 3 eur mintin kuit. Poanier kerzhet en hent en noz. Arru e Corcy abred. Kêrig klouar ha bokedek. Lennoù, manerioù, tier gronnet a goad, a wez frouezh. Monet a raomp d'an oferenn-bred rak Yaou an Emsav eo hag e klevomp ur predeg, unan ag ar re kaerañ sur hon eus klevet a-c'houde pell 'zo. Ar person a gomz mat ha kemer a ra digarez àr ar gouel e'it diviz d'an dud penaos lezenn Jezuz a zo bet a verpet ul lezenn a emsav e'it ar speredoù, e'it ar moral vuhezegezh hag ivez e'it traoù ar c'horf. Uhel-mat eo e soñjoù e'it ar re a zo doc'h er selaou marse, met ne vern, vad en deus graet d'ar re en deus gellet er c'hompren. En em gempenn a raomp goude evit monet kuit arc'hoazh d'enderv.

**18-05-1917** - Àr-dro un eur eh aomp-ni àr-raok da gar

Longpont. Dre voneur nend eo ket hir an hent, rak ken pounner eo an amzer ma vehe bet start gober hent hiziv. Àr-dro peder eur eh aomp kuit. Nend omp ket drouk en hor vagon. Plouz a zo roet deomp hag e c'hellomp en em astenn. Monet a raomp dre « Gouriz vras Pariz » reve an akustumañs rak e Frañs ema ret tremen eno mar faot deoc'h monet ag ar c'hreisnoz d'ar c'hreisteiz pe ag ar gevred d'ar walern !...

**19-05-1917** - Dre Troyes, Bar-sur-Aube, Chaumont e pasomp hag e Vesoul ema ret deomp diskenn, ne ouiomp ket perak, evit gortoz an tren a gas ar vatailhon-ni. Eno e kavomp an tu da zebrñ er gar : soubenn, ariko, daou ui, keuz, bara, gwin evit 7 real.

Àr-dro 8 eur eh arru an tren arall ha setu-ni àr hent Belfort lec'h mah arruomp àr-dro kreisnoz. En ur gazarn en hol lakaer. Plouz a zo ha kousket a raomp dous betek an deiz àr-lerc'h vintin.

**20-05-1917** - Devezh kaer ha klouar. E kazarn Des Barres eh omp. Ne blij ket kalz al lojeris soudardek-mañ din... Met èl ne chomomp ket pell n'en em glemmomp ket. Àr-lerc'h merenn, da 2 eur, eh aomp-ni kuit. Pourfitiñ a ran e'it gober un dro e kêr. Minet mat eo. An tier a zo mistr ha savet mat. Tier pinvik a zo, ruioù ledan hag aeret mat. Lâret e vehe ema savet ar gêrig-mañ ar blezioù paseet. Ar c'hreñvlec'h a zo a-zehou da gêr a sav uhel a-dreist kêr hag a zegas soñj din un tammig a gastell Edimburg... An dud a ziskouez bout karadek.

Tomm eo, ha pouk eo kerzhet. Monet a raomp er-maez a gêr, er-maez ag ar vagoerioù - rak kêr a zo magoeret- hag e kavomp ar fabourzh ken kaerik get e dier bokedet, an dud azezet àr dreuzoù o dor é kemer an aer ha, daousto d'an amzer drist-mañ, ur minc'hoarzh a zegemer mat àr o diweuz. Da Vezelois eh aomp. Start eo kerzhet. Arru a raomp gwleb-brein

goude ur vroig leun a blañchadoù foen glas-glas piket e pep lec'h get bokedoù melen ar pav-yar. Diragomp, trema an hanternoz, e weler ar menezioù kentañ kabet get koadoù a weler a-boan kuzhet mand int get ar vrumenn.

Diaes eo deomp lakaat hon tud e kêr. Lec'h a zo d'an dud, met d'an dud hepken... ha d'ar roñseed ; met hani ne venn ag ar gegin nag a gegin an ofiserion. Ar re-mañ ne blijont ket kalz e neptu...

Nag ur yoc'h re vezv a zo c'hoazh ! Chomet a zo un 1/2 dousenn àr an hent ha mem e Belfort ! Dre voneur ema ar re na talvont ket kalz a dra en deus mezvet. Neoazh teurel a raer ar gare àr ar Vretoned holl. Hag e gwirionez al lodenn muiañ anezhe a zo Bretoned, tud dizimez, tud divroet, tud dihentet.

Koutant on bout daet d'ar c'horn-mañ ag an Alzas, da welet un tammig ur vo ha tud dishañval doc'h ar re hon eus gwelet beta bremañ.

**21-05-1917** - Na vad en deus graet an nozvezh kousket deomp àr-lerc'h ar redadenn (5 K.) edan an heol. A-benn e teraou al labour. Kousi paper a zo ret ; da gentañ get ar brizonerion hag ivez get ar re a ya da vale d'ar gêr.

**22-05-1917** - Komz a raer a-benn a gas an dud da redek da vintin ha d'ober o amoet. Monet a rint arc'hoazh e'it ar wezh gentañ.

**23-05-1917** - Un doere arall : achu eo an diskuizh ! Arc'hoazh vintin ema ret din achap get ar c'hampemant da 3 eur 1/2 e'it monet da Ballersdorf en Alzas gwezharall jerman. Oc'h penn 6 lev hon eus d'ober.

**24-05-1917** - Setu-ni en hent. Brav eo kerzhet. Ur blijadur a gavomp d'an eur-mañ, hag ar parkoùier, ar gwez a zo ken

kaer ; an evned a gan ken dous ! Ar maezoù a zo gronnet en ur vrumenn a cheñch liv a-gentizh ma tarzh an deiz, ha gwelet a raomp dre bep div wezh ur c'hloc'hdi é tibouk er vrumenn, pe ur maner a zo èl dislivet du-se trema an hanternoz. Da 5 eur 20 e tremenomp en tachad a oa gwezharall an disparti etre Jermani ha Bro-Frañs. Un davarn a zo just e-tal ar pont a dreuz ar wazh a rae an disparti hag an tavarnour en deus lamet ar pezh a oa àr e di ha merket bremañ e galleg « Café des deux frontières » ! Tremena a raomp e Petit-Croix, ur vourc'hig didrouz, ha goude e Montroux-Vieux. Emberr, en ur flagenn bourrus, eh arruomp get Dannemarie (an Intron Varia) lec'h ma en deus ar Jermaned lakaet pont an hent-houarn da sailh. Esaet a zo bet er sevel en-dro, a lârer deomp, met ar Jermaned a ziskar a-benn al labour. Ema rac'h an dud dre-mañ.

Àr an hent e kavomp tud é monet d'o labour. Kirri, araroù a zo doc'hte roñseed, met liesoc'h ec'hen ha saout. Saout a stager lies dre-mañ hag o stagiñ a raer èl roñseed, get ar c'holier. E Dannemarie eh an e ti ul levrouer da breniñ ur gartenn ag ar vro. An ao. a gomz un tammig galleg. Neoazh amañ e komzer dreist-pep-tra alamaneg hag alzasianeg. An anvioù a zo 'gozik rac'h jermanek. Ar speredoù ne lâran ket. Burzhud eo mem gwelet ar vugale bihanik-tra é komz mat en tri yezh. Nend eus ket kouezhet kalz a botarnoù amañ : gwelet a ran hepken un ti a zo bet foñdet an diaraok anezhoñ. Komañs a ra an amzer tommet. Dre voneur e tostomp.

Setu du-se, kuzhet doc'h kostez ar c'hoad, Ballersdorf lec'h mah aomp. Badricourt a raer ag an tachad-mañ e galleg. Eh omp tost d'al linenn. Neoazh rac'h an dud a zo atav amañ. Degemer mat a raont deomp. Met ar Jermaned a zo falloc'h ! Setu pell 'zo n'o deus ket tennet, ha just a pah arruomp e kouezh unan àr an iliz hag ur c'hant bennak a-gleiz hag a-zehou àr ar gêrig. Ret eo deomp monet da guzhet en un abri graet e-kreiz kêr rak amañ nend eus na kav na bouzellenn.

Monet a raomp en un davarn da zebriñ un tamm harzel ha da evet ur wezh bier.

Àr-dro kreisteiz eh arru ar gompagnunezh hag ema lakaet pep unan en e lec'h emberr. Lojet mat omp rac'h. Kavet a raer da evet ivez. Met na skuizh omp ! Un nozvezh kousket a ray vad deomp a-dra-sur.

**25-05-1917** - Diskuizhet mat hon eus. Monet a raomp er-maez da skriv edan ar gwez-kistin-Spagn hag ar c'higenez. A-vod eo an traoù.

Miz Mari a vez bemnoz. Monet a ran henoazh. Hañval eo an iliziad doc'h re hor bro. A-gleiz ema ar merc'hed, merc'hed yaouank dreist-pep-tra ; doc'h an tu dehou, ar wazed. E galleg e pedont ha vad a ra klevet ar geizh tud-mañ a zo bet ret dezhe cheñch kel lies a yezh é komz atav ar yezh a garont ar muiañ.

An iliz a zo bet savet goude ar blez 70. Bravik eo ha kempennet brav an diabarzh. Delwenn ar Werc'hez a zo gronnet a vokedoù, dreist-pep-tra re gwenn. An holl en em zalc'h mat en iliz. Gwelet a raer o deus feiz. Ur ganenn e galleg a lâront hag a zo kensoniet get an orglezoù. Ur yoc'h tud a zo en iliz e'it ur vroig ker bihan. Divourapl eo evidomp-ni marse klevet distilh gallek an dud-mañ, met ne faot ket ankouaat e komzont dalbezh alzasianeg.

**26-05-1917** - Gober a ran un dro er vourc'h. Rac'h an tier a zo minet mat ha savet reve an hevelep tres. Me 'soñje, é welet limajoù Hansi, en devoa karget un tammig, met e gwirionez èl-se ema ar vro. Pep tiig a zo savet get koad kroaz-digroaz hag àr al lein un doennn vras a zibas ar vagoerioù hag a zo troc'het a-skelp ar c'hornoù anezhi. Dirak an ti, lies eh eus ul liorzbig get bokedoù a-barzh. Doc'h an noz, rac'h an dud en em zastum evit Miz Mari hag eh aont get o chapeled en o dorn. Àr-lerc'h miz Mari, paotred ha merc'hed, re yaouank ha

re kozh, èl e Breizh, a azez àr dreuzoù an norioù pe àr brichoù er-maez doc'h an ti hag a ziviz, a c'hoarzh. Gwelet a raer ema onest an dud ag ar vro-mañ hag emaint sevenaetoc'h e'it ar re a ra goap anezhe. Rak al lañstefoued, tudjentiligoù e karg pe mevelion, a gav souezhus e c'hell tud yaouank bout kevret hep lousteri... Leun eo o begoù-int a gomzoù lous. Bout a zo genomp daou pe tri kozh aotrou a Bariz, hag ar re-se a laka o flijadur 'dreist kement lezenn a zo. Me 'respont deoc'h ema diaes o lakaat da anzav e tle en onestiz bout istimetoc'h e'it ar bailhardegezh.

**27-05-1917** - Sul ar Pantekost. Monet a raomp d'an oferenn-bred. A-vod ema kempennet e draoù d'ar person. Leun eo an iliz a dud. Doc'h un tu ar wazed, doc'h an tu 'rall ar merc'hed. Tu ar merc'hed a zo goarniset-brav. Tost d'an aoter ema ar vugale. Àr-lerc'h ar merc'hedigoù, ar c'hrannverc'hed, ar merc'hed yaouank, ar vaouezed yaouank hag ar re gozh. Rac'h emaint gwisket fur. Keuz em eus neoazh pas gwelet sklom bras ha dañter an Alzas. Ar merc'hed yaouank en deus kemeret guskemant Pariz hag, èl rezon, emaint diwezhat. Neoazh nend int ket dihaill ha gwelet a raer emaint yac'h a wad é welet o bougennoù ruz ha plaen hep gor erbet, o daoulagad splann ha dous àr-un-dro.

An iliz a zo kempennet brav. Taolennoù livet, gwerennoù livet, hent ar groaz kizellet. Rac'h an dra-se a zo graet get an c'hoant d'ober brav, d'ober kaer. Pec'hed eo eh eus en iliz delwennoù ne jaojont ket doc'hti, traoù palastr fall livet hag ivez doc'h an armel santel a zo graet reve tres Munich.

Ar baotred a zo e-tal en orglezoù a gan, get teir bouezh dishañval hag an orglezoù a garg an iliz get e vouezh aelus.

Bout a zo bouezhioù nend int ket parfet met re 'rall o digoll.

D'enderv eh eus gosperoù ha da goubanwel-noz miz Mari

èl bepred. Er predeg, ar person a gomz e jermaned doc'h e dud ha me 'wel eh eus tud amoet (soudarded) hag a zo souezhet a gement-se !... Gwir eo ema diaes da Frañsizion kompren al liberte. Sellit an taolennoù a servij da verchiñ an hentoù. Ar Jermaned en doa-int lezet ar re a oa er vro hag a oa bet lakaet get Napoleon. Merket a zo àrnezhe « *Haut-Rhin. Route Imperiale N°...* » Ha kentizh mand eo arru ar Frañsizion amañ o deus kredet eh oa kollet ar Republik ma chome ar gerioù-se. Diskaret o deus ar ger « imp. » get ar gizell ha lakaet en e lec'h ar ger « nat. » Nag ur gavadenn !! Ar gar a oa Ballersdorf hec'h anv a zo troet e Badricourt. Un dra a zo ankouaet : kas an tren betek ar gar !...

**28-05-1917** - Devezh didrouz. Dre-mañ da lun ar Pantekost e veze diskuizhet ivez gwezharall. An dud ne labouront ket er parkoù atav. Gober a raont àr-dro o zraoù ha bale a raont.

**29-05-1917** - Brav a zoere : eh aer da reiñ deomp 4 real bemdez a-dal ar 1<sup>añ</sup> d'ar 14 a viz Mae èl indemnité de combat hag e oamp e Crouy !! Paperioù arre d'ober muioc'h e'it ne glaskomp sur 'walc'h.

**30/31-05-1917/1<sup>añ</sup> /02 a Vezheven 1917** - Didrouz eo an traoù bepred ha berr e kavahep er vro-mañ a pa ne vehe ket al labour a zo get rac'h ar baeamantoù-mañ.

**03-06-1917** - Oferenn-bred. A-raok an oferenn e ta bugale get podoù leun a holen ha bokedoù piket ennoñ d'o lakaat àr an aoter a-zehou d'an aoter bras. Goulenn a ran goude an oferenn petra eo an akustumañs-se hag e lârer din e lakaer èl-se d'ar sul un dra bennak a zebtrer pe a ever àr an aoter evit bout benniget. Goude an oferenn ar vugale a gemer en-dro o fodoù, hag an holen-se en em servijer anezhoñ da lakaat un nebeudig

er boued kevret get holen arall. Reiñ a raer anezhoñ ivez d'ar saout a pa alont. Meur a wezh e vez lakaet gwin, bara...

Monet a ran doc'h an noz betek ur chapel a zo er walern a gêr. Aze, reve ma lârer, eh oa kêr a-raok, met an Normaned a zas hag a revinas kêr. Ne chomas mui 'met ur familhad tud a yas da sevel un ti lec'h m'ema Ballersdorf bremañ. Hag un aotrou a zas ivez er mem tachad hag a oa Bauldry e anv. An aotrou-se a roas e anv d'ar gêr-mañ en ur sevel e borzh. Bauldryporh a zas da vout Baldryporh (èl-se e komz an dud). Ar chapel-se a zo bet savet e div lodenn. Lodenn ar c'heur a zo roman hag a ziskouez bout kozh-mat. Al lodenn arall, korv an iliz, a zo yaouankoc'h. Bout a zo er chapel taolennoù livet a hent ar groaz a zo sur kozh, met ne chom mui 'met teir anezhe. Laeret int bet pe roeget da soudarded Frañs. Ur C'hrist bras, bras èl un den 'gozik, ha groet get koad, a zo bountet daou daol bouc'hal getoñ. Un taol en deus lakaet un tamm a glipenn e c'har da sailh, un taol arall e-kreiz al liñsel a c'hronn e gorv. Hag an amoed en deus graet al labour milliget-se en deus merket e anv àr an troc'h en deus graet en e char !

Bout a zo delwennoù arall a zo bet ivez skoet. Hag an dra-mañ a zo labour soudarded Frañs hep arvar, rak, a-c'houde 1914, nend eus bet 'met Frañsizion amañ hag al labour-se a ziskouez bout graet nend eus ket pell 'zo. Ag en dukenn lec'h m'ema ar chapel e weler menezioù Thann. Gwelet a raer ivez ar vro lec'h m'ema ar Jermaned a-dal deomp. Donet a rin endro amañ get ma jumel evit teurel ur sell àr ar vro gaer a zo diragomp.

**04-06-1917** - Gwelet a ran daou bemoc'h bihan en deus paeet ar vestrez ag an ti lec'h ma tebromp 6 X 20 lur an daou ! Gwezharall e veze paeet 20 real ar pezh. Spontet on d'ar briz. A pa vezont lazhet, nend eus ket e'it 20 lur argant a gig enne.

Vil eh a an traoù er Rusi. Ne ouian ket ma ne droint ket



kein deomp 'benn ar fin bremañ pand eo aet hon argant gete ha mand eus kouezhet kement a dud...

**05-06-1917** - Ema bec'h an dud àr-dro o foen. Rac'h ar wazed pe 'gozik a zo chomet dre-mañ, hag èl mand int bet soudarded en arme jerman, n'o lakaer ket da vout soudard en hon mesk. E-leizh anezhe, ar re yaouankañ, a zo bet serrret d'ar Jermaned hag emaint bremañ an tu 'rall hag o fried, o bugale doc'h an tu-mañ. Jermani mem a gas 50L. dezhe pep miz dre ar Suis ! Kement-se a barra mat doc'homp a vout «potarnet» amañ, rak doc'h an tu 'rall eh ouiont ervat ema c'hoazh tud ar vro amañ, hag evit pas gober droug da dud a sellont èl kenvroiz, ne dennont ket ar kêr. Ar beizanted a labour o douar betek al linenn 'gozik, hep ne vez lâret grik dezhe.

Komzet em eus get ur vaouez ag ar vroig-mañ. Nend eo ket jerman a spered. Neoazh ema bet he gwaz en arme jerman, ha serjant c'hoazh ! Ema e boltred er gampr lec'h ma tebromp get poltred ar C'haizer, e vaouez, hag ar mab henañ. Ar Jermaned n'en deus ket klasket o gwalldretiñ, met rac'h al lec'hioù a veze gouarnet evit ar Jermaned. Met, doc'h an tural, e veze lezet an dud digabestr a-walc'h evit ar relijion, evit traoù ar barrez. Ne oa 'met ar skol e oa ret dezhe kas o bugale dezhoñ da zeskiñ jerman.

**06/07/08/09-06-1917** - Labourat a ra an holl àr-dro o foen. Get filc'hier e troc'hont hag o labourat èl genomp-ni. Met abretoc'h e troc'her ar foen. Glas e vez c'hoazh ha frond c'hwek a vez getoñ. Rac'h an dud a labour par ma c'hellont, met 'gozik bemdez e ta an arneñv da droiñ hag e vez gwlebet o foen. Dre voneur e ta tomm etre ar barradoù arneñv. Hiziv 9 e labour an dud da gempenn an iliz rak ar blez-mañ, get aon ne dahe d'ar Jermaned tenniñ, e vo graet al lidoù en iliz.

**10-06-1917** - Gwarniset eo an iliz get glazadur. Plant kiriz, knaou-garzh ha sapin a zo lakaet rac'h dre an iliz. An dud en deus lakaet o gwiskamantoù brav ha bokedoù a zo serrret evit teurel àr hent ar sakramant santel. Pec'hed eo n'en deus ket gellet ar prehesion bale.

**11/12-06-1917** - Hiziv eh aomp àr-lerc'h koan beta Dannemarie pe Dame-Marie pe Damerkirch (iliz en Intron). Ur gêrig didrouz. Ema 7 eur 1/2 a pah arruomp hag pa ne vehe ket soudarded e kêr e vehe lâret ema kousket an holl. Gwir eo emaint peizanted hag ema al lod muiañ anezhe é labourat en o farkoù. Div grennblac'h àr dachenn kêr é c'hoari get ur gerlenn a daolont d'al laez hag a dapont àr div vazhig. O mamm a sell doc'hte hag a ziskouez kemer kement a blijadur èlte. Àr an hevelep tachenn ur maen hir kizellet a zo savet àr ar beg anezhoñ ur c'hog dihailh alaouret. Moarvat eh oa an egl jerman àr al lein a-raok. Doc'h un tu e lenner 1812, doc'h an tu 'rall 1914, met 1914 a zo bet merket àr un dra bennak arall. Ar bravañ a zo rak mand eo bet livet e melen gris ar maen-se !! Nag ur soñj...

Bout a zo amañ anvioù familh gallek : *Centlivre* a weler stank àr an tier kenwerzh. Rac'h an tier pe 'gozik a zo graet reve giz ar vro ha kement-se a ra plijadur d'an daoulagad.

Monet a raomp da evet ur wezh d'un davarn e-tal an iliz. Tavarn dalc'het da dud daet a Altkirch 3 miz 'raok ar brezel. Ar plac'hig a gomz galleg 'gozik hep fall zistil. Lâret a ra deomp ema Zislin amañ èl ofiser etrekomzer. Eil-lieutenant eo. Renner eo àr-un-dro ag ur gazetenn alzasian a vouller amañ.

Monet a raomp da welet an iliz. Kentoc'h ema vil e'it brav. An tour a zo ag en 18<sup>vet</sup> kantvlezad met korv an iliz a zo bet graet goude ha ne ouier ket forzh kaer petra en deus vennet gober an dud en deus he savet.

Nend eus ket kalz a dier foñdet amañ d'an obusoù. Meur

a wezh e ta ar Jermaned da deurel paperioù e'it lâret d'an dud achap rak mand eo en o soñj tenniñ. An deiz àr-lerc'h 'gozik bepred e kouezh ur potarn bennak.

**13-06-1917** - Arneñv. Tarzhal a ra an traoù ha dasson a ra ar menezioù get trouz ar gurun. Un dra a remerkan : arneñv a vez lies amañ ha difonn eo d'an dud gober àr-dro o foen, dreist-pep-tra dre n'o deus ket falc'herezed.

**14-06-1917** - Monet a raomp d'ar predeg kent gouel Kalon Sakret J. Ur beleg soudard a esae diviz deomp penaos ema daet e Frañs karantez K. S. J. Met siwazh ! daousto d'e volantez ha d'an tamm paper en deus en e zorn, nen da ket da benn a ziviz netra deomp. N'em eus ket klevet biskoazh ur predegour ken truek. D'enderv eh eus bet ur yoc'h tud (merc'hed ha bugale) é tostaat d'ar gadoer a binijenn. Gwazed a zo bet ivez unanigoù. Gwelet a raer ema birvidant ar c'hredennoù amañ.

Àr-dro 9 eur 1/2 eh arru an doere genomp e kemerer 20 den ag hor c'hompagnoneh evit monet er c'holoniale en arbenn ag o oad. 20 arall a gaser deomp, tud kozh, tud ag ar C'hreisteiz c'hoazh al lod muiañ reve o anvioù. Ema ar 88° é monet da goll a-grenn. E-mesk ar re a ya kuit eh eus re hag a zo bet roet deomp e penn kentañ ar brezel, daet ag an aktiv, ha bremañ o lakaer arre a-barzh àr-lerc'h 3 blez brezel. Ar pezh a zo fentusañ, komz a raer a lakaat ar soudarded ag ar blez 1897 en territoriale !! E gwirionez an dud a zo e penn an aferioù ne ouiont ket petra raont !... Ar gwashañ, kement-se a ziskaloneka ar geizh soudarded yaouankañ a zo genomp hag ar re a zay amañ moarvat en devo keuz bout kuitaet ar C'holoniale.

**15/16/17/18/19/20/21/22-06-1917** - Doubliñ a ra an arneñv ha glav a gouezh stankoc'h. Diaes e vo d'an dud

serrezh o foen. Freskaet en deus ivez an amzer. Monet a ra hiziv eil-ofiserion ha kaporaled d'ar C'holoniale. Goueliñ a ra lod anezhe.

**23-06-1917** - Kaeraet en deus an amzer. Ne glever mui trouz erbet. Eh on ma-unan-kaer bremañ, chef ha kap. four. e perm. ha Belle-Croix aet er c'holon.

**24/ 25-06-1917** - Bepred ema didrouz hon traoù amañ hag atav e komzer e vo ret deomp monet trema Ueberstrass. Amañ eh oa aes al labour : lakaat orsal en douar. Setu 2 zeiz eh a hon tud trema Dannemarie da labourat, e-tal ar gar.

**26-06-1917** - Monet a raomp kuit. Da 6 eur d'enderv ema ret d'ar gomp. diblas. Ni ya-ni kuit da 4 eur ha hep debriñ rak oar n'em eus ket bet. Monet a raomp dre an hentoù bihan ha poanius-bras eo kerzhet. Arru a raomp àr-dro 7 eur e Ueberstrass en ur bas dre Hingelgen. Ur bravig a gêriadig eo, strewet àr vord an hent-bras, an tier dispak ha graet 'gozik rac'h reve tres tier an Alzas. Un ugentad a dud a zo chomet amañ pe kentoc'h daet en-dro goude an taol krog a oa bet e Seppois. En tier goulle e lakaomp hon tud ha fonnañ e raomp hol labour.

**27-06-1917** - An enderv-noz-mañ eh a hon tud d'al labour doc'htu doc'h devalenn ar c'hoad a zo doc'h ar sav-heol a gêr. An hevelep labour a raont atav hag el m'emaint dre varc'had eh a fonnañ o traoù gete.

**28-06-1917** - Burzhud d'ar paperioù a c'houlenner genom. Ha me ma-unan !

**29-06-1917** - Hiziv e c'houlenner get kemennour ar

gompagnunezh e soñj diàr niver ar c'hargerioù F. M. a greder e vehe mat da greskaat, rak berrek e oant bet e-pad an emgannoù diwezhañ. Goulenn a raer getoñ ivez ma n'en deus ket remerket e uz beg ar F. M. doc'h ar forc'h é tenniñ ha penaos e tleae bout graet ur gouriz grenadour ! Ha petra e faot deoc'h-c'hwila responto-eñ ? Netra a vad peogwir n'en deus ket biskoazh en em servijet ag ar F. M. er rejimant. Netra fur peogwir ar 88° nend eo ket bet gwezh erbet é kann e gwirionez ! Ret eo neoazh respont...

Henoazh àr-lerc'h koan eh aomp d'ober ur valeadenn trema chapel Intron Varia Grunenwald, da lâret eo Glas-Koad. Ema e krouiz ar menez a zo a-dreñv kêr, rak menezioù ar vro-mañ a zo souezhus. Àr al lein anezhe eh eus gwernegi. Dour a zibouk en tachadoù uhelañ. Ag ar chapelig-se e weler menezioù ar Suis, menezioù ar Voj ivez. En un tachad kaer ema. Met soudarded artilheured a zo bet amañ, hag ar Jermaned en deus gwelet e oa tud en tachad-mañ hag o deus taolet meur a botarn àrnezhon. Ar chapelig en deus tapet daou pe tri, ar vestial daou pe tri, an tier a zo tost dezhi kement 'rall. Pec'hed eo rak talviñ a ra ar boan donet d'he gwelet. An diabarzh anezhi a zo bet renevezet er blez 1901 hag àr ar vagoer durc'haet d'ar c'hreisteiz, àr ur maen, e weler ema bet renevezet c'hoazh ur wezh er blez 1705. Reve tud ar vro, ar chapel a zo kozh-kozh. Ar Normaned en doa-hi dismantret ar wezh gentañ, hag er blez 1565, ur c'hont a Freissen (*Comtur von Friessen*, a lâr an daolenn) aet àr vor en em c'hloestras d'ar Werc'hez hag a c'hratas dezhi adsevel he chapel e Grunenwald mar he dahe-eñ diwallet a vonet da goll. Daet e oa er-maez a zañjer hag en doa adnevesaet chapel ar Werc'hez. A-c'houde e tae tud, a-tro ar blez, e perc'hirinded d'ar chapel-se. Pedet e veze ar Werc'hez e'it drougoù ar c'horf, e'it madoù an douar. Ur gouriz graet get brec'hoù, garoù koar a rae an dro d'an iliz evit diskouez burzhadoù Mamm Hor Salver e'it tud ar c'hornad-bro. D'ar Rogasionoù, tud ar

c'hornad a yae ivez d'he fedin e'it o gouarn doc'h ar grizilh rak ur lezh eh oa bet ur barrad grizilh en doa finfoñdet kement tra en douar.

Er blez 1901 e oa arre en em glevet ar c'hornad-bro e'it kempenn un tammig diabarzh ar chapel. Graet e oa aoterioù, brichoù, stalioù get koad derv ag an hanni sonnañ ha bravañ hag ur gest graet e-mesk an dud en doa sikouret paein ar mizoù.

Oc'hpenn kement-se, an dud pinvik en doa roet pep unan un daolenn. Ar re na oant ket pitaot en doa en em glevet evit gober ur seurt hag el-se, doc'h doublaj an iliz, eh oa lakaet litanioù ar Werc'hez ar daolennoù livet. Ne oant ket, mar karit-c'hwil, taolennoù kaer-bras, met min vat o doa, ha kurius e oa ar chapel. E-kreiz eh oa un daolenn a zegase soñj penaos eh oa bet sovet Kont Freissen. Ul lestr bras a zo e monet da goll doc'h ur garreg bras. Ar c'hont a bed ar Werc'hez hag ar Werc'hez a weler e splannin e-kreiz ar c'hogus teñvel. Pep unan ag an taolennoù-mañ en deus koustet 60 marck. Anvioù an oberizion vat a zo ar an taolennoù.

Ar potarnoù en deus foñdet mat ar chapel. An hanter ag an taolennoù a zo roeget ha diskaret d'an diaz. Magoerioù ar chapel a zo ivez foñdet, diskaret lod anezhe, hag an aoterioù ha koadaj a zo en ur stad truek.

Ur verje a zo tro-ha-tro d'ar chapel hag ivez un tammig tachenn tavar. Ur frer a oa karget da gempenn ar chapel ha da evezhat doc'hti. En a werzhe traoùigoù e'it ar berc'hinderion e'it bevin, met treut e oa e draoù daousto d'an 1/2 ag ar frouezh a laoske person Freissen geton, ha ret e veze lies dezhoñ diskenn da Ueberstrass ha da Freissen da gestal laezh, keuz, bara ha traoù arall.

Ur person kozh ivez hag e vatezh a oa bet e chom un herrad e-tal ar chapel-se en e-raok.

Ar vaouez a Ueberstrass a gonte an dra-se din e ouie mat

ar galleg. 13 vlez he devoa a pa zisklerias ar brezel dek-ha-tri-ugent, hag èl ma lâran dezhi e komz mat ar galleg, hi a respont : « Met, aotrou, ni 'zo Frañsizion ! »... Goût a ra gwell galleg e'it he mab-kaer a zo e-talti hag a zo kantonnier, ha mem e'it he merc'h en deus desket galleg a-c'houde ar brezel. Ur mab he deus soudard er Jermani ha n'hi deus doere anezhoñ 'met dre ur breur dezhi a zo en octroi e Mulhouse.

Start e kav tud ar vro-mañ kaout èl-se lod ag o zud doc'h tu ar Jermaned, lod arall doc'h hon tu-ni, hag aes eo kompren o anken.

Ar Jermaned a laka amañ forzh-aes soudarded ag ar vro. Gwir eo e paeont lies kement-se rak e-leizh a Alzasianed a achap kuit. Disul c'hoazh e oa daet daou doc'h an tu-mañ.

**30-06-1917** - Didrouz eo an traoù amañ, muioc'h c'hoazh e'it e Ballersdorf. Neoazh eh omp a-dal d'al linenn. Ag ar burev, ag ar sal-debriñ e welomp al linenn melen du-se etre Seppois hag ar menezioù. Sur e welont an ti-mañ ha moarvat, get jumel, an dud a fich e kêr.

**1<sup>añ</sup>/02/03/04 a viz Gourhelen 1917** - Glav a ra bemdez, glav arneñv a gouezh a-boullad. Ar wazhig voan a zo er pradoùier en deus mem dic'hlannt hag ema daet da vout ledan èl ur wazhienn-vor. Foen a zo aet get an dour. E Ballersdorf ema bet gwazh an traoù. Ur chaoser en deus talpet edan an dour hag ema daet an dour e kêr. Moc'h, yer, dilhad, kant tra en doa deraouet bale getoñ hag a oa aet trema an orsal dreinek a zo er pradoùier. Hon soudarded en deus bet labour du-se é soviñ traoù ha loened. Tud mem a oa en ur stad truek : mezv e oant d'an noz ha n'o doa ket santet an dour ec'h arru. Da vintin e oant gronnet !

**05-07-1917** - Derc'hel a ra ar fall amzer. Pec'hed eo ne

c'hellomp ket bale. An deiz arall e oamp bet e Rechesy, ur Parizian ha me. Souezhus eo gwelet pegen diouizieki eo an dud ag ar bobl a Bariz diàr-benn Breizh ha Breizhiz...

**06-07-1917** - Glav arre. Dalc'het omp amañ hep gellout bale.

**07-07-1917** - Henoazh eh aomp da vale da-dal chapel Grunenwald ha goude, a-dreuz dre an douaroùier chomet da bouez, eh aomp da welet Seppois. Nend eo ket forzh foñdet kêr daousto dezhi bout just e-tal al linenn ha gwelet d'an enebour. Gwir eo ema àr Seppois-d'an-Diaz e tennont dreist-pep-tra. An iliz a zo forzh foñdet. An tour a zo dibennet a-rez get an horolaj. Souezhus eo gwelet labour an dour glav : foñdet eo an hentoù, ar girzhier. Aet eo ar mein get an dour àr ar pradoùier.

**08-07-1917** - Monet a raomp àr-lerc'h koan da welet Lartgitzen, ur c'hardeur doc'h al linennoù. Amañ ema foñdetoc'h c'hoazh an tier. Setu pell 'zo ema bet fall an traoù met bremañ ema didrouz. Rac'h àr al linenn amañ ema ar soudarded kozh a zalc'h ar fozelloù-difenn ha nend int ket maleürus...

**09-07-1917** - Arc'hoazh eh aomp d'hol lec'h kozh.

**10-07-1917** - Kuit da Ballersdorf. A-dreuz dre ar parkoù eh aomp. Glav a ra arre. Penaos bro ! Nend on ket souezhet bremañ e troc'hont o foen 'raok ma vez azev. Ne c'hellahent ket gober kalz a foen get un amzer seurt a zo. É-l-mañ e c'hellont troc'hiñ geot e-pad an hañv. Ballersdorf a zo kousket c'hoazh a-hanter a p'arruan. Met nend eo ket diaes ma labour : n'em eus 'met kemer al lec'hioù hor boa a pa oamp amañ.



**11-07-1917** - C'hoariva a zo henoazh. C'hoarierion savet e-mesk soudarded en 3<sup>e</sup> Divizion a ra un droiad er c'hêrioù tost d'an talbenn. Bet int bet e Seppois, e Friesen ha henoazh emaint amañ. Siwazh ! ma lakaont da c'hoarzhet ema un tammig àr goust an onestiz eo. Nend eus ket kalz ag o zraoù a c'hellahe klevet tud desavet mat. Neoazh ofiserion ha soudarded digousiañs en deus stlejet d'an c'hoari merc'hed yaouank. Lod n'en deus ket netra da goll met re 'rall a ra poan d'an den o gwelet é selaou doc'h komzoù hag a glever bemdez get al lañstefoued. Ne gomprennont ket bepred hag a zo c'hoazh un dra vat. Met nag a dastornerezh en deñvelded ! An deiz àr-lerc'h eh oa muioc'h komz ag an traoù-se e'it ag ar pezh a oa c'hoariet. Sur e ra muioc'h a zroug an c'hoariva-se e'it a vad.

**13-07-1917** - Ni 'ya kuit dre an tren evit kempenn ar c'hantonemant ha touchiñ ar bevañs. (*Chèvremont près Belfort*) Àr ar geot e paseomp an enderv rak an ofisour ne arru 'met da 7 eur 1/2 noz. A pa yaomp evit deraou get hol labour eh arru an noz. An dud, skuizh get o labour, a zo aet da gousket. Gober a raomp èlte àr ar plouz a zo roet e'it an dud. Er-maez e kouskan e-tal ur puñs, ur bot plouz edan ma fenn, unan edandon, unan a bep tu ha ma c'hapot àr al lein.

**14-07-1917** - A-vintin e teraouomp arre get hol labour met arru a ra ar gompagnunezh ha nend eo ket c'hoazh achu. Muioc'h a stal a zo get un ofisour, e'it kaout ur gampr dezhoñ, e'it na zo e'it klask lec'h d'ur gompagnunezh. Neoazh a-benn an noz ne chom mui den àr ar paver.

Da greisteiz e teraou ar c'han. Ur voutailhad champagne a zo touchet etre pevar, ur sigar e'it pep unan, ur voutailhad gwin. Get ar pezh a zo prenet a-hend-arall ema al lod muiañ ag an dud samson a p'arru an noz. Kan a glever e kement kognell a zo. Bevet ar Republik !

Hag er vro lec'h ma taomp anezhi an dud en deus lakaet bannieloù triliv doc'h o fenestri. Nend eus moarvat hani hag en deus ankouaet kement-se. Amañ, e Frañs, nend eus 'met an dudjentil e karg hag en deus dic'houinet o banniel ! Fentus !...

Nag a gemm etre tud ar vro-mañ ha tud an Alzas gwirion. Ar Feiz en deus gwanaet kentizh mand omp daet d'an tu-mañ ag an disparti-bro. An onestiz en deus gwanaet-mat ivez. Setu-ni amañ e ti ur vaouez a ziskouez bout aes. Ne glask nemet un tad e'it kousket geti bemnoz. Gober a ra mem argant doc'h ar vicher-se. A-dal d'an ti-mañ un ti arall, teir damezel a-barzh gwisket reve mod Pariz, brec'hier berr, kalon dizolo, blev stoubennek, hag a ra ur vicher hañval met get ar re a blij dezhe hepken !...

Ha bout a zo tier arall e kêr... Ar brezel en deus sur koc'honet meur a unan ; neoazh kement a zo hag a vev èl gisti, ma ne c'heller ket lakaat rac'h ar gare àr ar brezel.

Ar vro a zo kaer, kaer al lec'h mah omp. Ar menezioù a zo doc'h tu an hanternoz a ra èl ur gurunenn d'ar vroig-mañ hag ur burzhud eo gwelet ar parkoùier leun a geot pe ed livet e kement glas a zo moiand da welet ken mand eo ur blijadur...

**15-07-1917** - Sul. Paot-mat a dud a zo en oferenn-bred. Bugale, merc'hed yaouank, gwraez, gwazed un nebeud. Met labour a zo ivez get ar foen, ken difonn da serrezh get an amzer glavek-mañ, hag ar person a aotre ar barrezianed da vonet da serrezh o foen goude an oferenn.

**16/17/18** - Didrouz eo an traoù met ne rimp ket kozh askorn amañ. Arc'hoazh ema dle deomp monet da gemer an tren da Velfort.

**19-07-1917** - A-vintin eh aomp àr-raok. Àr an hent e

kavomp re du doc'h en em gempenn ivez hag a fars genomp e-pad ma paseomp. E Belfort ema kousket al lod muiañ ag an dud a pah arruomp. Emberr eh omp paket er vagonioù. Ni a c'hell-ni monet tri pe pevar er vagon lec'h m'ema sec'hier ar gompagnunezh hag ema frankoc'h àrnomp.

Treuziñ a raomp arre an hanter a Frañs. Tremen a raomp dre Vitry-Le-François, Epernay, hag eh aomp da ziskenn ag en tren e Oeuilly, er Marne, àr hent Epernay da Dormans.

**20-07-1917** - Noz eo c'hoazh a pa ziskennomp, ha hent a zo d'ober 'raok arru e Barsay-sur-Marne lec'h mah aomp. Dre Dormans eh aomp ha n'em eus oar 'met da welet en ur bas ar gêrig didrouz-mañ hag hec'h iliz a seblant bout kurius.

Monet a raomp beta Jaulgone hag arru eno e lârer deomp nend eus ket lec'h. Ret eo deomp donet àr-dreñv ha monet da Barcy-sur-Marne. Graet hon eus 6 lev bennak hiziv c'hoazh.

Monet a raomp amañ dre ar flagenn a red a-barzh ar Vesles. Rac'h ar vourc'hoù a zo skribilhet doc'h an dostennoù, ur c'hardlev bennak an eil doc'h egile. Ar gwiniegi a za betek amañ. Labourat a raont ar rezin e'it marc'hadizion a za d'o freniñ gete e'it gober gwin champagne. An dud a ra degemer mat ac'hanomp met ne chomomp ket amañ arre.

Doc'h an noz eh arru kemenn genomp monet arc'hoazh vintin da Vesles, da gostez Kastell-Thierry.

**21-07-1917** - Da 3 eur eh aomp àr-raok get ar c'hampe-mant. 5 lev bennak a zo d'ober, a lârer deomp, met, èl bepred, e vo-unan pe div bennak oc'hpenn. E rac'h ar broioù-mañ e kaver ilizioù roman kozh, kurius. Ar vro a zo labouret mat. Àr an hentoù e kaver e-leizh a wez frouezh.

Àr-dro 10 eur eh arruomp en distro lec'h ma weler Château-Tierry paket doc'h tor ar menez hag àr ar wazh get hec'h iliz uheloc'h e-kreiz kêr. Divogediñ a ra un niver bras a

cheminalioù labourdioù. Monet a raomp a-dreuz e'it berraat an hent hag eh arruomp emberr e Nesles.

Met e Nesles nend eus ket lec'h evit rac'h an dud. Reiñ a raer deomp un dachenn a zo ul lev hanter c'hoazh ac'halemañ : les Grandes Noues. Poanius-bras eo kerzhet ken pouk el m'ema an amzer hag a p'arruomp ema ar boutivezh genom. Dre eurvad ema frank an dachenn ha lec'h da lakaat ar gompagnunezh a-barzh forzh-aes.

Didrouz omp amañ. Dour a zo ha kentizh e sailh rac'h an dud da walc'hiñ.

**22-07-1917** - Ar sul 'zo hiziv met hani ne c'hell er gouiet rak iliz erbet nend eus tost.

Tud an ti lec'h mah omp n'en em soursiont ket kalz ag ar sul. Labourat a raont ar mintin-mañ el bepred hag unan ag ar merc'hed, paket-mat, a respont din nend eus Doue erbet rak n'he deus ket-eñ gwelet biskoazh ! Honnen sur ne dap ket lies droug penn é soñjal...

**22-07-1917** -... An enderv-mañ eh aomp àr-raok arre. Da Nesles e tleomp c'hoazh monet, met lec'h a vank arre hag e taomp àr-dreñv da gavet tachennoù Petre ha Lumeron lec'h ma tleomp kousket. Amañ eh omp gwell c'hoazh. An ofiserion en deus gweleoù ; gellout a ran mem lakaat meur a eil-ofiser en ur gwele. Debrñ a raomp en un ti a zo 9 a vugale a-barzh. Ar vamm a oa e Pariz é labourat hag en doa bet ur c'hrouadur pe daou 'raok dimeziñ. Dimezet e oa d'un den e karg ha goude d'ur bugul. He div verc'h koshañ a zo e Pariz hag en deus bet ivez beb a grouadur 'raok bout dimezet hag an daou-se a zo kaset d'ar vamm ivez da vagiñ.

Ur soudard en deus tapet leun ur gaoter pesked hag ema daet d'o c'henig deomp. 20 real o faeomp get ar soñj gober ur pred mat arc'hoazh.

**23-07-1917** - Da deir eur hanter eh arruer d'hon dihun. Ret eo achap a-benn e'it monet da Jaulgone. A-dreuz eh aomp c'hoazh hag e heuliomp pell-ha-hir an hent-dour a dreuz rac'h ar vro-mañ hag a zarbar dour da rac'h ar gêrioù a zo àr ar wazh. Ret eo deomp gober en-dro an hent graet ar wezh arall. Arru a raomp abred e Jaulgone, 'raok mand eo re domm an amzer. D'ar soudarded e vo ar gwashañ ! An dud a labour amañ par ma c'hellont da serrezh bleuñv bourrache. Sac'hadoù a zo anezhe, el ma vez sac'hadoù piz genomp-ni.

**24-07-1917** - Da 5 eur eh aomp c'hoazh kuit. Ar wezh-mañ ema berroc'h an hent. A-boan ul lev. Da Charmel eh aomp. Ur gêrig dister eo. An iliz ag ar mod kozh en deus un nor-dal kozh kizellet mod karolijian. Ar rest ag an iliz a zo bet renevezet. E-leizh a dier goulle a zo amañ ; an dud a guita ar vro. Ur maner a zo hag a zo d'un aotrou da Rouge. Laosket eo bet d'ar Jermaned a p'o doa kilet goude ar Marne.

**25-07-1917** - Da 5 eur c'hoazh e kuitomp Charmel e'it monet da Fresnes, div lev bennak doc'h ar gêrig-mañ. Eh arru eno e kavan ur bez fentus. Lenn a raer àr ar maen :

*A la memoire*

*de M. Moittie, Jacques, ancien militaire,  
né à Fresnes le 11 avril 1774, décédé au  
dit lieu le 6 mai 1862 dans sa 89<sup>e</sup> Année.*

---

*Etat de services.*

*Dragon au 2<sup>e</sup> Régiment le 1<sup>er</sup> Ventose an II.  
Brigadier le 20 Germinal an VII.*

*Maréchal des Logis le 11 Jerminal an XI.*

*S/lieutenant le 12 9bre 1811.*

*Lieutenant le 2 Xbre 1813.*

*Legionnaire le 12 juin 1813.*

*Il a fait les campagnes des Années*

*II - III - des armées de l'Ouest et du Nord.*

*IV - V - VI - VII - VIII - IX de Sambre et Meuse  
du Rhin et de l'Helvétie.*

*XI - XII - XIII - XIV Côtes de l'Océan.*

*1806 -1807 Grande Armée.*

*1808 Espagne.*

*1809 Autriche.*

*1810 -11- 12 Portugal Espagne.*

*1813- 14 Allemagne.*

*Blessé d'un coup de feu le 18 juin 1815.*

*Admis par suite à la solde de retraite.*

*Priez Dieu pour lui.*

Setu a-wel ur soudard !...

En hevelep bered eh eus bez famill Mandat Crancey. Unan anezhe a oa Kerchore ; marse a Vreizh. Ul lavar kaer a zo en o armaj : «Endurer pour durer».

Amañ ivez nend omp ket drouk met ne c'heller ket chom. Degemeret omp e ti ul lerer en deus ur vaouez ag ar re amiaplañ. He zi hag he liorz a zo dalc'het mat ; he dilhad a zo mistr. Plijadur a ra deomp debriñ doc'h he zaol e asietoù douar ha doc'h un daol rond. Netra hol laka kontant !

**26-07-1917** - A-vintin eh aomp arre àr-raok. Da Saint-Gilles e-tal Fismes eh aomp. Tostaat a raomp bepred d'an ifern.

Amañ eh omp lakaet en ur baraque Adrian ha nend eo ket fall hon traoù. Dispartiet doc'h ar re 'rall, eh omp didrouz amañ. Met c'hwenn a zo er baraque ! Rac'h ar re a zo techet da dap anezhe a zo goloet a dachadoù ruz an deiz àr-lerc'h vintin.

**27-07-1917** - Ar mintin-mañ, da 4 eur, eh aomp àr-raok e'it monet da Romain e-tal Courlandon. Met ne oer ket engortoz ac'hanomp amañ ivez hag eh omp kaset da veinglezioù a zo uheloc'h e'it Romain. Setu pell 'zo nend eo ket bet ken lous ha ken diharak an tachad roet deomp. Ur vezh eo mem lakaat tud e tachadoù seurt-mañ. An tachad ag ar groc'h roet deomp a zo gwleb-teil. Dour a ziver a-barzh hep arsav ha fresk eo. Ul loen ne harzahe ket a-barzh ! Nend on ket-me pell é kaout un tachad lec'h ma c'hellan lakaat ur vrec'had louzoù hag un nebeud plouz lous serret edan ar roñseed. Eno e vo ma loj e'it an noz. Ar gwashañ eo er-maez eh omp ha gwezenn erbet evit en em guzhet doc'h terennoù an heol. An dud a droc'h barroù koad en toull bras a zo e-talomp evit gober disheol dezhe.

**28-07-1917** - An enderv-mañ e raer deomp diskenn e kêr Romain lec'h mand eo c'hoazh tristoc'h hon doere e sulerioù gourdommet d'an heol. Nend eus ket a gousket ! Da greisnoz e taer da lâret deomp eh aomp kuit an deiz àr-lerc'h vintin. Talviñ a rae ar boan hon diblas e'it ken berr amzer.

**29-07-1917** - 4 eur. Àr-raok diàr lein ar menez. Diskenn a ran doc'h devalenn Maisy. Tarzhal a ra an traoù doc'h Craonne ha doc'h flagenn Vassognes. Luc'hiñ a ra an neañv get an tennoù kanon, get ar fuzeoù a bep liv a sav hep arsav en aer ag an amzer. Ha ledan eo an tarzhad ! Kaer ha spontus eo ar pezh a welomp...

Donet a ra an deiz a-nebeudigoù hag e welan teir

« silzigenn » é spiiñ doc’h an tarzhad-mañ. Tremenn a raomp e Maisy. N’en deus ket cheñchet tamm ar gêrig-mañ a-c’houde daou vlez. N’end eo ket foñdet ivez d’ar Jermaned. Uheloc’h e welomp Beaurieux atav kousket. Nend eus ket bet ivez kalz a dennoù ar gêrig-se rak atav ema tour an iliz ar sav. Derc’hel a raomp-ni da vonet. Er flagenn a zo doc’h ar sav-heol a venez Beaurieux ema hol lec’h. Klask a raomp an dro dre dal Cuiiry-les-Chaudardes. Arru a raomp amañ e bro Craonne a zo enni tachadoù kaer met ivez tachadoù paour hañval doc’h ar Champagne Laouek. Lec’h mah aomp-ni ema ar *Champ d’Asile*, ur flagenn mouest hep dour, koad sapin a-barzh ha tailheriz. E kobannoù eh omp lakaet, lous man Doue, ken emaint lous a-walc’h. Labour d’ar 88°. Skuizh omp neoazh ha mall eo e gwirionez hol lezel didrouz un herrad. Setu 11 deiz e kerzhomp ’gozik hep diskuizh, hep kousket, get boued na talv ket.

**30-07-1917** - Un nozvezh kousket mat a za da benn a ma lakaat da blom. Met ar soudarded int a zo kaset kentizh d’al labour henoazh. Ne ouian ket met me gred e raer diavaez d’ar rezon d’hor soudarded.

**31-07-1917** - Fall eh a an traoù. Goude ar redadennoù-se, c’hweziñ, kousket ne vern e-men, fall vaget, setu an dispac’h em bouzelloù ! Ha divourrus eo amañ bout klañv. Tri deiz e pad ma zraoù, un deiz diskuizh ha tri deiz arall c’hoazh. Brav a c’hoari bout é postal er flagenn mouest-se hag é flutiñ beb 5 munut. Cheñch a zo ret neoazh ha donet a raomp tostoc’h d’an hent e kobannennoù arall lec’h mah omp falloc’h c’hoazh e’it lec’h ma oamp.

Yenaet en deus an amzer. Mouest eo ha divourrapl. Ar c’hanon neoazh ne arsav ket, ha divourrus eo rak ne c’heller ket kousket get trouz an dennerezh.



En em gavet a ran get an Ao. Jaouen, ni Ab Alor, hag e komzomp doc'htu ag ar vro, ag ar varzhed, ag ar re holl a zarempredemp gwezharall.

**1<sup>añ</sup>/02/03/04 a viz Eost 1917** - Bemnoz e tarz'h an traoù ha bemnoz eh a hon tud da gas torpilhoù, grenades ha traoù seurt-se trema ar gentañ linenn. Fall vicher ! Fang a zo, dour. Teñvel e vez...

**05-08-1917** - An noz paseet ema daet ar potarnoù da gouezh just e-tal dor ar gobanenn. Mall e vo achap !

Doc'htu e klaskomp dor tor ar menez a zo tostoc'h da hent Cuiry-les-Chaudardes hag e toullomp eno. Dizañjerusoc'h eo an traoù.

**06/07-08-1917** - En em gustumat a raomp doc'h hon toulloù nevez. Monet a ran-me da vale henoazh àr menez Beaurieux. Gwelet a ran, gronnet en ur vrumenn, flagenn Vassognes, distro ar Marv, menez Oeuilly, rac'h an tachadoù a zegas soñj din a vlez kentañ ar brezel (tri blez a-c'houde !)

**08-08-1917** - Achap a ran àr ar marc'h-houarn beta Oeuilly da welet ar gêrig-se hag ivez mard eus atav tud a anavan eno.

N'en deus ket cheñchet forzh-kaer 'met ar fourch-hent a zo àr hent Oulches -Vassogne - Jumigny ha Beaurieux. Ur gar vihan a zo savet eno evit degemer houarnaj, koadaj, orsal ha potarnoù. Àr ar c'hanal e welan tri pe pevar pont graet a-c'houde 3 blez. Komprennet a zo eh oa dañjerus bout en tu-mañ doc'h an Aisne ha pas kaout ken lec'h da bas en tu 'rall 'met pont Bourg-et-Comin, Pont ar Sukrdi, Pont Beaurieux.

E Oeuilly ema an traoù èl a-raok : un ti bennak muioc'h a zo devalet hag ar c'harrezioù gwer a zo brezilhet rac'h. Tud a zo aet kuit met chomet a zo ivez e-leizh. Kavet a ran an dud

e oamp en o zi ha lâret a raont din en en deus ar Jermaned taolet bomboù ha tennet meur a wezh àr Oeuilly. Tud a zo bet gwallaozet. Ur barrad arneñv a zo degouezhet àrnon just a pa ziskennan ag ar marc'h-houarn, ha teurel a ra a-boullad !

**09/10-08-1917** - Bemdez e ra ur barrad glav bennak. Penaos bro ! An dud a ya da Graonne ha Craonelle da gas traoù a arru en-dro amañ goloet a fang ha gwleeb. Get an dra-se eh omp fall lojet a-walc'h. Àr-lerc'h tri blez brezel ema ret c'hoazh, en un tachad a zo soudarded a-barzh a-c'houde, gober toulloù hag o goloñ get ar pezh a gaver evit en em lakaat en abri. Un druez !

**11-08-1917** - Monet a ran henoazh c'hoazh àr menez Beaurieux. Henoazh ema splann an amzer hag e welan ervat flagenn Vassognes. Setu Oulches du-se e pign doc'h tor ar menez : ne ziskouez ket bout foñdetoc'h. A-gleiz ema kreñvlec'h ar Jermaned, ar C'hrouiz, an dachenn Heurtebise, ar monumant, met hiziv nend eus mui anad a netra. An douar a seblant ac'halemañ fresk labouret. Nen des mui anad a geot, a zrein, a goad : an dud en deus kaset rac'h da ludu...

Vassognes ha Jumigny ivez a ziskouez bout èl ma oant gwezharall. Er flagenn hepken e weler lec'hioù pezhioù kanon a-yoc'h. Met àr lein Hent-an-Intronezed ne weler mui tachad erbet hag a chom get ar Jermaned. Ema rac'h deomp. A pa soñjer e welent ac'halemañ rac'h ar pezh a raemp e c'hellomp bout eürus ag ar gounid-mañ daousto d'ar gwad a zo skuilhet evit er c'hemer. Nebeutoc'h a dud sur a zo kollet e'it ma vehe bet chomet ar Jermaned àr al lein.

**12/13-08-1917** - Atav e talc'h an amzer fall.

**14-08-1917** - Gwell eh a get an amzer, met get ar safar eh a bepred ur seurt. Bemnoz e tarzha an traoù.

**15/16/17/18/19-08-1917** - Kaer eo bepred hag aerlistri a vale. Kann a vez gete d'an noz, d'an deiz. Unan jerman a za da loskiñ ur silzigenn deomp e-pad pred. He gwelet a raomp, an tan enni, é tiskenn.

**20-08-1917** - Teir silzigenn losket doc'h hon tu, div doc'h tu ar Jermaned : setu labour an devezh a zec'h. Henoazh eh arru kemenn da gas ar gompagnunezh arc'hoazh vintin da dachenn Broussilof ha Monaco da gemer lec'h ar 5<sup>vet</sup>. Me a chom-me er *Champ d'Asile* get ar geginerion hag ar chef.

**21-08-1917** - Da 6 eur eh a an dud àr-raok. Labouret o deus neoazh beta div eur ar mintin-mañ. Monet a ran d'enderv d'o gwelet. A-dreuz dre ar c'hoadoù eh an hag e kavan e-mesk ar bezv hag an haleg tachadoù brug e bleuñv ken brav. Hañval e vehe eh on e flagennoù koad Kamorzh. E-leizh a gobanennoù a zo savet er c'hoad-mañ ha nend eus ket kalz anezhe hag a zo jaojapl e'it lakaat tud. Setu 3 blez e pad ar brezel hag ema an traoù èl ar blez kentañ.

E Monaco (un tachad e-kreiz ar c'hoad) eh eus ur section ag hor re. Ag an tachad-se da Vroussilof, un tachad arall lec'h m'ema ar rest ag ar gompagnunezh, eh an dre ar flagenn mouest. Un hent pe kentoc'h ur vinotenn a zo graet hed-ha-hed get ur riolenn, get fagot rak an douar amañ a zo re wleb. Arru a ran (1, 500 km) e Broussilof un herradig àr-lerc'h : amañ ema ervat an dud. Toulloù don o deus, mistr eo an tachad, ha nebeutoc'h a gelion e'it en tachadoù lec'h mah eus roñseed. An dud a ya amañ a ajadigoù da labourat get ar Génie, arañj bouzellennoù, kas traoù, diskarg vagonioù.

**22-08-1917** - Monet a ran c'hoazh da Vroussilof. Hiziv eh an dre un hent arall hag e kavan e-kreiz ar c'hoad unan a ma skolaerion brezhoneg a zo letenant en artilheri. Komz a raomp

un herrad, trinkiñ a raomp hag e tisko din e labour atav. Ur Breton Usuel a zo getoñ en e gobanenn. Lâret a ra din ema bet souezhet en ur arru amañ é kavet al levrig sonennoù e'it ar soudarded savet get Dihunamb, lezet moarvat get ur soudard. En ur varbotal eh aomp dre ar c'hoad hag e welomp tachadoù artilheri gwallaozet d'ar potarnoù. Unan anezhe mem a zo peget an tan a-barzh ha losket ar c'hoad a oa é terc'hel houarn ha douar a-dreist ar pezh.

Evit distroñ e tremenan dre Blanc-Sablon. A-raok arru get torgenn Blanc-Sablon e pasean en un devalenn a oa a-barzh ur pezh 210. Ar Jermaned en deus taolet àr ar pezh-se kant ha kant potarn ha daet int da benn ag en dismantr. Ur spont eo gwelet e kement lec'h a zo bernioù obusoù, boestoù obus, peudr a bakadoù, kaesoù, houarnaj. Peudr hag obusoù en deus sailhet e meur a dachad. Ar gwez a zo dismantret, losket ; lod a zo du èl glaou, lod a zo tammetaet, lod a zo chaket hag ar barroù a zo a-stribilh doc'h an treid... Àr lein tostennn Blanc-Sablon eh eus ur vered hag ar potarnoù a zo daet da glask kapailh doc'h ar re tremenet... Lod a zo bet dizinterret...

Ar c'hoad en-dro d'an ti, an dachenn, ar maner, rac'h an traoù-se a zo er stad truekañ a fehe bout gwelet. Abrioù a zo bet er c'hoad hag a zo bet foñdet d'an obusoù. Ar gwez a zo hachet ha berniet èl a pa vehe bet ur c'hren-douar. Àr an ti e weler é lugerniñ ur plak asurañs !...

**23-08-1917** - Arc'hoazh eh aomp kuit. Ar c'hampemant a barti da 12h. Ar gompagnunezh d'un eur, ar 24. Da Mont-St-Martin, 5 lev ac'halemañ, eh aomp evit 5 pe 6 deiz, a lârer.

**24-08-1917** - En em aprestomp. Avel a zo. Bourrusoc'h e vo kerzhet. Met na heuenn a lonkimp !...

Setu-ni àr an hent dre Glennes ha hent Merval. E-pad ma daomp dre ar vinotenn ema bourrus kerzhet, met a pa

gemeromp an hent-bras, en heuenn savet d'ar c'hirri hol liv e brizh.

Arru a raomp e Fismes lec'h ma kavan tud am boa anavet e 1914. E ti ma marc'hadourez legumaj e kavan an hevelep tud hag a roa ar vaouez daou varr rezin din.

Mont-Saint-Martin a zo ur gêrig vihan. Un dachenn a 800 hektar hepken a zo a-barzh, hag an holl dud a zo e kêr a labour àr an dachenn-se, a vev àrnezhi. Nend eus 'met ur gwalleur : marse eh eus ur 100 a dud a labour èl-se ; ar pezh a ra 8 hektar e'it pep den, bugale ha merc'hed ha rac'h. Lec'h a vehe da re 'rall !...

E kobanennoù Adrian e vimp lojet. Fonna-pl eo enta klask e lec'h da bep unan. Ar gwashañ eo, èl bepred, lojiñ an ofiserion : nend eus 'met ur gwele evit 4 !...

**25-08-1917** - Da 7 eur eh arru ar gompagnunezh. Da 6 eur eh oamp doc'h he gortoz. Gwir eo n'hon eus ket bet kalz a blijadur àr hon plouzh get an c'hwenn a oa a-barzh...

Fresk eo ar mintin-mañ. Bourrusoc'h e vo kerzhed. Neoazh skuizh eo hon tud. Da 24 eur emaint daet kuit a Vroussilof hag e kerzhont a-c'houde.

**26-08-1917** - Sul. Oferenn en ur chapelig savet àr rec'hier a zo e-kreiz ar vourc'h. Làret a raer eh eus bet ur manati amañ gwezharall. Lod ag ar chapel a zo kozh. E-tal ar chapel, ur veredig lec'h mah eus beziet ofiserion aerlistri. Monet a raomp da welet ar park aerlistri.

**27/28/29/30/31-08-1917** - Didrouz e paseomp hon diskuizh amañ met souezhus eo gwelet stad an tachadoù lec'h mah omp. Glav a ra er gobanennoù èl er-maez hag ema ret deomp lakaat hol lien tant da barraat ag an dour da gouezh en hor gwele !

En ti lec'h mah omp é tebriñ eh eus div blac'h yaouank, div geniterv, n'en deus dalc'hidigezh erbet. E Concevreux eh oant é chom. O zud a oa devezherion. Ar blez-mañ ema lazhet mamm unan anezhe en he divrec'h get ur potarn. Evit gober begin dezhi bremañ e lâr louteri e-pad an deiz hag e klask an tu da c'hoari gaer get kement soudard a blij dezhi. Ur vezh eo o c'hlevet é tivegiñ o c'hardellaj... Setu c'hoazh merc'hed kaset da goll d'ar brezel.

Monet a ran da Fère-en-Tardenois da gas hor c'harr da arañj. Treuziñ a ran Chery-Chartreuse, Mareuil-en-Dole ha plaenennou druz ha brav. Ar P. A. a zo 'raok arru e Fère en ur c'hoad sapin. Un dachenn a zo edantoñ. Kant ha kant karr, kant ha kant kegin, mil ha mil rod a weler e park ar c'hirri. Ul labourdi bras a zo eno ivez ha tud é labourat an houarn hag ar c'hoad.

**31-08-1917** - Arc'hoazh vintin ema ret deomp distroñ da vro an trouz.

**1<sup>añ</sup> a Wenholon 1917** - Da 5 eur eh aomp-ni àr-raok beta Romain lec'h ma welomp en ur arru prizonerion ec'h arru. Tapet int e kostez Heurtebise. Al lod muiañ anezhe a zo yaouankik-flamm. Fall vinet int rac'h, kann, fall wisket.

**02-09-1917** - Da 1 eur eh an àr-raok trema Fontaine-au-Vivier dre Meurival, Concevreux, Cuiiry-les-Chaudardes. Glav en deus graet ha poanius-bras eo kerzhet er vro meneziek-mañ. Dre voneur c'hoazh eh eus loar hag e welomp un tammig an hent.

Arru a raomp e Cuiiry hag ema noz c'hoazh.

**03-09-1917** - Da lakaat orsal eh a hon tud etre ar c'hoad, trema Broussilof. Dec'h d'an noz e oa bet start an traoù doc'h

kostez Heurtebise. Nen doa ket arsavet ar gurun e-pad an noz.

An enderv-mañ e ta un aerlestr d'ober e dro hag e ta da benn a loskiñ div silzigenn.

**04/05/06/07/08/09/10-09-1917** - Didrouz omp bepred amañ. Hiziv eh arru an D. Gentil ha Calbourdin a Surzhur d'hor gwelet. Plijadur a ra din gwelet tud ar vro. Hor c'houviññ a raont da vonet da verenniñ gete àr-lerc'h arc'hoazh.

**07/09/1917** - Komunio Roche er gampr Moigneu. Tri omp er gouel, daoulinet àr gwez sapin.

**11-09-1917** - Ar mintin-mañ doc'h gouloù deiz eh eus bet gurunaj. Tankoù a oa chomet e miz Ebrel etre an div linenn. A-c'houde e vezer daet da benn ag o aozñ hag a-benn a pand int bet prest emaint daet du-mañ o-unan e-pad ma oa hor pezhioù kanon é skopat houarn ha tan àr ar Boched !

**12-09-1917** - Monet a raomp da Oeuilly. Cheñchet mat en deus ar park lec'h m'ema ar vered. Savet a zo kobanennoù, graet hentoù ha krouizet an douar. En un toull eh aomp da zebriñ merenn. Paloured a zo da bred ha plijadur a raont deomp, din dreist-pep-tra ha n'en deus ket tañvaet traoù seurt-se a-c'houde 3 blez tremenet ! Goust ar mor o deus. Goust an Arvor. Komz a raomp ag an Arvor, ha komz a raomp ivez e yezh an Arvor evit deraou, rak fonnapl eh aomp àr ar galleg. Perak ? a lâro Breizhiz gwirion. Siwazh ! ret eo anzav ar pezh a zo : al lod muiañ ag ar velean daousto dezhe bout desket ar brehoneg a-vihanik, nend int ket gourdon d'en em servij anezhoñ, ha mab-den a zo techet da sailh a-benn àr an aesañ...

Meur a botarn a zo kouezhet àr Oeuilly a-c'houde ar wezh arall eh oan bet amañ. Get potarnoù « flarius » o deus tennet

an deizioù paseet. Bout a zo neoazh tud hag a zalc'h da vevañ amañ...

Lâret a raer deomp penaos ar 61<sup>e</sup> D<sup>on</sup> a zo amañ n'en deus ket ur wezh hepken fardet àr ar Jermaned a-c'houde penn kentañ ar brezel. Bale a raont ag ur penn d'ar penn arall ag en talbenn. Kemer a raont o lec'h er fozelloù-difenn, met ne c'houlenner ket muioc'h gete. Ret eo lâret eh eus ur politikour er penn anezhe hag emaint ag ar C'hreisteiz. Pec'hed e vehe lazhiñ mammenn ar varboterezh.

**13-09-1917** - Monet a ra tud kuit bemdez. Ar c'hlas 91 a zo aet àr-raok hag evit kemer o lec'h e c'houlenner genomp tud e'it kondu kirri ar c'harter-bras. Re ar blez 97 a zo aet kuit ivez da vout pilhoterion. Ne chom mui er gompagnunezhoù met un 60 den bennak...

Komañs a ra an nozvezhioù hiraat hag e kargan doc'htu àr al levrioù. « *Le dernier des Romanoff* », levr graet get kas doc'h tudjentil Rusi, a zesk din neoazh pegen lous e oa lez ar vrose. Goude e lennan « *Les mémoires de Mme Roland* » diàr an dispac'h. Souezhus eo gwelet pegen hañval eo rac'h ar re a ra en dispac'hoù e kement bro a zo àr an douar. Gwir eo e paeont 'gozik bepred o bihan a furnezh...

**14-09-1917** - Labourat a ra ar pilhoterion. Dre-mañ emaint a-tro an deiz é serrezh houarnaj, orsal, douilhoù, boestoù houarn gwenn goulle. Setu 3 blez e pad ar brezel ha nend eus ket soñjet 'raok bremañ serrezh rac'h an traoù chomet àr-lerc'h ar soudarded. Nag a vilionoù a vehe bet armerzhed a pa vehe bet dastumet pervezh rac'h an traoù am eus gwelet é monet da goll en tachadoù rac'h am eus gwelet. Met mem ar pezh a raer bremañ n'er graer 'met a hanter rak leraj, danvez, askorn, gloanaj a chom atav. Nend int ket merket àr roll an traoù a zle an dud-mañ serrezh !...



**15-09-1917** - Hiziv eh a ur soudard 91 d'ar gêr da labourat. A Concevreux emañ, ag ur gêrig a zo ul lev ac'halemañ a-boan. Dizarmet eo amañ ha ne lezer getoñ met an dilhad a ya get ar re a ya e perm. Ne ouit ket da veban er c'haser e'it donet d'ar gêr goude ? Da Voulogne-sur-Mer ! E sigur emañ eno emañ an dépôt de centralisation... Lec'h a zo da oueliñ.

Brav a souezh ! Arru eo Blei Lann-Vaus d'am gwelet... Lakaet eo er G. B. C ar C'holoniale. Bremañ enta en em welimp lies. Bec'h àr ar brezhoneg...

**16-09-1917** - Henoazh e ta Blei, Gentil ha Calbourdin da goaniñ genom. Àr-lerc'h koan eh aomp d'o ambroug àr hent Beaurieux, ha Blei a zispleg deomp ar pezh en deus savet an Ao. Corven. E-pad ma komz e teval an noz a-nebeudigoù àr an douar. Diragomp emañ tostenn Beaurieux get ar bodoù gwez du-pod àrnezh, an tour e-kreiz, savet he flemm trema an neañv. An neañv doc'h ar c'huzh-heol a zo ruz, liv teolennou, hag e-kreiz ar melen a zo a-dreist ar ruz e weler ar silzig a-skribilh en aer ag an amzer el stered hag en dehe arsavet a splaññ. Àr ar mem linenn geti steredenn ar Bugul a lugern ken bravik a-dreist flagenn an Aisne lec'h ma red un tren bihan a laosk àr e lerc'h ur chapelet feskennoù moged a chom pell hep bouljal el a pa vehent pozet àr veg ar gwez.

Brav eo an amzer ; dous ha didrouz. Hag é komz el-se a Vreizh, ag an traoù brezhonek e nij hor spered trema Breizh hag e welomp ar blezadoù eürus hon eus tremenet eno er peoc'h hag e karantez ar Brav hag ar Gwir.

**17/18/19-09-1917** - Atav eh omp didrouz. Eil-ofiserion a ya bep mintin da redek potironed hag e taont d'ar gêr get ur yoc'h. Biskoazh n'hon eus ket debret kement ! Monet a rivez àr-raok ar beizanted ag ar c'hlas 1892, hag ar soudarded nend int ket peizanted ag ar blez 1891. Bemdez e vihana hor

bandenn. Bremañ eh eus skoadoù n'o deus den enne ! Dastum a raer a-boan 40 den e'it al labour er gompagnunezh a-bezh, ha 11 anezhe a zo eil-ofiserion. Gwir eo e talc'h gete an ofiserion 1 mevel evit pep unan, 1 c'heginour, 1 servijour, 1 potironour ! Un arall a zo karget ag ar jao a-dreñv !!...

**20-09-1917** - Setu doere an diloj. Henoazh eh aomp da Vroussilof ha da Monaco !... Da 7 eur ema dle deomp monet kuit da gentañ, met kemenn a za deomp da vonet kuit da 8 eur 1/2 d'an noz hepken !... An noz a ziskenn hag an amzer a zo goloet. Monet a raomp a-dastorn-kaer, dallet d'ar goulaouennoù a sav dre bep div wezh en aer ag an amzer. A pa varvont ema teñveloc'h pe teñvel an amzer... Ne welomp ket mem mui forzh kaer an hent hag e postomp àr un hent nend eo ket hon hanni. Ret eo deomp distroñ àr hor pazoù... Donet a raomp da benn a welet ur penn gouloù é splanniñ e koad sapin Monaco. A-dreuz dre ar c'hoad, e heuliomp ur vinotenn graet àr ribl ur riolenn, eh aomp trema Broussilof. Broussilof ha Monaco, reve ma komprennit, a zo anvioù brezel. Monaco a zo ur c'hoad sapin a zo savet ennoñ kobanennoù koad lec'h ma vehe aes d'ar Jermaned lazhiñ 50 den àr-un-dro get ar mem potarn ha lec'h erbet d'en em guzh. Lous eo an tachad ha mouest.

Broussilof a zo mistroc'h. Doc'h tor un dorgenn ema, ha toulloù a zo graet en douar, toulloù goloet get koad, houarn ha douar. Toulloù lec'h ma vezer en abri doc'h ar potarnoù bihan met hag e vehe flastret d'ur 150. Ar c'hoad a zo hachet rac'h d'ar potarnoù.

Marse e voc'h souezhet ma vezomp kaset d'an noz da bostal èl-se e tachadoù lec'h ma ya hon tud da labourat àr greiz an deiz ! Ni ivez, met kustum omp da welet traoù dibennoc'h c'hoazh...

**21-09-1917** - Kousket em eus en un toull goloet a-boan get treujad koad a zo toullet e-kreiz d'ur potarn. Rac'h an traoù a zo bountet amañ e'it pas an noz. Rac'hed a zo, ha donet a raont da goroll àr ma c'hov ha da benndareoriñ àr ma fenn. Dre voneur em eus kuzhet ma fenn edan ma c'hapotenn.

Kousket dous em eus neoazh rak daousto d'an hent bout berr (1 lev), poanius e oa postal e-mesk ar «chouchoù koad sapin hag ar fav diskaret», èl ma lâr ar sonenn.

Ar mintin-mañ e tilojan get ar serjant-major e'it monet en un abri kreñvoc'h, mistroc'h ha dereatoc'h.

**22-09-1917** - Gwell eo bet ma nozvezh met freskaet en deus an amzer ha 'gozik em eus bet aneoued doc'h ar mintin.

Ar mintin-mañ en deus deraouet ar Jermaned da zave deomp ag o fotarnoù bras a za d'en em vrezilhiñ àr lein an Terrasse, uheloc'h evit Broussilof. Kouezh a ra an tammoù dir tro-ha-tro deomp ha ne fiziomp ket bountiñ hor fri er-maez. 2 pe 3 c'hant a re vras a voutont èl-se.

Hon tud amañ a grouiz an douar àr lein an Terrasse just a-walc'h. Ar re a zo e Monaco a ziskarg bagoniadoù koad, houarn ha traoù evit ar Génie. A pa ne dennahe ket ar Jermaned ne vehe ket re start an traoù.

**23-09-1917** - Sul. Monet a ran betek Monaco e'it klevet an oferenn. En un toullig bihanik-tra ema an iliz, lec'h da 10 den a-barzh. Ur beleg soudard a lâr an oferenn. Ar poste da secours Div. eo.

Un aotrou kozh hag en deus en em genniget e'it kement-se a zo edan ur gobanenn hag a ra kafe da rac'h ar soudarded gwallaozet a ya da c'houlenn getoñ. Eñ a bae ar c'hafe ha rac'h ar mizoù a vez.

E-tal ar c'hlañvdi se eh eus ur vered a zo oc'hpenn 300 bez a-barzh, tud lazhet e miz Imbril ha Mae ar blez-mañ a pa zo

fardet àr Craonne. Un dristez eo gwelet ar geizh-se diskaret e-kreiz o ampartiz. É tonet d'ar c'hamp Broussilof ema dav deomp monet fonnapl. Teural a ra ar Jermaned tammoù dir àrnomp, ha pezhioù. E-pad an deiz e pad o safar.

**24/25/26/27/28/29/30-09-1917** - Setu pell 'zo nend omp ket bet ken didrouz èl amañ. Meur a wezh e kouezh ur potarn bennak àr an Terrasse, gwezhavez e ta un aerlestr da vale hag e tarzh ar boledoù 'dreist hor penn, met akourset omp doc'h an trouz se, ha ne barra ket a-zoc'homp a ziviz hag a lenn. Hiraat a ra an nozvezhioù-se. Lod a c'hoari kartoù beta tost-mat da greisnoz ; me a lenn-me beta 10 eur, 11 eur. Lod a sailh àr levrioù lous pe amoral ; me a esae-me deskiñ pe pas ankouaat. Levrioù àr ar Feiz, àr ar ouiezegezh a lennan ha gete e tremen ma nozvezhioù hep añne. Hon tud a zalc'h da vonet trema Craonne da aoziñ an hent, met dister eo o labour, e meur a dachad atav : da 2 eur eh aont kuit ; a-benn 7 eur e vezont en-dro.

**1<sup>añ</sup> a Heneoual 1917** - An deizioù-mañ e vezer bec'h arre é kempenn ar bae. Paperioù a gouezh èl bepred ha tud a c'houlenner genomp a gement tu a zo e'it monet da gondou roñseed, da vout keginerion, gwerzherion kenobererezhdiar ha kant micher ! Ar bermisionoù a zo ivez é nijal arre er speredoù ha, hed an deiz, ne glever komz 'met anezhe. Nag ur foar ! Muioc'h ema troet ar speredoù àr du ar gêr e'it àr du achumant ar vuhez-mañ. He neoazh al lod muiañ a sell àr-un-dro get prederi doc'h ar bermision-se a lakay en-dro o c'halon da wadiñ.

An darn vuiañ ag ar vourc'hizion ha kêrizion a zo amañ a ya dreist-pep-tra d'ar gêr e'it en em skarzhiñ ! Ne gomzont 'met ag an dra-se a pa vezer doc'h pred hag o divizoù a zo c'hoazh danvez da 'm dic'houst da greskaat e'it darempred tud seurt-se.

**02/03/04/05-10-1917** - Netra a nevez. Meur a wezh e taer ar Jermaned hag e taolont ur grevennad houarnaj àrnomp hep gober netra met diwrizienniñ ur c’hwezenn bennak ha divarriñ re ’rall.

Monet a ra ar chef e perm. hag e choman ma-unan. Dre voneur ar wezh-mañ e kavan un denig daet ag ar C’holoniale hag a oui derc’hel ar bluenn. An denig-mañ a zeraou diviz din e valeurioù : ur vaouez en doa en deus troet kein dezhoñ. A-c’houde ar brezel en deus kavet ur «vamm-baeron brezel» hag e kerzh al lizherioù etreze. Ar vamm-baeron-se a oa dimezet ivez, met he gwaz en deus achapet e’it pas bout soudard. Ma skrivagnourig en deus kemeret en he c’halon lec’h an arall ha bremañ emaint, ma skrivagnourig hag e vamm-baeron, é klask sevel un neizh nevez ! É lakaat o oad bern-oc’h-bern e tostaont da 80 vlez ! Ne vern... Ar gwashañ, o daou o deus un tammig relijion, ha gourc’hemennoù Doue a sav ur vagoer etre o div garantez. Ne ouian ket petra ’vo ar c’hreñvañ, o c’harantez pe ar vagoer ?... Ar pezh a ouian ervat ema an «huanadour»-mañ a zo dall èl rac’h ar re a ra al lez. Diskouez a ra din un tammig banniel triliv a zo àrnezhi livet Kalon Sakret Jezuz hag edan, brodet get neud melen : « *Coeur de Jésus, sauvez la France* ». Ma skrivagnourig a gav kaer-bras al labour-se : « *Voyez, eme-eñ, comme elle travaille bien, ma marraine !* »... Ne gavan ket me... Met setu nend eo ket lunetoù Cupidon àr ma fri ivez.

**06-10-1917** - Setu ar glav ! Nend eo ket mui ken bourrapl an traoù genomp. Ret eo din achap ’raok an dour c’hoazh ; met mat e tegouezh an traoù : al letenant a ya da Monaco hag e kemeran en-dro an tachad lec’h ma oamp a-raok hag a zo ervat.

**07-10-1917** - Bemnoz e tarzha ar c’hanon a-gleiz deomp. Trema Heurtebise, Condé, Vauxhaillon. Un tamm krogad a zo doc’h en em gempenn doc’h an tu-se.

**08/09/10/11-10-1917** - Glav !! Na lous eo a-benn ar vinotennoù hep mein-mañ. Serrezh a raomp tammoù pav-kazh dizouaret d'ar potarnoù hag o bountomp en tan. Plijadur a ra un tammig tan ! A p'em gwelahe an dudjentil a zo a-dreñv, kement a boan dezhe é kaout glaou ha keuneud !... A-fet kement-se ema mat hon traoù-ni amañ. Ne vehemp ket chifet a bas ar gouiañv en tachad-mañ kentoc'h evit monet da bostal a-dreñv e'it kavet ul lec'h a vehe sur falloc'h hon doere a-barzh e'it amañ.

Paperioù ne vank ket an deizioù-mañ : hiziv em eus unan d'ober àr an holl e'it reiñ da ouiet d'ar chef de B<sup>on</sup> pegement a « sklaerder » a za deomp ha pegement a roer deomp. Venniñ a ra goût kement-se rak ne gav ket getoñ e roer trawalc'h dezhoñ ha ne venn ket an aotrou paeiñ ag e sac'h ! Amañ eh eus eil-ofiserion ha soudarded hag a bren gouloù !!!

**12/13-10-1917** - Glavaj atav. Ar Jermaned henoazh a zo follet ! Dave a raont houarnaj àrnomp harz-pe-krev ha hep dehan a-dal 5 eur betek an noz hag...

**14-10-1917** -... An deiz àr-lerc'h vintin hep dehan arre. Gourden a dap un tamm houarn en e vorzhed doc'h an diabarzh ag e c'hlin hag ema ret er c'has d'ar c'hlañvdi.

Klevet a raomp komz o deus flastret un nebeud mat ag ar 22 C<sup>al</sup> edan o zorpilhoù hag o boledoù ha kemeret ur pennad ag al linennoù doc'h Kompezenn ar Casemates. Ar mintin-mañ o bounter àr-raok hag ema hon tro da deurel 10 kwezh muioc'h àrnezhe sur a-walc'h e'it n'o deus kaset deomp. Get largantez e takoromp o fotarnoù dezhe !

Deskiñ a raer lod ag hon tud da denniñ get ar c'hanon, ha plijadur o deus e vountiñ get ar Jermaned : ar gwellañ artilherion a vehe sur ar soudarded àr droad a pand int bet un herrad er fozioù-difenn.

**15-10-1917** - Souret en deus ar paperioù àrnomp arre get ar bae a zo an deizioù-mañ... Hag eh on ma-unan get ma skrivagnourig. Kenderc'hel a ra ar c'hanonoù da skopat.

**16/17/18/19-10-1917** - Follin a ra ar Jermaned an deizioù-mañ. Degas a raont deomp a o louteri muioc'h e't bihanoc'h. D'ar 17, el ma oan aet d'ar Champ d'Asile, o doa parraet a-zoc'hin a zonet en-dro dre Blanc-Sablon. Hag arru er vinotenn Monaco-Broussilof eh oa just ken vil an traoù. 5 eur d'enderv-noz e oa a p'em boa gellet kêrin goude bout en em bladet div pe teir gwezh ha bout diskroc'honet ma zal get ma zokarn é kouezh àrnezhon. Bountin a raont aezhenn fall genomp ivez, met evit gouelin hepken !...

Ar 22<sup>vet</sup> a esae an deizioù-mañ lemel get ar Jermaned ar pennig bouzellenn o doa kemeret : nen daont ket forzh-kaer da benn : re a vindrailheroù a zo ha kouezh a ra meur a unan àr ar bratell c'hoazh. Gwir eo ivez nend eus ket tennet a-feson evit fondin o c'hreñlec'hioù.

Komz a raer bemdez a vout savet ac'haleman ; arc'hoazh d'an noz (21) e yaimp àr-raok 'gozik sur evit monet da gousket da Vaslieux-les-Fismes.

**21-10-1917** - Da 12h eh aomp-ni àr-raok e't Baslieux a welomp get plijadur en-dro. Met nag un tachad e't lakaat an dud : kobanoù planch, àr an douar, hep plouz. An dud a arru da 3 eur 1/2 d'an 22.

**22-10-1917** - E-pad an deiz Baslieux-les-Fismes lec'h mah eus un iliz ag en XII<sup>vet</sup> kantved kurius da welet. Er chapel dehou eh eus ur retabl kizellet er mein hag a ziskouez teir taolenn a vuhez hor Salver : ar gurunenn spenn, ar C'hrist dirak Pilat, ar C'hrist dirak Herode ? Taolennoù arall a zo uheloh. Ur voussure a zo merket àrnezhi :

*L'AN VXXXVI FUST FAISTE CETTE VOSSURE  
LONT DONE IEHAN CVLLOT ET MARIE SA FEMME.*

Pennpeulvanoù a zo ivez en ilizig-se hag a ziskouez pennoù tud, lod anezhe vil spontus.

**23-10-1917** - 4 eur 1/2 eh aomp-ni àr-raok ; ar gompagnunezh a ya kuit da 6 eur 1/2. Noz-du eo ha doc'h tu Laffaux du-se eh eus gurun èl biskoazh n'em eus c'hoazh klevet. Kempenn a raer du-se un taol àr an eneberion. Hani ne gomz é klevet an trouz-se ha soñjoù trist a grog en den...

Kêr Fismes a zo c'hoazh kousket a pa dremenan enni. Arru a raomp amañ (Goussaincourt) da 10 eur 1/2. Ar gompagnunezh àr-dro kreisteiz. Ha glav é kouezh neuze a-boullad. Brav e vo gober hent arre arc'hoazh ! Nend eo ket fall lojet an dud amañ : lec'h a zo e sulerioù, e karrdioù, e krevier ha plouz a zo ivez. En un dachenn e roer plouz evit netra d'an dud, tri bot pep unan, a dal ma chomo ar plouz en ti. An ofiserion a zo bet aesoc'h da lojiñ. Al lieut. a zo en ur gampr dister met mistr. Al L. Hegron n'en deus ket gwele erbet : el lakaat a ran en ur c'hraou lec'h mah eus graet gweleoù orsal ha lec'h ma kouskan-me ivez get en adjd., ar chef hag en adj. inf. Nend eo ket drouk hon traoù eno. An ofiserion a zebr en un davarn, àr un dro get en of-mitrail. ha kuit din a redeg da glask lec'h dezhe. Eürus on a gement-se rak e Baslieux n'o doa ket vennet paeñ 4 real ! d'ur vaouez evit debriñ en un ti kloz ; an dudjentil en doa kavet gwell debriñ en ur gobanenn lec'h ma hor boa lakaet hor burev.

**24-10-1917** - De 5 eur 1/2 eh aomp àr-raok. Arsavet en deus ar glav, met trouz ar c'hanon ne arsav ket ! Un trouz spontus a zo atav trema al linenn. Monet a raomp en hent, skañv ha get jourdoul daousto d'an hent fangek a zo ret deomp heuliñ e-pad un 1/2 lev. Treuziñ a raomp div pe teir kêrig



dister ha hep braventez hag eh arruomp get Verneuil. Diskenn a raomp beta Dorman(s) en ur dreuziñ ar Marne. Gwelet a raomp c'hoazh en un taol-lagad iliz Dormans a garahen kaout oar da vonet da welet, hag eh aomp da Chassaing, ur gêrig hon eus tremenet enni c'hoazh é tonet ag an Alzas. An dud a ra ar gwellañ degemer ac'hanomp ha kavet a raomp lec'h e't lojiñ tud, ofiserion ha loened. Àr-dro 11 eur ema pep unan en e lec'h hag e kavan amzer da vonet da dañvaat gwin ar vro e ti ur gwiniegour ag ar vro.

**25-10-1917** - Chom a raomp amañ hiziv. E ti tud a Penon eh omp é tebriñ. E Reims eh oant a pand eo daet ar brezel, ha chomet int eno keit èl m'o deus gelllet harz doc'h an obusoù.

**26-10-1917** - 5 eur. Eh aomp kuit evit Artonges. 20 pe 21 kil. a zo d'ober. O gober a ran hep diskuizh tamm ! Gwir eo ema bourrus kerzhet. Treuziñ a raomp Condé-en-Brie, ur gêrig vihan e deun ur flagenn, ur c'hovu hag un iliz gozh dezhi. E-tal Condé e welan ur soudard é labourat en ur park, e voest enep-aezhenn getoñ !... Bravik eo ar vro-mañ, flangennek ha meneziek. Arru a ran ma-unan e Artonges da 9 eur 1/2. Graet eo ma labour a-hanter dija d'al L. Roudier ha d'ar serjant Decoufflé a zo amañ. Monet a ray rac'h ma zud e daou di. Bout o deus beb a wele, ur c'holc'hedad plouz, un treuzplueg, hag un hunsac'h. Ni 'zo-ni disafar ivez : nend eus ket tud ag ar vro genomp. Ne fehemp bout gwell.

**27-10-1917** - Devezh labour a-grev e't kempenn pep tra ha reiñ an dilhad gouiañv. Rac'h ma lizherioù a zo chomet ivez hep respont a-c'houde pemzektez zo. Tud vezv a zo arre ha kan, ha kann ha trouz. Na divourrus eo bout e-tal tud seurt-mañ.

**28/29/30/31-10-1917** - Eh omp arre bec'h é lakaat pep tra en e lec'h hag é reiñ o zraoù d'an dud. Ar bae a vo arre an deizioù-mañ.

**1<sup>añ</sup> a viz Du 1917** - Dec'h d'an noz eh oa arru genomp 28 soudard daet ag ar 134°. 'Gozik rac'h emaint a gostez ar Savoie hag an Ariège. Diskouez a raont bout tud didrouz. Gouel an Hollsent. Oferennnoù a zo met nend eus ket kalz a dud enne, na tud ag ar vro na tud soudard. An iliz ag an XIII<sup>vet</sup> kantv. N'en deus netra forzh kurius. Aozet eo bet a dachadoù get brik ha forzh vil ! Neoazh, er vrec'h dehou eh eus ur C'hrist koad, kozh, ha div zelwenn, kozh ivez, a zo bet dastumet eno hag a zo labouret bravik. Ar C'hrist dreist-pep-tra a zo kizellet ag ar c'haeran.

**02-11-1917** - Gouel ar Re Dremenet : ken goulle eo an iliz. Nend on ket bet c'hoazh é welet ar vered, met ne gredan ket fari é lâret ema ken digas tud ar vro-mañ e-keñver o re dremenet èl m'emaint e-keñver an Aotrou Doue.

**03-11-1917** - En em gustumat a raomp a-nebeudigoù doc'h hol lec'h nevez : disafar omp. Henoazh neoazh e teraou ar jilori. Ar bae a zo bet, ha kentizh e krog ar follezh en dud. Leun eo an tavarinioù a dud vezv, a gan, a huch, a skop. C'hwezh ar gwin hag ar butum a fard er-maez ag an tier-se a pa zigorer an norioù hag a za d'en em gejiñ get c'hwezh ar staod tud vezv a red doc'h kostez an tier.

Hor c'heginour a zilez ivez e gegin, ha d'an noz ema ret deomp debrñ soubenn nend eo ket bet sallet ! An eil-ofiserion a zo ken mezv èl ar re 'rall ; nend omp met 4 doc'h taol. Achu a raomp debrñ ha nend int ket arru c'hoazh. Bec'h a sav etreze a pa zaont da zebriñ...

**04/05/06-11-1917** - Atav e pad an argant hag atav e red ar gwin. Komz a raer henoazh a ziblas. An tankirri a zahe d'hor c'hlask du-mañ.

**07/08/09-11-1917** - Reishaat a ra ma zud. Arc'hoazh vintin eh aomp àr-raok.

**10-11-1917** - Diblas da 6 eur. Dre Jolgonne eh aomp ha La Fère-en-Tardenois. Da 11 eur eh arruomp e-tal Beaurieux lec'h ma chomomp un euriad bennak evit gwelet reiñ ar groaz brezel da zaou pe tri soudard. Unan anezhe a stager doc'h kalon un eil-ofisour a anavan hag en deus bepred enebet doc'h ar brezel, doc'h an ofiserion, doc'h ar vicher ha graet pep tra en ur daranal ! Pegement a groazioù a zo bet staget el-se a-gleiz hag a-zehou àr galon tud n'o doa ket-hi gounidet !

Goude eh aomp ar hor goarigoù àr hent ar Vilin-Ruz. Treuziñ a raomp koad Beaurieux hachet rac'h d'an obusoù hag en ur stad truek. An hent a zo lous-meurbet. Arru a raomp get kroaz-hent ar Vilin-Ruz. An hent a zo atav el e 1915, met milin erbet nend eus ket mui. Ar mein anezhi a zo bet lakaet d'ober magoerioù al lojoù ofiserion a zo graet doc'h tor an dorgenn. Ar Vilin-Ruz bremañ a zo ur vilinig avel houarn gwenn livet e ruz a zo e pign, àr an hent, doc'h toenn ul loj. Ur Parizian bennak a duad Montmartre, é welet ne oa milin erbet, a gredas pechañs eh oa anv e vilin kanerion a oa bet roet d'ar c'hornad-mañ, ha kentizh en doa kavet an arouez a faote !

Monet a raomp da lojiñ e Camp-Boucheron, just e-tal hent ar Vilin da Oulches ; doc'h tor ar menez eh omp, er sav-heol da Vassognes. Gwelet a ran, kerlet diragon, Jumigny, Vassognes, ar Vilin-d'an-Diaz, Oulches. A-dreiste tachenn Paissy, ar C'hoad-Foulon, lec'h tachenn Heurtebise, lec'h peulvan Heurtebise hag an dorgenn lec'h ma oa ar Jermaned e miz Imbril. Labouret eo an douar d'ar boledoù, nend eus

'met toullou, toullou, ha toullou c'hoazh hag ar re o deus gellet monet beta du-se a lâr nend eus mui anad nag a wez, nag a geot, nag a dier. Ludu ha netra ken, ludu douar, ludu mein, ludu eskern ! Malet, brevet, tamouezet, mesket !... En tachadoù lec'h nend eus ket kouezhet obusoù e weler eskern divrec'h, eskern divhar, pennoù, chajelloù é wennaat edan an amzer. Tammoù dilhad a chom a-gleiz, a-zehou, hag a zegas soñj d'an den ema tud en deus en em lazhet amañ, ema labour mab-den eo an dismantr a weler. Keneve-se e kredaer bout en ur c'hornad divuhez, malet d'ur c'hren-douar, goloet d'al lav daet ag ur menez-tannek.

Oulches nend eo ket foñdet-bras a-c'houde 1915, met e Vassognes ne chom mui ti erbet hep bout diskaret. Jumigny en deus bet ivez nebeutoc'h a zroug ; chomet a zo mem 4 ag an dud a oa eno genomp.

**11-11-1917** - Oferenn en un toull e-tal gar vihan ar Vilin-ruz. Souezhus eo, 'gozik e kement tachad eh aomp e lârer an oferenn e toullou lec'h ne c'hell ket monet 'met un dousenniad tud !

**12/13/14/15/16-11-1917** - Labour deomp get ar paperioù arre ha get al lojoù a zo da gempenn. Rac'h ar gompagnunezh a zo lakaet en ur sape vras graet nend eus ket pell 'zo d'ar Génie, 10m. bennak edan an douar. Ne zoujer ket kalz ar potarnoù enni, met ken deun eo ha ken mouest mand eo hañval genin diskenn en ur bez ! Un noz am eus kousket enni met an eil noz em eus a-benn graet man gwele en un toull arall a weler an deiz ennañ. Dañjer nend eus ket kalz amañ hag em lec'h nevez e c'hellan a-wel gober tan ha lonkiñ aer fresk ha c'hwek an Aotrou Doue.

Dec'h en doa bountet ar Jermaned aezhenn fall àr gornad La-Ville-au-Bois, Craonne. Soudarded a oa eno ne oant ket

pechañs kustum doc'h an aezhennnoù fall, rak oc'hpenn ur mil anezhe a dremen e Beaurieux, o daoulagad gronnet. Ne greder ket neoazh e kollint ar gweled rak an aezhenn a daol an eneberion bremañ nend eo ket ken dañjerus el an hanni a daolent a-raok. Ne ra 'met dizarmiñ ar soudarded.

**17/18/19-11-1917** - Atav ema didrouz hon tachad.

**20-11-1917** - Monet a ran get Vramant d'ober un dre dre Oulches-Vassogne. Diaes eo anaout ar c'hoad ken foñdet el m'ema. Monet a ran neoazh get an hent am eus heuliet gwezharall ha gwelet a ran gwez, douaroùier am eus darempredet gwezharall. Setu du-se un ti a zo chomet foñdet el ma oa, ur c'hav a zo bepred ur seurt, ur vammen am eus kemeret dour a-barzh. Setu ul liorz a oa interret a-barzh soudarded Breizh-Veur : siwazh nend eus ket mui na bez, na kroaz. Ur potarn bennak a zo daet d'o dizouariñ. Àr an douar eh eus un troc'had geot sec'h, un troc'had avaloù-douar anvet helianti. Setu an ti pe kentoc'h lec'h an ti mah oamp. Amañ eh oa ul liorz frouezhet-mat, div wezenn brun a oa er c'horn aze hag en disheol anezhe em boa lakaet ur c'haes soavon get un taol-gwenan a-barzh : prunennoù, ruskenn a zo aet da vale, ar vagoer a oa e-talte ivez hag ur foñjell deun a zo daet da gemer o lec'h. Ag an ti ne chom mui met ar c'hav ha c'hoazh nend eus 'met unan ag ar c'havoù, an arall a gousken a-barzh a zo enmaeniet...

Ur valeadenn a raomp dre ar vourc'h. Finfoñdet eo, neoazh chom a ra tier en o sav. An iliz, doc'h tu an hanternoz a zo bet skoet lies, ne chom mui met ar vagoer en tu doc'h ar c'hreisteiz. Labour vat a rae masonerion an XII<sup>vet</sup> kantvezad... Chom a ra atav. Monet a raomp ivez da welet ar vered : nag a dud yaouank a zo astennnet aze evit o diwezhañ hun. Meur a Vreizhad a zo en o-mesk.

A Oulches eh aomp da Vassogne dre an hent-bras ha gwelet a raomp ar fozioù lec'h ma oamp e 1915. Setu Vassogne. Amañ ema viloc'h an traoù e'it e Oulches : n'em eus ket gwelet a-c'houde Dompierre, a-c'houde Terny-Sorny, kêr erbet ken foñdet. Bout a zo ruioù nend eus mui anad erbet anezhe ; an iliz a chom c'hoazh ur c'horn anezhi àr sav met ret eo bout e-talti ha gwelet ar c'hoad ag an aoter brevet e'it goût ema an iliz eo. En-dro dezhi ar potarnoù en deus krouizet, labouret, mac'het ar bezioù. Pennoù, divhar, divrec'h a zo a-gleiz hag a-zehou àr an douar, dizouaret d'an tennoù. Massiges am eus gwelet get ur vered seurt-se c'hoazh. Keizh soudarded ag ar 88<sup>vet</sup> lazhet e 1915 a zo bet beziet amañ, met ne vo ket mui gouiet diforc'h o relegoù doc'h re ar re 'rall. Rac'h emaint kejet ! Un dra neoazh a remerkan : kavoù ar vro, graet gwezharall e'it lakaat ar gwin, en deus dalc'het en o flom. Kaviñ a ran 3 pe peder anezhe am eus kousket enne hag a zo atav lec'hioù e'it soudarded.

Ar c'hoadoù a oa en-dro da gêr a zo finfoñdet, d'an dud.

Distroñ a ran da Gamp-Boucheron eürus a vout gwelet ar vroig-se lec'h em eus bevet e penn kentañ ar brezel, met ma c'halon gwasket ivez é welet c'hoazh da betra en deus servijet d'an dud bout invariant kement a draoù peogwir e fondont muioc'h e'it n'o deus gallet sevel ! Rac'h o ijin, rac'h o spered o deus lakaet edan damani ar marv hag eh oant karget da dreuzkas ar vuhez !....

**21-11-1917** - Nend eo ket trouzusoc'h an traoù. Neoazh un tammig tarzhad a zo bet get ar 22° a oa karget da skrapañ un dornadig Jermaned a oa chomet en tu-mañ d'an Ailette evit evezhat hon tud. Donet a raont da benn ag o skraperezh. Unan anezhe neoazh a zo chomet àr an dachenn.

**22/23/24/25-11-1917** - Setu al lârezhoù é kerzhet : lod

a lâr eh aomp da gostez Epernay, goude da gostez Lyon. Lod a lâr eh aomp da gostez Bourdel. Goude e vimp kaset d'an Itali, a lâr ar re gentañ, da Salonik a lâr ar re 'rall. Ha setu ur rummad arall hag a lâr, int ivez, eh aomp hepken da gostez ar Champagn laouek ! Fentuset traoù a glever, a pa venner digor an diskouarn da selaou rac'h an traoù diot a red èl-se hep dehan. Ha nend eo ket ar c'haezh soudard, ar c'haezh realour, a sav ar pousined-se, met tud hag en deus galonioù. Hol letenant a lâr da nep a venn selaou, ema «foutu» Frañs hag e rahemp gwell gober ar peoc'h, koustet a gousto. Bemdez e kav ur gredenn bennak èl-se da ziskar àr e-oarigoù. Nend eo ket fall zen neoazh, ha neoazh an deiz arall en doa lazhet en Aotrou Doue ! Doue ne c'hell ket bout, eme-eñ, rak penaos 'faot deoc'h-c'hwil e c'hellahe ar «pont-se» (pont, evitoñ, a zo èl poilu !) en em soursi a gement a dud vev hag a dud varv !!!

**26-11-1917** - Netra a nevez.

**27-11-1917** - Arru a zo kemenn genomp da vonet d'ar Vilin-Ruz, rak an tachad-mañ a zo miret e'it an Divizion a zo doc'h Craonne.

**28-11-1917** - Doere da vonet kuit arc'hoazh.

**29-11-1917** - Àr-raok d'Oeuilly. D'ar groc'hoù a zo a-dreist Oeuilly eh aomp. Nag a labour a zo graet amañ. Ar menez a zo a-dreist Oeuilly, lec'h ma oa ur groc'h get ur c'hoari lec'h naturel, a zo rac'h krouizet. Ar groc'h a zo skarzhet ha peulvaniet. Graet a zo a-gleiz hag a-zehou burevoù ha kambroù. Hañval eo an tachad bremañ doc'h un ti gwerzh bras. A-zehou eh eus krouizet toulloù arall ha kempennet lec'hioù e'it soudarded. Eh omp dek metr bennak edan ar rec'hier bras. Dergeioù ledan a zo evit diskenn, dorioù àrnezhe.

Tredan a zo e kement kognell a zo. Ne c'heller a-dra-sur kavet gwell e'it lakaat soudarded e-pad ar brezel. Neoazh ne c'hellan ket kousket ken dous amañ el a pa vezomp en hon touloù hon-unan. Diwezhat d'an noz e vez trouz ; abred da vintin e teraou arre an trouz. Ha lec'h mah eus kement a dud ne bas ket kalz a bredoù ag an noz hep ne vez unan bennak é fichal.

Diàr lein ar menez lec'h ma vezen gwezharall é vale ma-unan e weler Hent-an-Intronezed, Moulin, Troyon, Bourget-Comin, Pont-Arcy, Vieil-Arcy, Merval, Villers-en-Prayères, Revillon, etc. Ha rac'h ar gêrioù-se a zegas soñj deomp a vlez kentañ ar brezel. Siwazh ! e kement lec'h, dorn mab-den en deus foñdet pep braventez. Ar gwez a zo troc'het, ar parkoù hentaet get ar vinotennoù, an hentoù-houarn. Kobannennoù a zo savet e kement tachad a weler. En diaz doc'h ar menez eh eus ur vered lec'h mah eus oc'hpenn 2 000 soudard astennnet evit mat : soudarded àr droad, àr varc'h, aerlestrerion, belean, pastored, martoloded, ... Breizhiz ha Parizianed, re ag ar C'hreisnoz, re ag ar C'hreisteiz a zo eno en hevelep park lec'h ma oa ed druz e 1914...

Monet a ran betek Oeuilly evit gwelet an dud a anavan. Ne chom mui met un tregontad a dud ha ne gavan mui 'met ur vaouez hec'h-unan a anavan. En he zi em boa mam burev. An hanni a gousken en he zi a zo marv an deizioù-mañ.

**30-11-1917** - Labour arre da gempenn ar pae. Betak 11 eur ema dav deomp chom da zuiñ paper.

**1<sup>añ</sup> a viz Kerzu 1917** - Hiziv eh a kuit an adj. inf. maj. Vramant, un den yaouank a Bariz a zo argantaour er Bourse. Den amiapl ha spered digor a oan deraouet da ziskouez dezhoñ braventez al lezennn kristen na anaveze ket tamm.

**02-12-1917** - É tenniñ mein ag ar menez ema hon tud.



Ar mein a zeval diàr ur blankenn betek ur voest vras a za an tankirri da gargiñ edanti. Didrouz omp amañ.

**03/04-12-1917** - Netra a vad. Henoazh e taol an eneberion 4 pe pemp bomb àr Oeuilly hag e lazhont un nebeud tud.

**06-12-1917** - Kuit a groc'hoù Oeuilly e'it monet da Barbonval lec'h ma kouskomp en ur gobanenn a raomp tan enni. Eil-ofiserion artilheri a oa amañ ha chom a ra àr o lerc'h dour c'hwezh mat e boutailhoù mentek !

**07-12-1917** - Kuit e tankirri e'it Montigny. Hon dastum a raer da gentañ àr hent Revillon, goude e raer deomp krapañ àr hent Barbonval. Àr-lerc'h bout gortozet un euriad vat e weler nend eo ket amañ eh oa dle deomp donet met àr hent Villers da Fismes ! Ema an tankirri doc'h hor gortoz eno... Fonnapl e raomp an 40 kil. bennak hon eus d'ober. 'Raok an noz eh arruomp e Montigny, ur gêrig goant staget doc'h tor un dostenn, àr glann ar Marne. E bro ar gwin eh omp. An dud, hep bout pinvik, en deus rac'h un draig bennak. Degemer karadek a raont ac'hanomp ha fonnapl ema lojet rac'h ma zud din.

**08-12-1917** - Kempenn a raomp pep tra ha lakaat a raomp pep den en e lec'h. Pep unan en deus ur gwele get ur bailhasenn plouz, ur c'holc'hedad plouz, ur sac'h hun, un treuzplouzeg, ur c'hroc'hen dañvad. Diaes e vehe bout gwell. Pec'hed eo ema yen ha ne c'heller ket gober tan en tachadoù lec'h ma kousker. Nend eus 'met ar burev hag en deus tan.

**09-12-1917** - Sul -Div vaouez en oferenn. Goulenn a ran get ar vaouez eh omp en he zi penaos ema an dud dre-mañ a-fet al Lezenn. Nend int ket a-enep d'ar Feiz, badezet e vez ar

vugale, gober a raont o c'homunion gentañ, eurediñ a raont en iliz hag evit o c'has d'ar vered eh aer da glask ar beleg ! Beviñ a raont a-hend-arall hep en em soursial tamm erbet ag al Lezenn... Kontiñ a ra din en en doa euredet he breur-kaer d'ur geniterv dezhoñ. É! ma c'houlenne ar person getoñ paeiñ an deog dleet e'it an diliamm a gerentiaj, eñ a chipotas hag a gennigas an hanter d'ar person !!! É! rezon ne oa ket asantet getoñ. An den yaouank neuze a bedas ar bomperion da zonet da evet an argant ha eñ en em barras get e vouzenn !

**10-12-1917** - A du ar moral ne talv ket kalz a dra ar vro-mañ ivez. Merc'hed diroll a zo e-mesk ar re yaouank hag e-mesk ar re dimezet. Souezhet e vehen é welet an eskemm.

**11/12/13/14/15-12-1917** - En em gustumaat a raomp en holl lec'h nevez daousto d'an tier digor d'ar seizh amzer ; ha yen an amzer. Skorn a vez beb mintin ha tud ar vro a ya da skubat o gwiniegi. Get ar skorn, ar glizh hag al louzoù a vez bresk hag a-benn e torrout ; èl-se, a pah arru an nevez-amzer o devez nebeutoc'h a labour é c'hwennat o gwiniegi. Argant a c'hounide tud ar vro-mañ kent ar brezel ha neoazh nend eus 'met tres ar baourentez àr an dud. Un den a gousk hol letenant en e di a lâre a rae 25 pe c'hwec'h pezhad gwin bep plez a werzhe 400L. bennak. Al lod muiañ ag an dud en deus kement. Met korv er gounit korv en debr !

**16/17-12-1917** - Erc'h ! Ar mintin-mañ a pa zisuleromp ema gwenn an traoù. Brav eo gwelet a-ziabell an dostennoù gwenn èl tul hag ar gwiniegi a seblant bandennoù brodet ; ar bernoù piketoù a zistag du e-kreiz ar rankadoù a seblant «greun piz». Labour ur vroderez. Yenaet-mat en deus an amzer. C'hwezhiñ a ra an avel.

Urbain II ?

**18-12-1917** - Yen eo an traoù. An erc'h ne deuz ket. Donet a ra a-c'houde disul an Ao. Moigneu da bredeg ur retred deomp. Nend eo ket leun an iliz ! Ur vaouez ag ar vro, 1 den, 10 d'ar muiañ !! Gwir eo ema forzh yen en iliz. Na paour, na paour ! Hañval eo an iliz doc'h Feiz ar vro-mañ...

**19/20/21/22/23/24-12-1917** - Netra a nevez 'met ema yen bepred. Start eo d'hon tud harz en o sulerioù lec'h ma fard an avel a gement tu a zo. Genomp-ni eh eus tan hag ema diaes harz doc'h ar mintin. Gwir eo e tiskenn ar jed amzer beta 13 edan ket. Ne vez ket lies ker yen e Breizh !

Arc'hoazh eh aomp kuit. Da Verzy eh aomp, a-dal da Reims, da gemer lec'h an eil Bataillon. Tankirri a zay d'hor c'hask hag ema un dra vat rak diaes e vo kerzhet... Ur brav a zeiz an Nedeleg c'hoazh evidomp ! Nend eo ket ar c'hentañ...

Prenet hur boa ur waz neoazh evit en deiz-se : 4 lur al lur kig ! Netra che !

**25-12-1917** - Nedeleg ! Tristet ur gouel en iliz-mañ yensklask ha digor d'ar seizh avel ! Ha bihan eo an niver a dud a zo daet d'an oferenn !

An enderv-mañ eh aomp kuit ag ar vro-mañ ha nend on ket fall goutant ag he c'huitaat. Displijout a ra an dud din ha fall lojet omp.

Da 1 eur eh aomp en tankirri. Heuliat a raomp ar Marne hag emberr e ta erc'h. Kouezhel a ra stank-stank hag a-benn ema gwennaet maezoù, tier, hentoù. Diaesoc'h e-leizh eo d'hon tankirri kerzhet. Ruskliñ a raont, troiñ a ra ar rodoù en hevelep tachad é krapañ doc'h ar menezioù. Ne oa ket kalz a hent d'ober ha neoazh ema tost da 5 eur 1/2 a pah arruomp e Verzy. Daousto d'ar serjant a zo amañ bout belzet eh arruomp, ema rac'h hol labour d'ober, hag el nend eus ket lâret d'an dud eh arruomp, aet int rac'h da gousket hag ema ret deomp skoñ

àr an norioù e'it lakaat an dud da sevel. Na traoù dibenn a raer er vicher-mañ. Aes e oa neoazh, forzh aes, hor c'has-ni un euriad bennak àr-raok, aes e oa lâret d'an dud e tae soudarded ha neuze e vehe bet prest an traoù a-benn a pa vehe bet arru an dud. Er feson-mañ ema bet ret dezhe chom àr ar ru 2 euriad bennak da c'hortoz ma oa achu din klask lec'h dezhe. Ha penaos lec'hioù klasket en noz, en teñvelded hag a-herr ! E'it lojiñ an ofiserion e oa bet gwazh c'hoazh, rak diwezhatoc'h-diwezhat e oa ma zraoù hag an dud ne oant ket jalet da sevel get un amzer ker yen. Da 11 eur eh oa achu ma labour din ha debret un tamm kreun : a-c'houde 11 eur da vintin n'em boa ket chaket tamm !

**26-12-1917** - Hiziv e kempennomp arre hol lec'hioù rak amañ ivez àr-lerc'h tri blez brezel nend eus graet netra, netra evit gwellaat lojeris an dud. Dre voneur ema kêr a-bezh. Nen deus ket taolet ar Jermaned kalz a botarnoù àrnezhi. Ur vravig a gêr eo, bras el Henbont, get tier graet mat, mistr, pinvik. Pinvik eo ar vro ivez. Gwin champagn ag an dibab a eoster amañ, a werzher beta 400 skoued ar varrikad vihan a 200 litrad. Al lodenn vrasañ ag an dud a zo perc'henned ha beviñ a raont kaer. Neoazh an dud a zo jaojapl. Degemer mat a raer doc'h ar soudarded hag ar yaouankiz ne ziskouez ket bout divergont el er c'hornadoù e taomp anezhe. Feiz a zo ivez ; er gwelet a raer doc'h an iliz, doc'h an diabarzh ag an tier, doc'h feson an dud er ruioù. Neoazh ar brezel sur 'walc'h en deus graet droug amañ el e lec'h arall.

**27-12-1917** - Kavet hon eus ul lec'h evit debriñ e ti ur boulom, an Ao. Sacy, jandarm kozh, den a galon, na gar ket kalz ar Jermaned. Gwir eo o doa laeret e win, e sukr, e evaj, rac'h ar pezh o doa gellet !

**28/29/30/31-12-1917** - Eh omp arre é kempenn ar bae. Didrouz omp ec'h ober hol labour. 29 - Oferenn en iliz parrez. Plijadur a ra deomp gwelet e-leizh a dud ar vro en iliz hag é klevet merc'hed ha bugale é kanal kanennoù an iliz get bouezhioù spis. Met na yen eo en iliz ! Kreniñ a ra rac'h an dud. Lenn a ra ar person ul

lizher skrivet get ar C'hardinal Luçon d'e zeñved, lec'h ma tigas soñj d'an dud eh eus c'hoazh Unan n'hon eus ket soñjet lakaat a-du genomp, Unan neoazh hag a zo kreñvoc'h e'it rac'h an armeioù : Doue !

## 1918

**1<sup>añ</sup> deiz ar blez 1918** - Monet a raomp da souetiñ ur blezad mat d'hon ofiserion a bae deomp un tasad gwin ag ar vro. A-c'houde Deiz-Kentañ-ar-Blez 1916 ne oamp ket bet é welet hon ofiserion : ne oa ket tu d'en em bakiñ get en hanni bras !

**02/03-01-1918** - Atav ema ken yen an amzer. Neoazh heol a vez tammigoù ha diskorn a ra doc'h ar c'hreisteiz. Tañvaat a raomp gwin ar vro e meur a di. Ur skoued a werzhont ar voutailhad. Mat eo, ha c'hwekoc'h e'it an hanni a lakaer da skumenniñ. Bout e vehe e-leizh sur hag a garahe gwell ar gwin champagn èl-mañ.

**04-01-1918** - Setu-ni a-c'houde un herrad amañ hag atav eh arru dibenn-kaer hol lizherioù genomp. Re ar 27 a arru àr-lerc'h ar re kaset d'an 28, met rac'h e lakaont 6 pe 7 deiz e'it

donet a Vreizh du-mañ. 4 serjant a zo karget ag al lizherioù er Rejimant ha n'o deus ket kavet an tu a-c'houde mah omp amañ d'en em glevet get re ar «secteur» evit kas hol lizherioù deomp dre un hent berroc'h. Neoazh ne vank ket kirri é monet hag é tonet àr an hentoù...

**05/06/07-01-1918** - Netra a nevez genomp, met glav a ra un deiz, erc'h an arall. Start eo d'hon tud labourat edan an amzer. Bet int bet edan ar glav sklasus un deiz a-bezh er c'hoad hep 'gozik netra e'it o gwarantiñ. Burzhud nend int ket skornet.

**08-01-1918** - Ar mintin-mañ eh arru an doere monet kuit. Hol labour a zo pelloc'h trema Epernay hag e resevomp ar gemenn da vonet da Fontaine-sur-Ay. Monet a raomp àr-raok àr-lerc'h merenn. Start e vo gober hent rak skornet eo an hentoù hag oc'hpenn ruskliñ a raont. Kerzhet hon eus un euriad vat a p'en em laka an erc'h da gouezh. Dre eurvad eh arruomp e Louvois àr-un-dro get an tankirri a gas ar sec'hier hag ar marc'hadourezh. Fardiñ a raomp enne hag eh omp emberr e Fontaine-s/-Ay. Eno e lârer deomp nend eus ket lec'h 'met d'an hanter ag ar gompagnunezh. Al lodenn arall a yay da Mutry, ur gêrig arall àr an hent eh omp daet getoñ. Monet a ran d'eno get ar C'hlañch. Erc'h a gouezh kreñv ha kalet, yen eo, avel a zo. Kavet a ran un tankarr hon doug betak Mutry. Eno e lârer deomp nend eus major kantonemant erbet ! Ret eo monet beta Tauxières, àr droad ! 800m. c'hoazh edan an erc'h. Kavet a ran ar gompagnunezh àr an hent. En ur gobanenn eh a hon tud e Mutry, e lec'h an artilheured, hag e Fontaine-s/-Ay e sulerioù digor d'an avel, d'an erc'h ! Ur spont eo gwelet e pezh tachadoù e lakaer an dud àr-lerc'h tri blez brezel. Nend eus netra graet a-c'houde 1914, e kontrol, foñdet eo an tier d'ar soudarded a zo bet enne. Kousket a raomp-ni en ur suler

en deus 5m. bennak a uhelled ha digor-kaer. Erc'h a ra dre zindan an teollennoù hag a gouezh àrnomp. En em vountiñ a ran en un toull etre al luzern hag ar vagoer àr un dornad plouz segal. Lakaat a ran àr ma c'hein man div lañjel, ma c'hroc'hen dañvad, div lien tant, ma sae, ma c'hapot, ma mantel ha nen dan ket da benn a en em dommet. Ar botoù-ler chomet er suler a zo skornet ! An dilhad a zo reut !... Ne vo ket tu deomp da chom amañ.

**09-01-1918** - Labour da arañj pep tra. Donet a raomp da benn a gavet ul lec'h e'it debriñ hag ur burev, met na poan ! Na pell ! Ret eo deomp gober ur c'hardlev mat e'it monet da zebriñ ag ar burev. Erc'h a ra atav.

**10/11/12/13-01-1918** - Gouiañv, gouiañv ! Yen-mat eo ; glav a ra meur a wezh hag e tiskorn. An deiz àr-lerc'h e skorn ha ne c'heller ket forzh kaer kerzhet.

**14-01-1918** - Sul - Monet a ran da Avenay d'an oferenn-bred. Un 1/2 lev bennak eo ar gêrig-se doc'h Fontaine-s/-Ay lec'h mah omp. Dre an hent bihan eh aomp. Gwenn-kann eo ar maezoù. Avenay a zo ur vourc'hig etre an daou, hanter gwinieg, hanter peizant er mod arall. Neoazh, pinvikoc'h eo e'it Fontaine, ha mistroc'h. Kristenoc'h ivez. Ur person kozh a zo, meulet get an holl a-gaoz d'e vadelezh ha d'e c'hred d'ober e zevel. Kozh eo e iliz ivez, met brav eo. Ag en XIII<sup>e</sup> kantvlezhad eo. An nor-dal a zo kizellet ag ar c'haerañ : ar pec'hedoù pennekañ a zo lakaet e kiz tud pe loened luziet e delennoù oskal, labouret ag ar c'haerañ. Doc'h un tu ag an nor ema Sant-Jojob, doc'h an tu arall ar Werc'hez savet àr ur sichenn a zo èl ur wezenn. E-kreiz ema ar roue santel David é c'hoari àr e zelenn.

An diabarzh ag an iliz ivez a zo kaer. Tokoù ar pilerioù a

zo kizellet ivez hag an dèl pikerez en deus servijet arre d'ar c'hizellour d'ober labour flour ha fin. Eledigoù, loened, bokedoù arall a zo luziet en del-se. Taolennoù kozh a zo ivez. A-gleiz d'an aoter bihan er c'hostez kleiz eh eus unan graet reve N. Poussin hag a ziskouez Elisabeth é monet get he mab da welet ar Werc'hez hag he mabig. Sant-Joheb a zo a-zehou é labourat get e gompas àr un daolenn. Pec'hed eo en en deus ar person digoret e iliz ken kaer da gentañ da garrezioù livet nend aont ket doc'hti, d'an eil da zelwennoù palastr ha d'un hent kroaz a ya c'hoazh falloh. Kavet a raer amañ delwenn I. V. Lourdes a gaver el lod muiañ ag an ilizioù, delwenn palastr marc'hadmat prenet e tier Jerman hag a ziskouez ur plac'h yaouank 13 vlez, liv ar c'hleñved àrnezhi, ur c'houg na achu ket, daouarn displet. Sur, ar Werc'hez nend eo ket bet biskoazh hañval doc'h telwennoù seurt-mañ.

**15-01-1918** - Distroet omp hiziv da welet gwell an iliz, ha get plijadur e c'hellomp sellet a-dost pep tra. Ur valeadenn a raomp ivez e kêr. Mistroc'h eo doc'h tu ar gar ha diskouez a ra bout pinvik an dud a chom en tier savet-mat a welomp. Lod ag an tier a zo kozh, ag an hen-amzer.

**16/17/18-01-1918** - Setu doereoù fall ec'h arru c'hoazh. Rac'h ar c'hlas 98 a bas en arme yaouank. Ar wezh-mañ e yay rac'h an dud, skrivagnerion, ofiserion ha re 'rall. Ar re a zo dle dezhe monet kuit a sell rous !

**19/20-01-1918** - Dousaet-mat en deus an amzer met fang a serrer ar pezh a garer. Distroiñ a raomp d'an oferenn da Avenay.

**21/22/23/24-01-1918** - Netra a nevez. Daet eo an amzer gaer en-dro. Arsavet en deus ar brumaj ha meur a zeiz ema



kaer èl d'an nevez-amzer. Ema bepred hon tud àr-dro o linenn hent-houarn. Treuziñ a raont an douaroùier gwinizh hep kreniñ ha fondiñ a raont bevañs ur 100 den bennak e-pad ur miz. Ne vern !

**25-01-1918** - Hiziv eh a da gavet ar eoñdred ur soudard ag ar gompagnunezh anvet Rouleau hag en doa dezertet. Ag ar Beljik ema ginidik. Daet e oa da Frañs da vout soudard ha gounidet en deus e bañsion é cheñch un dousenniad rejimantoù lec'h mand eo bet bountet er prizon meur a wezh èl laer. Daet e oa d'ar 4<sup>vet</sup> Komp. hag a honnen eh oa bountet genomp. Ar milon a lâre eh oa ag ar broioù kemeret d'ar Jermaned. Merc'h ur c'holonel en doa-eñ kemeret èl « filhor-brezel » ha ma labous a yae da di an dud-se e-pad e bermis. Maget e veze, gwisket èl un aotrou ha diskouez a rae ur skeudenn lec'h ma veze gwelet get ul lavreg flanel gwenn é c'hoari get merc'h ar c'holonel-hont. E-pad ma oamp en Alzas eh oa aet e permis. 5 deiz. Met é tonet en-dro e tas c'hoant dezhoñ da lezel ar vicher. E Belfort eh arrestas ha da di ur marc'hadour koad eh as da labourat. Goude un nebeud sizhunioù e tas da flastriñ e viz get un tamm koad. Monet a ras d'an ospital met eno ne vennont ket en degemer hep paper. Neuze aet an c'hwil da welet major kêr ha goulennet getoñ ur paper. Kentizh eh oa bet degemeret. Ag eno eh oa kaset da Vontelimar ha goude ur miziad paseet eno eh oa bountet ur berm. 7 deiz getoñ e'it monet da Bariz. Arru eno eh as da welet Intronezed ar groaz ruz Frañs e'it goulenn gete ma ne oa ket tu da gaout labour eno. Eh oa lâret dezhoñ monet d'ar + ruz amerikan lec'h ma oa degemeret èl mah oa ag ar broioù dismantret. 4 skoued en doa bemdez evit evezhat doc'h 60 labourer e oa é kempenn ur c'hlañvdi amerikan. 4 miz e chomas eno hep bout tregaset get hani, hag, al labour achu, ar renour a roas e goñje dezhoñ ha 200 lur gwerzh-butum a-gaoz d'ar servij en doa rantet. Ar

milon a ras c'hoari gaer get e argant beta fin miz Kerzu. A pa achuas e argant eh as da welet komiser gare PLM hag eno e oa bet serrret ha degaset deomp en-dro. Bremañ ema edan bout barnet ha ne gredan ket e vo truez doc'htoñ.

**26/27-01-1918** - Didrouz eo an traoù. Arru a ra a berm. hol lieutenant a oa arru getoñ un telegram eh oa gwall glañv e vaouez. Ret eo bet digor he fenn : ur gor a oa daet en diabarzh anezhoñ. Ar c'haezh den a zo diwadet. Kontiñ a ra e boanioù din : n'en deus ket bet pechañs biskoazh poan en e vuhez hag ar wezh gentañ a seblant kalet dezhoñ...

**28/29-01-1918** - Setu aet al letenant kuit en-dro hag eürus ! Me 'ra-me ur c'houlenn e'it monet d'an Intendance rak c'hoant erbet n'em eus ket da chom get an Ao. Toupin. Re rok eo ar milon evidon ha skuizh on é cheñch. Mallet, Cesari, Petit, Maratray, Dupoux, Toupin, setu en 6<sup>vet</sup> hep komz ag ar re am eus bet c'hoazh a pa veze permis. Ha pep unan anezhe ne venn ket kaout mat ar pezh a rae ar re 'rall, ha deomp-ni neuze ema ret cheñch penn da bep tra e'it gober plijadur d'an dudjentil. Cheñch mevelion a zo divourrus, met cheñch mistr a zo divourrusoc'h c'hoazh !

**1<sup>añ</sup> a viz C'hwevrer 1918** - Arru eo Toupin. Esae a ra en em lipat doc'homp : gwin a bae... Met, ag an deiz kentañ e kav kant si d'ar pezh a raomp. Sur e oan ag an dra-se.

**02/03/04/05/06/07/08-02-1918** - Cheñchet mat en deus ar burev. Nend eo ket mui karadek el gwezharall. 'Pad an deiz ema hon aotrou àr hor c'hein : nend eus ket a beoc'h getoñ.

**09-02-1918** - Setu aet Mauge, Loumagne, Keryhuel, Gouriot, daou gaporal kuit d'ar 8°. Goulle eo an ti...

**10-02-1918** - Sul - Hiziv eh achap hon aotrou da vonet da zeskiñ komandiñ !!

**11-02-1918** - Arc'hoazh eh aomp àr-raok da Tauxières. Dober a zo ac'hanomp du-se e'it gober kobanennnoù.

**12-02-1918** - 7h. Kuit. Arru a raomp a-benn en hol lec'h rak nend eus ket kalz oc'hpenn 3 c'hardlev d'ober. En ur suler eh omp lojet, burev ha rac'h. Yen eo an traoù ! Da vintin an aneoued man dihun. Brav a lojeris hon eus ! Ret eo deomp, en ur gognell ag ar suler, miret un tachad a c'hronnomp get lien tant. Un daol a zo ret deomp gober, pankoù. Él bepred nend eus netra ha neoazh e c'houlenner genomp labour ha labour c'hoazh.

**13/14-02-1918** - Kempenn a raomp ar prêt. Dre voneur eh omp didrouz, met nag aneoued hon eus !

**15-02-1918** - D'enderv-noz, goude mand eo achu deomp kempenn ar bae, eh arru ur paper genin a gemenn din bout en eil int. an eil rann kolonial, e Ludes, an deiz àr-lerc'h da vintin da 8 eur ! Bec'h doc'htu é kempenn ma zraoù, ec'h arrest ma c'hontoù, hag é tiviz da Clarezy, ma c'hap -four., petra en devo d'ober e'it derc'hel ma lec'h. Un tammig ema diskalonekaet, ar c'haezh den, rak biskoazh n'en deus graet ar pezh en devo bremañ d'ober... Doc'h ma zu, me 'zo-me eürus bout dijablet doc'h ar vuhez-mañ, ha dreist-pep-tra doc'h an aotrou a zo anvet da vout pennek er gompagnunezh. Unnek eur eo a pa achuan kempenn ma zraoù hag an deiz àr-lerc'h da 5 eur ema ret din difre.

**16-02-1918** - Aneoued am eus bet man gwalc'h c'hoazh an noz tremenet. Yen eo ivez. Skornet eo an amzer. Al letenant

a zo amiaapl evidon : reiñ e ra din karr ar gompagnunezh evit kas ma sac'h ha ma c'has mem. Treuziñ a ran koad bras Reims a-raok arru e Ludes. E Ludes, e kêr, ar gwellañ degemer din. An ofisour, an aotrou Oury, a zo breur ur beleg a zo bet er skol àr-un-dro genin ; an adjoint a ra e lec'h an eil int. a lâr din en deus resevet diàrnon an notoù gwellañ. Grataat a ra din man digoll a ma labour, mar plij ma labour dezhoñ. Ha kentizh en em lakaan da zeskiñ ma labour nevez, dishañval-tre doc'h an hanni am eus graet beta bremañ. Neoazh, hañval eo genin e vo gwell ma zraoù amañ. Da 8 eur 1/2 e teraou al labour ; beta 11 eur 1/2 e labourer ; da 1 eur 1/2 e teraouer arre beta 6 eur. Met àr-lerc'h, kenavo ar soursi hag al labour !... Get an dra-se, blank erbet etre hon dehorn. An noz a-bezh e'it kousket, didrouz doc'h pred. Pep tra arañjet mat enta e'it tremen ar brezel hep re a boan. Get an dra-se, 'gozik bepred e tachadoù dizañjerus, pe a-wael gwarantet-mat. Burev ervat ha kempennnet : hag ar servij, ar « soudardegezh » kaset da vale. Mem mar bez ret din andur un tammig a-fet ar vistr, a-wael ne vin ket mui e riskl a vout brevet get ur potarn, pe skornet em gwele.

**17/18/19/20-02-1918** - Plijout a ra ma micher nevez din. Trawalc'h a labour a zo, pas re. Ar gêr lec'h mah omp nend eo ket drouk. A lein ar menez e weler iliz-vamm Reims savet a-dreist en dremwel, trema en neañv... Klevet a raer meur a wezh un tenn bennak.

**21/22/23/24/25/26-02-1918** - A-nebeudigoù e teskan c'hoari get ar paperioù nevez a zo amañ. Nend eo ket diaes al labour : da evezhat labour ar re 'rall dreist-pep-tra eh on lakaet. Akustumañs ha netra ken.

**27-02-1918** - Ar c'hreisteiz-mañ eh on aet da vale àr ar menez a zo en tu doc'h ar c'hreisteiz a gêr. Eno eh eus un toull bras e'it dour kêr. Kaeret ur wel a zo a lein ar menez-se. Gwelet a raer an iliz-veur a Reims, hag al linenn penn-da-benn e-pad 20 lev atav.

**28-02-1918** - Tarzhal a ra an traoù ha tarzhal a-feson.

**1<sup>añ</sup> a viz Meurzh 1918** - Goût a raomp en en deus ar Jermaned esaeet donet àr La Pompelle. Aezhennoù fall, potarnoù, rac'h ar pezh en deus roet dezhe o ijin fall, rac'h an traoù-se a daolont àr hor soudarded ha neoazh nen daont ket da benn a ober kalz a dra. Unanigoù a zo kouezhet èl bepred, lod arall a zo bet skrapet. Àr an 3<sup>vet</sup> Divizion ema bet startoc'h an traoù. E-leizh a zo bet skrapet hag ul lodenn vat a zo ampouezonet. Neoazh n'o deus ket araokaet tamm erbet.

**09 a Veurzh 1918** - Kaer-bras eo àr an deiz. Monet a raomp un tammig d'an heol. Re 'rall a zo é heolata. Du-se e welan doc'h penn un ti, flutet en heol, 4 morilhon é tiviz e yezh gouzougel o bro. Komz a raont pechañs ag ar vro druz ha klouar o deus dilezet e'it donet da vrezelat get ar re gwenn ha ne ouian ket ma ne gavont ket ema finoc'h an dud en o bro e'it dre-mañ !!

An deizioù paseet eh oa tud yaouank ar c'hornad-mañ ec'h ober safar : bet e oant bet doc'h en em ziskouez d'ar medisinour e'it monet da vout soudard ha kement-se e lam gete lod ag o spered. E-pad an noz, teir noz doc'htu, e huchont, e kanont, e trompetont, e tabourinont... hag e vezvont. Ur c'hempenn ag an dibab e'it donet da vout hañval doc'h ul lodenn vat a soudarded.

**18-03-1918** - Ur sizhuniad didrouz paseet deomp c'hoazh,

met na koll amzer a ra al lod muiañ ac'hanomp amañ ! Labour a zo da 5 hag eh omp unnek ! Gwir eo eh eus amañ tud a zo soudard a vicher hag a soñj muioc'h da evet ha da rudellat e'it ma soñjont labourat. Cheñchet em eus lec'h met an dud a gavan amañ a zo hañval-tre doc'h ar re am eus laosket du-se. Me 'gred mem emaint lousoc'h c'hoazh dre m'emaint yaouankoc'h evit ar re 'rall. Er vuhez ne vennont sellet met doc'h an tu « loenek » ha rac'h o c'homzoù a zo evit komz a lusteri, ag ar merc'hed o deus diskaret, ag ar priedoù o deus dispartiet. Brav a albac'henn !

**25-03-1918** - Arru eo genomp an doere d'achap e'it monet da Louvois arc'hoazh vintin. Àr-lerc'h koan e kargomp ar c'hirri hag eh arañjomp pep tra e'it monet kuit a-benn a pa vo lâret deomp, en noz pe arc'hoazh vintin. Ret eo kousket dilhad ha rac'h hag el mand eo yen an amzer, ne c'hwezomp ket doc'h ar mintin.

**26-03-1918** - Ar mintin-mañ eh omp atav amañ, met un doere arall a arru ivez : an dud ag ar vro a zle kuitaat. Kement-se ne blij ket kalz dezhe. Skuermerezh a zo...

**27-03-1918** - Deraouet eo an dud da vonet àr-raok. Donet a ra e-pad an deiz tud da gennig deomp foen, plouz, ed, kerc'h, moch, yer, konifled, avaloù-douar ha me 'oui-me petra rac'h. Kemeret e vint gete 'met ar yer, konifled na gemerer ket. Lezel a raer er vro ar pennoù tiegezh, gwazed pe merc'hed, a vo karget da c'houarn an traoù ha d'ober àr-dro ar gwiniegi.

Droug kalon en deus ar geizh tud-se é lezel o gwin àr o lerc'h rak an intendant ne c'hell ket preniñ 'met gwin ruz marc'hadmat, 90 lur an hektolitrad, ha gwin ar vro-mañ a werzher da nebeutan 600 lur ar varrikad ! Ar c'henoberdi a c'hellahe preniñ lod, mem rac'h, peogwir e c'hellont

pas o marc'hadourezh d'ar re a za àr o lerc'h, ha bremañ e c'hellahent kaout ar gwin-se evit 6 real ar voutailhad. Met setu ! Nend eo ket bet merket kement-se àr gourc'hemennoù ar C'henoberegezh !!

An deizioù-mañ e vramm an traoù àr talbenn Breizhiz-Veur. Setu daet en-dro ar Jermaned er broioù o doa dilaosket arlene d'ar c'hours-mañ. Lâret o doa atav e vehent bet daet en-dro ar blez paseet a pa oant aet kuit.

**11 a viz Imbril 1918** - D'ar 5 ag ar miz-mañ eh oa aet un adj. hag ur serj. ac'halemañ er c'homission de réforme. Ur brav a fars ! Mourier en doa graet ul lezenn evit kas d'an talbenn, met en trañcheoù, ar soudarded yaouank a oa er burevioù hag ar soudarded eil-ofiserion retretet ag ar c'hlasoù beta 1916. Ne ouit ket penaos e taont da benn a achap ? Setu. C'hwi 'ya da gavet ur medisinour soudard get ur paper ag ho Ct. Ar medisinour a gav ur yoc'h kleñvedoù deoc'h. Un arall a ya àrnoc'h hag a gav ar mem klenvedoù deoc'h. C'hwi a c'houlenn monet dirak ar gomision reform. Eno an dudjentil a sell dreist-pep-tra doc'h ho paperioù hag ho laka «mat da servij hepken en tachad lec'h mah oc'h !! »

Èl-se e weler ur yoc'h tud nend int ket klañv, met hag en deus rudellet par ma o deus gellet, é chomel, daousto dezhe bout yaouank, e tachadoù dizañjerus a pa zo re kozh astennnet àr ar bratelloù emgann, maouez ha bugale dezhe er vizer...

**15-04-1918** - Hiziv ema aet kuit ar re a zleomp kemer o lec'h : ne oant ket laouen anezhe...

**16-04-1918** - Arru eo an doere eh on anvet amañ èlkent. Nag un dijabl ! Komz a raer din ag ar 88°, ag an ardoù amoet a ra ar c'holonel nevez a zo roet d'ar rejimant. Puniset en deus ur serjant a ma c'hompagnoneh rak ne gave ket getoñ eh oa mistr

a-walc'h e roched !... Lakaat a ra an eil-ofiserion da zeskiñ en « *théorie* » an deizioù nend aont ket da labourat !!

**17-04-1918** - Yen eo daet. D'an noz e raomp tan hag e filajomp, met nag ur stad spered en deus rac'h ar re a zo amañ en-dro din. Difeiz, ne c'hellont ket andur bout forc'het a rac'h ar plijadurioù a gemerent 'raok ar brezel ha goulenn a rahent get an diaoul, a pa gredahent ennoñ, kas rac'h ar jeneraled getoñ ha rac'h ar re a venn kenderc'hel get ar brezel. An Alzas ha Loren evite ne zenefiont netra ha ne vennont ket koll o buhez evit ar re-se !! Ar c'homzoù dibennañ a lâront diàr ar brezel : an dud pinvik hepken a laka ar brezel da badiñ evit ma vo lazhet al labourizion a luske sevel a-enep dezhe ! Doue ne zleae ket lezel ar brezel da ren àr an douar : an dra-se nend eo ket just, eme-int, ma en em bil an dud ! Ar Pab a zo a-du get ar Jermaned ha ne ra netra evit ma fino ar brezel... Kant sotoni èl-se a glevit e-pad an deiz. Kejit an dra-se get touiadennou ha komzoù lous hag ho po rac'h ar pezh a sailh er-maez a genoù 8 soudard ar zeg ! Barbusse a lâre n'en doa ket kavet den pinvik erbet en trañcheoù : me a c'hellahe-me lâret n'em eus ket kavet kalz a dud àr an talbenn. Sklaved a zo ur bochad, met tud nend eus ket kalz.

**09 a viz Mae 1918** - Yaou an Emsav - Ar mintin-mañ e ra ar vugale o c'hentañ fask ; nend eus ket ur bern bras anezhe : un douseniad, met diskouez a raont bout ervat. An iliz a zo kempennet kement èl ma c'heller evit ar gouel bras-mañ, met nend eus ket gellet kuzhet labour milliget ar brezel. A-dreist an aoter, bolz an iliz a zo diskaret ha daet da gousi an tachad kaeran ag an iliz...

Dec'h em boa bet ar blijadur da gomz un herrad get Blei Lann-Vaus ha get Alex. Jaouen, ni AbAlor. Ha doc'htu e oamp aet àr Breizh... Allas ! pell omp doc'hti ha dic'halloud-kaer. Hag an amzer da zonet a seblant teñvel, teñvel...



**19-05-1918** - Sul ar Pantekost - An deizioù paseet e oamp bet é vale e koad bras Reims. Krapet hor boa, a-dreuz dre ar parkoù hag edan ar c'hoad tailh. Brav eo, kaer-meurbet, ar c'hoad bremañ. Tarzhet eo rac'h ar botonnoù, glas-melen eo ar c'hoad. Ar bokedoù a zigor e kement lec'h a zo ha kan a ra an evned. Edan ar gwez ema hañval genin bout arru e koad Kamorzh. Setu lus, setu brug, muguet, man, ... Trouz an aerlistri hag ar c'hanon a zegas hepken hor spered d'ar gêr...

Sul ar Pantekost ema arañjet un tammig an iliz get bokedoù ha plant glas serret er parkoù. Ur beleg soudard a lâr an oferenn hag ur predeg c'hwek a ra àr ar Spered a zle, reve an Aviel, lakaat an dud da anzav o fec'hedoù. Nag a dorfetoù, a louteri, a valeurioù a vehe bet gellet parraat doc'hte a pa vehe bet feal an dud da heuliñ alej ar Spered-Santel ha lezenn an Aviel.

Bouljal a ra arre Iwerzhon. Arrastet a zo ur c'hant bennak ag ar re a oa da benn ar Sinnfein. Ar pezh a zo fentus ha mezhus àr-un-dro evit gazetoù Frañs ema gwelet àrnezhe pennadoù diot diàrbenn adsav Iwerzhon. Labour an Iwerzhoniz a zo lakaet ar goust ar Jermaned. Esae a raont get gevier lakaat ar Frañsizion da gasat an Iwerzhoniz é lâret e savont a-enep d'o Roue ! A pa vehe ar Pologne en dehe graet an hevelep tra a-enep d'ar Jermani, ne vehe ket kavet trawalc'h a zel lore e Frañs a-bezh evit o c'huruniñ. Rac'h ar pezh o dehe graet a vehe sellet èl kaer. An Iwerzhoniz hiziv a gav an tu da c'hoari ur fall dro d'ar vro en deus o goasket, o laeret, o forbanet hag o lazhet, hag eh esaeer, rak mand eo Breizh-Veur ha ni unanet, lakaat ar gaou a-bezh doc'h hon breuder. Gwezharall, a pa oa Bro-Saoz ec'h ober mil vilonaj d'hon breuder, nend eus ket bet pobl erbet en Europ é sevel a-du gete hag hiziv ar pobloù-se a garahe ma tahe Iwerzhoniz da sikour gete, get ar vro en deus dismantret o hanni !!

**31-05-1918** - A-c'houde tri pe pevar deiz eh eus kogus àr

ar speredoù dre-mañ. Ar Jermaned en deus c'hoazh ur wezh bountet un taol bras en Aisne ha graet d'hor re kiliñ betek en tu 'rall da Fismes ! Hag ar speredoù gwan da vout spontet get an doere. Spontet ha diskalonekaet, rak get an disterañ dra o lakaer kontant, get an disterañ dra o diskarer ivez. A pa glevont eh aomp àr-dreñv, doc'htu e lâront eh omp kollet. Ar re a zo da benn ne talvont ket netra, treiset omp. Nend eus ket un doere amoet na gavont da lâret. Doc'h an tu 'rall, a-benn a pa c'hounidomp un tammig douar, setu-int kollet get ar blijadur. Neoazh hañval eo genin e vez bihanoc'h ar blijadur e'it an displiadur. Stad spered tud ar C'hreisteiz dreist-pep-tra ne talv netra. E 1914 e oant dija dic'houstet ha n'o deus ket cheñchet. Ne welont 'met un dra : dirañjet int bet get ar brezel, ne c'hellont mui kousket en ur gwele dous, debriñ friko, bale èl ma raent gwezharall 'raok ar brezel : ne gomprenont ket an dra-se hag ar Frañsizion arall ne sellont netra dezhe !...

Tud ar vro a zo bet pedet dec'h da vonet kuit ivez e'it an eil gwezh. Aon a zo nen day ar Jermaned àr ar vro-mañ ivez. Ha setu en-dro daeroù, gouelerezh. Divourrus eo gwelet ar geizh tud-mañ en deus labouret kement e'it kempenn o gwiniegi é monet kuit, a pand eo ken brav ar blezad, get ur garrikel, ur c'harr bihan pe get pikol pakadoù en o daouarn. Start eo kuitaat. Lod a oa aet kuit hag a zo daet en-dro ha bremañ ema ret arre postal. Ha monet d'e-men ?

Doc'h tu Reims du-se nend eo ket bourrapl ivez. Ema an tan e kêr. Menez-Thierry a zo an tan àrnezhon e pemp pe c'hwec'h tachad. E flagenn Reims ivez ema tomm an traoù. Ma c'hompagnunezh gozh a zo du-se hag hiziv eh arru an doere genin ema lazhet Lamour ha soudarded arall ha skrapet ur soudard bennak.

**1<sup>añ</sup> a Vezheven 1918** - Da 2 eur e taer da lâret deomp ema ret achap da Ville-en-Selve. A-c'houde dec'h d'an noz e

tarzh an traoù. Da 6 eur eh aomp àr-raok àr hor goarigoù. Bourrapl eo kerzhet, rak nend eo ket c'hoazh tomm ha nend omp ket sammet. Na vad a ra d'an den, goude bout herset keit amzer, kaout frankiz bremañ da gerzhet àr ar goar, hep bout sammet. Nend eo ket hir an hent ivez : ul lev a-boan e-kreiz ar c'hoad rak eh omp er c'hoad amañ, « *en selve* », e-kreiz koad bras Menez Reims. Lojet omp en ur c'hozh ti toull ha hanter brein. Ret eo deomp kousket, an noz kentañ, e gweleoù orsal hep tamm plouz. Droug hon eus d'hor c'hostezioù ! N'en em arañjomp ket peogwir ema dle deomp monet pelloc'h.

**06-06-1918** - Hiziv eh arru ur yoc'h seud genomp, daet a Sacy lec'h mand int serrerret. A-c'houde eizhtez e « komzer » hag e « skriver » diàr ar pezh a zle bout graet e'it dastum al loened hag an traoù chomet àr-lerc'h an dud aet kuit, met hani pe 'gozik hani ne ra ar pezh a zo d'ober ha loened ha gwin, ha legumaj a ya a-gleiz hag a-zehou rac'h get lod e-pad mand eus re 'rall n'o deus netra !...

**07-06-1918** - Aet eo soudarded Gwilhou da vout foll. Deraouet int bemnoz da skoiñ àrnomp amañ get pezhioù bras. Bemnoz àr-dro unnek eur e kouezh re vras a laka hor paour-kaezh ti da horosal. Unan a zo kouezhet un daou gant paz bennak doc'h hor popote ha graet un toull dezhi a vehe interret 3 jao a-barzh !

**08/09/10-06-1918** - Bemdez d'enderv-noz e tarzh an houarnaj. Àr Germaine, Louvois, rac'h ar gêrigoù a zo amañ e kouezh potarnoù. Ha tud lazhet a zo. Loened ivez. Àr-dro 50 procès-verbal a ran e'it an 310° Artilh. Ar 1° A. C. ivez a goll kalz a roñseed. Gwir eo ne zisfiz ket an artilheured. Kas a raont o roñseed d'an dour daousto ma vale an aerlistri, en em ziskouez a raont en treuzkoadoù hag an aerlistri a zeval tost

d'an douar hag a lazh al loened get ar mindrailherez. Ret eo bet mem d'ar jeneral kemenniñ d'holl ar re a veaj e kirri doug gete ur fuzilhenn e'it en em zifenn.

**14/15/16/17-06-1918** - Degouezhet eo ar c'hleñved àrnomp. Àr 7 eh omp eh eus 5 hag a za ar grip dezhe. Terzhienn, pas, dinerzh... Gwir eo ema diyac'hus an amzer. Un deiz e vez ur wrez pounner, an deiz àr-lerc'h e vez goloet an amzer ha yen. An deiz àr-lerc'h a ra glav hag e vez yeno'h e'it biskoazh. Nend on ket souezhet ma kresk ar gwez hag an traoù el ma raont er vro-mañ ha neoazh ne garahen ket bout é chom a-barzh. Amzer Breizh a zo amiaploc'h ha plaenoc'h e'it an dra-se, ha d'an hañv e vez an hañv.

**20-06-1918** - Diskennnet a zo amañ ur vatailhon ag ar 22° a oa e maner La Haubette. Ar Jermaned an deiz kent dec'h en deus tennet àr hol linenn a-dal 6 eur betek 8 eur da noz get potarnoù leun a aezhennnoù fall hag esaeet fardiñ goude. N'o deus graet netra. Ret eo bet dezhe kiliñ en-dro. Goude an tarzhad eh eus arre lakaet bec'h àr àr gwin. Ur gravaour hag en deus merennet genomp a lâe e vehe bet klevet ar stoufoù é sailh diàr ar voutailhadoù en tranche el « *un nouveau tir de barrage* » ! Kaset en deus deomp div voutailhad. Gwin natur eo, hep sukr. Mat eo ha goust rezin dezhoñ.

**21-06-1918** - Lenn a raen dec'h e lâe Bourget ema ar vicher soudard ur c'haer a vicher a zesk an dud d'ober o dever... Siwazh ! ya, el levrioù ema el-se met a pan da ar brezel ha ma pad 4 blez el bremañ ema ret anzav eh eus cheñchet penn d'ar vazh !

Gwelet em eus meur a soudard kozh, bevet em eus gete a-c'houde 4 blez ha n'em eus ket kavet c'hoazh soudard erbet hañval doc'h ar re a weler el levrioù. Ar re en doa graet o

micher doc'h ar soudardegezh en deus tennet o revr àr-dreñv. Lod-kaer a zo chomet ar c'holonioù ha diaes eo o diblas ! A pan daont du-mañ e raont kement mar taont da benn a chom pell doc'h an tan. En em vountiñ a raont en ur gognell bennak ha mar gwelont e taer d'o c'hask eh aont a-benn da gavet ur medisinour bennak bet èlte er c'holoni hag a gav kleñvedoù dezhe muioc'h e'it ne faot e'it lazhiñ un den yac'h ! Lakaet e vezont da vout « *apte à son arme seulement* », da lâret eo e vezont lesket en o c'hognell e-pad mand eo o c'henseurted disoudard é parraat na zay an eneberion àrnezh-e-int ! Na gredit ket ema uhel o speredoù e'it an dra-se. Hañval e vehe o dehe anduret mil boan ha kollet o holl danvez. En em glem a raont bepred a hirded ar brezel, hag a pa bedahent e c'houlennahent sur ma padehe c'hoazh pell-ha-hir e'it ma kreskahe o fañsion un tammig. Ne bas ket un deiz hep ne huchont àr-lerc'h ar vistr, pep tra, hep penn erbet d'o c'homzoù. Unan a lâr a pa vehe-eñ peizant ne lakahe traoù 'met just evitoñ e'it ma achuahe ar brezel mank a voued ; an arall a garahe e tahe grizilh, fall amzer e'it distruj pep tra. Un arall a garahe ma vehe lazhet Clemenceau ha rac'h ar re a zo da benn rak int a zo abek ma pad ar brezel. Un arall mah arruahe ar Boched e Pariz ha ma yahe ar gouarnemant kuit rak neuze ar soudarded ne chomahent ket àr an talbenn, int a yahe get ar gouarnemant ! Diaes e vehe din lakaat amañ rac'h ar pezh a vez ret d'em diskouarn klevet, met trawalc'h a zo, 'kredan.

**Fin Mezheven 1918** -... a zo didrouz met àr-dro deiz kentañ Gourhelen e kouezh paper àrnomp, trawalc'h e'it mougiñ un den en dezhe c'hoant kousket ! Betak an 13 pe ar 14 ema ur seurt.

**14 a viz Gourhelen 1918** - Gouel broadel. Él bep plez eh eus friko hiziv. Ur pred ag an dibab a raomp da greisteiz :

soubenn, legestr, kig, hariko, konfitur, champagn, sigar...

Met àr-dro 11 eur eh eus un tarzhad seurt n'em eus ket klevet c'hoazh. Ne glever 'met trouz ar c'hanon e kement korn a zo, ha hep dehan, hep distag.

**15-07-191** - Goût a raomp ema kemeret en-dro ar fard Jerman. E kement tu e arsailhont àr hon re.

E-pad ar pemzektez-mañ nend eus ket arsav d'ar c'hanon. E-pad eizhteiz a-bezh eh omp àr nij. Bemnoz goude koan e karger ar c'hirri ha da vintin e vez ret diskarg e'it labourat un tammig. Start eo an traoù. Donet a ra ar Jermaned beta Nanteuil-La-Fosse hag an deiz-se e kredomp mat e vo ret achap en o-raok. Met arru a ra sikour a bep tu. Breizhiz-Veur, artilheri, hag emberr ema d'ar Jermaned da giliñ hed-ha-hed d'al linenn.

**05 a viz Eost 1918** - Komz a raer a vout kaset da ziskuizh !

**07-08-1918** - Àr-raok da 5 eur 1/2 e'it Tours-sur-Marne lec'h ma em boa kousket e 1914.

Kêrig didrouz ha mistr « *asses* », èl ma lârer e kostez Pondi. Ar merc'hed a esae bout reve ar mod. Botoù-ler uhel, seulioù divalav, brec'hier berr ha loroù toullek. E gwirionez ar vaouez a zo graet e'it heuliat bepred... Neoazh ret eo anzav en em zalc'h e-leizh gwell ar merc'hed amañ. Tostoc'h int da Epernay lec'h ma oa sur, 'raok ar brezel, ur vare kreñv merc'hed onest.

Henoazh e ta aerlistri da barraat doc'homp a gousket. Cheñchamant gwele ha trouz a zo a-walc'h e'it ho terc'hel dihun a-tro an noz.

**08-08-1918** - Kustumat a raomp doc'h hol lec'h nevez. Ar burev a zo en ti savet ar pilerioù èl gwezharall.

**09-08-1918** - 'Gozik bemnoz e ta an aerlistri da vale a-dreist hon bourc'hig ha lezel a raont o lousteri da gouezh. E-tal ar vilin avel a zo trema Fontaine-sur-Ay eh eus kouezhet unan e-kreiz ur c'herc'heg. An avel savet dezhoñ en deus dihilhet rac'h ar c'herc'h ; ne chom mui 'met ar plouz àr o sav, dibennet ker brav.

**15-08-1918** - Gouel Maria Kreiz Est - Ar mintin-mañ eh oa ur c'hant maouez ha plac'h bennak é resev. En em zerc'hel a raent a-feson ha gwisket e oant dereat. Gwazed ne oa ket kalz.

An enderv-mañ eh oa prehesion met er vicher amoet-mañ eh omp prizonet : ne welomp 'met ar paper é tremen dirak hon daoulagad hag an hanter anezhe a vehe ervat en tan e'it àr hon taol.

**21-08-1918** - Tommet a ra an heol ken nen da ar c'housed deomp àr hon paperioù. Aneviñ a ra an eost ha labourat a ra an dud harz-pe-krev da zastum ar blezad. Gwir eo emaint paeet ag o labour. 75fr. eh a ar sac'had gwinizh. En dachenn lec'h mah omp é tebriñ eh eus tud forbanet d'ar brezel. 1000lur a feurm a baeont evit 30 hektar hag un ti forniz, krevier, karrdioù ha lec'h frank da lakaat pep tra. Get 20 sac'had greun e paeont o feurm hag ar mizoù o devo bet é kardellat. Lec'h a vo dezhe enta da armerzh. Gwir eo o deus gounidet an dra-se dre labourat.

Tud a feiz int, didrouz ha kalonek el labour. A diad e labouront, betak ar c'hrennbaotr en deus 12 vlez bennak.

**03 a Wenholon 1918** - Setu daet yen en un taol ! Ha drougkov da bep unan. Difennet eo pesketa get grenad er wazh hag er c'hanal ; er *c'honseil de guerre* e pas lod met trawalc'h a chom hep bout tapet ha finfoñdiñ a raont ar pesked hep gallout pourfitiñ anezhe rak ne grapont àr al lein 'met hanter brein.

**18-09-191** - Ar mintin-mañ e kuitaomp Tours e'it monet da Louvois. Glav a ra àrnomp a-hed an hent.

En ur c'hozh ti.

An deiz eh aomp araok e tremen Clemenceau ha jeneraled en ur c'harritan é vonet trema an talva.

**Sul 06 a C'houel-Mikel 1918** - Arru eo genomp an doere da vonet àr-raok. Da Ludes eh aomp. Distaget en deus ar Jermaned doc'h Menezioù Moronvilliers hag o herzel a ra hon soudarded a-dost. Àr-lerc'h merenn eh aomp kuit àr hon goarigoù a-dreñv ar c'hirri a grap ivez a vandenn trema an talbenn. Pas a ra kirri-tan ha get ur soudard e welan ur c'hazetenn a zo merket àrnezhi get lettrad bras : « *L'ennemi demande un armistice !* » Komz a raer ivez ec'h achap an eneberion par ma c'hellont trema an hanternoz. Komz a raomp ag ar peoc'h hed an hent ha gwivaat a ra daoulagad an holl é soñjal e tosta da ziwezhan buhez drist...





**Lun 07-10-1918** - Monet a ran d'ober un dro e Ludes. Finfoñdet eo lein kêr, dreist-pep-tra tro-ha-tro d'an iliz. Honnen en deus bet droug mat ivez. Ar werennoù a zo rac'h disternet ha toullet, brevet àr an douar, tammoù magoer a zo devalet hag un delwenn gozh ag an XIII<sup>vet</sup> kantvlezad é tiskouez ar Werc'hez azezet get ar Mabig Jezuz àr he daoulin a zo gwallaozet. Ar Mabig a zo dibennet ha dizornet hag ar Werc'hez en deus tapet meur a damm dir. Tristet brezel a lazhañ an dud hag a zismant oc'hpenn ar Vraventez....

Chomet a zo un 200 a dud bennak amañ daousto d'an tier bout foñdet-mat. Esae a raont eostiñ o rezin a brener ker-bras gete (150L. ar 60 kos !). Meur a di goulle a zo neoazh hag am eus gwelet e miz Mae get o zud enne. Bremañ ne weler dre ar fenestri diwerennet, dre toulloù ar potarnoù, met tammoù treustier, tammoù gloestraj, douar, mein, skolpad...

Monet a raomp da zebriñ en hevelep ti ma oamp kent kuitaat.

**Sadorn 12-10-1918** - Arru a ra ar gemenn genomp da vonet àr-raok rak distaget en deus ar Jermaned. A-herr e kargomp ar c'hirri evit monet kuit da greisteiz 1/2. Hent Puisieux a gemeromp. Ar gêrig-mañ ne chom mui anezhi 'met magoerioù gwenn kann savet trema an neañv èl eskern loened chomet plantet en o-sav e-kreiz en dezerh.

Sillery nend eo ket kalz bravoc'h, neoazh foñdet eo bet dreist-pep-tra e-pad an tarzhadoù diwezhañ. Ur maner kozh renevezet reve mod an dalc'hiadezh a zo gwallaozet ; pec'hed eo rak a-fourch àr ar Vesles èl mah oa get ar gwez en-dro dezhoñ, ar maner-se a oa sur bravik. Àr ar Vesles eh eus chalantoù aet d'an deun. Brumaj mat a ra ha patouilhus eo an hent.

Àr-lerc'h Sillery eh aomp e-kreiz ar blaenenn a raer An Dezerh anezhi. Amañ eh oa al linennoù. Ne weler 'met toulloù obus, orsal dreinek ha re 'rall, gwez sapin chaket d'an obusoù,

toulloù, armaj, gwiskamant ha boutailhoù, boutailhoù a-yoc'h !  
Evet mat a rae soudarded Gwillhou. Àr an hent e kavomp ivez,  
àr-dro un dachenn, ur vered a zo ur yoc'h soudarded jerman  
a-barzh. Àr an hent e kavomp ivez obusoù, armaj, benveger  
a-yoc'h, lesket d'an enebour 'raok achap. Na linennoù hent-  
houarn a zo ivez chomet àr o-lerc'h !

Tremen a raomp dre Beine. Amañ ema èl e Puisieux, met  
ni en deus foñdet kêr é tenniñ àrnezhi. Ne chom ket mui anad  
a netra. Mein hepken, geot ha louzoù a gresk lec'h ma oa tier.

Nogent-L'Abbesse a zo just ken vil. Ne chom forzh-kaer  
'met an iliz hag a zo un doennn c'hoazh àrnezhi.

Berru nend eo ket gwell. Eno e chomomp. Noz eo pah  
arruomp. Nend eo ket aes kavet lojeris rak nend eus den evit  
en em soursial a gement-se. En em lojiñ a raomp en un ti  
hanter-foñdet. Toenn a chom un tammig neoazh hag a barra  
doc'h ar glav a gouezh àrnomp. Plouz nend eus ket : lakaat a  
ran ul lañjel hag ur sac'h edandon hag e tan da benn a gousket  
ur seurt.



**13-10-1918** - Sul. Monet a ran da welet an iliz ag ar XIV<sup>vet</sup> lod anezhi. Ne chom 'meti get un doennn 'gozik a-bezh. Nend eus mem kouezhet 'met un obus àrnezh daet ac'hanomp-ni. Met an deizioù paseet eh eus kouezhet àrnezh daou pe dri en deus graet muioc'h a zroug dezhi.

**14-10-1918** - Da 7 eur 1/2 eh aomp kuit arre dre Epoye. Ne ra ket glav ha bourrus eo kerzhet daousto d'ar fang a gavomp àr an hent. Foñdet eo Epoye pell 'zo. Àr an hent eh eus meur a doull obus, kouezhet an deizioù-mañ. E Vaudetre e kavomp tier sailhet ha losket. Rac'h kêr a zo a-blad. Ur vagazin a oa gwer a-barzh ha benveger. Teuzet eo ar gwer karrezioù get orsal.

Àr an hent ar Boched en deus dalc'het penn ; toullet o doa kostez an hent-bras evit lakaat mindrailherezed. Tennen o deus ha difennet rak gwelet a raer àr ar bratell kartouchoù goulle. Met a-herr ema bet ret dezhe achap rak gwelet a raer, taolet a bep tu, dilhad ha benveger.

Da 11e 1/2 eh arruomp e Warmeriville. Ur gêrig a zo bet sur buhez enni gwezharall. Àr ribl ar Suippes ema. Sailhet eo ar pontoù ha diaes eo monet e kêr. Al linenn vras Reims-Vouziers a zo 'gozik a-bezh ; aes e vo d'arañj. Amañ eh oa tud disoudard rak kempennet eo parkoù kêr. An dud a zo bet kaset pelloc'h trema an hanternoz. Kavet a raomp kaol, saladenn a servij deomp.

Àr-lerc'h meren eh aomp da welet ar vered. N'he deus chet bet re a zroug met ret eo bet d'ar Jermaned he c'hreskaat e'it lakaat o soudarded lazhet. Tost da 2 000 a zo anezhe hag al lod muiañ kouezhet ar blez-mañ. Soudarded Frañs a zo ivez tri pe pevar hag o anav a raer get ar gurunennoù lakaet àr o bezioù get tud ar gêr-mañ.

Gober a ran ivez an dro da gêr. Nag un dristez ! Rac'h an tier a zo losket pe lakaet da sailh. Nend eus 'met 3 zi am

eus gwelet ha nend int na losket na sailhet met ar fenestri, an dorioù en deus sailhet get horos an obusoù.

Dre ar fenestri duet d'ar moked e weler en diabarzh ag an tier, e-mesk treustier hanter-losket ha ludu, al listri kegin, ar gloestraj, houarn ar mekanigoù ; rac'h an traoù-se du, loaget, poazhet.

Un uzin vras a zo losket a-bezh ; un ti a gavan ha n'en deus ket losket. Lakaet e oa an tan a-barzh, met n'en deus ket redet rak an treustier a oa houarn.

Àr gement ru eh eus taolennoù get jermaneg àrnezh. Àr an tier ivez, ha kavet a ran àr an dachenn, un afich jermaneg-galleg a c'hrata amandoù a-yoc'h d'an dud na vennont ket labourat e'it an enebour.

An iliz a seblante bout bet gouarnet mat, ur banniel gwenn kroazet ruz a oa àr an doenn. Met, kent kuitat, ar Jermaned en deus hi lakaet da sailh.

Kavet a raomp lec'h en ur gampr soudard get gweleoù orsal e'it tremen an noz. Stankiñ ar fenestri a zo ret rak pas a ra an avel dreze.

Er maeri ema hon burev, met ar mintin-mañ e taer da lâret deomp diloj ! Ha moarvat ne chomimp ket pell amañ.

**15-10-1918** - Pozet omp e'it un deiz.

**16-10-1918** - Ar mintin-mañ eh aomp àr-raok a-benn àr-lerc'h merenn ; da Bergnicourt, àr ar wazhig « La Retourne ». Glav a ra a-boullad doc'h ar mintin ; àr-lerc'h e vihana un tammig. Divourrus e vo bale edan an amzer-mañ.

A-raok kuitaat e tehan ar glav. Strakus eo an hentoù, met an hanter ag an hent a raomp er vinotlennoù a zo hed-ha-hed get an hent-bras. Hent Rethel a gemeromp, eeun-ha-eeun, (un hent roman a yae da Reims moarvat). Àr an hent e kavomp bepred linennoù hent-houarn dilaosket.

Uheloc'h e'it Warmeriville, doc'h tu an hanternoz, eh eus un dorgenn a oa rac'h a-bezh kreñvaet d'ar Jermaned. Diaes e oa monet a-dal dezhi. Met gwelet a raer ema bet klasket an dro anezhi hag en en deus-hi ar Jermaned dilaosket a-herr, goude bout bet losket ar c'hoadaj ag o sapoù.

Da 1 eur 1/2 eh omp e Bergnicourt, ur gêrig vihan àr ar Retourne. Pontoù, kroaz-hentoù a zo sailhet. An tier a zo èl ar re hon eus gwelet beta bremañ, dismantret pe losket.

Get an dra-se ema leun kêr a soudarded. Hor pakiñ a raer get ar Secteur en un ti er-maez a gêr a zo c'hoazh en e sav met truek eo hor stad. Lod a gousk en un toull a oa kac'het a-barzh. Me 'ya-me en ur suler a-dreist, edan ar mein-glas - Aneoued a-walc'h em boa bet e-pad an noz.

**17-10-1918** - Arañj a raomp hon traoù a-nebeudigoù hag ervataat a ra hon stad.

**18-10-1918** - Atav eh omp amañ. Didrouz eo an traoù ha kaeroc'h an amzer.

**19-10-1918** - Komz a raomp doc'h tud ag ar vro chomet a-c'houde 4 blez get ar Jermaned ha diviz a raont deomp o buhez drist.

E oant èl prizonerion. Droad n'o doa ket da vale ar-maez ag o c'hêrig, ha labour a veze ret dezhe gober e'it ar Jermaned. Galvet e vezent èl soudarded hag ar re na arruent ket d'an eur a vezè bountet amand gete, ha prizon ma vezent kemeret an eil gwezh. Ar re oadet a veze lakaet da labourat an douar e'it degas kaol, irvin-kaol, irvin, rutabaga, betrav ha legumaj. Ar merc'hed yaouank, int a rae dezhe monet gete da droc'hiñ koad d'ar c'hoadoù !... Lakaat a raent ivez tud ar vro hag ar soudarded prizonerion d'ober labourioù brezel, èl minoù edan an hentoù e'it o lakaat da sailh.

N'o devez ken boued 'met an hanni a zae dezhe ag ar broioù divrezel ; ha c'hoazh ne vezent ket roet rac'h a-bezh dezhe. Ar Jermaned a c'houarne gete ar pep gwellañ. E'it ar gwiskamant eh oa ur seurt. A-raok monet kuit o deus bountet en o 'raok rac'h an dud hag o dastumet e iliz Avançons a oa minet ivez, da c'hortoz ar Frañsizion ; met an dud yaouank a-dal 12 vlez, ar merc'hed dreist-pep-tra, a yas gete, Doue 'oar d'ober petra !

**20/21/22/23/24/25/26-10-1918** - Chomet omp amañ. Start e vo distag doc'h an Aisne. 'Gozik bemdez e vez ur c'hrogad bennak met ne araoka ket kalz an traoù ; ar Jermaned en em zifenn el diaouled ha ret e vez monet dezhe korv- oc'h-korv e'it o lakaat da giliñ. Ar mintin-mañ, a-benn àr-lerc'h hor fard, o deus arsailhet àrnomp ivez hag ema bet start an traoù met kollet o deus o amzer rak n'o deus ket gellet hol lakaat da giliñ daousto d'an niver a dud o deus taolet en ifern. Lod-kaer ag hor re ivez a zo bet gwallaozet.

**27-10-1918** - Sul. Revet en deus ! Goût a ran eh eus oferenn en ur chapel a servij da glañvdi. Er suler ema ret krapin. Eno e kavan edan an doenn toullet, e-mesk tammoù koad, plouz brein, ur beleg é lâret e oferenn e-unan-kaer ha den doc'h er selaou. Un tammig àr-lerc'h eh arru un arall àr-un-dro get ur morian hag ur gravazhour. Hennañ a respont betek ar C'hirie hag a achap. Ne chom 'met ar morian ha me... Respont a ran neuze dezhoñ. Met ne c'hellan er servij : ema en un toull lec'h ma en deus poan é troiñ ha me 'zo-me àr gein ar groaz mein a ra bolz an iliz, ur metr uheloc'h evitoñ !

An aoter a zo graet get plañch, abrevantoù dalc'het get tammoù brik, ar pennoù gouloù a zo staget àr tammoù brik ivez. Ul lien gwenn a servij da doal. Ha setu... Truek... Ar gouarnemant en deus soñjet anviñ alezonerion met nend eus ket soñjet a reiñ dezhe ar pezh a zo ret da nebeutan e'it lâret an oferenn. Neoazh...

D'enderv eh an da vale trema an talbenn. Àr ur menez eh an e welan anezhoñ glann an Aisne hag ar vro a zo en hanternoz anezhi. A-dreuz get an douaroùier eh an. Revendaill eh oa soñjet ar Jermaned achap ac'halemañ rak ne gavan tamm douar erbet a zo bet eostet a-barzh ar blez-mañ. Ur pezh-douar araet a gavan hepken 'raok arru get ar monumant savet en enor d'ar Werc'hez get ar markiz Polignac : un «tryptique» get ar c'hanegigegzh, ar C'hrist hag un daolenn arall. Livaj kriz a zo lakaet d'er gober ; lâret e vehe labour graet da liverion jerman !

A lein ar menez lec'h ma azezan, e welan un dra n'em eus ket c'hoazh gwelet a-c'houde ar brezel. Aerlistri a bas e 4 pe 5 bandenn 28, 27, 11, 17, 18, etc. hag a za a-dreist linennoù ar Jermaned da lezel bomboù da gouezh. Ur spont eo klevet an drouz a raont é kouezh. Na zle ket bout gwall vourrus du-se...

**06 a viz Du 1918** - Da greisteiz. Kuit a Vergnicourt e'it monet da Saint-Loup-en-Champagne, ur gêrig vihan uheloc'h, 5km. Amañ eh eus ur c'hant hanter a dud. Nend eus 'met daou di losket. Ur vaouez gozh a zo perc'henn d'unan anezhe a gont din penaos eh oa graet dezhe.

Prizonerion Frañs a labour e amañ. Gete Poloniz a oa dous evite. Ur serjant anezhe a lâre n'en doa biskoazh tennet àr ar Frañsizion. Kousket ha debriñ e ti ur vaouez truck a zo daet he gwaz d'he gwelet.

**07-11-1918** - Kuit da 10 eur e'it Inaumont. Fang a zo en hentoù, neoazh glav ne ra ket hag eh arruomp àr-dro kreisteiz e-tal kanol an Aisne. Met amañ ema an diaesañ. Hentoù, pontoù a zo sailhet. D'ar fonnaplañ en deus ar Génie taolet teir paserez àr ar c'hanol, div àr bagoù, an arall graet get fagot berniet. Àr ar wazh e paseer c'hoazh, met àr-lerc'h eh eus dour

dastumet d'ar glav ha d'an Aisne dic'hlannet. Amañ eh eus graet tammoù pontoù get koad ha diaes eo pas. Ur c'harr tri jao doc'htoñ a zo diaes dezhoñ tremen. Unan a ya ur jao anezhoñ doc'h kostez ar pont. E droad a bas etre daou drest hag e kouezh àr e gostez e-kreiz ar pont ! Burzhud n'en deus torret e c'har. Get ur stag ha tammoù koad e taer da benn ag en dijabliñ goude un eur labour ha neuze e c'hell arre ar c'hirri tremen.

Met un doere arall a pah arruomp e Château-Porcien : kemenn a raer deomp da chom amañ hiziv. Klask a ra pep unan e lec'h en tier finfoñdet d'an tarzherezh hag aes eo en em lojiñ. Un daol skrapet ag un ti, kadoerioù ag un arall, koad ag un drivet ha setu lec'h deomp da zebriñ. Evit kousket ema ur seurt.

Ar gêr-mañ sur ne oa ket drouk a-raok. An tier daousto dezhe bout bet graet get pri, al lod muiañ en deus min vat. An iliz a-hend-arall ag an XIII<sup>vet</sup> kantvlezad, lod anezhi a zo kurius : bezioù kozh a zo en-dro d'an iliz. Doc'h an nor-dal eh eus kizellerezh ag an dibab met foñdet mat. Un tamm a chom, ur barr rezin livet get del ha daou varr greunnad doc'htoñ ; ur pikol eskargo, e zaou gorn getoñ ar-maez, a vale àrnezhoñ.

Er vered eh eus soudarded jerman ; un dornadid hepken.

Komz a raer an enderv-mañ ema daet kannaded Jermani da Frañs. Da noz e welomp an doere àr ur gazetenn : fical a ra kement bro gwasket e-kreiz an Europa ; ema o Frankiz é tonet. Nend eus 'met div vro a chomo moarvat hep bout digollet : Iwerzhon ha mam Bro. Iwerzhon, gwir eo, en deus graet fall benn, ha ret eo anzav ne oa ket ar gaou doc'hti, met Breizh a zo gwadet, Breizh en deus roet moarvat da Frañs ar muiañ a vuhezioù e-pad ar brezel-mañ ha ne gomzer ket mem a reiñ dezhi an droad da gariñ he Yezh... Met ne vern, Poloniz a zo bet gwasketoc'h hag un deiz emaint bet dihaodet...



**08-11-1918** - Setu arsavet an argad ! Joa a zo : ar re foll a huch, a vlej é kredíñ ema achu rac'h an traoù hag ema arc'hoazh eh aint d'ar gêr. Ar re fur a wel get fiziañs an amzer da zonet, ha levenez o deus ivez.

Àr-raok eh aomp da greisteiz da Novion-Porcien. Netra a-feson àr an hent 'met fang ken ne c'heller ket rudellat get ar marc'h-houarn. Neoazh, é kuitaat Château-Porcien e kavomp soudarded é tiblas ha gete ur gompagnunezh prizonerion Jerman. Arrestet int àr an hent hag ar brizonerion a denn betrav er park, o diskroc'hen hag o debr èl-se, kriz. Arru a raomp àr-dro 3 eur 1/2 d'enderv e Novion-Porcien goude bout paseet e Inaumont, Sery, lec'h nend eus ket mui den erbet. E toull an norioù e welit kadoerioù, gloestraj taolet er-maez. Ar c'harrezioù gwer a zo brezilhet a daoloù fuzilhenn moarvat. Ar c'hroaz-hentoù a zo sailhet.

E Novion eh eus chomet tud. En ur vonet e kêr e kavomp ur pikol toull graet d'ur min. Diaes e kaver lec'h amañ. Leun eo ar gêrig vihan-mañ a soudarded ag ar bedervet arme hag a re hon Divizion. Ret eo deomp en em vountiñ en un ti lec'h mah eus 7 a vugale. Unan a zo soudard e Frañs ; amañ eh eus 6, 5 plac'h hag ur paotr. Bugale desavet mat int, ha brav. N'o deus ket souffret re get ar Jermaned. Neoazh ne oa ket brav o stad. Labourat a veze ret dezhe e'it ar Jermaned ha paeet ne oant ket. Rac'h an douar a oa kemeret dezhe hag al legumaj, ar frouezh, ar yer, ar gonifled a c'helle an dud kaout a veze rac'h skrapet a-zoc'hte. Ar re en doa yer a veze ret dezhe fournis 2 ui dre sizhun ha dre yar dezhe, hag e vezent paeet 2vl. 1/2 ar pezh. Pa vankent e veze graet dezhe paeiñ 1 mark dre ui !

Doereoù am eus ivez ag ar vuhez drist a rae lod ag ar merc'hed get ar Jermaned. 3 a vugale a zo bet anezhe, marv doc'htu (pe lazhet !). Ne oa forzh-kaer 'met ar merc'hed dimezet hag a rae fall vuhez. Ar merc'hed yaouank a oa dibaot hag en em

zerc'hel a raent a-feson. Nend eus 'met un ti lec'h m'en doa un ofisour esaeet kaout dre vil merc'h an ti. Nend oa ket tizhet. Mamm ar plac'h a oa arru doc'h kriadennoù he merc'h hag en doa belzet man andour eh ae da lâret d'ar C'homandantur petra en doa esaeet gober.

Skol ne oa ket er vro hag a-c'houde 1914 ema ar vugale baour àr divrec'h o zud. Ar re en doa 13 vlez a veze ret dezhe labourat e'it ar Jermaned.

Ar person a oa chomet er vro an taol kentañ, met 'benn ar fin eh oa kemeret ha kaset prizonour d'ar Jermani. Daet eo en-dro ha kemeret en deus e iliz lakaet d'ar Jermaned da vout klañvdi.

Ar merc'hed a rae fall vuhez amañ a zo aet get ar Jermaned a pand int aet kuit. Lod a oa aet a-raok da vout matezh gete.....

**09-11-1918** - Ar mintin-mañ eh a soudarded ar IV<sup>e</sup> Arme kuit hag e chom lec'h genomp. Kemer a raomp doc'htu un ti fornis e'it gober hor burev hag e tiskargomp arre hon c'hirri.

Hol lec'h da gousket a zo gwell ivez. An neizhour ema bet ret deomp kousket en ur marchaosi. Glav a rae àrnon hag ema bet ret din cheñch lec'h 3 gwezh d'am gwele. Un nor lakaet a-dreiston en deus paarraet doc'hin a vout gwlebet. Get an dra se, e-kreiz an noz, setu un tarz spontus ! Ur potarnle a sailh hag e horoz ar c'hornad a-bezh. Kouezh a ra tammoù dir àr ma zoenn ! Hag ar potarnoù a sailh e-pad an noz... Bravet nozvezh !

E-pad ar mintin hiziv n'en em glever ket get trouz an tarzhoù. Lod a sailh doc'h tu an hanternoz, lod doc'h ar gar. Nend eus ket a arsav. Ar gwashañ, tud a dap tammoù hag a-benn c'hoazh eh eus ur serjant ag ar 43<sup>e</sup> é tremen 'tal ma fenestr, lazhet da dammoù dir.

**10 ha 11** - Château-Porcien. Yen-bras an noz kentañ. Tan en ti an eil noz (er gampr d'al laez).

**11-11-1918** - Arsavet elkent an diwaderezh !

**12-11-1918** - Àr-raok. Trema Epernay eh aomp. Da gentañ da Boulton-sur-Suippes dre Avançon, St-Loup, Roisy. Daet eo kaer a-vintin hag an hentoù en deus sec'het mat. Ur blijadur eo kerzhet. Goude Saint-Loup e kavomp un nebeud merc'hed ha gwazed é tonet a Roizy. Monet a raont da welet Saint-Loup hag an dud a zo eno n'o deus ket gwelet a-c'houde oc'hpenn 4 blez.

Arru a raomp àr-dro 3 eur e Boulton-sur-Suippes. Foñdet-mat eo kêr ivez. Ur vaouez a zo amañ, arru dec'h ag an Ardennes lec'h m'ema a-c'houde àrlene. Ne oa ket foñdet kêr neuze. Kavet a raomp tier a zo c'hoazh toenn àrnezhe. Kaset em eus genin un nebeud plouz a zo gras din kaout henoazh. Arañj a ran un tammig ar gwele orsal a zo er gampr hag e tan da benn a bas un nozvezh ag ar re wellañ am eus tremenet er brezel. Huñvreal a ran er peoc'h, en distro : ur blijadur !

**13** - Chom a raomp amañ hiziv hag a-vintin ema ret diskarg ar paperioù, rak ar mestr en deus kleñved ar paper. Ne vez eürus met a pa vez azezet doc'h un daol e tuiñ paper ! Ha duiñ a ra ! Evit lâret kemer ur c'harr ha monet getoñ d'ur gêr arall e skriv e-pad un hanter-eur.

**14-11-1918** - Da 7 eur 1/2 eh aomp àr-raok dre Fresnes ha Reims e'it Ludes. 32 km hon eus d'ober. Yen eo ha skornet an hentoù. Bourrus eo kerzhet met ret eo kerzhet mat evit en em dommet.

Treuziñ a raomp arre bro an Ankoù. Fozioù, orsal a bep seurt, toulloù potarn, tier brevet ha diskaret ; rac'h ar pezh

hon eus gwelet e-kostez Sillery é monet. Met ar poaniusañ a welomp a-dal Vitry-les-Reims. Amañ ema kêr dija, hag e-pad un euriad ne welomp 'met dismantr. Du-se, e-kreiz kêr, savet a-dreist an tier, ema izili gwenn-kann an iliz-veur. Tammoù a vank hag ag un hanter-lev e weler lec'h ar goulïoù... An tier, ar ruioù, ar monumantoù, rac'h ar pezh en deus graet mab-den a-c'houde an Amzer-Grenn evit kaerat an tachad-mañ pe evit gwellaat stad an dud, en deus servijet e-pad 4 blez d'an den d'en em zifenn doc'h an den a oa a-dal hag a venne el lazhiñ. E-mesk rac'h an traoù brav pe mat-se ar soudard n'en deus bet 'met ur soñj : en em zifenn, en em guzhet, aesaat e stad ; hag evit disoc'h get e soñj en deus toullet ar magoerioù hag an norioù e'it pas beg e fuzilhenn, toullet edan ar ruioù, er c'havoù e'it en em guzhet doc'h an obusoù, kemeret gloestraj, mekanigoù, delwennoù da lakaat etrezoñ hag an enebour. An obusoù a zo daet neuze ha diskaret hep truez rac'h ar pezh a oa en o hent, brevet pep tra, tier, gloestraj, gwez ha reverber... A-dal ar momant-se mab-den en em gav aotreet da gemer ha da fondiñ rac'h ar pezh a wel : an evaj e'it evet, ar gloestraj, ar c'hoadañ e'it en em dommet pe evit gober meni gweleoù, an traoùigoù, an dilhad evit kas getoñ èl koun, pe evit gwerzhiñ, evit kas d'ar gêr. Dre an toull graet d'ar potarn en un ti ema achapet pep onestiz....

E Boulton-sur-Suippes eh eus ur vered a zo pasein 500 Boch a-barzh. Kempennet a-feson. Met er vered bourc'h o deus, reve o akustumañs, foñdet meur a vez. Doc'h tu Reims o deus mem skarzhet kavoù bez ag ar re varv e'it en em lakaat enne. Mur ar vered en deus servijet dezhe da greñvlec'h. An iliz en deus servijet d'ober un neizh mindrailherezed : finfoñdet eo. Merc'hed daet aze get ar Jermaned a zo arru hag a gont deomp penaos eh oa o stad get ar Jermaned. Rac'h en em glemmont ag al labour ret gober 'gozik e'it netra, ag ar fall voued, ag ar feson rust ma vezent tretet.

Arru a raomp e Ludes goude bout paseet dre hent Cormontreuil ha Montbre (anv kurius bre : *colline*). Fall lojet omp met dre voneur e kavomp hor popote get an dud. François (Charles) hon degemer.

**15-11-1918** - Da 8 eur eh aomp àr-raok dre Craon-da-Ludes, Louvois, Tauxières. Gwelet a raomp get plijadur tachadoù ned omp ket bet re valeürus enne, tud en deus bet hon degemeret mat ha kenavo a lâran d'an dud ha d'an traoù, moarvat evit mat. Kavet a raomp ivez àr an hent lod-kaer a dud é tonet en-dro d'o bro get karradoù gloestrajoù ha listri.

Gwelet a raomp ivez un dra na ra ket gwall a blijadur deomp. E-tal heskennerezh Louvois eh oa ul lec'h dornerezh dalc'het d'an arme. A pa yazomp-ni àr-raok e chomas pep tra e darn. Paseet e oa al labour d'ar major cantonnement. A-c'houde nend eus graet netra. Ar pezh a zo gwashañ, un 50 sac'had greun bennak a zo chomet berniet e-kreiz ar park hep bout goloet : dideñviñ a ra ar greunn a-dreuz ar sec'hier ! E-tal ar sac'hadoù eh eus bernoù gwinizh boulc'het ha chomet digor d'an amzer. Glas-deur int get an ed é pousiñ !... Hag ar sac'had greun a goust 75 Fr d'ar gouarnemant ! E-pad an amzer-se tud ar vro hag en deus un tammig muioc'h a benn hag a galon e'it ar vistr soudarded a had par-ma-c'hellont e'it kempenn ar blezad 1919.

E Tours eh arruomp àr-dro kreisteiz. Reiñ a raer deomp an hevelep lec'hioù eget ar wezh arall eh oamp amañ. Ema pep tra er mem stad. Nend eus 'met an heol ha nend eo ket-eñ ken tomm, ha me respont deoc'h eh a fall an traoù get an holl soudarded a zo er sulerioù hep plouz, digor d'ar seizh avel. Ne c'hellan ket-me donet da benn a en em dommet a-tro an noz. Yen eo !

**16-11-1918** - Ret eo din cheñch lec'h d'em gwele. El lakaat

a ran etre ur cheminal hag ar vagoer hag a-dreist e lakaan ma lien tant. Donet a ran da benn el-se a en em gloziñ mat. Gwir eo, an noz paseet e oa teir lañjer àrnon ha ma c'hapot hag atav em boa aneoued !

Er burev ema ur seurt, met amañ ema hanter-kloz an traoù ha donet a raomp da benn a gaout ur fornev d'ober tan.

**17-11-1918** - Arru a ra genomp doere ag ar jilori a ra an dud a-dreñv en arbenn ag an arsav-brezel. Lod-kaer anezhe a c'hoarzh, a gan, a goroll hag e vehe aesoc'h dezhe gouel, rak an achumant-brezel evite a zo ivez an diwezh ag ar vuhez gaer o deus bevet e-pad 4 blez é serrezh argant a zornad hag é tebriñ hag ec'h evet ar pezh a blije dezhe. Ar vedalenn-se ivez en deus un tu gin...

Amañ ema bet klouaroc'h an traoù rak petra a zo cheñchet evidomp ? Dec'h eh oamp é redek, hiziv e redomp arre, arc'hoazh e vo hañval doc'h hiziv... Un deiz a levenez a vo an deiz ma vimp disoudardet ! Met, en ur mod, ema dereatoc'h gwelet ar soudarded el m'emañ e'it doc'h o gwelet é vlejal er ruioù, get bannieloù, goude bout karget o c'hov.

Amañ ivez eh eus lod-kaer ha nend int ket forzh koutant m'ema achu an traoù. An ofiserion dreist-pep-tra a sell rous al lod muiañ anezhe. Kenavo ar friko, kenavo ar c'hiritan, kenavo ar 500, 600, 1 000, 2 000 lur bep miz ! Kenavo ar skraperezh, an hujaterezh hag ar c'hant ardoù arall o doa kemeret a-c'houde ar brezel, int tudigoù e karg, devezherion, kenwerzherion dister pe soudarded a vicher.

Bremañ ne vo ket mui indemnite combat, na zone, nag ar c'hant tro a zae da zoublin o fae bep miz. Ret e vo dezhe labourat e'it beviñ, hag amañ eh oant bevet ec'h ober netra, lod-kaer anezhe.

**18-11-1918** - Un dra souezhus a weler àr ar gazetoù : arlene

ne oa ken komz àrnezhe 'met ag ar Réveil des Nationalités. Ar brezel-mañ a zlee reiñ d'an holl broioù gwasket frankiz ha librentez. Ha setu bremañ e lenner en holl gazetoù ema dañjerus ar soñj-se. Ha ne ouit ket perak ? Ar Jermaned ag an Aotrich, goude m'ema dismantret o gouarnemant, en deus savet ur gouarnemant e'ite ha goulennet bout staget doc'h o breuder ag ar Jermani !!... Hon politikerion n'o doa ket soñjet e kement-se ! Bremañ enta e vezer prest da nac'hiñ doc'h ar re-se ar pezh a veze goulennet e'it ar re 'rall. O justis mab-den !

**24-11-1918** - Ha kompren a rit-c'hwi perak un ofisour uhel e karg a lâr aotrou d'ur bardehol, daet da vout ofisour doc'h ar brezel, hag e lâr e anv, hep aotrou erbet, d'ur soudard licencié es-lettres, den a-feson, pe d'ur beleg ? Ne gomprenan ket-me...

**25-11-1918** - Achu eo an emgann doc'h ar Jermaned met a-benn ema digoret ar brezel etre ar spered soudardek hag ar spered disoudard.

Da vintin, da greisteiz, d'an noz, e'it pep tra, setu an trompet é monet àr-raok èl en ur soudardi ! A-vintin betak an noz ekselsis, tennerezh get fuzilhenn pe mindrailherez !

Notennoù a arru e'it degas soñj d'an dud ema dle saludiñ dalc'hmat, dougiñ ur gouriz ler ha me 'oui-me petra rac'h. Ar re en deus harzet gwezh e-pad 4 blez 1/2 doc'h ar Jermaned nend int ket e'it harz pell doc'h ar vuhez-se. Selloù du a weler, touierezh a glever...

Lenn a raer ar gazetoù evit klask ma komzer a zisoudardiñ. An traoù arall, gouelioù en Alzas, ar pezh a lârer diar Gwilhou hag e dud, rac'h an dra-se, a lârer a zo, « *bourrage* ».

Get an dra-se, ema èl rezon bihanaet ar boued ; ar gwin ne arru ket (2 gart bemdez hepken), butum ne gaver ket... Rac'h an traoù-se a laka peb unan da vout dibasiant.

Ar gwin a servij a du 'rall d'ober troioù kamm : ar re a c'hell touch a gemer evite hag evit an dud emaint en o zi. Int a werzh gwin d'ar re-mañ hag eh eus neuze re ha ne c'hellont ket kaout e-mesk ar soudarded.

Rac'h an traoù-se, rac'h an troioù a zo bet graet get boued pe get butum pe get dilhad a ziskouez reizh ha splann petra 'vehe ar vuhez a pan dahe un deiz ar gouarnemant ha kemer pep tra edan e vili !...

4 a viz Kerzu 1918 - Kuit a Tours e'it Matougues. Glavaj a ra ha strakus eo an amzer. Tremen a raomp dre Conde. Truek eo hol lojeris e Matougues.

D'an noz e krog an derzhienn paper er mestr. Ret eo dezhoñ lakaat un diviz e penn ar gemennoù a za dezhoñ ag ar jeneral hag ema 10 eur bennak a pa c'hellomp monet da gêrhun. Da 4 ar 1/2 da vintin e tihunomp arre get blejerezh ar c'heginerion.

**05-12-1918** - Kuit a Matougues e'it Cheppes-la-Prairie. Àr-dro 30 kil. a raomp. Tremen a raomp e-tal Chalons. Chom a ra eno restajoù ar brezel : pezhioù kanon, rodoù, koad, etc. Ken vil ha ken divourrus eo kerzhet. Dre voneur e c'hellomp krapin àr ar c'hirri.

**06-12-1918** - Chomet e Cheppes. En ur c'harrdi bras ha digor d'ar seizh amzer eh omp lojet. Arañj a ran ma zraoù èl a pa vehen ar-maez hag èl-se n'em eus ket èlkent aneoued. E ti peizanted eh omp. An tad hag ar mab a zo soudard hag ar vamm mezvez henoazh... Ervat omp neoazh en ti. Tredan a zo ha kaer eo en ti.

**07-12-1918** - Àr-raok a-vintin. Un dro vras a raomp, èl lies, evit gober un hent berr. Dre hentoù bihan en hor c'haser



lec'h ma en deus poan vras al loened stlejal o bec'h. Arrest a zo ret lies : ruziñ a raomp ha netra ken. Dre ribl Kanol ar Marne eh aomp un herradig hag e tremenomp e-tal un uzin a raer rad hidrolik a-barzh. Àr-lerc'h bout klasket c'hoazh un dro vras e troomp groñs trema Vitry-Le-François lec'h ne basomp ket. Er falborzh e troomp groñs arre e'it kemer hent Vitry-en-Perthois, lec'h ma tleomp lojiñ.

Nend eo ket bras kêr, met ervat omp e'it ur wezh : burev, lojeris, ti da zebriñ.

**08-12-1918** - Sul. Chomet omp amañ evit diskuizh. Monet a ran d'an oferenn. An iliz a zo kozh ar penn doc'h an aoter anezhi. 'Gozik ag an XIII<sup>vet</sup>. Met ne chom ket kalz ag an iliz gozh. Tud a zo en oferenn. Neoazh èl e rac'h ar c'hornadoù-mañ, nend eus ket kalz 'met merc'hed hag a bas o amzer é sellet doc'h ar re a zo en iliz ha doc'h ar re a ya ar-maez, doc'h brec'hier ha sokoù o c'henseurtez. Aze emaint hañval doc'h lod-kaer, mem e Breizh !

É c'houarn ar burev eh on hiziv ha n'em eus ket oar da vonet da vale e kêr.

**09-12-1918** - Àr-raok da 8h1/2 ! E Thieblemont - Abati Bourmont.

E Thieblemont e kouskomp en ur c'harri ag ar vor-mañ, digor-kaer, àr ur bern melchon eostet e'it gober had. Gober a ran un toullig, èl ur c'hi, er bern ha gronnet get ma lañjelioù e tan da benn a dremen un nozvezh èl-se hag èl-se... Hon pred d'an noz a gemeromp e ti ur boulom kozh genedik a Strasbourg. Donet a ras da Frañs e'it gober e servij, evit pas bout soudard jerman. Reiñ a raomp un tammig boued dezhoñ, met ar pezh a ra ar muiañ a blijadur dezhoñ a zo ur c'hartad gwin hag ur sigaretenn.

**10-12-1918** - Àr-raok. 8 eur.

Hir eo an hent. 30 kil. bennak. Neoazh ar penn kentañ ag an hent a za genomp dibilh-kaer. Arrest a raomp kent St-Dizier e'it debriñ ur begad, hag e treuzomp kêr a ziskouez bout rac'h en-dro d'an hevelep ru. Ne raomp 'met he zreuziñ en ur gerzhet met ne ziskouez ket bout kurius-bras da welet : an dud naket nend int ket brav. Fall wisket, bugale diarc'hen er fang, é vutumat, merc'hed vil (rac'h emaint vil ar re a gavomp àr an hent !...)

Koantoc'h eo ar vro a welomp goude : stankaat a ra ar c'hoad. Setu berjeioù get avalennoù, kignezennoù, parkoù get un nebeud gwimennoù.

Ancerville a zo en ur flagenn etre div dostenn. Kozh eo kêr ha chom a ra c'hoazh ur yoc'h tier mod kozh get treustier a za a-dreist ar ru. Kizellet a zo e-leizh anezhe. An iliz ivez a zo bravik an nor-dal anezhi. Gotik eo met dirak an nor eh eus savet àr pevar piler kizellet ul leinienn bravik. Anvioù kozh ar ruioù a zo gouarnet, ar pezh a ziskouez e oa tud avizet er vro.

**11-12-1918** - Da 8 eur 1/2 eh aomp àr-raok. Meneziekoc'h eo ar vro ha bravaat a ra ivez rak muioc'h a wez a zo. 13 k. 1/2 a raomp edan ar glav 'gozik penn-d'ar-benn hag emberr, diàr lein un dostenn, e welomp beg un tour é sevel just en ur gammdro. Aze eh arrestomp ha mall eo rak nend eo ket bourrus tamm erbet bale ar mintin-mañ. Emberr e welomp kêr e deun ur flagenn, dastumet start-start en-dro d'an iliz ha d'ur maner a weler ar fenestri dantellet àrnezhon : maner duked Lorraine.

A druegezh-kaer e taomp da benn a en em lojiñ. Ar burev a zo en un toull lous.

Lec'h ma kouskomp ema lousoc'h c'hoazh. An dud ag ar vro a sell rous doc'h ar soudarded ha kuzhet a raont en hor

'raok. Ne glaskont ket tamm erbet gwelet soudarded hag, a p'o anaver, ne c'heller ket lâret e raont fall.

**12-12-1918** - Diskuizh a raomp hiziv hag arru eo an doere eh aer da gas elkent d'ar gêr etre deiz an Nedeleg hag ar 5 a C'hwevrer rac'h ar soudarded kozh R.A.T.. Splannaat a ra evidomp an amzer da zonet...

Met perak bout gouarnet ken pell amañ ec'h ober netra peizanted hag en dehe gellet e miz Du ha Kerzu hadiñ c'hoazh ur blezad mat ha kempenn douar e'it lakaat ed pe kerc'h en nevez-amzer hag avaloù-douar ?...

**13-12-1918** - 8 eur. Àr-raok e'it St-Aubin-sur-Avre. Arru da 11 eur 1/2. Beajet àr bot plouz er charr. Glav hed-ha-hed get an hent. Gwelet a raomp Amerikaned. An hentoù a zo gouarnet dezhe hag ar c'hirritan a vale a zo 'gozik rac'h dezhe. Fall zegemer a raer deomp amañ. A-c'houde ar brezel an dud ag ar vro en deus diskroc'henet par m'o deus gellet ar c'haezh soudard ha bremañ, a pa welont achu ar brezel, ne vennont ket er gwelet. Goulenn a raont argant get an ofiserion e'it kamproù a zo paeet dezhe dija. Ne gavomp-ni lec'h da zebriñ 'met e ti un divroadez a-gostez Sant-Mihiel hag a zo he gwaz èlomp er sektion. Kemenerez eo, ha degemer ervat a ra ac'hanomp. Ur c'hrouadur he deus, 8 vlez bennak dezhoñ, fall zesket mard eus ha digempenn. Ar c'hrouadur sur a gemenn d'ar vamm.

**14-12-1918** - Glav atav ! Monet a raomp àr-raok arre e'it Void (Meuse), ur gêrig didrouz, mistr, àr ar Meuse hag ar c'hanal. An tren a bas a-barzh ivez. Tier a zo hag en deus gouarnet c'hoazh o min gwiskamant ag an amzer gozh. Un nor-borzh bras get lec'h ar rañjennoù a chom ag ar vagoerioù a oa en-dro da gêr. Bout a zo ivez ur fenteun vras àr dachenn ar c'hovu a fard an dour er-maez a bodoù a zo edan kazal hag àr

skoaz ur vaouez. Lojet mat omp, hag amiañ eo an dud. Kavet a raer pep tra da breññ, met amañ ivez ema douar ar Stadoù-Unanet ! Ar vugale en deus desket dija meur a c'her amerikaneg hag o blejal a raont en ur sailh en toulloù dour ha fang.

**15-12-1918** - Sul - Àr-raok c'hoazh. 16 kil. bennak e'it Foug. Meneziekaat a ra bepred ar vro met na divouzent eo an dud ! Gwiniegi a gavomp c'hoazh en tachadoù klouarañ. Foug a zo en ur flagenn don àr ribl kanal ar Meuse ha 'tal al linenn houarn. Lous eo ar vourc'h get an dour a chom er ruioù hep pavaj. An teil a daol an dud e kement kognell a za da gousi muioc'h c'hoazh kêr.

Uzinioù a zo hag a rae 'raok ar brezel tuyautage. A-c'houde ar brezel e raont potarnoù hag al lod muiañ ag an dud en deus dilezet an douar evit monet en uzinioù-se rak, a lâz ul labourer din : « Muioc'h a c'hounezer eno e'it e krabisat ar winiegi » ha setu perak e kera kement pep tra e'it ar vagadur.

**17-12-1918** - Monet a raomp àr-raok da 7 ar 1/2. Glav atav ha lous ! Dre Toull e tremenomp, met a-zehou da gêr. Ne weler a bep tu 'met soudardier, tavarinioù. Amerikaned a zo e kement kognell a zo. Àr ar stagelloù eh eus amerikaneg hag ar vugaderezed ha distenerezed a zo ivez amerikaneg àr o zier. Ar voutikloù a werzh traoù e'it an Amerikaned...

Abred e tegouezhomp e Gondreville, ur gêr dister ha lous. Netra da welet, 'met rac'h ar merc'hed a vrod hivizioù e-tal o fenestr e'it 9 blank ar pezh !!

En ur suler yen e kouskomp hag ema ret deomp laerezh plous er bern, daousto d'an difenn, evit lakaat edandomp.

Abred eh an da gousket, met ne c'hellan ket repo : ar re 'rall a zo é c'hoari kartoù, ha seul taol eh on dihunet. Gwell on amañ neoazh e'it é selaou doc'h o lousteri hag o zouierezh. An enderv-mañ, ur C'hreistezad aet da Bariz, a pa oan é komz ag

ur c'honkordad etre roue an Itali hag ar Pab, a venne groñs ma lakaat da grediñ en doa ar Pab ur vaouez ! Ha ne c'hell ket un den beviñ hep ur vaouez !... O, speredoù kousiet...

**18-12-1918** - Da 7 eur eh aomp kuit. Yenaet en deus an amzer. Avel a zo. A du 'rall ema sec'hoc'h an hentoù hag e c'heller redek e'it en em dommet. Ne dremenomp ket e Nancy. A-gosteziad eh aomp dre Malzeville hag e Champigneulles eh arrestomp.

En ur maner ema ar burev, met evit kousket ha debriñ ema truek hon stad ! Donet a raomp da benn a gavet gwell lec'h. Ur gampr a gavan mem e ti keizh tud. Kaeroc'h e vo din atav e'it er gobanoù a oa merket evidomp. Un tammig kêr eo honnen met labourizion dreist-pep-tra. An tram a za amañ.

**19 a viz Kerzu 1918** - Da 6eur 1/2 eh aomp àr-raok edan ar glav hag avel vras. Vad en deus graet man gwele din. Hor burev a oa e ti rener *L'Impartial de l'Est*. Ur miloer porselen saxe forzh brav a oa er sal. Ar vagoerioù a oa bokedet get kroaz al Loren ha bokedoù askol.

Vil eo an hentoù. Emberr eh arruomp get ar c'hornad gwelet gwezharall get an enebour. A bep tu d'an hent eh eus girzhier koad ha lien evit parraat doc'h ar Jermaned a welet doc'h an tu-mañ. Nend eo ket bet start-bras an traoù er c'hornad-mañ. Ne weler ket kalz a doulloù potarn hag an tier nend int ket foñdet kalz. Lanfroicourt ha Manhoue neoazh a zo dismantret. E Manhoue eh eus c'hoazh karrezioù gwer ha gwelet a raomp un den, ur c'here, en deus en em lakaet da labourat. E Jallaucourt hag Oriocourt ema daet an dud en-dro. E Delme ivez. Rak, a-raok monet kuit, ar Jermaned a harzas tud ar vro e'it gellout aesoc'h laerezh ar pezh a c'hellent sevel. Komz a ran get ur gemenerez eh omp é tebriñ en he zi, ha lâret a ra din penaos o deus bevet get ar Jermaned 'raok ar

brezel hag e-pad ar brezel. 'Raok ar brezel ne oa ket re start o stad. Lezet e veze frankiz da gomz galleg hag er skolioù e veze desket d'ar vugale galleg ha jermaneg. Ne oa 'met an dud e karg a veze dibabet kentoc'h e-mesk Jermaned hag ar skritelloù àr an tier a veze ret lakaat e jermaneg. A-c'houde ar brezel eh oar startoc'h en o c'heñver. Difennet e oa komz galleg er ruioù hag ar re a veze tapet a veze roet amand dezhe. An dud rac'h a gomz galleg mat, hag ar vugale ivez. Gwelet a raomp soudarded jerman ag ar vro ec'h arru er gêr. Lâret a raont deomp en dehe padet c'hoazh ar brezel a pan dehe bet ar Jermaned boued èl ar Frañsizion. Met pell 'zo eh oa ret dezhe diouwer hag an dra-se o lakae da goll kalon. Rak er c'hornad-mañ n'o deus ket graet kalz a labourioù evit en em zifenn hag a pa vehe bet daet àrnezh e amañ e vehe bet aes araokaat.

**20-12-1918** - Monet a ran da welet an iliz. Nevez eo met savet er mod gotik. Mistr eo an diabarzh ha furik. Neoazh gwan-mat eo ar peulvanoù evit uhelled an iliz. (Daou zeiz e Delme).

Kavet hon eus aes un tachadig klouar evit kousket hag evit skriv. Ur fornev a zo ha get tan e taomp da benn a vout ervat.

**21-12-1918** - A-vintin eh aomp àr-raok trema Morhange. Kaer eo a-vintin, met ne bad ket. Brum yen-yen a za hag hon eus poan doc'h en em dommet. Treuziñ a raomp broioù vihan a gavomp atav enne tud a gomz galleg.

E Morhange eh eus un tammig cheñchamant. Ar vugale a zo e-leizh anezhe hag a gomz jermaneg etrezè. E-mesk ar re vras eh eus e-leizh a gomz galleg.

Er vered 'gozik rac'h an anvioù tiegezh a zo gallek.

D'an noz e tebromp e ti an D. Marquart a werzh balizioù, panerioù, gweleoù, ha pep seurt traoù èl-se hag e choman da gousket en o zi. An tiegezh-mañ a zo kurius da studial.

Gellet a raer o sellet èl ar c'hreiz ag ar boblañs. 5 a vugale a zo. Ar baotred 'zo kentoc'h tuet àr ar jermaneg, ar merc'hed àr ar galleg. An tad, daousto d'e anv gallek, a zo Jerman hag ar vamm, ur « *Henrionenn* », a zo ur Frañsezenn a ouenn, a yezh, met a spered ema jermanekaet. Ar merc'hed, ar goshañ dreist-pep-tra, a zo kentoc'h a-du get ar galleg. Komz a ran geti beta 9 eur 1/2. Ar paotr yaouank a laka da c'hoari ur fonograf fall, diblaen a rastell seul taol ; e vamm, e-pad an amzer-se, a zo ret dezhi huchal a-bouez-penn evit komz genin. Ar merc'hed, int, a vrouda ur pezh danvez Gobelin. Ar vamm a ziviz din un istor : ur marc'heg a gar ur verc'h yaouank ha ne c'hell ket dimeziñ dezhi. Eñ a bella doc'h ar maner hag, evit diskouez dezhi en he c'har bepred, e son get ar c'horn-boud e park ar maner. Goude, ha daousto d'ar c'herent, e taont da benn a zimeziñ. An istor-se a blij bras d'ar verc'h koshañ. Lâret a raer din ema bet infirmière en arme jerman. Daou soudard Frañsez a oa en ur c'hlañvdi : unan anezhe a oa marv. E vreur a c'houlennas get ar plac'h-se kavet ur beleg katolik e'it interriñ e vreur. Ar verc'h-se a reas ar pezh a c'hellas, met he zad hag e oa jermanegar a esaeas c'hoari ur fall dro d'e verc'h e'it bout en em soursiet ag ur prizonour frañsez. Ar plac'h a zas d'ar gêr goude. Met d'an dehan-brezel, an tad, get aon ag ar Frañsizion, a achapas !...

An tiegeh-mañ a zo rac'h desavet er soñjennoù jermanek. Lâret a raont deomp ema Frañs en deus klasket brezelat hag eh oa ar C'haizer un den mat. E vab neoazh, eme-int, a oa ur foll. An den yaouank en deus 17 vlez. Dle e oa dezhoñ bout soudard jerman. Ne gav ket souezhus bremañ bout soudard frañsez. E vamm a gav, doc'h he zu, an dra-se a-vod, ha ne gav ket mat en deus ar gouarnemant jerman permetet komz galleg el Loren hag en Alzas ; ha bremañ ne gav ket mat e vehe lezet ar vugale da gomz jermaneg en hevelep kornadoù !! An hanni kreñvan a zle bout mestr !!

Poan a ra dezhi ivez gwelet nend eo ket mui Morhange tost d'al linenn-harz. Soudarded ne vo ket mui hag ar c'homers ne gerzho ket mui el a-raok... Poan am eus doc'h he lakaat da gompren penaos e yahe an hanter gwell an traoù an deiz mar behe gellet parraat ne vo soudardet rac'h an dud, rak an dud yaouank, e-lec'h chom d'ober netra e-pad tri blez en ur gazarn, a labourahe abretoc'h hag a savahe tiegezh abretoc'h hag an dra-se ne vehe 'met mat.

Forzh-chifet eo bet é welet àr ur gazetenn diviz maer Metz hag a lâr eh eus Loreniz, hag evit goapaat e lâr : « Gwell e vehe genin pas monet d'ar baradoz e'it bout eno get Prusianed ». An dra-se a ra poan-bras dezhi rak, eme-hi get rezon, Doue n'en deus bro erbet hag e pep bro eh eus sent.

Lâret a raont, ha krediñ a raont, ne vehemp ket bet daet da benn ag ar Jermaned keneve d'an naon. A-hend-arall e raont an degemer kaerañ a c'hellont ac'hanomp. Ur gwele, hanni ar verc'h goshañ, a roont din - daousto din bout arañjet man golc'hedad plouz - ha gwelet a ran en deus ar verc'h yaouank-se levrioù gallek en he stal levrioù. Met ar pezh a ziskouez labour ar Jermaned a zo al levrioù pedennoù hag al limajoù a zo rac'h e germaneg. Goût a ran ivez perak nend eus ket muioc'h a Jermaned er vered. Hugenaod int, hag en o deus ur vered evite. Er ru vras a zo a-dal d'ar soudardioù nend eus 'met Jermaned a zo serrret o dorioù en arbenn m'emaint Jermaned. Ar vaouez-mañ a lâr din penaos an deiz ma yas ar Jermaned àr-raok, a-raok mem ma oant digêret mat, en en doa ar Frañsizion savet bannielloù triliv. Ar soudarded jerman a oa eürus é welet an traoù ec'h achu met ar vistr a rae selloù du, mam breuder !!

**22-12-1918** - A-vintin ema ret achap. Monet a raomp da Putlange (e germaneg : Puttlingen). 28km ac'halemañ. Yen eo, Erc'h a ra ; divourrus eo. Treuziñ a raomp kalz a gêriadoù.



E lod anezhe eh eus skritelloù get : Vive la France ! Soyez les bienvenus ! Tavarnioù ivez en deus merket an dra-se evit tenniñ an dour d'ar vilin met ivez dre garantez-bro rak komz a raont galleg mat. Ret eo anzav a du 'rall e kavomp pennoù boch, fasoù aheurtet hag a sell doc'homp dre zindan. En ur gêr eh eus un delwenn peizant savet 'raok 70. Dibennet eo. Get piv ne ouian ket, met marse ema ar Frañsizion eo ha marse ar Jermaned. Ne vern penaos ur fall daol eo a-dra-sur rak un delwenn mein n'en deus netra da welet get brezelioù mab-den.

Arru a raomp e Putlange àr-dro 2 eur. Ar gwellañ degemer a raer ac'hanomp. Gweleoù hon eus, lod ac'hanomp, evit netra. E kement fenestr a zo eh eus un drapo.

Un dra souezhus : ur sinagog zo amañ. Gwir eo e weler àr an tier anvioù yuzev èl Levy, Elie. Ur voutikl a welan er ru vras a werzh pep seurt traoù ha levrioù. Tennet en deus ag e suler levrioù gallek e'it ar skolioù moullat 'raok ar brezel 70 !! Doc'h gwerennoù e di en deus staget niverennoù ar *Petit Journal Illustré* ag an amzer-se ivez pechañs, pe diwezhatoc'h, a zo soudarded àrnezhe é monet d'an emgann get jourdoul !! Kavet en deus èl-se an tu da ziskouez ema Frañsez.

Un dra lous a zo e-mesk levezet an holl. Doc'h an noz e komañs koubladoù en em barat. Ar merc'hed a servije amañ d'ar Jermaned a sailh hiziv ken skañv doc'h goug ar Frañsizion. Ur bal a zo d'an noz e kement kozh tavarn troñs-ar-vrozh a zo ha gellet a rit kompren ar pezh a dremen eno.

**23-12-1918** - Monet a ran en un davarn da evet bier àr-lerc'h koan ha da dañvaat gwin-ardant prun ar vro. Gwan-mat eo ar bier met ar gwin-ardant a zo goustet-mat. 20 blank e werzhont ar «veskennad» anezhoñ. E'it netra ema ! En davarn eh eus tud a bep bro ha klevet a raer komz pemp pe c'hwec'h yezh. Tud an ti a gouskomp a-barzh hag an ti lec'h m'ema hor

popote a zo Frañsizion. Ur gwele a roont din. Dre waleur nend eus ket liñselioù àrnezhon hag a pand on astennnet a-barzh eh arru get ma fri goust treid an hanni en deus kousket a-barzh em 'raok hag en doa e dreid lec'h m'ema ma fri !... Kousket a ran neoazh.

**23-12-1918** - Ar mintin-mañ, da 9 eur, eh aomp àr-raok. Ema rac'h kêr àr voutj e'it gwelet ar soudarded é tremen. Hiziv eh aomp da Sarreguemines, 14 km ac'halemañ. Treuziñ a raomp ur vro a ziskouez bout pinvik hag a zo kempennet-mat. Koadoù a zo àr ribl an hent.

Emherr eh arruomp e kêr. A-dreist ar ruioù eh eus lakaet lienennoù àrnezhe : *Vive la France, Vive la République, Vive nos libérateurs, Vive les Vainqueurs. Liberté, Egalité, Fraternité.* Bannieloù triliv a zo doc'h an tier, barroù sapin, ampouloù elektrik triliv. Àr an tier eh eus merchoù : *Maison française, On parle français, Consigné à la troupe* (ar re-mañ a zo tier jerman). Degemeret mat omp e ti un intron a gomz galleg ag an dibad. Ur gwele a ra da zaou ac'hanomp ha debriñ a raomp en he zi. Lâret a ra deomp e vezent lezet da gomz galleg, met e-pad ar brezel, dreist-pep-tra an taol diwezhañ, e vezent bountet en toull a pa vezent tapet é komz galleg àr ar ru. Bremañ mand eo cheñchet penn d'ar vazh e vezer é tastum ar Jermaned a c'hoarie vil èl-se hag e vezont bountet e tankirri e'it o c'has d'o bro genidig. Ur yoc'h yuzeved a zo ivez dre-mañ, souezhus eo mem. E Putlange e oa oc'hpenn 200. Amañ sur eh eus ur yoc'h rak ur sinagog vras a zo, ha pinvik. Boutikloù kaer a zo ha traoù enne da werzhiñ, traoù daet ag ar Jermani èl rezon. Él ma tosta d'an Nedeleg, e ruioù a zo, e werzher gwez sapin e'it gober ur wezenn Nedeleg. Al lod muiañ ag an ilizioù ha tier bras a zo pounner ha savet reve ar giz jerman.

**24-12-1918** - Deiz kent an Nedeleg. Ema kêr a-bezh àr vourj. Monet a ran da welet ur Friseur, èl-se emma merket ti an troc'hour-blev dibañnour amañ. Goût a ra un tammig galleg ar minour, hag e vaouez ivez. Honnen en deus daou vreur soudard e Frañs ; emaint edan donet e perm.

D'an noz, reve an akustumañs, al lod muiañ ag an dud a ya d'an tavarnioù : paotred ha merc'hed, kozh ha yaouank, a ya da evet. Tud a dremen er ruioù get brec'hadoù traoù prenet evit ar vugale. Leun eo ivez ar ruioù a verc'hed é klask sav... O brezel, na lous oc'h daousto d'al levrioù ha d'ar pennadoù leun a c'hevier a skriver bemdez diàrnoc'h...

Ar soudarded doc'h o zu a glask arrest ar merc'hed er ru. Ne gredan ket eh eus kalz a dud a-feson hag a laosk o merc'hed yaouank da vale er ruioù...

Dic'houstet on. Yen eo. Hag ar mestr hag a c'hounit oc'hpenn 1 000 lur bep miz hag e douch argant e'it preniñ koad ha glaou hol laosk da skorniñ e-pad an deiz en ur burev a zo en ur houloir teñvel. Monet a ran da gousket abred. Àr-dro kreisnoz e tihunan d'ar c'hlec'hier é son e'it an oferenn a greisnoz. Emberr e sav beta ma c'hampr tonioù an orglezoù. Kousket a ran en-dro ha monet a ran da Gêrhun leun a vuzik hag a gan...

**25-12-1918** - Deiz an Nedeleg. Freskaet en deus an amzer. Lâret a raer din ne oa ket lec'h da rac'h an dud en iliz an noz tremenet. E-tal an teil e kresk meur a wezh bokedoù kaer...

Monet a ran d'an oferenn a eizh eur. Kalz a dud a zo. E-tal ar gadoerioù pinijenn eh eus tud é c'hortoz, paotred ha merc'hed.

Erc'h a ra ar mintin-mañ.

Leun eo ruioù kêr a vugale ha hardizh int, met desavet mat neoazh. E-leizh anezhe a ya da stardiñ o dorn d'ar soudarded pe da c'houlenn gete e'it un herrad o c'habell.

Monet a ran da welet ar Sarre. Àr an tier eh eus merchoù e'it diskouez betek e-men e save an dour ar blezioù en deus dic'hlanet ar wazh. Doc'h an tu-se eh eus c'hoazh tier brav hag uhel evit ur gêrig èl honnen.

Doc'h an noz e teraou arre an dud da vale er ruioù daousto d'an erc'h teuzet a gouezh ha 1/2 noz ec'h arru eh eus atav er ruioù tud yaouank e esae kanal ar Marseillaise ha flaouital. A-dra-sur e kaner muioc'h ar *Marseillaise* amañ e'it e Frañs lec'h ne gaver ket un den dre gant hag he gouar. He gwerzhiñ a raer e kement ti a zo, èl ar butum !

**26-12-1918** - Da 9 eur e kuitaomp ar gêrig-mañ e'it monet àr hent Rochbach lec'h ma tleomp arrest. Nen daomp ket mem betek kêr, hol lojeris-ni a zo e-tal ar gar ha nend omp ket drouk en ur c'hafé. Ar gwashañ, deiz àr-lerc'h an Nedeleg eo hag eh eus gouel bepred dre-mañ : ur piano mekanik a zo en ti, hag ar soudarded ha tud yaouank ar vro ne arsav ket a vountiñ argant a-barzh e'it el lakaat da skuermal evit gellout koroll er sal a zo e-talomp.

Monet a ran d'ar gar da gas ur pakad. Un den yaouank a Sarreguemines a zo eno a oui un tammig galleg : met nag a droioù a glasker din e'it man diaoul a bakad ! Amañ, a lâr din an den yaouank, ne gaser 'met ar pakadoù a bouez oc'hpenn 10 kilo èl pakadoù tren. Hag e Frans ne c'heller ket kas oc'hpenn 1 kg. A-dal 1 kg enta beta 10 kg reve al lezenn nend eus ket tu e Rochbach da gas pakadoù !!! Donet a ran da benn, é paeiñ e'it 10 kg, a gas ma fakad. E'it ma zrugerekat e kenig din monet da gousket d'e di... Met diskouezet a zo din ur gampr lec'h ma c'helliñ kousket.

Debriñ a raomp en davarn ; ar gegin a raomp ivez en davarn, hag e-pad an dra-se ar piano-hont a zalc'h da skuermal. 5 a vugale a zo en ti hag en deus naon ; hag int a sikour get ar piano gober trouz. D'an noz ema gwazh c'hoazh. Arru a ra tud

yaouank a bep tu a zo d'ober « An deiz àr-lerc'h an Nedeleg »  
èl ma raomp-ni an adpardon ha c'hoant koroll o deus, me  
'respont deoc'h !

Monet a ran fonnañ da welet ma c'hampr, met kemeret eo  
d'un ofisour. Poan hon eus e c'houiet get an ozhac'hez petra  
'zo arru rak komz galleg ne ra ket. E-pad an amzer-se e pun,  
e tro ar c'houbladoù en davarn. Nend on ket fall goutant a  
achap... Er c'harrdi e lakaan ma golc'hed hag a-dreiston ul lien  
tant. Èl-se e vin klos ha donet a ran da benn a bas un nozvezh  
vat a gousked.

**27-12-1918** - Mat em boa graet kousket er c'harrdi : betak  
1 eur 1/2 eh oa koroll ha trouz !

Monet a raomp àr-raok dre Rochbach ha flagenn  
Wohlmünster. Pell 'zo n'em boa ket gwelet un tachadig ken  
klouar. Koadek ha dourek, get tier dre bep div wezh.

Wohlmünster nend eo ket gwall vras. Peizanted a chom  
amañ dreist-pep-tra. Bernoù teil a zo e kement kognell a zo.  
Neoazh an tier a zo biskoazh mistroc'h ha komz a raer galleg  
atav.

Monet a ran da welet an iliz, mistr èl ar rest, ha gloestraj  
derv kizellet brav a-barzh. Pankoù, kadoerioù breg ha pinijenn,  
rac'h emaint krabiset bravik.

Ar vered a zo mistr ha dalc'het mat, ha bout a zo a-barzh  
meur a vez get galleg àrnezhe ; personed dreist-pep-tra.

Degemer mat a raer ac'hanomp e ti daou gozhiad a brest o  
zi deomp evit kousket ha debrñ a-barzh.

D'an noz ema ret deomp kemer gete ur banne gwin-ardant  
graet dezhe get prun ha tañvaat gwastell bihan an Nedeleg.  
Kontiñ a raont deomp neuze rac'h an atahinaj a rae ar Jermaned  
dezhe. Pep tra a oa kontet ha jedet ha ne c'hellent ket implij  
'met ar pezh a oa merket evite. Difennet e oa komz galleg.  
Evit an amprest eh oa ur bourd : mestr-skol, maltouter, ma

« eoñtr », rac’h an dudjentil e karg a zae peb unan d’e dro da esae lakaat an dud da reiñ o argant. Er skolioù e veze graet d’ar vugale reiñ peb unan e lod. An aour, an argant a veze serrret dre fors hag amand d’ar re na roent ket. An dra-se ne barrae ket doc’h an dud na garent ket ar Jermaned a c’houarn o aour hag o argant evit reiñ d’ar Frañs.

**28-12-1918** - Lein get amanenn, laezh e ti an dud. Ur blijadur. Met kuitaat ’zo ret ha fall amzer a zo. Dec’h e rae erc’h hag eh oa skornet ; ar mintin-mañ e ra glav. Aesoc’h e vo d’ar roñseed krapin doc’h ar menezioù.

Ar vro a zo meneziek. Na raomp ’met krapin ha deval. Tremen a raomp e teir pe peder kêrig a weler enne bannieloù trilig hag kerlennoù barroù get Vive la France à nezhe. Komz a raer galleg c’hoazh amañ. Met setu ur menez uheloc’h e’it ar re ’rall. E-kreiz ar c’hrap ur post livet get armaj Jermani ha « Bayern ». Setu-ni er Palatinat. A-dal bremañ ne glevimp mui galleg, a-dal bremañ e vimp sellet el eneberion. Treuziñ a raomp ur vro, labouret mat, get tier mistr ha savet a-feson. Tra kurius : al lod muiañ ag an tennerisoù a zo melen koar ! Gwerennoù ar fenestri a zo mistr-mistr.

Emberr diàr lein ur menez e welomp tourioù iliz Piermassens, lec’h mah aomp.

Àr an hent e kavomp ur yoc’h labourizion ha labourerezed é tonet ag o devezh rak achu eo ar sizhun da greisteiz. Rac’h emaint gwisket mat, rac’h en em zalc’hont mat. Àr-dro 10 eur eh arruomp e kêr. Glav a zalc’h da gouezh. Teir eur hol laosk an ofisour er ru, edan an amzer, e-pad mand eo-eñ doc’h taol en ur c’hafe bennak. Aet eo en tankarr evit klask lec’h deomp hag ema ret deomp-ni klask àr e lerc’h !! Ha c’hoazh just eo bet deomp pas bout letaet getoñ a p’hon eus en em glemmet...

Ur burev bihan lec’h mah eus lec’h da 3 en deus klasket deomp hag eh omp 10 !

Lec'h erbet da zebriñ. Hag evit kousket ur gwele e ti Jermaned a zo 1 1/2 lev ac'halemañ. Diaes eo deomp en em glevet gete. Ul levrig am eus prenet galleg-jermaneg a servij din da c'houlenn an traoù retañ. Met komz n'heller ket !

'Benn ar fin e kavomp un ti evit debriñ, an ti-mem lec'h m'ema ar burev. 11 a vugale a zo en ti hag ar vamm n'en deus 'met 40 vlez. Yaouank-flamm a ziskouez bout. Degemer mat a raont ac'hanomp. An tad a lâr ema Lorenad, met !... Ne vern. Daousto ne gomprenomp netra e c'hoarzhomp, e raomp gwignoù... hag e taomp da benn a breidiñ un tammig. Daou bred a raomp er mEMP.

**29-12-1918** - Gober a ran un dro dre gêr. Ruioù kreiz-kêr a zo kaer. Tier sonn ha savet mat. Met diskouez a raont rac'h bout rébarbatif, get o dorioù houarnet, o magerioù tev, o c'hoadaj meur.

En oferenn. Kan jermanek pounner, predeg hep fin. Kalz a dud en oferenn. Kalz a dud er gomunion. Kesterion ur yoc'h ; unan get ur vazh, ur sac'hig doc'hti. Brav eo gwelet an iliziad tud-se, hag é klevet an holl é kanal àr-un-dro. E gwirionez, ar bobl-mañ-rac'h, tiegezh et mat ha gredus, a ziskouez bout kreñv. N'em eus gwelet 'met e Breizh hag en Alzas ur bobl hag a zo èl-se mestr àr e dechoù.

Div pe teir ru vras, ha goude e kaver ruioù moan, tier izel, lous hag ar maezoù kentizh. Kêr ne zle ket bout kozh. Oc'hpenn 40 000 a dud a zo a-barzh. Rac'h pe 'gozik e labouront àr an arc'hen ha gounit a raont devezhioù a-feson : mestr an ti lec'h ma kouskan a lâr din e c'hounit 18 mark bemdez é labourat en e di. E verc'h hag a sikour getoñ a c'hounit 5 pe 6 mark. Gwelet a raer ivez doc'h an tier, ar gloestraj nend eo ket paour an dud.

**30-12-1918** - Baleadenn noz. Glav a ra ha gwan eo ar

sklaerder. Neoazh e vale an dud er ruioù, ar re yaouank dreist-pep-tra. E-leizh a baotred ha merc'hed, labourizion gwisket mat, merc'hed fur daousto dezhe bout ag ar bobl. Rac'h an dud-se get o disglavier a vale àr o goar, a arrest evit komz. Rac'h pe 'gozik en em zalc'hont mat ; kuitaat a raont bevenn ar ru e'it lezel soudarded Frañs da dremen. Ne glever komz rok erbet hag an dud-mañ ne ziskouezont ket bout droukkoutant doc'h hor gwelet amañ. Gouiet o deus doc'htu pourfitiñ ag ar soudarded a gaser dezhe. Gwerzhiñ a raont a bep tra, salv ar bevans, ha gwerzhiñ a raont marc'hatmatoc'h e'it ne rezer deomp e Frañs.

Rac'h an dud-se é vale en hanter teñvelded a zo èl ombres chinoises. Ur wezh pa yaer e klevan « Ya, Ya... » hag e seblant genin bout en ur gêr vras a Vreizh lec'h ma komzahe rac'h an dud brezhoneg.

Hiziv en deus kaset ar jeneral ur serjant da Landau (5 lev) da glask dezhoñ un Echo de Paris. Daet eo da c'houlenn un ordre de transport - a zo roet dezhoñ - hag a pand eo graet e valeadenn dezhoñ e tas da c'houlenn genomp frais de déplacement ! Da lâret eo e tae ar journal d'un 20 real bennak !! Hep kontiñ pe ar serjant...

**31-12-1918** - Komz (!) a ran get merc'h an ti lec'h mah omp é tebriñ, « Fraulein Anna », hag a lâr din eh eus an 1/2 ag an dud katolig er gêr-mañ. Hi 'zo-hi ivez hag e tisko din he chapelet, he levr pedennoù. Ar plac'h-mañ a zo jederez en un ti gwerzh. Desavet mat eo, ha joaus ur bam. Bepred ema é vousc'hoarzhiñ hag é esae lâret ur gêr bennak deomp.

An ti lec'h ma kouskomp : gwele get coussins lakaet tal-oc'h-tal. Ul liñsel hepken hag ur c'holc'hedad plu àrnomp. Donet a ran da benn a o lakaat da gompren e karahemp kaout taol-noz ha pod-kambr. Reiñ a raont hor c'hoant deomp ha lakaat a raont div liñsel àr ar gwele.



Er ruioù e weler stank kirri bihan graet reve ar giz loren a servij dezhe da gas o fakadeu. Pep ti en deus e garrig èl-se hag, evit kas an disterañ pakad, e stlejer an diaoul a garr-se. Er ruioù àr zeval, ar vugale a grap enne èl kaserion laezh an Oriant, ha hay, ma c'harr ! Gwazh-a-se e'it divhar an tremeniad.

Amañ e raer tan, met setu, ar mestr ne venn ket preniñ, hag e kas paotr ar burev da laerezh glaou-douar e ti amizion ! E-pad an amzer-se e laka en e fiched an argant roet dezhoñ e'it tommet e dud.

## 1919

**Kentañ deiz ar blez 1919** - Dre-mañ nend eo ket gouel bras an deiz-mañ. Deiz an Nedeleg a c'holo rac'h. A pa savomp da vintin ema maouez an ti àr voulj. Souetiñ a ra deomp « *Goutneuiahr* » (mat nevez blez). Ar ger-se a glevit e kement ti a zo, met nend eus ket gweladennoù hag everezh èl e Breizh. An devezh a-bezh a dremenomp prizonet er burev. Hani ne labour, met ar mestr ne lâro ket deomp monet da welet kêr. Pourfitiñ a raomp ag an diskuizh da greisteiz hag àr-lerc'h koan evit monet da welet kêr un tammig. Labour nend eus ket hiziv hag ema rac'h an dud serrret kloz en o zier. Gwir eo nend eo ket kaer-bras bale.

Gwelet a raomp ar gar a zo minet mat ha savet un tammig bravoc'h e'it ne vez savet garioù Frañs. Setu ur ger ha nend eo ket ker bras èl an Oriant, met gar an Oriant e-tal honnen a zo ur c'hraou.

### **02-01-1919** - Ar mintin-mañ eh aomp kuit

Hon ozhaç'h a za da benn ag hol lakaat da gompren ne venn ket mui bout Jerman. E famill a gomz èltoñ 'met ar baotred. Diskouez a ra din nend eus ket er Jermani na librentez na boued e-pad ma kaver an daou e Frañs. Fari a ra un tammig ; neoazh ne vennan ket en difari.

Ar re a gouskan en o zi a zo klañv ivez é klask goût ha Frañsez e vint pe Jerman pe Bayerniz hepken. Ne c'hellan evit c'hoazh lâret dezhe petra e vint. Met ne gavan ket tamm erbet emaint graet e'it bout Frañsez.

**02-01-1919** - Da 7 eur 1/2 eh aomp àr-raok goude bout lâret kenavo d'hon tudigoù. Anken a zo en o daoulagad doc'h hor gwelet é monet kuit rak get ar boued hor boa relez e taent da benn a vevñ, ha pell 'zo n'o doa ket bevet ken mat. A-hend-arall o doa sur un tammig karantez evidomp. *12 reich strass Grünfelder* (Anna).

Monet a raomp da Waldfirbach, doc'h an hanternoz, ha deval a raomp 'gozik hed-ha-hed get an hent etre daou goad ag ar re bravañ.

Àr-dro kreisteiz eh arruomp e Waldfirbach. Degemer mat a raer deomp. Merc'hed a za da gas koad deomp d'ober tan. Un ti a-bezh hon eus evit lojiñ ha burev, un ostaleri nevez-flamm. Àr an hent e kaver soudarded àr al linenn hent-houarn, àr ar pontoù ; met tud ar vro ne ziskouez ket bout fallgoutant a welet ar Frañsizion amañ. C'hoarzhet a raont hag ar vugale a zo desket da lâret : « *Ponchou Mousseu* ». Desket hon eus-ni lâret ivez « *Gouten Tag* ».

**03-01-1919** - Àr-raok, a-vintin, dre ur flagenn ag ar re sioulañ. Ar vro a zo un tammig kousiet d'ar sapin a zo bet hadet doc'h kement torgenn a zo. Doue a had ar gwez dispak ha diseurt e'it ne skuizho ket mab-den é sellet doc'h e labour.

Mab-den, eñ, ne oui ket diseurtiñ e labour. Neoazh brav eo ar flagenn-mañ get div wazh é vale a-barzh. 25 kilom. hon eus d'ober hiziv hag atav a ra glav ha gwall gaer nend eo ket.

Kaiserlautern - Uzinioù, bro plat, tier nevez. Bugale leun ar ruioù. Unan a freg diragomp er ru ! Ar pennoù amañ a zo jermanoc'h. Ne raer ket ivez degemer ken karadek deomp. Ar vugale neoazh a huch bepred : « Pouchou Mousseu ! » Donet a raomp da benn a gavet lec'h en ur meni kafe ha c'hoarilec'h. Ar boued a raomp d'al lein, met an diaesañ eo lakaat an dud ag an ti da gompren. Kavet a raomp neoazh en ti, d'an diaz, ur fraulein hag a gomz galleg un tammig. Ema get he c'henseurtezed é ranniñ ur meni keusturenn, graet get riz ha legumaj poazhet àr-un-dro, etre tud paour a za get kartennoù da glask podadoù friko... Lod arall, azezet doc'h taol, a lonk ar c'haot-se, get un tamm bara bihan. Ne evont greun : na dour na bier. Get an damazell-se e c'hellomp kaout koad ha kok e't gober boued.

---

Waldfisbach - noz - Donet a ra ur verc'hig da lâret din eh eus evidon ur gwele e ti he zud. Krapañ a ran geti evit gwelet. En ur gognell ag an ti, ur gwele pell get ul liñsel hag ar c'holc'hed a gaver e kement ti a zo amañ. Lâret a ran ur ger bennak dezhe met hep kompren kalz a dra ag ar pezh a lâront deomp. Kompren a ran neoazh eh on e ti tud troet groñs a-du get ar Jermani hag a-enep da bep... ?... El lakaat a ran da gompren e vehe gwell ma vehe ar Bavière digabestr. Eñ a respont din ema al Loren Jerman-Frañsez met ar Bavière Jerman. Me a gomz dezhoñ ag ar republik : «Nicht Repoublik ! eme-eñ. Repoublik Frankreich : Kapitalist. Republik Amerik : Kapitalist». Diaoul bras ! Trawalc'h em eus klevet ha koll a rin sur ma haloù ec'h esae lakaat an den-mañ da gompren e c'heller beviñ eürus hep en devout ur C'haiser é reniñ àrnoc'h.

Achap a ran a-herr goude bout bountet kant Gout ha kant Danke gete evit diskouez dezhe eh on eürus-bras bout bet degemeret ker mat.

---

Kaiserslautern - Bale er ruioù. Kêr vras met vil. Un iliz nevez giz roman a zo tost d'ar burev. Nag un dra displet get ur rozenn vein bras a-dreist un norig vihan ha flastret !... Un iliz arall ojival a zo dereatoc'h. Krabiset eo bet d'ur potarn kouezhet ag un aerlestr. Goulenn a ran get ur vaouez é tremen mar he des graet droug : 3 maouez, eme-hi a zo lazhet. (Trei frau kapout !)

Ar 24 C<sup>al</sup> a dremen er ru get ar muzik. Rac'h an dud àr voutj, met yender a zo. Hani ne salud an drapo, hani ne voutj. E gwirionez, pellaat a raomp doc'h Frañs ha yenaat ra ar c'halonoù a-gentizh.

En ti lec'h mah omp e raer selloù du doc'homp. Ne venn ket ar vestrez reiñ na koad na glaou douar deomp, mem e'it argant. Goût a ran ema bet lazhet he gwaz e-pad ar brezel. An dra-se moarvat na ra ket lusk dezhi d'ober degemer vat doc'h ar re en deus hi intañvezaet.

**04 a viz Genver 1919** - Weidenthal - Ur gaer a valeadenn hon eus graet ar mintin-mañ en ur flagenn don-don a red etre div steud menezioù meinek goloet a goad sapin. Kaer e oa an amzer ha plaen an hent. Div gêr a gavomp àr an hent, stardet doc'h ar menez a zo bet ret chakiñ un tammig evit kaout lec'h da lakaat an tier. Er gêrioù-mañ e vever dreist-pep-tra doc'h ar c'hoad. Heskennerezhoù, labourlec'hioù e'it gober koad micher, treid benveg. Ur riolenn kreñv a red hed-ha-hed d'an hent, gouarnet mat he glannoù get ur vagoer mein a bep tu. Gwelet a raer en deus mab-den amañ en em velet a wellaat e stad e kement mod a zo. Pradoùier kempennet, hentoù-

bras karget mat, gwez hadet a-nevez, pavaj, mein-mir doc'h kostezioù an hent. Nend eus 'met un dra displet : ar c'hoadoù sapin nend eus achumant dezhe.

Bugale a zo atav, leun ar ruioù, ha minet vat int daousto d'ar brezel. Neoazh goulenn a raont boued. « Nicht manger ? » setu ar pezh a glevomp a-hed an hent er gêrioù a dremenomp enne. Un dra a remerkomp ivez : an dud a sell falloc'h doc'homp a-gentizh ma dostaomp da galon ar Jermani. Amañ neoazh eh omp degemeret mat get ur vaouez a zo he gwaz àr an hentoù-houarn. Nend eo ket bet er brezel, hag èl-se eh eus nebeutoc'h a gasoni dastumet en he c'halon.

**05-01-1919** - Sul. Àr-raok. Degemer karadek e Weidenthal. Ken 'met koadoù. Bad-Dürkheim : Koant. Degemer mat. 'Raok arru e Bad Dürkheim e tremenomp e-tal kastell Limburg. Chom a ra c'hoazh kalz a vagoerioù en o sav. Àr ur menez ema azezet, a-dreist ur gêrig savet a-c'houde er flagenn glas ha bourrus a zigor en un taol evit gober lec'h da Bad-Dürkheim.

Amañ e kavomp ur gêrig èl Henbont, staget doc'h tor ur menez, en tachad izelañ anezhoñ. 8 000 a dud, a lârer din, a zo a-barzh. 800 hektar gwiniegi a sikour e-leizh kêriz da vevañ. Ar gwin a raer get rezin ar vro nend eo ket gwall nerzhet met c'hwek eo. Tost da gêr eh eus ivez dourlec'hioù a denn du-mañ ur yoc'h kantreerion. Div pe teir ostaleri vras a zo e kêr. Hor burev a zo e unan anezhe, ar Colonade Hotel a zo just e-tal an iliz katolig. Ul liorz a zo dirak an ostaleri get ur vasque a zo graet get mein a ziskouez pesked pe kregad hag a daole dour gwezharall. An dour a ziskenne neuze en ur park koadek a zo izeloc'h. Tier kaer, ar re gozh atav, nend int ket forzh jerman. Hañval int doc'h an tier a gaver en hor bro, er gêrigoù hanter pinvik. Mistr eo kêr ha sklerderet mat 'raok ar brezel. Bremañ e vank meur a dra d'an dud èl e rac'h ar Jermani, ha ret eo ansav

o deus muioc'h a basianted e'it ar Frañsizion. Kafe graet get heiz, hep sukr, soubenn legumaj, na kig, na lart, na chocolat. Ken 'met avaloù-douar ha bara segal kejet get ne ouian petra. Sur, nend eo ket eürus o stad. Neoazh rac'h an dud a ziskouez bout kontant. Mestrez ar c'hafe lec'h ma tebromp a lâr ema kontant ag ar soudarded : an argant n'en deus ket liv-bro ! Hag ar boued a zae da benn a skrapañ get ar c'heginour a rae boued en he zi a oa trawalc'h e'it he lakaat kontant.

Kavet a zo kambr din e ti ur plac'h yaouank-kozh a gomz un tammig galleg. Goût a ran e veze, nend eus ket pell 'zo, desket galleg er skol amañ d'ar vugale.

Ur gambrig plac'h yaouank-kozh am eus. Ur gwele houarn get boulloù kouevr, ur gwele livet e gwenn, ur gredañs livet e gwenn, un daol e'it en em walc'hiñ livet e gwenn get lestri gwenn hag, àr ar vagoerioù, àr taolennoù koad livet e gwenn, kizhier, chas ha kêrioù ag ar vro. Mistr eo ar gambr ha kempennet ar gwele el e Frañs, get div liñsel.

Goulenn a ra genomp doc'htu ma ne c'hellomp ket reiñ dezhi chocolat, gouloù, soavon !! Reiñ a ran un tamm soavon dezhi evit gwalc'hiñ al liñselioù a gousiomp, hag hon Gretchen a sav he daoulagad trema an Neañv, a groaz he divrec'h ar he bruch plat hag a lâr : « *Je suis drès heureuse !! Drès heureuse !!* » Ha ni 'ta ! Àr-lerc'h bout kousket àr an douar...

Baleadenn er ruioù d'an noz. Ne chom ket kalz a voutikloù digor. Ar gouloù moarvat a zo mezulet dezhe. Tavarnioù a zo hag int leun a soudarded. Monet a raomp e unan anezhe evit gwelet. Nend eus forzh kaer 'met bier, bier du, c'hwerv ha dinerzh. Leun eo ar sal. Bout a zo soudarded hag a zo mezv dija. Unan a ziroc'h àr un daol e-talomp. Doc'h un daol arall eh eus un nebeud tud a gêr, paotred, merc'hed yaouank. Ar baotred a c'hoari kartoù, ar merc'hed a sel doc'het ; ha dirak pep unan anezhe eh eus ur pikol podad bier !...

Bugale a zo doc'h un daol arall, 13-14-15 vlez, hag a esae

deskiñ butumat hag evet. Rac'h an dud-se a vev e-kreiz ar moked butum hag un aezhenn blazus savet ag an dud, ag ar skop, ag ar gaz, ag ar bier... Ne chomomp ket pell eno, hag e kavomp er ru tud e kantre. Ur Jerman hag ur Fr. soudard a dremen e-talon. Unan ne gomz 'met jermaneg, an arall ne gomz 'met galleg. An eil a venn diviz d'egile ema bourrus bale, ha eñ ha lâret : « *Promenade chocolat* » (rak *chocolat* a zo prizius el aour amañ) hag an evour bier a respont dezhoñ hep c'hoarzhet : « *Ia, gout, promnat schocolate* » !!

**06-01-1919** - Monet a ran d'ober ur valeadenn arre goude koan met fresk eo an amzer. Soudarded a zo neoazh àr voulj ha, reve o akustumañs, en en em zalc'hont ar fallañ ma c'hellont. Blejal a raont, c'hwitellat a raont, divegiñ a raont komzoù lous e jermaneg hag en em lakaat a raont àr-dro ar merc'hed. Ar re-mañ en em zalc'h gwell e'it ar soudarded ha ne welan ket kalz anezhe doc'h en em frotiñ, é klask tostaat d'ar soudarded. Tud ar gêrig-mañ a ziskouez bout desavet mat.

**09-01-1919** - Div blac'h yaouank a dremen e-talomp er ru, fur, é monet trema al lizherdi. Pemp pe c'hwec'h soudard a za er-maez ag un ti ; nend int ket mezv. Unan anezhe en em laka àr e grabanoù, a dap gar unan ag an div blac'h hag he zaol àr ar paver. Ar re 'rall a achap, ha eñ ivez. Kousiet eo dilhad ar plac'h yaouank hag ema ec'h esae o naetaat doc'h sklaerder gouloù un ti kenwerzh. Donet a ra tremazon hag e tisko din he dilhad kousiet é lâret : « *Kamerad...* » Hec'h alejiñ a ran monet da welet ar C'homandantur.

**10-01-1919** - Baleadenn er winiegi. Ema an dud doc'h o c'hardellat. Merc'hed a zo ec'h ober al labour. Un douseniad a zo anezhe en ur park. Ur sklisen deun àr o fenn, unan àr-lerc'h an arall eh aont beta ar boulom a zo é strewiñ an teil, hag unan àr-lerc'h an arall e wintaont o sklisennadoù teil en

ant, etre ar chouchoù. Unan àr-lerc'h an arall eh adlakaont o sklisennoù àr o fenn hag e tevalont èl m'emaint daet, betek an teileg lec'h ma leunier arre o sklisennoù. Keit èl ma welan ar blaenenn, ne spian 'met gwiniegi ha merc'hed ec'h ober an hevelep labour, àr o goar ha reizh mat.

Hiziv eh eus ofiserion vras, en o mesk ar jeneral, hag e c'houlenn ma ne c'hellahen ket skrapin, e'it netra, glaou ha koad e'it tommet o burevoù. Resev a raont argant e'it preniñ ar pezh a faot, met, èl bepred, karout a rahent bountiñ an argant-se en o fiched ha kas o soudarded da laerezh keuneud ha glaou !...

Al lod muiañ ag an ofiserion ne soñjont amañ 'met lakaat ar gêriz edan o zreid ha dismantr pep tra. A pa welont un delwenn jerman e komzont ag he dibenniñ ! Un daolenn jerman a zegas c'hoant dezhe he dismantr. Él ne gredont ket gober d'o c'hoant e troont tu dezhe, o fas doc'h ar vagoer !...

Doc'h o homzoù e ta soñj din ag an taolennoù am eus gwelet e Vitry e 1914 foñdet d'ar Jermaned, hag an delwennoù sent dibennet e amzer an dispac'h, hag ar merkoù tiegezh rac'het d'an dispac'herion... Bepred an hevelep follezh ! Mab-den ne c'hell ket andur e-talton tud ha ne gredont ket ema mat rac'h ar pezh a gred-eñ hag, an deiz ma n'en deus ket mui doujañs a vout kastizet, ne gav ket netra gwell e'it dismantr ar pezh a zegas soñj dezhoñ ag ar re n'o doa ket an hevelep kredenn getoñ. Ne sell ket ha brav pe vil eo al labour a finfoñd, a-dal ne vo ket mui gwelet eh oa ha ne soñjent ket èlton.

Na bravoc'h mod, na digoroc'h spered en doa sent Breizh hag a gavas dirakte kredennoù pagan en dour, en tan, er mein hag a imboudas ar gredenn nevez àr ar c'hredennoù kozh. Ar groaz kristen àr ar maen a yae an dud d'en em froitiñ doc'htoñ, ar feiz e galloud ar sant àr ar vammenn a yae ar bobl d'evet anezhi evit aesaat... gwellaat d'e zrougoù...

---



É tonet a Prague, a welet ar roue didronet Karl X, Chateaubriand a dremenas dre amañ<sup>1</sup>. Komz a ra a Dürkheim – a skriv Dunkeim – hag a revin ar manati-mañ (p. 189).

Gwelet en doa banal e bleuñv hag ur gigin é kanal ; hag e nijas e soñj trema Breizh.

Hag e c'hore en e benn hunvreour ar soñj e tlee ar Frañs gounit ar vro-mañ betak ar Roen, get ar gredenn ne oa nemet kement-se en dehe gwarantet ar Frañs doc'h tu ar sav-heol. A pan dehe bevet betak bremañ en dehe komprennet ne vo ket mui emberr harz erbet a c'hello parraat doc'h ar brezel a dremen, hag ema é c'hounit pabloù a-enep d'o c'halon e hader enne just a-walc'h gouel ar brezel.

---

**12-01-1919** - Sul. Oferenn. Àr an nor a-c'houde dec'h eh oa ur paper àrnezhoñ eurioù an oferennnoù. 3 a oa. D'an hanni a nav eur eh on aet. Oferenn ar soudarded e oa. Ema ar jeneral en e lec'h. A pand eo daet rac'h ar soudarded en iliz e kontan 40. 20 anezhe a zo ofiserion. Hag eh eus amañ oc'h penn ur rejimant.

An alezonour a bredeg. Gwelet en deus ivez ema goulle an iliz. Predeg a ra àr an dra-se. Àr an tri poent : sentidigezh d'al lezenn soudard, buhez direbech, relijion ; an tri zra ret domp diskouez e'it gounit istim ar Jermaned a zo, int, sentus, reizh a vuhezegezh, gredus a Feiz. Hag ema hañval genin klevet Sant-Yann é predeg en dezerh...

Siwazh, aotrou kaezh, kaer ho po lâret ema gevier a zo lâret ag ar Frañsizion d'ar Jermaned er Jermani a pa zo lâret ne ouiont ket sentiñ, emaint dirollet ha difeiz, ar Jermaned ne c'hellont krediñ 'met ar pezh a welont ; Hag e Bad-Durkheim e welont soudarded disentus er ruioù, divergont ha diroll en o c'homzoù, ha difeiz ivez pe a-wel digas peogwir nend aont

ket d'an iliz da bediñ o Doue... Hag e kement-se c'hoazh e vo diaes o lakaat da grediñ emaint izeloc'h evidomp !

An neizhour ec'h arru em c'hambur em eus kavet àr ma zaol un tamm katev get un tammig paper skrivet àrnezhoñ e galleg : « *Au déjeuner demain matin !* » Ma flac'h yaouankozh en deus bet soñj ac'hanon. Ma c'henseurt en deus kavet un tamm ivez.

Ret eo bet deomp donet en ur vro estren hag enebour evit bout berloet èl-se. Gwir eo ema é c'hortoz ma roimp chokola dezhi !... Pep miliner fin a oui tenniñ dour d'e vilin.

An enderv-mañ e ra glav. Neoazh eh an da welet Limburg rak lakaet em eus em soñj monet. Kemer a ran ur vinotenn, hag emberr eh on àr an hent pavet, un hent kozh pechañs, a ya da Limburg. Kêr en deus kempennet hed-ha-hed get an hent ur vinotenn get traezh àrnezhi hag ur steud gwez kempennet brav. Krapañ a ra an hent doc'h tor ar menez, met dre bep div wezh eh eus brichoù en tachadoù bravañ, evit diskuizh. Àr-lerc'h bout troet ha distroet get an hent doc'h ar steud menezioù, e-kreiz ar c'hoad hag ar brug, a-dreist ar gwiniegi skribilhet doc'h tor ar menezioù, ker brav, eh arruan e-tal Limburg. Àr lein ar menez strizh e weler é tigor èl ur boked flagenn Bad-Durkheim get an toennoù, ruz, gris, du, ker brav an daou du ag ar flagenn, ha, daousto d'ar glav, pell du-se e weler ar blaenenn a ya trema ar Rhin hag a zo goloet a winiegi kempennet mat a zegas soñj din a vro Champagne.

E-mesk ar gwez, en un taol, setu tour iliz an abati 'gozik a-bezh c'hoazh, ar vagoerioù a chom en o sav ; c'hoazh e weler dorioù kizellet, ar sal-debriñ, ar chapel get peulvanoù diskaret ha mein kizellet brevet. Miret-mat eo ar revin : graet a zo labourioù evit parraat doc'h an dour a vonet er vagoerioù, labourioù na weler ket ; harpet eo ar vagoerioù koshañ get masonerezh en hevelep liv. Brichoù a zo lakaet e kement kognell a zo, taolioù en diabarzh evit prediñ. Àr un

daolenn staget a-dreist an nor-dal eh eus ur skritell kravet er maen e jermaneg hag a lâr ema bet savet an abati-mañ e 1035. Benediktined a oa a-barzh. Gober a ran an dro d'an abati ha sellet a ran pep tra. Hag emberr eh arruan get un dra hag a zegas soñj din eh on er vro jerman. Stageta doc'h an abati lec'h ma en deus pedet ha labourer menec'h distaget doc'h ar bed hag he flijadurioù brellus, eh eus savet un ti ; hag en ti-se eh eus un davarn hag en davarn eh eus ur *Pianino automatic* !!! a skuerm get ur vouezh houarn gwenn, polka, mazurka ha korolloù arall... Spontañ a ran hag eh an da hunvrein edan ar gwez platan en deus kemeret lec'h ar peulvanoù er pred-sal. O, menec'h santel an amzer gozh ! C'hwi hag a garan kement evit ar vuhez divlam a hues bevet pell doc'h trouz ha safar ar bed, c'hwi hag en deus pechañs desket da vroiz ar c'hornad-mañ gounit ar baradoz en ul labourat tostenoù ha flagennnoù bourrus o bro genidik, c'hwi hag a gare kement ar Vraventez, ar Peoc'h, al labour, dait er-maez ag ho pezioù, dait da herzel er-maez ag ho touar benniget multreion, mougerion ar Brav, ar Peoc'h, al labour bleidi an amzer nevez...

Savet ho poa un neizh klouar ha kaer en tachad-mañ ha mab-den n'en deus ket mem respet evitoñ : àr an holl magerioù ne weler 'met anvioù tud en deus venet el-se donet da vout brudet. Hag ar c'hizellerion, ar vasonerion, ar venec'h en deus savet ar manati, an abati-mañ ken kaer n'o deus lezet anad erbet ag o anv...

En ur c'hornig eh eus savet ur peulvan d'ur gwerzour ag ar vro, pechañs, en deus kanet braventez an tachad. Nend eo ket re zihailh e-tal tour ojival an abati.

Donet a ran en-dro get un hent arall a zo àrnezhon tier labourizion dalc'het mat ha mistr. Ar pezh am souezh ar muiañ en tier a zo ar c'harrezioù gwer bombet, mistr-mistr.

**15-01-1919** - Arru a zo amañ un ofisour adm. ag ar

C'hom. A-c'houde-kreiz ar blez paseet e oa dle dezhoñ donet, met goulennet en doa monet da Bariz. Roet e oa e c'houlenn dezhoñ, met ken fonnapl eh a ar paperioù mand eo a-c'houde 6 miz é c'hortoz mah arruo getoñ ar gemenn. An deiz arall eh oa bet e Pariz hag eh oa lâret dezhoñ eh oa graet an traoù hag e tlee arru e Pariz, en e lec'h nevez, fin miz Genver, met, èl ne oa ket c'hoazh graet ar paper, eh oa ret dezhoñ monet d'ar Palatinat, d'e lec'h kozh, e-pad daou pe tri deiz.

Arru eo enta amañ evit daou pe tri deiz, ha ne oui petra gober ag e amzer. E-lec'h monet d'ar G.B.D. e chom amañ rak kêr a zo bravoc'h hag e kav muioc'h a « feskennoù ». Goulenn a ra mem dre telefon get un ofisour arall reiñ dezhoñ chomlec'h ur risklerez bennak ag ar gêr-mañ. An arall a roas ur chomlec'h dezhoñ ha setu eürs man den...

Ne gavit ket en dehe gellet an tren servij da gas un dra bennak spletusoc'h e'it an c'hwil-kaoc'h-se, hag an telefon da gomz ag un dra bennak spletusoc'h ivez ?... 250 lur ema daet da douch ivez èl « Entrée en campagne » rak an tri pe pevar deiz padet dezhoñ amañ, dre gaou, a ra droad dezhoñ da douch an argant en deus touchet soudarded e'it kement-se...

Katev a gavomp àr hon taol-noz c'hoazh ! E'it hon trugarekaat ag an tammig chokolat... Ema hor gozh freulein e-tal he dor doc'h man gortoz d'an noz. Ret eo din monet geti en he salig hag e komzomp un tammig a gement ma c'hellomp, hi get un nebeud gerioù a oar n'he deus ket ankouaet, ha me get an nebeudig am eus desket... Àr he zaol eh eus ul levr sonennoù jerman hag Iphigénie Racine. E galleg e lenn bremañ. Desket he deus anglez ha galleg er skol. Nend eo ket ag ar vro-mañ, Jermanez eo ag an tu 'rall d'ar Rhein, ha goapaus, en ur gomz, e lâr deomp é komz ag he c'henvroiz : « *Nous sommes des barbares !* »... Dre respet eviti nend aomp ket pelloc'h. Neoazh, a pa welahe ar pezh en deus graet he c'henvroiz, marse e cheñchahe he c'hredenn. Gwir eo, e lâr

deomp, ema an den mat a pand eo e-unan hag e ta da vout kri a pa vez get re 'rall. Ha gwir eo : spered ur yoc'h tud nend eo ket biskoazh hañval doc'h spered pep den ag ar yoc'h...

Un tammig àr-lerc'h e lâr deomp ema dimezet d'un den ag ar post...

**19-01-1919** - Sul. Àr-raok da Limburg ha da Hardeburg. Ur c'henseurt yaouank am eus, daet amañ da gemer lec'h ar re gozh, genedik a Gemper, studiour hag a gar an traoù kozh. Tuet eo ivez trema traoù Breizh. Goût a ra un tammig brezhoneg. Karadek eo. Hon daou eh aomp da vale. Ar gwashañ, ur vrumenn tev a zo hag a barra doc'homp a welet flagenn gaer an Isenach. Poan hon eus mem é welet lein tour an iliz ha ne c'hellomp ket gwelet en ur dramsell rac'h an Abati.

Diskenn a raomp er flagenn get un dergei krouizet en dorgenn a zoug an Abati, hag e-pad ma tiskennomp e sav tremazomp bouezhioù bugale a gan er flagenn. Hañval eo genin, get an tonioù difonn a zo gete, klevet bugulion a Vreizh é huchal e lannoùier mem bro holaika ar mintin... Diaes e kavomp hon hent er vrumenn, ha ret eo deomp monet d'an hent-bras.

Emberr eh arruomp get ar gêrig a zo doc'h troad menez kastell Hardeburg. Krapin a raomp àr hon goarigoù an hent pavet a gas d'ar c'hastell hag emberr eh omp e-tal troad ar vagoer uhelañ. Savet eo ar c'hastell-mañ àr un dorgenn paraviz da Abati Limburg. Izeloc'h eo an dorgenn, met ur roc'h eo an dorgenn-se, ha troc'het a zo a-barzh e'it kavet ul lec'h da ziazeziñ ar c'hastell. Ar mein bras, ar rec'hier en deus servijet d'ober ar vagoerioù hag èl ne oa ket diaes kavet mein eh eus paket magoerioù ledan ha sonn. Reve ar pezh a welan, er blez 1510 ema bet savet ar c'hastell. Graet eo èl kastelloù an amzer-se, get peder tourellenn, peder magoer uhel, ur c'hreñvlec'h hag, e-kreiz, un tour kreñv c'hoazh. Dergeioù

ledan, kavoù don, toullou e'it teurel mein ha dour bervet àr gein an arsailherion... Ne fehe bout choazet bravoc'h lec'h e'it en em zifenn en amzer ne oa ket pezhioù kanon èl ar re a zo bremañ.

Donet a raomp en-dro àr hon goarigoù get an hent-bras hag e kavomp un nebeudig tud yaouank àr an hent é vale. Kavet a raomp mem ur vare a zo ur soudard ag ar C'hreisteiz enni, rak bout a zo soudarded amañ, èl e pep lec'h, hag en deus ankouaet fonnapl emaint en ur vro enebour... Gober a raont èl ar chas soudarded a zo daet genomp : a pa vezont distaget ne sellont ket, ha ruz, ha jerman pe petra eo ar giez a red en o 'raok... Rak amañ èl e pep lec'h ivez eh eus merc'hed amvro hag a c'hounit argant ken aes get Frañsizion èl ma c'hounident get Jermaned.

Hiziv ivez ema ar vouezherezh. En ostaleri ema ar sal bouezherezh ha gwelet a raomp er vro-mañ hag a oa sellet èl « ardreñvaet » un dra hag a souezh lod-kaer : ar merc'hed a za da vouezhiñ. Gwelet a raomp leanezi é tonet da lakaat o bilhetenn er voest. E-tal an nor eh eus tri pe pevar roour bilhetennoù : met trouz erbet, na hucherezh nag un den meyv. Lâret e vehe nend eus netra a nevez er vro-mañ ha neoazh ema é tiazeziñ ur gouarnemant nevez. D'an noz eh aomp en un davarn, lec'h mah eus tolpoù tud en em soursi ag ar vouezherezh. Rac'h an dud-mañ a zo didrouz-kaer, a gomz hep huchal, get ur werennad bier pe gwin-bro a-dal dezhe.

Goulenn a ran get mab ar c'hafe hag a gomz galleg mat penaos e kerzh an traoù. Hag e tiviz din eh eus teir listenn : ar sosialisted ruz-poazh, an demokrated hag ar c'hreiz. Amañ e vo an demokrated a c'hounido rak aon en deus an dud ag ar Bolchevisted dre mand int rac'h pe 'gozik perc'henn d'un dra bennak ha tud peoc'hus, met er gêrioù vras e vo ar sosialisted a c'hounido a-gaoz d'al labourizion, ha dreist-pep-tra d'ar re a zo bet soudard hag en deus bremañ en o c'halon kasoni doc'h

o mistr ha dic'houst doc'h ar brezel. É vouezhiñ a-enep e'it ar sosialisted ruz-poazh e vouezhont nepas e'it an dispac'h met a-enep d'ar brezel ha d'ar re en deus o gwasket e-pad ar brezel.

Diwezataet eo an eur da serriñ ar c'hafeioù en arbenn d'an degemer mat en deus graet ar vroiz d'ar soudarded ha d'an urzh a zo e kement lec'h a zo. E-leizh a dud ivez a za da zeskiñ galleg er gentelioù savet e'it tud ar vro d'an arme.

Engortoz eo tud ar vro-mañ d'ober aferioù genomp pechañs rak c'hoant erbet n'o deus da zonet da vout Frañsizion. A pa gomzer mem dezhe ag o distag doc'h ar Jermani ne ziskouezont ket bout forzh koutant....

**23-01-1919** - Erc'h a ra hiziv ; greunad krach-erc'h kentoc'h. Nend eo ket neoazh kalz ynoc'h.

An neizhour àr hon taol hon eus kavet an tamm paper-mañ skrivet d'hon *freulein* :


*« Monsieur ! Je ne vous ai pas encore pu remercier, parce que je ne vous vois pas du soir. Je suis très enchanté au chocolat si excellent, aussi au savon très bon. Je vous remercie beaucoup – Tristement j'ai encore une demande – une bougie s'il vous plaît. M. »*

Henoazh e kasomp arre div c'houlouenn hag un tamm soavon d'ar *freulein*. Eh oa doc'h hon gortoz àr dreuzoù he dor, alumet ar gouloù dezhi en dergei. A-benn a p'hor gwelas e tiskouezas deomp e-kreiz he fas treut krouizet d'ar ritennoù, treut ha gwenn d'ar peudr èl a pan dehe graet erc'h àrnezhoù ivez, div renkad dent gwenn ha bras. Poltred ar Jermani !... Hon trugarekat a ras arre en ur sevel he daoulagad d'an neañv hag en ur groaziñ he dehorn àr he c'halon plat : *« Vous êtes un ange ! »* eme-hi... Hag e tenn deomp c'hoazh : *« Vous voyez aussi vous êtes des barbares ! »*... Ne gomprenan ket forzh kaer... Pe neuze ema é klask hol lakaat da grediñ ema ar Jermaned

hag ar Frañsizion tud a-feson, tud sevenaet, daousto d'ar pezh a zo bet skrivet er gazetoù, el levrioù.

Un dra a gomprenan ema-hi skeudenn he bro. Ne gred ket en deus he c'henvroiz graet an torfedoù hon eus gwelet ; krediñ a ra ema-ni en deus fardet àr ar Jermani hag ema Breizh-Veur en deus hon aliet da vrezelat ; krediñ a ra eh omp ur vro a netra hag hon dehe gounidet e-leizh doc'h en em lakaat edan gouarnasion ar Jermani. An diouwer a voued en deus graet d'ar Jermani arsav a vrezelat. Bremañ emaint edan damani ar Re-Unanet, met ne bado ket gwall bell an dra-se. Neoazh, e-pad ma pado, ar gwellañ eo d'ar Jermaned ne gav netra gwell, evit kaout boued ha peoc'h, e'it en em izelat kement èl ma c'hellont. O c'hein a zo gwevn ha goût a raont pladiñ betek an douar, ha mem evit kaout ar pezh o deus dober...

Setu ar pezh a gomprenan-me doc'h ardoù ha komzoù ar freulein gozh-mañ a Darmstad.





**24-01-1919** - Ar mintin-mañ eh a an adjudant Saurel kuit da 5 eur 45. A Ste-Foix-de-Peyrolière (tost da Doulouse) ema. Eürus eo da achap daousto dezhoñ bout soudard a vicher. Dec'h d'an noz ar mestr er c'havas àr e hent hag a c'houlennas getoñ c'hoazh ma ne venne ket « rengajiñ ». 43 blez en deus !... Dimezet eo hag ur burev butum dezhoñ. N'en deus c'hoant erbet da vout haodet pelloc'h !...

**26-01-1919** - Hor mestr en deus ul levr àr ar Palatinat roet dezhoñ get ar *Ministère de la Guerre* evit ma ouio penaos labourat er vro-mañ. Pep tra a zo divizet a-barzh : gwelet a raer dres e-mesk traoù arall ema Durkheim a Cercle Neustad (Bezirksämter) Neustad hag ema ur c'hanton Bad-Durkheim hep den erbet er penn, èl mand eo kantonioù Frañs. Ar mestr amañ a zo e Neustad hag e anv a zo « Bezirksamtmann », da lâret eo renour ar c'hornad, ar cercle. Hag hon aotrou a skriv da sous-prefet Bad Durkheim ! Ne c'hell ket kompren, eñ hag en deus bevet bepred en administration, e c'hell bout ur vro àr an douar hep pefed na sous-prefed !!...

An enderv-noz-mañ eh an get Blei ha ma C'hernevad beta Abati Limburg. Bourrusoc'h eo bale e'it disul. Splann eo an amzer ha graet en deus ur rizennadig erc'h en deus brishaet ar maezoù hep kuzhet netra. An tier, ar parkoù, ar gwez, ar gwiniegi a welomp splannoc'h c'hoazh e'it d'an ordiner. Komz a raomp ag ar vro gaer-mañ, ag ar venec'h en doa choazet un tachadig ker bourrus e'it pediñ ha labourat, ha 'gozik hep goût deomp eh omp e-kreiz ar revin. Dalc'h soñj, keneil karet, ag an anken a ziskennas en hur c'halon a p'en em gavomp rr chapel e-kreiz ar vagoerioù gozh-se ag an 11<sup>vet</sup> kantvlezaad hag ar mein kizellet a oa kouezhet, brevet doc'h hon treid. Un tachad ker kaer en dehe bet dleet bout respetet a-wel ha miret e'it ar rummadoù da zonet. Siwazh ! mab-den en deus tremenet eno get e ijin fall...

**27-01-1919** - Erc'h en deus graet c'hoazh. Freskaet en deus an amzer.

Eh on ma-unan amañ e-mesk an dud yaouank a zo daet da gemer hol lec'h, ha hiraezh am eus da vout dispartiet a-zoc'hte rak nend omp ket graet evit en em glevet : yaouank int ha dibenn, hag ag ar C'hreisteiz emaint 'gozik rac'h ; da lâret eo emaint barboterion, foeñverion ha diboan. Nend eus 'met an den yaouank-se a Gemper hag en em zalc'h mat. A-hend-arall nend eus ket a ziviz gete. A p'o deus komzet ag ar boued, ar merc'hed, ha diveget ur yoc'h lousteri ema skarzhet o c'halon...

**28-01-1919** - Tevaet en deus c'hoazh an troc'had erc'h. Aet eo an avel trema ar Rhein ha c'hwervet en deus.

**29-01-1919** - Diwezhañ deiz a bevar blez hanter anken ha spont ! Un tammig em eus terzhienn hiziv... Diaes eo din diazez ma spered àr ar soñj-se eh an da zilezel ar samm-mañ a zo ar man divskoaz. Eh on un tammig èl un evn a zo bet dalc'het un herradig en ur gavidell hag a zegorer an nor dezhoñ un deiz evit el lezel arre da nijal, digabestr, dihaot en aer ag an amzer. A pa wel an nor digor e chom un herrad da sellet doc'h an toull-se nend eus ket mui àrnezhoñ barrennoù. Ne c'hell ket da gentañ kompren eh eus un oabr kaer, digor, hep barrennoù. Disfiz a ra, hag en ur greniñ eh a àr dreuzoù an norikell ; brasaat a ra c'hoazh e souezh, kreniñ a ra muioc'h-mui. Penaos e ray-eñ evit sailh en oabr-se hag en em zoug a-barzh ? Ha neoazh ne harz ket doc'h bouezh an Natur, doc'h Bouezh ar Vuhez a zo ennoñ. Fardiñ a ra er-maez, hep bout re sur a e zivaskell, mank a dorriñ e c'houg, diliamm !

Èl-sen ivez ul loen a zo bet pell ur samm pounner àr e gein, a chom divoulj ha souezhet un herrad a pand eo disammet : nend eo 'met un herradig àr-lerc'h e kompren e c'hell arre

breskenn, ha redek reve ma c'houlenn e gorv evit en em ziherniñ...

An arrest-se a ran en despet din hiziv...

Ar mintin-mañ eh on bet é c'horonkat en ti a zo e-tal ar burev. Ervat eo ar sal koronk ha mistr ; hag an dour liv douar ar vro-mañ a ra vad d'am c'horf. Setu 3 miz tuchant n'em boa ket gellet en em walc'hiñ.

En em soursi a ran a ma zraoùigoù. Pakadoù da ober, paperioù da glask, argant da douch. Ha gober a ran man diwezhañ baleadenn e kêr, ar gêr en deus laosket em spered ar gwellañ koun ag ar brezel. Monet a ran da droc'hiñ tri barr gwinieg e'it kas genin da lakaat er Goh-Kêr e'it derc'hel soñj a win c'hwek ar vroig-mañ. Atav ema brizh an amzer hag an erc'h a chom àr an tostennoù. Fresk eo ivez.

**30-01-1919** - A-vintin, 5 eur, e tihunan. Gober a ran ma fakadoù diwezhañ a-herr. Serrezh a ran a-herr man disterajoù hag àr-raok trema ar gar. Gwenn eo an douar atav get an erc'h, ha yen eo. Emberr e tigêromp. Kenavo Durkheim ! N'ho ankouain ket a pa vin distroet em bro, rak e-pad rac'h ar brezel, n'em eus ket kavet par doc'h d'em degemer. E kêr erbet e Frañs n'em eus kavet tud ken onest hag a zegemer ker mat. Man diwezhañ kêr brezel oc'h bet hag ac'hanoc'h e c'houarnan ar soñj gwellañ.

E Neustad ema ret deomp diskenn rak an disoudardegezh, daousto d'ar gevier a zo lakaet er gazetoù, a zo graet en dizurzh brasañ. Hani n'en deus lâret deomp pezh tren kemer, hani n'en deus gellet diviz deomp da bed eur eh oa an trenioù a zlee hon dougiñ beta Schaidt. Deval a raomp enta e Neustad hag eh aomp d'ober ur valeadennig e kêr. Met diaes eo kerzhet, kler a zo e kement lec'h àr ar pavaj hag ema ret diwall a gouezh. A-hend-arall, nend eo 'met 7 eur hag nend eus ket kalz a dud àr voutj c'hoazh. Gwelet a raomp neoazh ema mistr kêr ha paket mat.

Da 8 eur 1/2 e kemeromp tren er bermisionered hag eh aomp beta Landau, lec'h ma raer deomp deval c'hoazh ! Da c'hortoz tren ar soudarded da zisoudardiñ !!! Chom a raomp un euriad bennak àr ke ar gar da skorniñ get an aneoued hag àr-lerc'h mah omp krapet en tren ne vihanna ket hon aneoued rak torret eo ar c'harrezioù gwer hag eh arru an avel genomp èl a pa vehemp er-maez !

Àr-dro kreisteiz eh arruomp e Schaidt. Eno eh eus un ofisour yaouank er gar hag hol laka a vandennoù reve hon arm hag eh aomp da gêr a zo ur c'hardlev bennak a-zoc'h ar gar. Ha hani ne ouel é welet ar soudarded kozh-mañ, pikol pakadoù doc'h o c'hein hag en o daouarn, gwisket e glas, e du hag e melen, é monet kej-mej èl un nebeud deñved trema ar gêr.

E kêr eh eus ur gobanenn lec'h ma kemerer hor paperioù genomp hag hol lakaer dre Region. Bremañ hor bo da chom amañ betek arc'hoazh da 10 eur 1/2. Klaskiñ a ran ur gampr met leun eo kêr a soudarded, ha goude bout troet ha distroet e kêr e-pad un eur e kavan un ti lec'h mah eus ur vaouez hag a gomz galleg. Bet eo bet e Pariz pell-ha-hir, matezh get ur medisinour hag eno he deus desket galleg. Plac'h yaouank-kozh eo, ha menuserzh a zo geti e dalc'h. Get he breur ema, un den en deus kollet e vaouez arlene hag a zo chomet getoñ 5 a vugale. Menuser eo ha grataat a ra din arañj en e labouradeg un tachad get plouz evit kousket. Àr-lerc'h chaokiñ un tamm bara ha komz un herradig diàr traoù ar vro. Butum eo a hader amañ, evaj – Sklisennoù a raer el lod muiañ ag an tier.

Merc'hed yaouank an ti, c'hoant dimeziñ dezhe. Me a gomz a-enep d'an dimeziñ etreze ha Frañsizion.

Kousket dous àr ar plouz. Menuser graet gwele.

**31-01-1919** - Ar mintin-mañ baleadenn goude 1 eur stardet e'it kafe, é kreniñ.

Da 10 eur 1/2 tolpl àr dachenn an iliz lec'h ma chomomp

1 eur da skorniñ. D'ar gar lec'h ma chomomp 1 eur 1/2 da skorniñ. En tren àr-lerc'h, lec'h ma skornomp betek 2 eur. Arru e Haguenau, ur gêrig vihan met koant a-walc'h. Amañ magazin Français. Bout a zo re hag en deus skritelloù a ziskouez ur Marianna a-bouez he hiviz, pikol bronoù dezhi, ur c'habel ruz àr he fenn hag he mantel kouezhet betek he c'hov. Ur penn lous dezhi ! Lâret e vehe ur c'hast mezvez... Souezhus eo ne c'heller ket diskouez poltred Frañs en ur mod dereatoc'h. Ur c'hog, sur, a vehe bet bravoc'h.

En tren eh omp zo a gement korn a Vreizh en 11<sup>vet</sup> rannvro. Tri a re vezv a zo hag o zri emaint a Vreizh-Izel. Hag èl bepred ne c'hellont ket poz. Kan a faot dezhe ha ne za 'met blaz gwin er-maez ag o beg. Koroll a faot dezhe hag e kouezhont.

Chom er gazarn. Eürus omp kaout tan ha golc'hed paper get plouz.

Pas aneoued noz met re vezv.

Ar re a oa en tren a zo arre ec'h ober o Jak. N'o deus ket dehanet a evet a-c'houde mand int arru, hag èl ne zebront ket kalz, fonnapl emaint a-blat. D'an noz e roer ur meni pred d'an dud met evit er c'haout ema ret en em bakiñ e-tal an nor ha gortoz eno un eur. El mand eo yen-mat ha ne harzer ket kalz èl-se àr sav, en avel ha hep netra er c'horf, an dud a goll pasianted. Pousiñ a raont àr ar re a zo tostañ d'an nor ken mand int flastret doc'h ar vagoer. A pa vez tro an tostañ da vonet en ti ne c'hell ket en em zijabliñ 'met get e-leizh a zroug. Lod a chom o muzetoù àr an dachenn, dre forzh tenniñ àrnezhe. Ha, tra souezhus, nend eus ket un ofisour àr al lec'h, pas un den doc'h en em soursi.

An dud a ya en ti, a vount o c'hart lous en troc'h lec'h m'ema ar gwin ; bountiñ a raer gete ur goglead soubenn graet ne ouier ket forzh-kaer get petra, hag un tamm kig n'en deus goust erbet ha nend eo hañval doc'h netra...

**1<sup>añ</sup> a viz C’hwevrer 1919** - Ar c’hafe ar mintin-mañ da 7 eur. Peb unan atav a soub e gart pe e vidon er bailh evit en em servij. Ne weler atav fri ofiser erbet. Hani ne oui pegours e yaimp kuit. Àr-dro nav eur e welomp diwezhadidi dastumet er porh. Ar mintin-mañ eh aont kuit holl. Un tammig àr-lerc’h e stager doc’h ar postoù a zo tro-ha-tro d’ar porzh ur skritell a lârer àrnezhi eh a kuit hiziv ar soudarded àr droad, àr varc’h hag ar c’hanonerion, hag e vo lâret diwezhatoc’h pegours eh arruo tro ar re ’rall. C’hoazh e vo ret enta kavet pasianted. Dre voneur c’hoazh e c’heller bale e kêr. Monet a ran da welet an iliz a zo bet savet e amzerioù dishañval. Bout a zo gotik ha roman a-barzh hag en diabarzh, re deñvel, e weler ivez labourioù meur a rummadoù tud. Gwerennoù a zo hag en deus min kozh daousto dezhe bout graet nend eus ket c’hoazh kant vlez : gwelet a raer merket àrnezhe emaint bet graet e Metz etre ar blez 1841 ha 1845. Galleg a zo merket àrnezhe.

A-dreist an aoter ur pikol jube alaouret re uhel e’it an iliz a flastr ar c’heur hag a lazha ar sel dre mand eo re luc’hus.

Goût a raomp nend eus ket tu deomp da vonet kuit hiziv. Gwelet a raomp ar re gentañ é monet trema ar gar get ar muzik er penn anezhe. An dud a za en o fenestri ha daeroù a zo e daoulagad meur a vaouez é soñjal en he fried nen day ket-eñ d’ar gêr, kousket mand eo, a-enep d’e galon ivez moarvat, e-tal soudarded jerman doc’h kostez ar Rusi pe ar Serbie...

Bale a raomp un herrad c’hoazh dre gêr ha gwelet a raomp ne vank netra amañ, kig, moc’haj, koñserv, bara ha katev. Katev a vernoù ! Ar vagazinioù a seblant kalz gwell montet e’it er gêrioù arall a Frañs am eus gwelet e-pad ar brezel. Monet a raomp da gemer ur c’hafe goude bout debret ur begad hag eh evomp kani kerklous èl an hanni a roer deomp get un tamm sukr evit lakaat a-barzh ma n’er c’havomp ket dous a-walc’h.

Pep tra a zo ker neoazh. Gwelet a raer eh omp arre e Frañs. Ma n’er gouiahemp ket, ur skritell staget doc’h ur vagoer

e jermaneg ha e galleg a za da zegas soñj d'an dud e tleont bremañ paeiñ taosoù !

**02-02-1919** - Sul d'enderv, 1h30. Tolp ar re diwezhañ er porzh e'it monet àr-raok. Beta 3 eur 1/2 e chomomp plantet eno e-kreiz an avel. Neuze eh arru ar muzik a zle hon ambroug d'ar gar. Emberr eh omp steudet pevar ha pevar, ha ni àr-raok neuze get ar muzik e son. Hag ema ur bourd gwelet é treuziñ kêr, 2 000 a dud bennak pleget edan ar sammoù bras é monet harz-pe-krev trema ar gar. Lod a zo meyv, en deus evet ur banneig re hag a zo diluzi o zeod : teurel a raont bourdoù get an dud a zo en daou du ag ar ru. Gwelet a raer ivez tud en o fenestri ; meur a unan en deus krapet mem àr an doenn !!

Monet a raomp doc'h kostez al linenn lec'h ma roer boued deomp : div seurt bara ha peder boestad kig « *singe* », èl ma lâr ar soudarded. Daou litrad gwin ruz e roer ivez da bebb unan. Eno e c'hortozomp c'hoazh a-dal 4 eur beta 6 ar 1/2 noz kent monet kuit. Evit hol lakaat da gemer pasianted e taer da gas deomp ur begad boued hag un tasad kafe tomm. Dibasiantañ mat a ra an holl, ha get plijadur e klevomp an tren é c'hwitellat... Eh omp en hent... Dre Sens, Toull eh aomp. Start-mat omp : 46 eh omp en ur vagon amerikan ha n'hon eus ket oc'hpenn un 60 santimetr bennak peb unan evit kousket, debriñ, fichal, lakaat hor pakadoù. Siwazh ! nend eo ket an dra-se en doa grataet ar gouarnemant d'ar soudarded kozh a zo chomet edan ar yev a-c'houde pevar blez hanter. Eürus c'hoazh mand eus plouz. Met evit gober ho toberioù ema an diaesañ. Ret eo d'ar re a zo e daon ar vagon monet a-dastorn, en ur ziwall a gerzhet àr ar re 'rall, beta dor ar vagon evit freget. Él bepred daou pe tri a zo er vagon ha ne arsavont ket a evet hag a huchal, ha, siwazh ! Breizhiz int c'hoazh. Hag e klevan get anken arre tro-ha-tro din é wallgomz ag ar Vretoned. Hag o difenn a pa vezont er stad se ne c'heller ket. Get poan e tan da benn a

gousket. Berroc'h e seblanto an hent deomp. Met sel gwezh ma arrest an tren eh omp dihunet. E Sens ema ret arrest 5 eur en noz. Nend eo ket dijabl al linenn.

**03-02-1919** - Derc'hel a raomp da rudellat ha skuizhat a raomp àr ar plouz.

**04-02-1919** - Arru a raomp e St-Pierre-des-Corps hag eno, àr-lerc'h bout evet un tasad soubenn hag un tasad the, e taer da lâret deomp e vo ret diskenn ha cheñch tren. Ur brav a c'hoari ! A-herr e serrromp hon traoù hag hol lakaer er-maez ag ar gar. Ha neuze e roer kemenn deomp da vonet da gar Tours da gemer an tren. 3 c'hardlev a zo ret deomp gober àr droad èl-se. Ne oa ket kalz ha na vlejent ket ec'h ober an hent-se. E gar Tours ema ret deomp gortoz un eur rak tren erbet nend eus ket : an tren a zle hor c'hemer a zo un tren civil ha krapin a-barzh a zo ret a-herr hag a-laer. Donet a ra an holl da benn a en em lojin neoazh, lod e bagonioù marc'hadourezh, en o sav, lod e bagonioù kozh hep karrez gwer.

Lâret e oa deomp e vehemp bet aet èl-se betek an Naoned, met evit hol lakaat da gemer pasianted eh oa an dra-se c'hoazh. E Saumur ema ret deomp diskenn rac'h 'met ar soudarded en train des Equipages. Erc'h a ra ha yen eo an avel. Monet a raomp da c'hortoz an tren arall a zle hor c'hemer àr-dro div eur, en ur gobanenn graet e'it ar soudarded, lec'h mand eus tan ha lec'h ma servijer deomp un tasad kafe 'gozik yen. Poan hon eus doc'h en em zifenn doc'h an aneoued.

Eur an tren a arru neoazh hag eh aomp en tren, un tammig klosoc'h arnomp ar wezh-mañ, met start omp ! Tud disoudard a zo a-barzh, kejet get soudarded. A-dal deomp ur vaouez italian he merc'hig kousket a-dreñv he c'hein, en deus hepken taolet he fenn ar ziskouez ur soudard a ziroc'h e korn ar vagon. Ar gwaz a zo en e sav doc'h kostez ar vagon.



Morgousket a raomp-ni ivez hag àr-dro 4 eur 1/2 eh arruomp e gar Naoned lec'h mand eus soudarded doc'h hor gortoz e'it hor c'hondu. Skritelloù a zo gete e penn un dreujenn koad a zo merket àrnezhe ar seurt armoù. Pep unan a dosta neuze d'ar skritell a zo merket e vicher àrnezhi hag emberr, dre ruioù leun a erc'h teuzet, e krapomp beta kazarn Bugeaud. Eno a roa daou soudard ag ar C'hreisteiz degemer mat ac'hanomp. Met ofisour erbet, gradet erbet nend eus ket atav !! Servij a raont daou dasad kafe deomp ha sardined e boestoù get bara, ha lâret a raont deomp kousket didrouz er gweleoù e oa eno beta 7 eur. D'an eur-se e vehe bet servijet ar c'hafe deomp.

En em astenn a raomp met ar c'housed nen da ket. Trouz kêr Naoned é tihun a barra doc'homp a gousket, ha ken skuizh èl mah omp !

Da 8 eur eh arru ar skrivagnerion. Àr-lerc'h bout en em walc'het un tammig hag en em gempennnet (ha dober hor boa àr-lerc'h 3 deiz hent-houarn !) eh aomp da welet ar skrivagnerion.

Fonnapl e kerzho an traoù gete rak en hevelep sal, tro-ha-tro d'un hevelep taol, ema rac'h ar burevoù. Diskouez a raomp hor paperioù hag e-korv un eur eh omp prest da vonet àr-raok.

Daousto d'an hiraezh am eus da zegouezh er gêr ne harzan ket mui get an c'hoant da zebriñ un dra bennak kalonek. Setu eizhteiz tuchant eh on é tiwall a zebriñ hag a evet e'it ne vehe ket bet ret din monet da gac'hat na da freget. (Ur brav a vuhez, hama !)

Monet a ran enta d'un debrti hag e c'hellan èlkent leuniiñ ma jilet arre, àr un dro get ur c'henseurt arall. Tu da vale dre gêr nend eus ket : glav a ra a-boullad. Da 3 eur eh a hon tren àr-raok ha kempenn a raomp pep tra e'it bout prest d'an eur rak kement a dud a zo mard eo ret diwall a vankiñ an tren.

Arru a ra an tren da beder eur ha 1/4, get un eur vat

diwezhat... Ema ar wallchañs àr hol lerc'h. Él rezon eh arruomp en Oriant get un eur diwezhatoc'h ivez, hag an hent din d'ober en noz teñvel. Donet a ran da benn a zegouezh neoazh er gêr àr-dro 9 eur 1/2. Kousket e oa ma zudigoù ha ret e oa bet din o dihun.

Ar c'hentañ tud a gavan àr ar baserel a gomze brezhoneg. Gwelet a ran cheñchamant daousto d'an noz. Met na stardiñ a ra ma c'halon é tremen e tachadoù n'am eus ket gwelet a-c'houde keit amzer. An daeroù a fard em daoulagad ha poan am eus é krediñ ema achu ar vuhez-se a dristez. Huneñ a ran moarvat !

Hag an hune-se a bad an deiz àr-lerc'h, ha pell amzer. Betak an deiz ma vin arre kemeret get an traoù ma gronne gwezharall, get ma zud, ma bugalegoù keizh en deus kresket ha me pell a-zoc'hte. Betak an deiz ma vin daet da benn a sellet ar brezel ivez d'e dro èl un hune spontus ha hir am eus èlkent gellet en em zijabliñ. Met siwazh ! start e vo din en em zijabliñ ag ar soñj-se... Me 'wel bremañ pegement em eus kollet get ar brezel. N'em eus ket mui soñj a netra. Ema arre ma labour da gomañs èl d'an oad a 20 vlez hag em eus 40. Ne vern penaos e troay an traoù bremañ, ar vuhez drist-se a laosko àrnon merch hec'h ivinoù. Aet int deun em c'hig, deun em spered. Siwazh ! èl lod kaer, kousiet eo mam buhez ha troc'het an tachad ma he devehe gellet bout ar c'haerañ, keneve-se.

Trugarez da Zoue bout gouarnet.